

AR BED K ELTIEK
A B K

KELAOUENN VIZIEK


KELEIER


ARZ

ISTOR


SKIANT

LENNEGEZH






Kelaouenn vizek
Niv.145 - Genver 1971
Koumanant-bloaz : 20 lur
(Studierien ha soudarded : 15 lur)
(Broioù estren : 25 lur)
"AR BED KELTIEK"
24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST
CCP.RENNES 1907-07



=====
PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON
=====



T a o l e n n

- 2 Ar miz (15 Du - 15 Kerzu)
- 7 Embannadurioù (Roparz Hemon)
- 9 Geriadur ar Brezhoneg, kendalc'h (Roparz Hemon)
- 15 Bodadeg-Vloaz ar C'hevre Keltiek (Alan Heusaff)
- 21 Ar yezh kasoubek (Ferdinand Neureiter,
(troet gant Roparz Hemon)
- 24 Brezhoneg skrivet ha brezhoneg komzet
- 25 Va farkad ed (Herve Ar Menn)
- 27 An aozadur gladdalc'hel
(troet diwar Istor Breizh La Borderie)



BLOAVEZH MAT D'HOL LENNERIEN !

AR MIZ

(15 Du - 15 Kerzu)

BreizhKREIZ BREIZH

Studiet e voe kudennoù Kreiz Breizh en un emvod dalc'het gant Kambr-Genwerzh ar Mor-Bihan en Oriant e miz Du, gant an Ao.H.Ducassou da gadoriad.

Divizet e voe krouiñ ur C'helc'hiad Stummidigezh padus evit bastañ da ezhommoù armerzhel Kreiz Breizh, dindan renerezh an Ao.Tymen. Pleustret e vo dreist-holl war aozadur al labour hag ar mererezh en embregerezhioù bihan hag etre.

Divizet e voe ivez sevel e Pondivi ur greizenn-labour deskiñ yezhoù (dreist-holl saozneg kenwerzhel) heñvel ouzh ar re a zo bet savet en Oriant hag e Gwened.

Kembre Studierien eus Skol-Veur Aberystwyth en em glozas e salioù-keleñn evit enebiñ ouzh ur raktres da zegemer muioc'h c'hoazh a studierien saoz (30 Du). Daou zen a ginnigas ober yun ha devañ o diplomoù dirak an holl. Kevredigezh ar C'hembraeg a brometas skoazellañ ar studierien.

Re a studierien saoz a zo, ha niverusoc'h int endeo eget ar studierien gembreat. Diwar an 2.600 studier a oa warlene, 36,9% hepken a oa Kembreiz.

Ar Saozon a lavar ez int didamall : perak, emezo, ez a kement a Gembreiz da studiañ e Bro-Saoz, e-lec'h mont da skolioù-meur o bro ?

Respont : peogwir e rank yaouankizoù Kembre divroañ da gaout ur vicher, hag an diplomoù gounezet e skolioù-meur Bro-Saoz, evel Oxford, Cambridge ha Londrez a vez sellet outo gant kalz implijerien evel talvoudusoc'h eget ar re gounezet e skolioù-meur Kembre.

Izili eus Kevredigezh ar C'hembraeg, kaset dirak ul lez-varn e Londrez e miz Kerzu, a voe nac'het outo gant ur barner ar gwir da gomz kembraeg. Pakistaniz, Gallaoued pe Rusianed, eme an Ao.Phillip Williams, kadoriad ar Gevredigezh, o dije bet aotre aotre da gomz o yezh : neb a venn ober gant ar c'hembraeg er vuhez pemdeziek a gav c'hoazh en hon amzer diaesterioù ; ur c'heodedad a eil renk eo hepken.

Ur c'heloù mat koulskoude. Sekretour Kembre, an Ao.Peter Thomas, en deus nac'het reiñ aotre da gregiñ

gant al labour-imbourc'h evit sevel ur mirlec'h-dour nevez e Traonienn Dulas e Kreiz Kembre. Re a dud, emezañ, o doa enebet. Gouarnamant Breizh-Veur, evit ur wech, en deus souzet. Ma vije bet kaset ar raktres da benn, e vije bet beuzet kêriadenoù ha douaroù talvoudus, evit dastum dour da gas da Vro-Saoz.

Iwerzhon Souezh a voe en Iwerzhon pa zisklerias ar pennministr e miz Du e oa bet diskuliet dezhañ gant ar servijoù-polis edo strolladoù 'zo e soñj skrapañ tud a bouez hag ober taolioù-nerzh. Aotre a voe roet eta da astenn galloud ar boliserien, ha kemenn a voe kaset da Guzul Europa eus mennadoù ar gouarnamant, - mennadoù a dorr darn eus reolennoù Kenemglev Europat Gwirioù an Den.

Un dalc'hva-prizonidi a vije prientet eta e Kamp-Brezel ar C'huirreach. Tud a c'hallje bezañ harzet ha dalc'het hep barnedigezh.

Breizh-Veur E derou miz Kerzu en em gavas gouarnamant ar Virourien en he brasañ enkadenn abaoe ar votadeg veur. Divizet en doa lakaat termen d'ar re-voneizadur dre nac'h kreskiñ re pae al labourerien.

An dredanerien, evit kaout ur c'hresk-pae brasoc'h eget an hini kinniget dezho, a grogas da "labourat diouzh ar reolennoù", ha da heul e voe bihanaet pourvezadur ar red-tredan. Dizurzhiat-krenn e voe buhez an dud, en tiez prevez koulz hag er stalioù, er burevioù, el labourvaoù, er skolioù, ha zoken er c'hlañvdiou.

Ar gouarnamant a nac'has selaou ouzh goulennoù an dredanerien, hag ar re-mañ a rankas plegañ a-benn un nebeut devezhioù : ne oant mui evit derc'hel penn ouzh displijadur o c'henvroiz. Hogen ken diskompennet e oa bet ar rouedad-tredan dre ar vro ma rankjod gortoz ur sizhun da vihanañ a-raok dezhi bezañ adarre en he flom.

Ur gentel a zo da dennañ : ur rummad labourerien, zoken mar bez reizh ar pezh a c'houlenn, ne c'hell ket daeñ pell kounnar un niver bras a dud diaezet gant e harz-labour.

Portugal Pennministr Portugal, an Dr. Caetano, a roas da c'houzout (2 Kerzu) e vije graet pourchasoù evit reiñ o emrenerezh da Angola Ha Mozambique. Aotreet e vije d'an div vro-se ar galloud da lezenniñ, gant ur melestrerezh lec'hel hag ar gwir da zastum tailhoù. Hervez ar pennministr, ez eo politikerezh Portugal diaezet war al liesouennelezh, hag ez eus frankiz evit an holl ouennoù : holl dud ar broioù tramor dindan veli Bortugal a zo kevatal, ne vern peseurt liv a zo d'o c'hroc'hen !

A dra sur n'eo ket ali Stadoù emren Afrika, a c'houlenn start ma vo kondaonet Portugal gant ar Broadoù Unanet

Euzkadi Kann a savas e Bilbao d'an 30 Du etre polised ha war-dro 500 studier, o doa aozet un displegadeg a-enep prosez ar vroadelerien.

D'ar 1-añ Kerzu e voe skrapet an Ao. Eugen Beihl, konsul Kornogalamagn e San Sebastian, gant izili eus ar strollad broadel ETA, a zisklerias e vije dalc'het ar c'honsul e-pad ar prosez, hag e vije graet en e geñver evel ma vije graet e-keñver an damallidi.

Ar prosez a zigoras e Burgos d'an 3 Kerzu, dirak ul lez-varn-vrezel. Gwardet-strizh e oa ti ar prosez. An nebeut tud a voe aotreet da vont er sal a voe furchet. Ar 16 tamallad a voe kaset, grizilhonet, dirak ar varnerien, ha ne voe ket lamet ar grizilhonoù diwar o arzaouarn. Lennet e voe derou ar skrid-tamall (30.000 ger) : muntrevezh, laeroñsioù e tiez-bank, perc'henniezh hag implij armoù-tan ha danvez-tarzh, emezelerezh en ur strollad berzet gant al lezenn. An torfed brasañ oa drouklazh an enseller-polis Manzanos e miz Eost 1968.

En deiz-se e voe harz-labour en Euzkadi, dreist-holl e Bilbao hag e San Sebastian, gant micherourien, kenwerzherien, implijidi tiez-bank, studierien. Zoken ar besketaerien a nac'has mont er-maez gant o bagoù. Ma tivizas Franco embann stad-diwall e Guipuzcoa (4 Kerzu).

An den goulennataet da gentañ e-pad ar prosez, ur micherour 21 bloaz, a voe lezet da gontañ penaos e oa bet jahinet gant ar boliserien.

N'edo ar varnerien avat nemet o c'hortoz un digarez da droc'hañ berr ar prosez. Dont a reas d'an 9 Kerzu.

An den goulennataet en deiz-se a lammas trumm war ar varnerien sabatuet ha spontet. Unan eus ar re-mañ a zic'houinas e sabrenn, endra ginnige unan eus an archerien tennañ gant e bistolenn. Hag an holl damallidi neuze da youc'hal ha da ganañ kan broadel Euzkadi, kanet ivez gant lod eus an dud deuet er sal da arvestiñ. E-kreiz an tousmac'h, na badas nemet un nebeut munutennoù, e roas ar pennvarner urzh da "c'houllonderiñ" ar sal, hag e tisklerias e kendalc'hje ar prosez e kuzh a-dreñv dorjoù prenet.

Dizale, avat, e voe roet da c'houzout e krede d'ar varnerien n'o doa ket ezhomm da vont larkoc'h gant o goulennoù, n'o doa ket ezhomm zoken da selaou prezeg-enoù an alvokaded. Pedet e voe ar re-mañ da reiñ d'al lez-varn dornskrid o frezegenoù. Ne voe klevet nemet prezegenn ar prokolor, a c'houlennas ar marv evit 6 eus an damallidi, hag ar prizon e-pad pell amzer evit ar re all, nemet ur vaouez, a c'halle bezañ didamallet.

Ar varnerien a chomas neuze da zerc'hel kuzul, klozet an dorjoù warno. D'ar 15 Kerzu, ne oa ket bet embannet c'hoazh ar varnedigezh.

Evit enebiñ ouzh ar prosez, tost 300 a Gataloniz en em serras e manati Montserrat, holl tud vrudet,

skrivagnerien, arzourien, c'hoarierien, tisavourien h.a. Montserrat, manati ar Veneadiz, war-dro 60 km er c'huzh-heol da vBarselona, a zo anavezet evel kreizenn cneb-erezh ouzh ar gwaskerezh. A-viskoazh eo bet ur minic'hi asur evit ar re heskinet. Gouarnamant Madrid avat a reas pezh n'he doa kredet aotrouniezh ebet ober e-doug an Istor, reiñ urzh d'an archerien da vont er manati. Evit mirout na vije trubuilhet ar venec'h, o ostizidi a yeas kuit.

D'ar 15 en doa roet gouarnamant Franco galloud d'ar boliserien da herzel ha da vac'hañ tud dre Spagn hep aotre a-ratozh.

An Iliz En ur "motu proprio" (21 Du) e kemennas ar Pab ne vije mui aotreet ar gardinaled oadet a ouzhpenn 80 vloaz da gemer perzh en ur c'honklav evit envel ur Pab nevez. Lakaet e vo ar reolenn-se da dalvezout diwar ar 1-añ Genver 1971.

25 eus ar 127 a gardinaled a zo bremañ a zo tizhet.

Pedet eo ivez ar gardinaled da ginnig o dilez diouzh pep karg er Guria pa vint 75 vloaz. Scurt dilez a c'hell bezañ nac'het, hogen da 80 vloaz e vo, ne vern penaos, lamet o c'harg diganto.

Paol VI a guitas Roma d'ar 26 Du evit ober ar vrasañ beaj biskoazh graet gant ur Pab. Goude un ehan berr e Teheran, e reas un ehan berr all e Dakka, kêrbenn Pakistan ar Reter, evit reiñ ur merk a gengañv d'ar vro, bet gwastet un nebeut deizioù diagent gant ur gelc'houidenn.

D'ar 27 e tegouezhas e Manila, kêrbenn an Inizi Filipinez. Edo gant ar prezidant Marcos o vont etrezek an iliz-veur, pa glaskas un den, un arzour boliviat, surmat direnket e spered, skeiñ outañ gant ur gontell.

Eus ar Filipinez ez eas ar Pab da Samoa, ha neuze da Sydney en Aostralia, ac'hano da Jakarta en Indonezia, ha da Hong Kong. Goude un ehanig e Kolombo, en Enez Selan, e tistroas da Roma d'ar 5 Kerzu.

Italia Al lezenn oc'h aotren an torr-dimeziñ en Italia a voe votet gant ar Gambr d'ar 1-an Kerzu, gant 319 mouezh a-enep 286. Votet e oa bet gant ar Sened e miz Here.

Damheñvel eo ouzh al lezennoù graet e kalz broioù all abaoe pell. Diaesoc'h oa ar gudenn en Italia en abeg d'ur feur-emglev etre ar Stad hag an Iliz katolik. Hervez an emglev-se, ne c'hell un dimeziñ bezañ torret nemet gant ar Rota er Vatikan, diouzh reolennoù an Iliz.

Un tu a chomfe c'hoazh da ziarbenn al lezenn : ober referendom. Ret e vefe dastum da gentañ 500.000 sinadur, pezh a vefe aes, rak tud e-leizh, feal da gelennadurezh an Iliz, a zo a-enep al lezenn-se. Koulskoude ne vefe ket tu da aozañ ar referendom a-rack 1972.

Kanada An diplomat saoz J. Cross, a oa bet skrapet gant disrannerien eus "Talbenn Dieubiñ Bro-Gebek" d'ar 5 Here, a adkavas e frankiz d'an 3 Kerzu. Dalc'het oa bet en un ti e Montreal. Hervez ar bromesa graet gant ar gouarnamant, e voe lezet e skraperien da nijal da Guba, hep bezañ bet ar pezh a c'houlennent : ur yalc'had vras arc'hant ha dibrizonadur kenseurted dezho.

Ginea En eil hanterenn miz Du e voe trubuilh e Ginea. Kemennet e voe d'ar bed gant ar prezidant Sekou Touré e oa bet dilestret en noz gopr-soudarded, kaset gant Portugal evit diskar e renerezh. Hervez gouarnamant Portugal e oa faos.

Ur strollad dileuridi, e izili eus Nepal, Finland, Kolombia, Polonia ha Zambia, a voe karget gant ar Broadoù Unanet da vont da ober enklask e Konakri, ar gêrbenn. War o distro da New York, e tisklerias an dileuridi-se e oa bet e gwirionez argadennoù, bleniet gant izili eus nerzhioù armet Portugal, dindano Gineiz, izili eus strolladoù en harlu enebour da Sekou Touré. A-unvouezh e voe graet an diskleriadur-se.

Sina Darempredoù diplomatek a zo bet skoulmet etre Etiopia ha Sina ar gomunourien (1 Kerzu). Heuliañ a ra Etiopia ar skouer roet gant Kanada ha Ginea ar C'heheder e miz Here, hag Italia e miz Du.

48 Stad o deus bremañ darempredoù gant Pekin, en o zouez an darn vrasañ eus Stadoù Afrika ar Reter.

Oabl Un oabllestr hep den e bourzh, LUNA-17, a voe bannet gant ar Rusianed e kreiz miz Du etrezek al Loar. D'ar 17 e leurias e Mor ar Glaveier, hag un doare karr eizhrodek, anvet LUNOKHOD (Loargarr), a zeuas er-maez, a riklas war ur bann-war-naou, a ruilhas war ar gorre betek 25 m bennak diouzh an oabllestr. Ar wech kentañ eo ma fiñve ur c'harr war al Loar.

Al loargarr, skinvleniet diouzh an Douar, en doa war-dro 3 m a hirder ha 2 m a dreuz. Warnañ e oa skinluc'hskeudennerezed hag ardivinkoù da studiañ an endro. Bez' e oa ivez un dameuc'her laser, oberiet e Frañs gant danvez graet en Alamagn, a dalvezo da vuzuliañ resis an hed etre al Loar hag an Douar.

Ar c'harr a reas ouzhpenn 100 m hent, ha neuze e chomas difiñv pa gouezhas an noz warnañ, un noz a badas div sizhun. Pa zeuas an deiz, e voe lakaet da gerzhout adarre. Skingaset e voe skeudennoù eus an Heol o sevel. E-pad an noz e oa diskennet an derez-hin tro-war-dro betek -130 derez. Hogen e-barzh al loargarr e oa un aozadur-tommañ a savas an derez-hin betek 15 derez.

VENUS-7, an oabllestr kaset gant ar Rusianed etrezek ar blanedenn Wener, goude ur veaj a badas tost pevar miz, a dizhas e bal d'ar 15 Kerzu. Un harz-lamm a voe digoret, hag e-pad 35 munutenn, endra ziskenne dre ar gazkelc'h, kalz stankoc'h eget hini an Douar, e kasas skinarouezioù. N'eus ket da grediñ e oa aet a-stok neuze ouzh ar gorre. Moarvat e voe distrujet a-raok, evel VENUS-5 ha -6, gant ar gwask pe gant ar wrez.

=====

EMBANNADURIOÙ

gant Roparz Hemon

HOR YEZH, niv.60-61 : GERIAOUEG 02

Setu deuet eil lodenn ar C'HERIAOUEG aozet gant Gwennole Ar Menn, skoazellet ar wech-mañ gant 20 kenlabourer.

Niver ar genlabourerien a ziskouez ez eus tu da seveniñ labourioù a-stroll, gant ma vo kavet un den da zastum an danvez kaset dezhañ ha da lakaat urzh en danvez-se. Trugarekaat a dleomp an Ao.Ar Menn da vezañ sammet ar garg pounner war e choug.

Un darn vat eus ar gelaouenn a zo gouestlet da studi un dousenn c'herioù nebeut anavezet. Dastumet e vez evezhiek :

1) Kement meneg eus ar ger a c'haller kavout en dielloù skrivet (testennoù, geriadurioù, studiadenoù yezhoniezh, h.a. 2) Notennoù diwar-benn stumm, ster hag implij ar ger en teodyezhoù, tennet eta eus ar yezh komzet. 3) Neuze e klasker dizoleiñ pe spisaat etimologiezh ar ger.

An hentenn-se da studiañ ur ger a zo mat. Klokoc'h eo eget an hini a heuliañ-me em GERIADUR ISTOREL, rak er Geriadur-se ne zalc'han kont nemet eus an dielloù skrivet.

Al labour graet gant ar rummad GERIAOUEGOU a c'hell hol lakaat da brederiañ war gudenn furmidigezh ar yezh lennek.

E-kichen ar yezh komzet, implijet en darempredoù pemdeziek etre an dud, e rank pep pobl kaout ur yezh skrivet. Unan eus perzhioù rekis ar yezh skrivet, rekisoc'h c'hoazh en amzer-mañ eget gwechall, a zo kaout un arouez, hag un arouez hepken evit pep ger. An arouez-se a c'hell bezañ ur skeudenn, ur c'henaozadur linennoù, pe, evel en darn vuiañ eus ar yezhoù, ur strollad lizherennoù. Kemeromp ar ger menez : graet eo gant 5 lizherenn, m, e, n, e, z, lakaet lerc'h-ouzh-lerc'h. Distaget e vez e meur a zoare er yezh komzet. Skrivet eo bet ivez e meur a zoare : mene, mené, mañné h.a. Hogen, a-benn ar fin, ur stumm hepken, menez, a zo bet dibabet. Menez a zo ar "stumm lennek", an arouez a zo bet trec'h d'an arouezioù all.

A-wechoù e lavarer ez eo ar stumm lennek ar stumm "reizh". Gwall zispis eo avat ar meizad a zo dindan ar ger "reizh". Peurliesañ e kreder ez eo ar stumm a glot gwellañ gant ar stumm skrivet en henvrezhoneg, mar deus, pe e

krennvrezhoneg, mar deus, pe gant ar stummoù a gaver er yezhoù keltiek all, mar kaver, hervez "lezennoù" emdro-adur ar sonioù savet gant yezhourien an 19-vet hag an 20-vet kantved, - en ur ger "emdroet-reizh" ; ar stumm eta an nebeutañ "distreset" a c'haller kavout.

Ur skouer splann a zo roet gant ar ger hiziv. Ar stumm hiziv a zo bet degemeret da stumm lennek, peogwir e klot mat gant ar stumm krennvrezhonek hiziu (hiziu o klotañ mat e-unan gant ar c'hrenngembraeg hediw, ha kavet "reishoc'h" eta eget hyziou, hizyeu, hizieau, hizu h.a.). Hiziv a zo bet trec'h da hirio, hirie, hiriou, hidiu, hicho, hiniù h.a.

Krediñ avat ez eus bet lakaet kement a evezh o tibab stumm lennek pep ger a vefe ober ur fazi bras. N'eo ket e-giz-se e c'hoarvez an traoù en istor furnidigezh ur yezh lennek. Ar stummoù lennek, e brezhoneg evel e pep yezh all, a zo bet diazezet peurvuiañ dre zegouezh ha dre chañs, hervez froudenn pe faltazienn (hag ivez a-wechoù skiant-vat) ur yezhadurour pe ur geriadurour. Ur yezhoniour a vremañ a gav abeg alies en dibab a zo bet graet.

Er yezhoù stadel, reolenet ha statudet dre lezenn, n'eus koulz lavaret netra d'ober da gemmañ ur stumm lennek. Kaer en devezo ur yezhoniour gall krial e tleer skrivañ l'en demain, ha n'eo ket le lendemain, skrivañ il y a belle heurette, ha n'eo ket il y a belle lurette, ne vezo ket selaouet. E-giz-se emañ, hag echu !

E Breizh n'eus ket a lezenn da herzel ouzh gred "reizhourien" ar brezhoneg. Un den a verz pezh a zo, war e veno, un "direizhder" e stumm lennek ur ger. Ar gwir en deus hep mar da ziskleriañ e soñj. Hogen mont a ra pelloc'h : kemman a ra stumm ar ger en e skridoù, ha fellout a ra dezhañ lakaat an holl da gemmañ ivez.

Un tech fall eo, am eus enebet outañ a-hed va buhez. Me ivez am eus kavet "direizhderioù". Ma rafen ar roll anezho, e lakafe ho plev da sevel a-bik war ho penn, ken niverus int : tost an hanter eus gerioù ar yezh !

Ul levr bras a c'hallfen aozañ war ar gudenn-se. An nebeut linennoù am eus skrivet amañ a zo da lavarout : forzh pegen talvoudus eo al labour sevenet gant ar rummad GERIAOUEGOU, ne dle ket bezañ digarez da lakaat rouestl er yezh lennek. Klaskomp atav kreskiñ hon anaoudegezh eus ar brezhoneg. Hogen na zispennomp ket an ardivink prientet gant kement a boan, evit ar blijadur da ober "gwellaennoù" n'int mat e gwirionez mat nemet da hadañ an dizurzh.

(HOR YEZH, koumanant-bloaz 20 lur. Da gas da : Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22-GUINGAMP, CCP.Rennes 1240-22).

=====

stuc'hennañ v. 1. lakaat stuc'hennoù (pluennoù) (ouzh ur saezh). 2. lakaat (ed) e stumm stuc'hennoù (malanoù). (+ stuc'hennadur, stuc'hennerezh, stuc'hennidigezh, stuc'henner).

stuc'henn-vara gg. stuc'hennoù-bara tamm bara a souber (e melen ur vi bihanboazh h.a.), hv.soubigell.

stuc'henn-vlev gg. stuc'hennoù-blev tra e stumm ur vandenn pe ur gordenn, graet dre genweañ blev, hv.plañson, plezh, plezhenn, nac'henn.

stuc'hiañ v. evel "stuc'hennañ 1". (+ stuc'hiadur, stuc'hier, stuc'hidigezh, stuc'hiezh).

stuc'hiek ag. goloet gant stuc'h. (+ stuc'hiegezh).

stuc'hellat v. 1. sachañ kreñv ha rust. 2. gwallgas.

studi gg.-où 1. al lakaat ar spered da zeskiñ pe da imbours'hiañ. 2.(ster kozh) dezo, mennad ; ober e studi, bezañ war e studi (db. ur bugel pe un den yaouank) heuliañ kentelioù (ur skol h.a.) e sell da gaout ur vicher.

studiadenniñ v. en em reiñ d'ar studi.

studiañ v. 1. ober studi (war udb.). 2.(ster kozh) kaout dezo, kaout c'hoant (da ober udb.). (+ studiadeg, studiadenn).

studienn gg.-où pennad-skrid displeget ennañ frouezh ar studi (db. tra pe dra).

studier g.-ien 1. neb a studi. 2. unan a ra e studi en ur skol-veur pe ur skol uhel.

studius ag. 1.(db. un den) douget d'ar studi.

2.(db. un dra) a c'houlenn kalz studi, diaes da studiañ. (+ studiusted, studiuster).

stuienn gg.-où heskedig war ar c'hroc'hen-lagad, hv.hesked-malvenn.

stultenn gg.-où taol youl o tont trumm hep abeg anat, hv.froudenn, kulad.

stultennañ v. kaout ur stultenn pe stultennoù.

stultennus ag. douget da stultennañ.

(+ stultennusted, stultennuster).

stumm ag. fetis hag o terc'hel nebeut a lec'h. (+ stumnder).

stumm g.-où 1. doare-bezañ un dra hervez aoz al linennoù pe ar gorreoù a vevenn anezhañ en diavaez, hv.furm. 2. doare ub. pe udb. barnet hervez ar gwel, hv.neuz, min. 3.(dre vras) aozadur, an doare m'eo aozet pe savet (un ti, un oberenn arz pe lennegezh h.a.). 4.(Yezhadurezh) doare ur ger e-keñver ar son pe ar skritur, a c'hell kemmañ hervez an amzor pe al lec'h.

stummad g.-où evel "stumm".

stummadur g.-ioù 1. ar stummañ. 2. tra stummet. 3. (Yezhadurezh) ar gevrenn eus ur yezhadur gouestlet da studi ar stummoù. stummadurezh gg. (Yezhadurezh) studi ar stummoù. stummañ v. 1. reiñ stumm (da udb.). 2. dont da vezañ a-veskell, pe muioc'h a-veskell, hv.stouiñ, kosteziñ. (+ stummadeg, stummadenn, stummerezh, stummidigezh, stummer).

stumm-lavar g. doare komz ur yezh, doare distagañ ar gerioù hag ar frazennoù, a gemm hervez bro-orin an dud, o renk er gevredigezh, derez o deskadurezh h.a.

stumm-skrivañ g. doare sevel skridoù en ur yezh, dibab gerioù ha troioù-lavar, aozañ frazennoù, a gemm hervez personelezh ar skrivagner.

stunañ v. rivinañ er c'hoari-kartoù h.a., hv.lutañ, sac'hlutañ, sklutañ, stranañ, stranikañ, krazañ.

stuntellañ v. evel "stunañ".

stur g.-ioù 1. frammadur koad pe vetal, plat, staget ouzh aros ur vag, a lakaer da dreiñ evit he bleniañ war an hent rekis. 2. barrenn gromm, ouzh pep penn anezhi un dornell, e tu-araok ur marc'h-houarn, ur marc'h-tan h.a., a dalvez d'e vleniañ. 3. (dre astenn-ster) nep tra a dalvez da vleniañ war an hent rekis. 4. evel "sturienn".

sturdresadenn gg.-où tresadenn a dalvez da skouer pe da skoazell evit ober tresadennoù all.

sturiañ v. 1. bleniañ (ur vag) dre harp ar stur. 2. (dre astenn-ster) bleniañ, kas (ub. pe udb.) war an hent rekis. (+ sturiadeg, sturiadenn, sturiadur, sturierezh, sturidigezh).

sturienn gg.-où lavarenn o reiñ un ali, ur gourc'hemenn evit sturiañ, hv.ger-stur, lavarenn-stur.

sturier g.-ien 1. an hini a stur ur vag. 2. an hini a zo e gefridi sturiañ ur strollad, ul luskad h.a., hv.levier.

sturreolenn gg.-où 1. evel "sturienn". 2. reolenn da heuliañ evit seveniñ ur gefridi, ober implij eus un danvez pe un ardivink h.a.

sturva g.-où 1. lec'h ma vez sturiet udb. dioutañ. 2. bodad-tud karget da sturiañ.

sturyezhoniezh gg. ar rann eus ar yezhoniezh a studi an doare da sturiañ emdroadur ur yezh. (+ sturyezhoniell, sturyezhoniour).

sturi g.-ed (Acipenser sturio) pesk-mor bras, a ya er stêrioù da c'hreuniañ, a ro boued, kaviar, peg.

- stuz g. -ioù 1. an doare ma vez kempennet udb. 2. al lakaat plant disheñvel en douar, evit ma chomo strujus, hv.reg-an-trevad, regad, kesad, tro-an-eostoù.
stuziañ v. 1. reiñ stuz (da udb.) (hvz ar ster 1).
 2. ober stuz (hvz ar ster 2). (+ stuziadeg, stuziadenn, stuziadur, stuzierezh, stuzidigezh, stuzier).
- su g. roud-avel troet a-enep d'ar Sterenn, hv.kreisteiz.
suasion gg. (ger kozh) ali, kuzul.
- subjonktiv g. -où (Yezhadurezh) doare eus ar verb o tiskouez ur stad pe un ober sujet gant ur stad pe un ober all, a c'hell eta bezañ pe na vezañ, hv.doare-sujañ.
 (+ subjonktivel).
- sublimañ v. (Kimiezh) (db. un danvez) tremen pe lakaat tremen war-eeun eus ar stad kalet d'ar stad aezhenn.
 (+ sublimadeg, sublimadenn, sublimadur, sublimerezh, sublimidigezh).
- suc'hellat v. enanalañ gant trouz, hv.rufañ, fronañ, chuchal. (+ suc'helladeg, suc'helladenn, suc'helladur, suc'hellerezh, suc'heller).
- sufrajetez gg. -ed anv roet e derou an 20-vet kantved d'ur vaouez a rae trouz ha bruderezh evit gounit d'ar merc'hed ar gwir-votiñ, dh. e Breizh-Veur.
- sug gg. -où, -ioù, suioù fun pe lerenn hir a stager ouzh korf ul loen en doare ma c'hell stlejañ ur c'harr, ur garg h.a. 2. (dre vras) kordenn evit stlejañ pe stagañ.
sugell gg. -où evel "sug 1".
suiad g. pe gg. -où an dachennad ma c'hell peuriñ enni ul loen staget gant ur sug pe ur gordenn.
suiañ v. stagañ (ul loen) gant ur sug pe ur gordenn.
- suienn gg. -ed (Coryphoena hippuris) pesk dour sall damalaouret e liv, hv.abadorenn, aouredenn, lagadeg, skolae, speg, taleg, doreadenn, doreenn.
- suilh ag. damzevet, damlosket en diavaez.
suilh g. damzevadur, damloskadur en diavaez.
suilhañ v. 1. damzeviñ, damleskiñ en diavaez, hv.gouleskiñ, paredenniñ. 2. tremen (un evn-porzhañ lazhet ha dibluet) buan dre ur flamm, evit devañ an dum a chom.
 3. (db. ar c'hroc'hen) duañ pe rouzañ gant an heol pe an avel, hv.kramenniñ.
 (+ suilhadeg, suilhadenn, suilhadur, suilhenezh, suilhidigezh).
- suilhek ag. (db. greun h.a.) krazet gant an heol.
suilhus ag. a suilh, gouest da suilhañ.
 (+ suilhusted, suilhuster).
- suj g. -où barrenn goad a lakaer war bennoù daou ejen sterniet ouzh un arar pe ur c'harr, hv.yev.
sujad g. sujidi unan a zo dindan veli un aotrouniezh bnk. (dh. beli ur roue, ur priñs h.a.).

sujañ v. 1. lakaat (oc'hon) dindan ar suj.
2. lakaat da sentiñ, da blegañ.
3. sentiñ, plegañ. (+ sujadur, sujerezh,
sujidigezh).

sujed g.-ed evel "sujad".

sujete gg. 1. sujidigezh. 2. holl sujidi (ur
roue, ur priñs h.a.).

sujed g.-où 1. abeg, kaoz. 2. danvez (ur gaozeadenn,
un dael, ur brezegenn, ur skrid h.a.).

sujenn gg.-où sug evit stlejañ un arar.

sukantin g. sukr glanaet, strinkennet hag aet damvoull.

sukr g.-où danvez blaz c'hwek dezhañ tennet eus plant

'zo, dh. ar c'horz-sukr hag ar boetrabez.

sukraj g.-où boued a bep seurt graet gant sukr.

sukrañ v. 1. lakaat sukr (en udb.). 2. reiñ

blaz sukr (da udb.). (+ sukradur,
sukrerezh, sukridigezh).

sukr-dev g. sukr teuzet ha rouzet gant an tan.

sukrerezh gg.-ioù labourva evit ober sukr.

sukrin as. (un.-enn) doare melloñsoù c'hwek-
-kenañ.

sukub g.-ed boud mojennel, diaoul e neuz ur vaouez.

Sul g.-ioù anv deiz kentañ ar sizhun.

Sul-al-Lard g. ar Sul a-raok ar C'horaiz.

Sul-al-Lore g. evel "Sul-Bleunioù".

Sul-ar-Beuz g. evel "Sul-Bleunioù".

Sul-Bleunioù g. ar Sul a-raok Sul-Fask.

Sul-Ened g. evel "Sul-al-Lard".

Sul-Fask g. ar Sul ma vez graet Gouel Pask.

Sul-Gwenn g. Sul Pantekost.

suliad g.-où ar pezh a reer en ur sulvezh.

sulieg g. dilhad, douget d'ar Sul, kacroc'h
ha kempennoc'h eget an dilhad douget
war ar sizhun.

suliek ag. eus ar Sul.

sulvezh g.-ioù padelezh ar Sul.

sulvezhiad g.-où evel "suliad".

sulvezhiennoù ls. Sulioù 'zo ur wech an amzer.

sulbedenn gg.-où komzoù lavaret pe bedenn graet evit
ma kouezho droug war ub. pe udb., hv.droukpedenn,
gwallbedenn, mallozh, milligadenn.

sulbedenniñ v. lavarout sulbedennoù.

sulbediñ v. evel "sulbedenniñ".

sulfat g.-où holen an drenkenn sulfurek.

sulfatañ v. 1. goleiñ pe bezañ goloet gant
sulfat. 2. sparfañ sulfat kouevr (war
ar plant). (+ sulfatadur, sulfaterezh).

sulfhidrek ag. tronkenn sulfhidrek kediañ
sulfur hag hidrogen.

sulfidenn gg.-où kediañ sulfur hag un elfenn
all.

sulfit g.-où holen an drenkenn sulfurus.

sulfur g. (S, niverenn atomek 16) divetal
arvelen a zev gant ur flamm glas, hv.soufr.

- sulfurek ag. ennañ sulfur gant ur valusted uhel ; trenkenn sulfurek (H_2SO_4) berenn eoulheñvel, diliv, implijet² kälz en ijinerezh.
- sulfurus ag. ennañ sulfur gant ur valusted izel ; trenkenn sulfurus (H_2SO_3).
- sultan g.-ed 1. rener er broioù muzulmat.
2. impalaer Turkia gwechall. (+ sultanel).
- sultanelezh gg.-ioù 1. beli ur sultan.
2. tachennad-vro dindan veli ur sultan.
- sultaniezh gg.-où evel "sultanelezh".
- sulugenn gg.-où bara poazhet el ludu.
- sun g.-où 1. ar sunañ. 2. dourenn o tont eus ar plant, ar c'hig h.a., hv.chug, chugon, saourenn.
- sunad g.-où 1. pennad sunañ. 2. ar pezh a suner en un taol.
- sunañ v. 1. tennañ un dourenn (diouzh udb.) er genou, dre harp an diweuz, pe an diweuz hag an teod. 2. tennañ pe sachañ (udb., un danvez bnk) dre ziwaskañ an aer en-dro dezhañ. (+ sunadeg, sunadenn, sunadur, sunerezh, sunidigezh).
- sun-buhez ag. (db. loened pe blant) a vev war ur boud bev, o sunañ e vagadur "ioutañ.
- sunek ag. leun a sun. (+ sunegezh).
- suner g.-ien 1. unan a sun. 2. (ls.-ioù) tra (benveg, organ h.a.) a dalvez da sunañ.
- sunerez gg.-ed ardivink evit sunañ.
- suner-gwad g. sunerien-wad boud mojennel a sav diouzh ur bez evit mont da sunañ gwad un den kousket.
- suner-poultr g. sunerioù-poultr ardivink evit naetaat dre sunañ ar poultr (diwar ul leur-di, pallennoù, arrebeuri h.a.).
- sun-gad g. 1. sun gwezvoud. 2. gwezvoud, hv.sl.laezh-gavr.
- superfosfat g.-où 1. holen trenkenn fosforek. 2. danvez ennañ fosfat kalkiom, implijet evit temzañ an douar.
- superior g.-ed rener un urzh pe un ti a relijion.
- supet ag. rivinet (er c'hoari-kartoù h.a.), hv.lutet, sklutet, sac'hlutet.
- I. sur ag. un tammig trenk, hv.goudrenk, piltrenk, skildrenk.
- suraat v. mont pe lakaat da vont sur, pe suroc'h.
- suraval g.-où frouezhenn ar suravalenn, melen, sur, hv.sitroñs.
- suravalenn gg.-ed (Citrus limonum) gwezenn eus kerentiad ar rutedeg, a gresk er broioù istrovanel.
- suroni gg. perzh un dra a zo sur.
- II. sur ag. 1. a zo anezhañ hep mar, hv.asur, diarvar, diogel, divarteze. 2. hep riskl, hv.diriskl, diarvar, dizañjer ; a dra sur hep mar.

suraat v. mont pe lakaat da vont sur.
(+ suradur, suraerezh, suraidigezh).

surentez gg. perzh un dra a zo sur.

surjian g. -ed mezeg a ra oberatadennoù war ar c'horf gant harp binvioù hag ardivinkoù, hv.oberataour.

surjianerezh g. micher pe skiant ur surjian. (+ surjianerezhel).

sutal v. ober ur son skiltr dre c'hwezhañ gant ar genou pe gant ur benveg (lakaet pe nann er genou), hv.c'hwitellat, c'hwibanañ. (+ sutadeg, sutadenn, suterezh, suter) ; kas da sutal kas kuit (ub. hegasus), hv.kas da stoupa.

sutell gg. -où 1. benveg evit sutal, hv. c'hwitell. 2. an darn eus ur brok pe ur picher e stumm ur beg pe ur gorzenn evit diskenn an dourenn a zo e-barzh, hv.flutenn. 3. an darn eus ur benveg-sonerezh dre c'hwezhañ a lakaer etre ar muzelloù.

sutellañ v. lakaat ur sutell (hvz ar ster 1) da vont en-dro. (+ sutelladeg, sutelladenn, sutellerezh, suteller).

sutell-evnetaer gg. sutell a zrevez galv un evn, implijet evit e zedennañ.

sutell-gorz gg. sutelloù-korz benveg-sonerezh, anezhañ ur gorzenn, toulloù enni, doare fleüt, hv.c'hwitell-gorz, skavenn.

suward g. -ed den karget da ziwall un dachennad hemolc'h pe jiboesaat, hv.gward-chase.

suzon g. -ed (Petromyzon pe Lampetra) pesk eus rannad ar c'hiklostomeged, kavet en dour dous pe ar mor, damheñvel e stumm ouzh hini ur silienn, a dag pesked all da sunañ o c'hig, hv.lamprezenn.

Svedad g. Svediz den eus Sveden, bro skandinaviat eus hanternoz Europa.

svedeg g. yezh skandinavek Sveden.
(+ svedegañ, svedeger, svedegour, svedegouriezh, svedek, svedekaat).

swahilg g. yezh vantouek, levezonet gant an arabeg, komzet e Zanzibar, e Kenia, hag a dalvez da genyezh en un darn vras eus reter ha kreiz Afrika.

(+ swahilegañ, swahileger, swahilgour, swahilgouriezh, swahilck, swahilekaat).

BODADEG-VLOAZ AR C'HEVRE KELTIEK gant Alan Heusaff

Betek-hen hor boa graet bodadegoù-bloaz ar C'hevren e Kembre pe en Iwerzhon. Hevlene e oa divizet en em vodañ e Kernev-Veur.

Da gentañ e tlee bezañ e derou Gouere. Met war ali sekretour ar Skourr du-hont e voe dibabet an dibenn-sizhun 16-18 a viz Here a-benn ar fin.

Forzh pe vare ne vez ket aes bochadiñ tud hag a zo skignet dre ar broioù keltiek evit daou zevezhiad labour hep nemeur a zihued. Ne oan ket en gortoz e teuje kalz eus an diavaez d'ur c'hornad ken distro ha Kernev-Veur, d'ur mare eus ar bloaz ma vez echu o chanoù gant ar studierien hag ar gelennerien. D'ar re a labour a-hed ar sizhun, ez eo re hir ar veaj evit bezañ gouest da vont-dont ha kemer perzh en ur c'hendalc'h.

Daoust da se e teuas trizek den eus an diavaez. Gant Kernevveuriz e oa etre pemp-warn-ugent ha tregont den er bodadoù-labour. Eus pep bro geltiek e oa deuet unan bennak da vihanañ.

Me a oa en glevet gant Anthony Edwards, sekretour Skourr Kembre, evit kejañ gantañ en aerborzh Bristol ha mont neuze en e garr-tan betek Truro. Un eur hanter dale a oa gant ar c'harr-nij en abeg d'ar c'houmoul izel. Goulennet en doa R.Green, sekretour Skourr Kernev-Veur, diganimp tremen dre vurev ar BBC e Plymouth evit enskrivañ un diviz. Eñ e-unan a vije du-hont. Gant an diwezhat ma oamp, e kavjomp gwelloc'h pellgomz diouzh ur gêriadenn en ardremez. Edo dres er studio. Ne oa ket dav deomp dont, emezañ : graet e oa an diviz. Antronoz e voe pellskignet.

Diraez a rejomp Truro da 7.30 eur, e koulz evit ar vodadenn gentañ.

En ur sal eus ar maerdi, enni un daol vras ha kadorioù evit tregont den bennak, e kejjomp gant un nebeut pennoù anavezet, - Pádraig O Conchúir, Green, Legonna, J.Irving ha reoù all a anavezis diouzh o anvioù evit un darn vat evel izili eus Strollad Broadel Kernev-Veur. Tamm-ha-tamm e leunias ar sal, pennoù Mebyon Kernow o chom er penn-traoñ d'an daol. Kroget e oa ar c'henbrezeg pa zegouezhas un Iwerzhonad ha daou Skosad, aozerien al levr nevez, "The Scottish Insurrection of 1820".

Ar c'hadoriad, Harvey Lander, - gwisket gant ur c'hilt, - a zo ezel eus ar Strollad Broadel. N'hon eus ket bet amzer da zivizout mat penaos e tle bezañ "sturiet" ar vodadenn. Lezel a ray pep hini da gomz un tammig re hervez e c'hoant. So a laka P.B.Ellis ha Scumas Mac a' Ghobhainn drouklaouen. Goulenn a raint da heul ar c'hondalc'h ma ve taolet ar brasañ cvezh hiviziken ouzh ar roll-labour.

 Aliet em boa gouestlañ ar vodadenn gentañ-mañ da sellout a-vras ouzh ar pezh a c'hoarvez d'ar mare er broioù keltiek.

Goude prezegenn degemer-mat R.Green, - e kerneveg, - troet lavarenn ha lavarenn e saozneg, e c'houlenn Lander digant un dilcuriad eus pep Skourr komz pep hini d'e dro.

Klask a ris digeriñ ur gendael a-zivout efed ar C'henvarc'had war ar broioù keltiek, o tennañ evezh war an tech da gengreizañ ar c'henderc'hadur en-dro d'ar c'hêrioù bras ha d'ar rannvroioù poblet-stank, ar frankiz peuzdiharz roet d'ar re a glask ar brasañ gounid-arc'hant, hag ar renk izel ma'z eo kouezhet diorroadur ar rannvroioù-gwrinn e prederioù ar Gumuniezh Armerzhel Europat.

Un emdroadur eo hag a c'hallfe reiñ d'an droiadouriezh al lec'h kentañ en armerzh hor broioù-ni. Gouzout a reomp ez eo fall evit spered ur bobl bezañ e dalc'h an "ijinerezh"-se. Bernadette Devlin he deus e ziskuliet, peogwir e rafe eus Iwerzhoniz ur bobl a vitizhien hag a borzherien. Pádraig O Conchúir a laosk ar ger "prostitution". Feukus : e Kernev-Veur e vev kalz diwar an droiadouriezh.

Donald Rawe, aze en tu all d'ar c'hadoriad (fiziet ennañ ar gefridi aozañ ur veilhadeg keltiek evit ar Sadorn abardaez) a lavar e tlefemp klask he zreiñ da vad hor sevenadur ; ar pezh a zo fall hepken eo an doare ma'z eo aozet, oc'h aotren ar splot a zeu diwarni da vont gant rastellerien-arc'hant, diavaezidi onezho peurvuiañ. Ret e vefe anataat d'ar genwerzhourien e klask an douristed gwelout ha klevout traoù disheñvel diouzh ar pezh a gavont en o c'hêr.

Unan bennak a erbed sevel ur Burev Troiadouriezh Keltiek gant harp kuzulioù-kêr pe lec'hel, dindan evezherezh-pobl, evit herzel ouzh an dagerien.

N'eo ket ni evelato a c'holl kemman kalz a dra er c'henfeurioù-se ! Mar gwelomp ez eus tu da aosaat ar beajoù etre ar broioù keltiek, e roimp an harp a c'hellimp d'ar re a sammo an emell eus ur Burev ...

 Tamallet eo bet d'ar C'hevre bout re sujet da c'hoantoù ha doare-gwelout Plaid Cymru. (Miret e vije bet ouzh Kembreiz 'zo da zont er C'hevre pa ne zegemerent ket e oa tu da zieubiñ hor broioù dre gaer hepken. A.Edwards a fell dezhañ spisaat e tle ar C'hevre bezañ digor da bep seurt broadelourien. N'eo ket dav e vefe ken unvan hag ur strollad politikel. Kemend-all a zo empleget er vonreizh a vo kinniget a-benn disul.

 A drugarez d'ar vodadenn-mañ hon eus bet tro d'ober un tammig anaoudegezh an cil re gant ar re all. Dasparzhet ez eus bet a bep seurt paperennoù e-mesk ar gendalc'hidi : miziad Mobyon Kernow, THE CORNISH NATION, moulet war baper damluf, o kevezata gant hini liesskrivet ar Strollad Broedel, THE CORNISH INDEPENDENT.

En ostaleri ma'z omp aet da evañ ur banne e kavomp ar Breizhad F.S., hag a zo o paouez degouezhout, a-gevret gant M. Pederson eus Cwmbrân, Kembre.

Gouzavet on bet a-zivout ar sachadeg a zo etre Mebyon Kernow ha re ar Strollad Broadel. Leonard Truran, prezidant Mebyon Kernow, a grog diouzhtu da'm c'henteliañ diwar-benn an ezhomm da vont goustadik e Kernev-Veur, gant aon da spontañ ur bobl hag he deus kollet pep merk eus he broadelezh, war-bouez un emskiant dispis eus he disheñvelled diouzh ar Saozon.

"Ginañ a rafe an dud ma lavarfemp e fell deomp adober eus ar c'herneveg o yezh pemdeziek," emezañ. "Ar muiañ a c'hellomp ober bremañ eo aliañ anezho d'e zeskiñ."

Hag e kendalc'has sekretour Mebyon Kernow :

"Arabat ober ur gudenn bolitikel eus ar yezh. Hor pouez-mouezh, hon doare da gomz saozneg, a zo dibar; koulz merk eo hag ar yezh hec'h-unan eus hor broadelezh. Mar deo ur gudenn bolitikel, n'eo ket pouezus hen lavarout c'hoazh. Pezh a zo d'ober eo tennañ evezh hor c'henvroiz war saviad armerzhel ha kevredigezhel ar vro-mañ, ha kizidikaat anezho evel-se. Arabat deomp mont re vuan : deomp hepken ur c'hammed pe zaou pelloc'h war-raok eget hor c'henvroiz."

Kareziñ a reont ar gostezenn all.

Ne nac'hont ket ez eo gwirion an darn vrasañ anezho. Touellet e vefent avat.

Deuet on da selaou. Tostoc'h e kavan ar "vroadelourien" da'm doare-soñjal. Pere ar re efedusañ, n'on ket evit lavarout. Aliet em eus Green, ha n'eo ket stag ouzh an eil re nag ar re all, da strivañ d'o lakaat da genober e-barzh ar Skourr, hep klask kemer roll an eil rummad pe egile.

Diwezhat eo pa dizhomp ti Green, ugent kilometr bennak diouzh Truro. Eñ eo a ro herberc'h d'an darn vrasañ eus an diavaezidi.

Dudius eo, antronoz vintin, dihuniñ o klevout leueoù o vlejal en ur vereuri e-kichen, hag arvestiñ ouzh un dremmweliad torgennoù tro-war-dro. Dre hentoù kamm-digamm e tizhomp ar sal ma vo graet ar peurrest eus hor bodadegoù, en ur fabourz eus Redruth.

Dalc'hiad ar Sadorn vintin a zo gouestlet d'an danevelloù sekretourien : petra a zo bet graet e-kerz ar bloaz, peseurt kemmoù a zo deuet e niver an izili, kudennoù arc'hant hag all.

Kresket-mat eo hor c'henurzhiadur e Bro-Skos, Manav ha Kernev, tra ma chom tost an hanter eus an izili o Skourr Kembre. War-dro 1.500 den a zo bet en holl er C'hevre, - n'eur ket evit gouzout resis a-wechoù hag izili pe goumananterien a zo anezho, - met e-doug ar bloavezhioù, ez eus chomet un drederenn bennak hep adkoumanantiñ.

Ne glaskomp ket dastum un niver bras a izili, met skoulmañ darempredoù tost etre ar re a labour a-zevri war dachenn pe dachenn evit hor broioù. Ezhomm hon eus da gaout a-walc'h a goumananterien evit embann al Levr-Bloaz hag an trimiziad CELTIC NEWS hep sammañ dle, - pezh hon eus graet betek-hen. Broudet e vezomp gant tud ha na roont ket o amzer neg o nerzh d'ar C'hevre d'en em ziskleriañ a-du gant doareoù-stourm dispac'husoc'h, da embann menozioù taeroc'h, da zisteurel ar saozneg, da droc'hañ an ercoù gant strolladoù habask. Bez' e c'haller atav kaout taeroc'h eget an nen, ha ma vefe graet diouto, ne vefe eus ar C'hevre nemet 50 pe 100 den ken prest ha biskoazh da eskumunugañ unan bennak.

Evel m'emaomp, e talc'h muioc'h a dud d'hon harpañ eus an eil bloaz d'egile. Met evit kempouez hon arc'hanterezh e rankimp adalek miz Genver a zeu uhelaat ar skodenn pe goumanant-bloaz da £1 (evit Skourr Breizh e vo un tammig muioc'h en abeg da vizoù-post uheloc'h.

Kadoriad kuzul-kêr Redruth-Camborn a zo deuet da hetañ deomp donedigezh-vat e Kernev-Veur. An Ao.Bosanko, - un anv kernevek-rik ? - a daol evezh da spisaat ne dalvez ket e zegemer kement ha bout a-du gant hor menozioù, ha da gentañ ez eo un tammig reut hon diviz. O komz eus stad an armerzh e Kernev-Veur hag eus arnodoù ar c'hConcorde, e teu da dommañ, hag a-benn ar fin ez eo chomet un curvezh e-lec'h ugent munud.

Gouez da Gerneviz, n'eo ket bet amzer gollet.

Kouviet ez eus c'hwec'h eus kefrididi ar C'hevre da verennañ gant renerien Mcbyon Kernow.

Un tamm souc'het on o klevout unan hag a zo komunour o lavarout ur bedenn e kerneveg.

Emaon e-kichen Truran ha Lander. Hemañ a zo er C.N.P. (Strollad Broadel Kernev-Veur), met dont a reont a-benn da devel war an diforc'h a zo etrezo o-daou.

Truran a anzav n'en deus ket desket kerneveg ha n'eo ket deuret kalz gentañ kennebout. An deiz war-lorc'h ez on act d'e di : unan eus e ziv vere'h a zo kroget-mat da zeskiñ ar yezh.

D'ar Sadorn en endervezh hon eus divizet diwar-benn al Levr-Bloaz evit 1971 ha CELTIC NEWS.

A-du omp holl evit reiñ muioc'h a lec'h d'ar yezhoù keltiek el Levr. Ur gudenn bleustrek eo : pennadoù en ur yezh keltiek a vo talvoudus dreist-holl mar roont da anaout ar pezh a e'hoarvez er broioù keltiek all.

Kembreiz ha Kerneviz a c'houlenn perak ne vez ket moulet unan da vihanañ e galleg. Betek-hen ez eo Breizhiz o deus nac'het hon aotren. Hepket hon crez ouzh ar yezh-se, ne gav ket deomp e vo dedennet kalz Brezhoned

ha na ouzont ket saozneg war zigarez e vefe div pe deir fajennad e galleg el levr. Asantet hon eus koulskoude ober ur goulenn dre CELTIC NEWS evit gwelout pegement a izili e Breizh hag e lec'h all a garfe e rafemp diouzh ar c'hinnig-se.

E-keñver frammadur ar C'hevren, poellgorioù-skourr a zo bet savet e Dulenn hag e London, ha kevrennoù eus Skourr Alba a zo bet aozet en-dro da Inverness ha da C'hlasco'ho. N'eus ket bet tu da aozañ dilennadegoù d'ar poellgorioù-skourr e neblec'h c'hoazh.

Ne da ket re vat an traoù gant Skourr etrevroadel New York, ha goude ur c'hinnig eus Krec'h-ar-Roue, n'hon eus nemeur a geloù eus ar Skourr lec'hel a dlee bout savet eno ivez. Bruderezh a vez graet gant ur Skosat hag un Iwerzhonad en Aostralia.

D'ar Sadorn da noz e oa aozet ur "veilhadez" e C'hoariva an Arzoù, e Sant-Aostell, e tu ar reter eus Truro. Spi a oa e vije deuet a-walc'h a dud evit paeañ un darn vat eus mizoù ar C'hendalc'h, met ne oa nemet hanter leun ar sal. Ne oa ket bet roet amzer a-walc'h da zDonald Rawe da brientiñ an abadenn.

Goulennet en doa digant ar re ac'hanomp na oant ket Kernevveuriz kemer perzh en displegadegoù dre ganañ pe zezrevellañ ur varzhoneg war al leurenn. F.S. a ganas "Kan-Bale Juluan Kadoudal", A. Edwards a lennas un "englyn" fromus e koun eus J.E. Jones, ouzh e dreiñ goude se e saozneg. P.O. Conchúir a zisplegas barzhoneg Yeats "1916". Kernevveuriz a roas un displegadedeg liesneuz : laz-seniñ (ne gavis netra gwall geltiek er sonerezh ...), daou bezhig-c'hoari, enno arroudoù e kerneveg, barzhonegoù ha sonioù. Dihuedus e gwirionez. Diskouezet e voe ur film-liv, "Spring comes to Cornwall", bourrus, met ur wech c'hoazh, ne oa ket kalz a dra ennañ da wiriekaat e oa bet luc'h-skeudennet e Kernev-Veur.

Un diskouezadeg skulterezh, liverezh ha poderezh a oa en ur sal all. Delwenoù pri-poazh heneuz a oa eno. Met ac'hubet e oan gant traoù all, divizoù ha gwerzh levrioù, ha ne c'hellis ket sellout pizh ouzh an oberennoù. Ret eo lavarout o doa poaniet Kernev-Veuriz da aozañ mat an abardaevezhiad-se.

D'ar Sul da veure e pledomp d'un dek mennad bennak.

Da gentañ, unan a-zivout Euskariz. Laouen omp o welout ec'h asant Gwynfor Evans da ziskleriañ e harp d'ar 16 brogarour a dle bezañ barnet e Burgos, un darn vat tamallet dezho bezañ kemeret perzh e lazhidigezh un enseller polis politikel. Divizet hon cus skrivañ a-du ganto da benn ar gouarnamant spagnat, reiñ skridoù d'ar c'helaouennoù da embann diwar-benn ar gwaskerezh en Euzkadi, aozañ displegadegoù dirak ar c'hannaddioù e Dulenn ha London, hag all. (Koment-se a zo bet graet pe a vez graet c'hoazh e Dulenn d'an ampoent).

A-du omp evit sevel klemm a-enep disrannadur tachennoù 'zo e Gevred Kernev-Veur diouzh ar vro evit o stagañ ouzh Plymouth (ezhomm he deus ar gêr-mañ da vrasaat, neketa ...).

Divizet hon eus harpañ ar re a harz ouzh serridigezh skolioù kentañ-derez er c'hornioù-bro ma vez komzet yezhoù keltiek, pa denn an dra-se da zispenn kumuniezh an dud eno.

Diskleriañ a reomp ne gлот ket aozadur armerzhel ha politikel ar "Gumuniezh Europat" gant ezhommoù ar broioù keltiek.

Goulenn a reomp ma vo roet ur servij skinwel dibar da bep bro geltiek, ha ma vo lec'h a-walc'h en o frogrammoù evit hor yezhoù hag hon istor (1).

A. Edwards a ginnig e savfemp ur strollad-enklask evit gwelout ha tu a vefe da lakaat danvez-kannaded e dilennadegoù lec'hel, e-lec'h ma'z eus divroidi eus ar broioù kelt, e Bro-Saoz. N'eo ket sur e ve mat ar mennad-se, met klasket e vo kaout meno ar re a oar gwellañ hag e talvezfe ar boan.

Pep Skourr eus ar C'hevre a dle hiviziken aozañ ur vodadeg foran ur wech ar bloaz, gant ur prezeger eus ar vro geltiek all mar deus tu, evit reiñ gwelloc'h da anaout ar pezh a c'hoarvez er "C'heltva". Da heul pep bodadenn e vo aozet un abadenn "gevredigezhel", ma vo kaoz ha kan hag un dra bennak da evañ.

Breutaet hon eus testenn ur vonreizh en ugent kraf, hag hor boa ragaozet e-pad ar mizvezhioù tremenet. Degemeret eo bet, gant un nebeut gwellaennoù, war an diviz ma vo gwellaet c'hoazh diouzh ret a-benn bloaz. Bremañ hon eus reolennoù peuzspis evit hon heñchañ mar sav diaesterioù er c'henurzhiadur.

Evel just, e penn ar gont, e vo ar berzh diouzh ar youl da genober, met talvoud a ray ar benveg nevez da gompezañ an hent emichañs.

Evit echuiñ, ez eus bet pedet un hanter dousennad eus kefridiidi ar C'hevre da goaniañ gant renerien ar Strollad Broadel. C'hoant am boa da chom un devezh pe zaou ouzhpenn e Kernev-Veur, evit gwelout bro ha tud, met ober a ris va mad eus an "diloc'h" a ginnige din M. Pederson : da nav eur hanter e kuitaemp Camborn, ha da beder eur e oamp erru e Cwmbrân, nepell diouzh Kerdiz.

(1) Kaset hon eus lizheroù d'ar pennadurezhioù a sell ar mennadoù-se outo, da heul ar C'hondalc'h, evit o diskleriañ dezho.

=====
=====

AR YEZH KASOUBEK

gant Ferdinand Neureiter

troet gant Roparz Hemon

Ar pennad-mañ, Vom Menschenrecht
der Kaschuben auf Erhaltung ihrer Muttersprache,
 a zo tennet diouzh ar gelaouenn DAS MENSCHENRECHT,
 Vienna, Here 1970.

Pobl vihan ar Gasoubed, evit mirout betek hiziv he yezh hag he dibarelezh, he deus ranket stourm ouzh pep skoilh lakaet war he hent gant an tonkadur.

Pobloù amezek, niverusoc'h, ha brasoc'h o ferzh en Istor, evel an Obodrited, ar Vilzed hag ar Raned, o deus kollet o yezh, ha da heul o fersonelezh. N'eus nemet ar Gasoubed, a-unan gant ar Sorabed, e-touez ar pobloù slavek, o deus dalc'het d'o yezh, hag i renet e-pad bloavezhioù hir gant Alamaned ; dre se, n'int ket kouezhet en diskar hag en damankounac'h.

Hogos dianav eo strivoù ar Gasoubed da virout o yezh vroadel. O c'hotañ a rin amañ berr-ha-berr.

Ar Bomeraned, hendadoù ar Gasoubed a vremañ, a veve er Grennamzer er vro anvet diouzh o anv Pomerania (po morze = en arvor), da lavarout eo en ur vandennad-douar a-hed ar Mor Baltek, etre an Oder hag ar Vistula. Ne ouzer ket resis penaos e teuas ar Bomeraned da vezañ Kasoubed. En 13-vet kantved, konted Stettin (Szczecin) o doa endeo an titl "Dux Slavorum et Cassubiae".

Pa grogas an Alamaned da drevadenniñ ar Reter, e voe bountet ar c'hasoubeg, hag e rankas kilañ a dachenn da dachenn tamm-ha-tamm.

Spontus e voe dreist-holl darvoudoù Brezel an Tregont Vloaz. "Pommerland ist abgebrannt" (Pulluc'het eo Pomerania) ne oa siwazh nemet ar wirionez kriz. An tachennoù diboblet, peurvuañ diwar-goust ar Gasoubed, a voe annezet gant Alamaned.

Ar Gasoubed neuze a zalc'has pellañ e Pomerania ar Reter, en-dro da Lenn Leba. Amañ e c'hellomp mat kaout un alberz eus o steuzidigezh, a drugarez da varilh-iliz Glowitz. E 1713 ne oa nemet 559 a alamanegerien e-touez ar gomunierien, e-skoaz 3152 a gasoubegerien. Betek 1841, ne voe nemet gounid evit an alamanegerien, hag er bloaz-se e oant niverusoc'h endeo. Diwar neuze, ez eas buan ar gasoubegerien diouzh an tu-koll. E 1851 e oa 3838 alamaneger, ha 1178 kasoubeger hepken. E 1888 e oa 5037 alamaneger, hag ar gasoubegerien ne vezent mui kontet. Daoust da se, e chomas un nebeud anezho e Kluki (Klucken) war ribl al Lenn Leba, betek an eil Brezel-Bed.

Hiziv emañ tachennad-annez ar Gasoubed, strizh pe distrizh he bevennoù, e piaou ar Stad poloniat, e ledenez Hela ha tro-dro d'ar c'hêrioù Puck, Wejherowo, Kartuzy ha Kościerzyna (1).

Lakaet e vez o niver etre 150.000 ha 200.000. En dachennad-se, a war-dro 500 km², ez eo chomet bev ar c'hasoubeg daoust da bep striv-heñvelaat.

Abaoe marv diwezhañ rener dizalc'h ar Gasoubed, Mestwin II, da zeiz Nedeleg-1294, n'eus ket bet a Stad emren, hag ar bobl a zo bet a bep eil sujet d'ar polonekadur ha d'an alamanekadur, sevenet gant youl ha nerzh brasoc'h pe vihanoc'h. An alamanekadur a voe en e greñvañ e dibenn an 18-vet kantved, pa voe roet ar vro da Brus goude disrannerezh Polonia. Gouzout a reer avat e tiwan enepwask ouzh ar gwask, er bed broadel evel er bed fizikel.

Enkrezet o welout e oa darev ar c'hasoubeg da vervel, ur mezeg, Florian Ceynowa (1817-1881), a savas da zifenn e bobl. Hag eñ war e studi e Breslau, en doa graet anaoudegezh gant strivadennoù broadel an Tcheked, ar Slovaked hag ar Sorabed, hag e tivizas skignañ mennadoù heñvel e-touez ar Gasoubed, e genvroiz. Skrivañ a reas ur Yezhadur ar C'hasoubeg ; embann a reas ar gentañ kelaouenn gasoubek ; aozañ a reas pennadoù-skrid ledañ-deskamant ; dastum a reas marvailhoù ha krennlavarioù ; sevel a reas kenseurtiezhoù evit gwellaat stad danvezel e bobl.

E labour avat evit brudañ an emskiant vroadel a zougas nebeut a frouezh en e amzer. Ne voe ket komprenet gant e genvroiz, ha taget-c'hwerv e voe gant an dudjentil hag ar gloer a-du gant Polonia. Lavaret e voe e kinnige rannañ muioc'h e'hoazh ur vro rannet e tri, dre ma felle dezhañ gorren ar Gasoubed da renk ur vroadelezh, krouiñ ur yezh lennek dezho o-unan.

Ur mezeg all, Aleksander Majkowski (1876-1938), an hini eo a zeuas a-benn da reiñ buhez, er bloavezhioù a-raok ar c'hentañ Brezel-Bed, d'un emsav a verzer e levezon e'hoazh en deiz a hiziv. En-dro d'e gelaouenn GRYF e vodas un tolpad skrivagnerien, a implijas o yezh evit ar wech kentañ da sevel oberoù lennegezh. Ret e voe d'ar gelaouenn aozañ ur yezh unvan, dieub diouzh ar stummoù rannyezhel disheñvel, rak biskoazh ne oa bet graet gant ar c'hasoubeg en iliz nag er skol (un taol-arnod graet e Pomerania ar Reter en amzer an Disivoud da sevel ul liturgiezh kasoubek a oa bet ur c'hwitadenn hag a chomas dilevezon.

Pal Majkowski oa deskiñ d'ar Gasoubed karout o yezh ha trec'hiñ war o "c'hempleg a vihaniver". Kenderc'hel a reas gant e labour war-lerc'h ar c'hentañ Brezel-Bed,

(1) Notenn gant an troour : nepell diouzh kêr Danzig (Gdansk), diouzh tu ar c'huzh-heol.

ma oa aet ar vro adarre dindan veli Bolonia. Hogen re zister e oa niver ar Gasoubed desket hag emskiantek, hag aozet e voe un drevadennadeg kreñv eus diabarzhvro Bolonia, dreist-holl gant tud o tont eus Galizia.

Da heul e savas eneberezh taer a-berzh ur strollad brogarourien, a yeas war greskiñ. Evit ar wech kentañ e teuas fraezh a-wel ul luskad disrannerezh, hag e skedas huñvre ur Stad kasoub, eus an Oder d'ar Vistula.

Padal, etre an daou Vrezel-Bed, e voe merzet ul luskad all ivez : startaat an unaniezh gant Polonia, evit treuzvevañ ha derc'hel penn ouzh an Alamaned, o "Striv trema ar Reter" o tont sklaeroc'h atav. Rendaclañ a raed, hegarat evelato, e kasoubeg.

Gant an eil Brezel-Bed e voe kaset trumm pep obererezh a-du gant ar c'hasoubeg da get. E-pad an dalc'hidigezh gant an Alamaned e voe berzet implij ar yezh, hag ar Gasoubed a voe "alamaneket" ez kefridiel. Hag e-pad ar bloavezhioù goude 1948, dreist-holl er marevezh "stalinat", ne voe ket aes d'ar c'hasoubeg dihaniñ.

E 1956 hepken, gant "Miz Here Polonia", e c'hallas ur gelaouenn gasoubek, ("KASZEBE") bezañ embannet adarre, hag ez advleunias ur wir emskiant vroadel. Ankounac'hact e voe an tabutoù a wechall. Ar re eus ar skrivagnerien gozh a chome c'hoazh e buhez, hag ur rummad skrivagnerien nevez diwanet en un taol a roas d'ar c'hasoubeg ur sked n'en doa bet biskoazh.

Neuze eo e savas ar skolaer Jan Trepczyk (ganet e 1907) e varzhoneg fromus, Kaszebsko mova :

Ar yezh kasoubek

Mirerez teñzorioù sakr
ar bloavezhioù tremenet,
te hepken a c'hell diwall
eñvor ha brogarantez.
Heñvel out ouzh ar blaenenn
ledet e splannder an deiz.
Tintal a rez 'vel ur c'hloc'h
a-dreuz ar beurbadelezh.
Pa striv kalet an estren
da'z astenn e-barzh ar bez,
warnomp dalc'hmat e parez,
buhezek evel an tan.

Yezh va c'havell, da'm skouarn,
peseurt son a zo c'hwekoc'h ?
Me az kar. Kriz ar galon
a c'hallfe da zisoñjal.
Yezh vurzhdus, te 'zo din
'vel ur c'hoar muiañ-karet,
adalek va yaouankiz,
bemdez er gêr em c'hichen.

Ennout e lamm gwad hor pobl,
 dimp e roez ar vuhez.
 Eus islonk an dismegañs,
 sav lore'hus davet an oabl.

Yezh va e'havell, da wiskañ
 e dilhad kaer a fell dimp,
 ma lintri ouzh sked an heol,
 evel ouzh skleur ar stered.

Ar barzhoneg-se a zellez bezañ anavezet en tu-hont
 da harzoù bro ar Gasoubed ; pobloù bihan all a c'hell
 bezañ kalonekaet gantañ.

Daoust ma rankas ar gelaouenn KASZEBE mont da get
 e 1961, mouget gant lusk kreizennus Polonia, daoust ma
 vez dalc'hmat ar skolioù, ar servij-soudard, ar c'hel-
 aouennoù, ar skingomz, ar skinwel, hag ivez an Iliz
 o tiframmañ dere'hvoud pobl ar Gasoubed, ez eus c'hoazh
 brogarourien, a laka o nerzh-krouiñ hag o ijin da
 binvidikaat ha da zifenn ar c'hasoubeg.

Rak, evel a lavar ar skrivagner kembraek Saunders
 Lewis : "Difenn ur yezh a zo difenn ur gevredigezh,
 difenn tiez ha tiegezhioù."

=====

BREZHONEG SKRIVET HA BREZHONEG KOMZET

D'an 12 a viz Du, e reas
 Roparz Hemon ur brezegenn saoznek
 e Skol-Veur Dulenn, a-berzh
 Ensavadur ar Studioù Uhel.

Setu amañ un diverrañ eus ar
 brezegenn-se.

Gouzout a reer e tleer ober diforc'h etre ar yezh
 evel ma vez komzet hag ar yezh evel ma vez skrivet.
 Pa reomp istor ur yezh ne c'hellomp avat implijout
 nemet skridoù. Gwir eo an dra-se evit ar brezhoneg
 koulz hag evit an holl yezhoù all.

Daoust n'eus tu ebet da c'houzout resis petra oa
 ar brezhoneg komzet e mare pe vare eus e istor, ez eus
 tu da vihanañ da verkañ pescort kemm a oa etrezañ hag
 ar brezhoneg skrivet er mare-se.

Pa zeuas divroerien eus Breizh-Veur da annezañ
 e ledenez kornog Galia, eus ar 5-vet d'ar 7-vet kantved,
 e teuas ganto o yezh keltiek, a gomzent, hag a skrivent
 ivez. Betek an 11-vet kantved e voe darempredoù start
 etre Breizh, Kembre ha Kernev-Veur. Yezh an divizoù
 pemdezick e Breizh a oa hep mar disheñvel diouzh yezh
 an divizoù pemdezick e Kernev-Veur hag e Kembre.

Tost heñvel e oa evelato ar yezh skrivet en teir bro.
Bez' e oa yezh kefridiel ar renkadoù-tud uhelañ.

Diwar an derou eta e oa kemm etre ar brezhoneg skrivet hag ar brezhoneg komzet, ha kemm a zo bet bepred betek an deiz a hiziv.

Neboud a van eus ar skridoù savet en 12-vet, 13-vet ha 14-vet kantved. Da varn diouzh an testennoù a zo bet miret adalek ar 15-vet kantved, e welomp e oa neuze gant ar Vrezhoneg ur yezh lennegel, arziinet, diforc'h diouzh ar yezh komzet gant ar bobl. Edo ar yezh komzet oc'h emdreiñ dibaouez, bruzunet e rannyezhoù. Ha koulskoude e chomas ar yezh skrivet tost digemm betek kreiz ar 17-vet kantved.

Daoust ma voe adaozet an doare-skrivañ neuze, ne dostaas nemeur ar brezhoneg lennegel ouzh ar brezhoneg komzet en 18-vet kantved. E-lec'h ur yezh skrivet unvan, avat, en em furmas, hep kalz urzh, teir yezh skrivet : leoneg, tregerieg ha gwenedeg.

En 19-vet hag en 20-vet kantved, an doug d'ar c'hlan-yezhegezh a reas ma voe krouet miliadoù gerioù nevez, hage ledanaas c'hoazh an troc'h etre ar yezh lennek ha teodyezhoù ar bobl.

Zoken en hon amzer, daoust d'an niver bras a studiadennoù gouiziek graet, e chom diglok hon anaoudegezh eus ar brezhoneg komzet.

En amzer-mañ hepken, a drugarez da ijinadennoù evel ar bandennoù magnetek, ez omp barrek da zastum dielloù-komz, distag diouzh an dielloù-skrid. Ha tu a vezo, en diwezh, da sevel un taolennadur resis eus ar yezh komzet.

=====

VA FARKAD ED

gant Herve Ar Menn

Feiz, gleborek eo bet miz C'hwevrer hag un darn vras a viz Meurzh. Setu perak ne oa ket hadet va farkad ed e-touez ar re gentañ. Gant pounnerik m'eo va douar, e oa ranket gortoz ur bann heol bennak d'e zisec'hañ kent e labourat, pe e vije aet da bri. An had houarnet ennañ n'en dije ket kellidet.

Mat, hadet eo bet va farkad abred a-walc'h da reiñ kant evit unan.

"Un tammig brokus ez ez ganti," eme va amezeg din, "biskoazh douar ar vro n'en deus roet kemend-all. Doue hopken a ro kant evit unan eus ar madoberoù."

Lavarout a rafen a-walc'h n'emañ ket ar c'hiz ganin da vuzuliañ bihan, pa ne vez ket anv din da ziyalc'hañ.

Gwolet em eus ar greun o tiskenn eus an haderezh, lerc'h-war-lerc'h, evel ar merien o vont d'o labour, hag o kouezhañ d'an douar, kerkent goloet. Un teir sizhun bennak diwezhatoc'h, dre sellout pizh, e welen du-mañ

du-hont deliennoùigoù strizh o tont er-maez a'n douar. Bemdez e kreske o niver. Dindan un nebeut devezhioù e oa glazet an dachennad douar gell ganto. Rouez e kaven va bodoù ed da gontañ. Dont a rejont da gefiañ e berr amzer, ma oant stank a-walc'h en diwezh. Goude e veze kenstriv ganto da c'houzout pere anezho a savje a-us d'ar re all.

Daoust ha demokrated eo va bodoù ed ? Ya, emichañs, rak dibaot ar re a savas o fenn a-us d'o breudeur. Gwa ivez d'an hini dister a chomfe war-lerc'h da greskiñ. Mouget e vefe, digas. Stourm ar vuhez eo.

Alies e teuan da weladenniñ va farkad. Nag e trid va c'halon o welout pep kefiad o kreskiñ dibaouez, ar bodoù o sovel war-ecun d'an nec'h, davet an heol, an ec'honder da bere'hennañ. Un nevez 'zo eo diveuzet ar pennoù diouzh ar c'holoenoù savet sonn er vann. Dre ma tremen an deizioù, bep un tammig e stouont o fenn, evel krennbaotrezed a grog da ruziañ hep gouzout dare perak. Muioe'h-mui e stou va farkad ed e bennoù, par d'unan bennak kroget ar vezh ennañ. Bemdez e kresk ar greun o kaledañ. Kollet he deus an dachenn he liv gwer-teñval. Echu eo kresk ar blouzenn. D'ar greun ez a holl ar jol bremañ.

Nag a blijadur din-me, ar perc'henn, gwelout va ed o hejañ e bennoù d'an disterañ c'hwezh avel, pe o plegañ betek an douar dindan fourradoù avel-stourm. Sun an douar 'ta, va farkad, war-nes frailhañ gant o c'hofadoù bleud ! Emberr e teuio termen da vuhez.

Dornataet e veze da rummadoù kent, pa oant doujet evel un doue. Da falzet ha falc'het em eus, un hanter kantved a zo. Abaoe eo tremenet falc'herez ha mederezh dre ar parkoù. Warc'hoazh e teuio ar falc'herez-dornerez, az pilo, az torno kerkent. Nezet e vezo da c'hrcun ha boutellet da blouz ken buan all, gant ken nebeut a zoujañs ha m'en deus ar ramz d'ar preñvig-douar.


Bez dienkrez koulskoude, va farkad ed ! N'eo ket an ardivinkoù ramzel a gemmo dit da donkadur.

=====

NOTENN DIWAR-BENN "AN HENT-HOUARN"

An tamm barzhonog ombannet war ABK miz Kerzu, p.333, a zo derou ur ganaouenn savet gant Prosper Proux, a gaver en he fezh e levr Taldir a-zivout ar barzh-se (Karaez 1913), p.213.

En destenn embannet ganimp ez eus un nebeut traoù dishcñvel diouzh ar re a gaver el levr.



AN AOZADUR GLADDALC'HEL

troet diwar
Istor Breizh

La Borderie
(Levrenn III)

BRASTRES

Etre Breizh evel m'edo a-raok an dalc'hidigezh hir ha reuzus gant an Normaned, adalek 919-937, ha Breizh dasorc'het goude ar gwallrouestl-se ez eus, evel hon eus lavaret, ur foz, pe gentoc'h marteze un islonk.

En islonk-se kleuzet ganto, o doa an alouberien norman kriz taolet, torret, bruzunet, kaset da get holl ensavadurioù ar gevredigezh vrezhon a wechall.

Alan Varvek, diazezet e Naoned, a c'halvas en-dro an holl Vrezhoned aet da chom e Bro-Saoz hag e Bro-C'hall. Pounner ar garg a ranke seveniñ, adsevel ar gevredigezh a-bezh, adober an holl ensavadurioù a dlee bezañ he sichenn, reiñ dezhi stumm ha goudor, suraat he nerzh, he buhez, he bezañs.

Ar c'hentañ benveg kevredigezhel da adsevel oa beli ar rener : hep ur rener n'eus ket a vroad, n'eus nemet un tolpad tud, ur poultr luziet, difurm, dizurzh.

Er pevar fennad diwezhañ, - adalek Alan Varvek betek Alan Tev, - hon eus gwelet ar veli dugel oc'h en em aozañ. Un aozidigezh prenet gant meur a striv ha meur a stourm, hag oc'h ober berzh en diwezh, evel m'emaomp o paouez displegañ.

En-dro d'ar greizenn rekis-se, beli ar rener, e tleomp bremañ diskouez penaos e voe adkempennet an ensavadurioù kevredigezhel all :

Da gentañ, ar renkad uhelañ, hini ar vlenierien, o vont eus uheldadelezh ar "plouioù" hag o fennoù-bras d'ur vrientinelezh c'hladdalc'hel.

D'an eil, pobl ar c'hêrioù hag ar maezioù, ha kellidoù, pennlinennoù kentañ ar vourc'hizelezh hag an Trede Stad o tont a-wel.

En diwezh, an Iliz, kaset da get gant aloubadeg 919, ha neuze mac'homet, damvouget gant kammvoazioù mantrus diwanet da heul ar c'hladdalc'helezh. Gwelout a raimp e vo trec'h d'an daou varv-se, hag e savo diwar he dismantrou, bleuniusoc'h, galloudusoc'h, o ren ur vuhez nevez.

1) Lez an dug

E lein ar savadur gladdalc'hel emañ an dug ; ar rener eo, hag ivez ar pennaotrou, da lavarout eo, kentañ aotrou gladdalc'hel Breizh.

Kreizenn ar savadur a zo lez an dug.

Arabat faltaziañ ul lez-varn strizh, gant reizh-aouerien o tougen saeoù hir, kaskennoù ha kebell plat, renket e stumm ur garrezenn en-dro d'ar priñs, evel ma vezont skeudennet war engravadur Alan Bouchart (mouladur 1514, follenn 118-b).

Un dra all eo. Bez' e oa ur vodadeg niverus ha lidel, enni ar vegenn eus an dugelezh : eskeb, ebed, kloer vrudet, konted, beskonted, tudjentil ha brezelourien galonek, gwizien vras ha bihan, ofiserien an ti dugel, h.a. Hag ar vodadeg-se a veze galvet gant an dug d'al lec'h ha d'ar mare a blije dezhañ, teir pe beder gwech ar bloaz da nebeutañ, aliesoc'h diouzh ret.

Petra a raed eno ?

Da gentañ, hep ket a var, e veze graet chervad, evel reizh diwar-goust an dug en doa galvet an holl dud-se hag a rae eta un taol-gwel war ar vroad. Digarez e oa da festoù druz, da ouelioù laouen, da hemole'hadennoù feuls ha ferv.

Etretant e pleustred war gefridioù. An dug a ginnige hag a embanne e ordrenañsoù, a rae gwirickaant an donezonoù-aluzen roet gantañ d'an abatioù, d'an ilizoù, d'e servijerien gadarnañ hag emroüsañ, hag a zivize ganto diwar-benn peoc'h ha brezel h.a. En diwezh e varned ar prosezou a zelleze bezañ kaset dirak al lez-varn uhel-se, en abeg d'o doare ha d'o fouez. Er prosezou-se e veze dilennet gant al lez dugel a-bezh darn eus hec'h izili da aozañ ur strollad-kefridi barnerezhel, a studie an danvez, a save un danevell-skrid, hag a ginnige ur mennad, a veze degemeret peurliesañ gant al lez klok ; nemet galloud he doa d'e nac'h pe d'e gemmañ. Evel lez-varn ha bodad politikel e touge al lez dugel an anv ivez a Barlamant-Meur an Dugelezh.

Pelec'h en em vode ?


Un tammig dre-holl. Duged an 12-vet hag an 13-vet kantved n'o doa na kērbenn hag annezlec'h diazezet-start. Bale a raent, koulz lavarot, a gêr d'eben, a gastell d'egile, hag e talc'hent zoken laouen o azezoù e gwasked ar c'hoadeier.

=====
C.C.P.P. No.36.242.


Le Gérant : Mlle Y.Martin, 24, rue Poull ar Bachet,
29 N-BREST.

Liesskrivet gant ar gelaouenn.


Ronéotypé par la revue.



Kelaouenn vizek
 Niv.146 - C'hwevrer 1971
 Koumanant-bloaz : 20 lur
 (Studierien ha soudarded : 15 lur)
 (Broioù estren : 25 lur)
 "AR BED KELTIK"
 24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST
 CCP.RENNES 1907-07




=====
 PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON
 =====



T a o l e n n

- 30 Ar miz (15 Kerzu - 15 Genver)
- 35 Embannadurioù nevez (Roparz Hemon)
- 39 Geriadur ar Brezhoneg, kendalc'h (Roparz Hemon)
- 45 Ur c'hlemmer gwechall (Herve Ar Menn)
- 48 Kamp etrekeltiek evit deskiñ iwerzhoneg
- 50 Ar c'hoariva brezhonek e Pariz (L.Andouard)
- 52 A-du gant Euskariz (A.Heusaff)
- 56 An aozadur gladdalc'hel - Al lez dugel
 (troet diwar Istor Breizh La Borderie)



AR MIZ

(15 Kerzu - 15 Genver)

BreizhROAZHON

D'an 21 Kerzu e oa deredet labourerien-douar eus pevar c'horn ar vro da Roazhon evit enebañ ouzh ur prosez graet da unan anezho, F.Gourmelon. Goude bezañ klasket tostaat ouzh an Ti-Barn, en em vodjont war leurenn al Lez, hag eno e voe graet prezegennoù a-zivout gwirioù ar gouerien war an douar. Dibunadeg a voe aozet neuze etrezek ar prefeddi, ma edo an Ao.Pleven, ministr ar Reizh er gouarnamant gall. Hemañ a nac'has komz gant an displegadegerien, hag e voe kann gant an archerien.

SANT-BRIEG

En abardaez an 21 Kerzu, war-lerc'h displegadeg al labourerien-douar e Roazhon, e voe graet freuz e burev ar gazetenn LE PETIT BLEU DES COTES-DU-NORD e Sant-Brieg. Renet e vez ar gazetenn sizhuniek-se gant an Ao.Pleven. Torret e voe an dorioù, dispennet an arrebeuri, skignet paperioù dre-holl.

Diwezhat e oa, ha sioul ar straed. Hervez tud a dremene en ur c'harr-tan, e vije ar freuzerien labourerien-douar war o distro eus Roazhon.

NAONED

Displegadeg a voe aozet e Naoned d'an 22 Kerzu gant labourerien-douar evit enebañ ouzh ar c'holl a reont da heul politikerezh gouarnamant Pariz en o c'heñver, ur c'holl a ya war greskiñ atav. War-dro 8.000 den a gemeras perzh. War-lerc'h ur vodadeg en unan eus salioù Tachenn Veurzh, e voe aozet un dibunadeg, gant traktorioù e penn, betek ar prefeddi, da reiñ d'ar prefed ur mennad o klemm a-zivout ar prizioù, an tailhoù, an taosoù kevredigezhel, ha disurentez al labour.

Broadoù Unanct

Gouarnamant Italia en deus roet da c'houzout e oa o vont da ginnig d'ar Broadoù Unanct torridigezh ar boan a varv dre ar bed (1-añ Genver). Se a voe da heul an trouz graet gant barnedigezhioù Burgos ha Leningrad.

Kement a vroioù, eme Italia, o deus goulennet truez evit an dud kondaonet d'ar marv ma c'haller krediñ

eo deuet ar mare da ober seurt kinnig.

Ar boan a varv a zo bet torret en Italia evel e meur a vro all.

Kembre Muioe'h a zonezonoù arc'hant eget biskoazh a vo graet hevlene gant "Kuzul Arzoù Kembre" d'ar c'helaouennoù, ar re gembraek koulz hag ar re saoznek. Da skouer, da vBARN e vo roet £1,850, d'ar gela'hgelaouenn lennegel TALIESIN £1,125.

D'an 12 Genver, 4 ezel eus "Kevredigezh ar C'hembraeg" a reas trouz e Ti al Lorded, e Londrez. Aet e palier an arvesterien, goude bezañ en em chadennet a-gevret, e krogjont da lenn un diskleriadur o c'houlenn muioe'h a lec'h d'ar c'hembraeg er skingaserezh. Ar wardod, avat, - soudarded kozh an darn vuiañ anezho, - a zeredas hag a lakaas an drouzerien da devel dre waskañ o gouzoug gant ar chadenn end-ecun o stage. Sachet e voent neuze er-maez eus ar palier, ha klozet en ur gambr betek diwezh an dalc'h-azez.

Antronoz e voe harzet tri C'hembread paket d'an ampoent ma edont oc'h en em silañ e Ti ar Parlamant, marteze evit lakaat danvez-tarzh pe ober ur mestaol bennak.

Breizh-Veur D'an 12 Genver e voe lakaet div vombezenn da darzhañ o ti an Ao. Robert Carr, ministr an Implij, en Hadley Green. Den ebet ne voe tizhet, hogen kalz freuz a voe graet.

Ne ouzer ket gant piv eo bet graet an taol, nemet gant izili ur strollad anvet "Ar Vrigadenn Gounnaret" e vije, hervez ul lizher kaset d'ur gazetenn. Fromet-bras e voe an holl, rak seurt darvoudoù a zo dibaot e Breizh-Veur.

Frañs Paket e voe un darn vras eus Stad Frañs gant ur barrad yenijenn eus ar c'hrisañ e deizioù diwezhañ miz Kerzu ha deizioù kentañ miz Genver.

E traonienn ar Ron eo e voe ar gwashañ, dreist-holl en departamantoù Droma hag Ardecha. Kantadoù a girri a voe dalc'het gant an erc'h war ar meurhent etre Valensia ha Montelimar, ha kalz kêriadennoù troc'het diouzh ar bed gant berniadoù erc'h savet gant an avel.

Ar servijoù-Stad en em gavas tost dic'halloud da stourm ouzh un darvoud na zegouezh ket alies er vro-se, ha meur a zevezh a dremenas kent na voe graet tra efedus.

Gouarnamant Frañs en deus divizet kaout ur vombezenn-hidrogen a-benn 5 bloaz amañ. Da zibab e oa etre ur vombezenn kevatal gant an hini implijet gant ar gallouedoù bras, Rusia hag ar Stadoù-Unanet, hag ur vombezenn na vije ket koulz, hogen a vije graet buanoc'h ha na goustje ket ken ker. Houmañ eo a zo bet dibabet. Pa vo prest e vo lakaet war 5 splujerez nukleel a dle bezañ savet.

Belgia Al lezenn evit reizhañ an darempredoù etre an izelvroegerien hag ar c'hallegerien a zo bet votet gant ar parlamant e dibenn miz Kerzu.

Pa voe savet Belgia, e 1830, e voe frammet ar Stad diwar skouer Frañs, da lavarout eo, e voe kreizennet-start, hag e-pad ur pennad e kinnigas ar galleg mogañ an izelvroeg. Dre ma kreske emsav Bro-Flandrez. avat, e c'hounezas an izelvroeg mui-ouzh-mui a wirioù. En amzer-mañ eo deuet an izelvroegerien da vezañ niverusoc'h eget ar c'hallegerien, hag ar re-mañ eo en em gav en arvar.

Al lezenn nevez, hep treiñ Belgia d'ur Stad kevredel, a ziforc'h koulskoude Flandrez diouzh Wallonia e keñverioù 'zo. Frankiz leun a ro d'an eil ha d'eben da ren he c'hcfridioù sevenadurel ha darn eus hec'h armerzh. Evit ar wech kentañ, e vo daou Guzul Sevenadurel e-lec'h unan.

Er strollad-ministred, an hanter eus an izili a vo izelvroegerien, an hanter all gallegerien, nemet ar pennvinistr a c'hell bezañ izelvroeger pe c'halleger.

Atav e chom avat kudenn vBrussel. 75% eus poblañs ar gêrbenn hag ar fabourzioù, 19 kumun en holl, a gomz galleg. Bez' e reont evel un cnezennad c'hallek e Flandrez, pe gentoc'h ur "saotr coul", rak emaint dalc'hmat o ledanaat o levezon diwar-goust an trowardroioù a yezh izelvroek. Flandreziz a c'houlenne ma vije bevennet-strizh kêr vBrussel evel m'emañ. Er c'hontrol, Walloniz a c'houlenne ma vije roet ar gwir d'ar c'humunioù a dro-war-dro d'en em stagañ outi pa garjent.

En diwezh eo bet grataet o goulenn da Flandreziz, nemet asantet o deus plegañ war ur poent : e pep tiegezh, an tad hag ar vamm o devo ar gwir da zibab e pe yezh e tle bezañ skoliet o bugale.

Euzkadi Displegadegoù a-du gant Franco a voe aozet e miz Kerzu e Madrid hag e kêrioù all. Un doare-stourm nevez eo, ijinnet gant ar gouarnamantoù : a-enep taolioù-nerzh ar bihanniveroù, lakaat ar "brasniver dilavar" da ziskouez e c'halloud. Seurt displegadegoù, kempennet gant harp ar bolis ha kostez-ennoù politikel frammet-start, ne c'hellont nemet ober berzh.

Da zeiz Nedeleg e voe dicubet ar c'honsul alaman Eugen Beihl, bet skrapet gant ETA d'ar 1-añ Kerzu. Eus al lec'h ma oa bet dalc'het e oa bet kaset gant ur c'harr-tan betek Wiesbaden an Alamagn ! Hennezh eo da vihanañ an istor a voe kontet.

Eus ar 16 Euskarad barnet gant al lez-varn-vrezel e Burgos, 6 a oa bet kondaonet d'ar marv, 9 d'ar prizon evit hir amzer, hag ur vaouez a oa bet didamallet. Dre ar bed-holl e savas mouezhioù evit goulenn truez.

Franco a vodas e vinistred evit goulenn ali, hag

ivez Kuzul ar Rouantelezh, na vez bodet nemet evit divizout diwar-benn kudennoù eus ar grevusañ. D'an 30 Kerzu hepken e voe roet da c'houzout a-berzh Rener ar Stad ne vije ket lamet o buhez digant ar 6 den barnet da vervel.

Un trec'h e oa evit broadelerien Euzkadi : gouarnamant Madrid en doa kavet fur plegañ. Kement-se avat ne ra ket disoñjal krizder Spagn e-keñver tud omsavet da zifenn o gwir. Ne ra ket disoñjal e oa direizh kas an dud-se dirak ul lez-varn eus an arme. Ne ra ket disoñjal e oant bet boureviet gant ar boliserien, hag e oa bet aozet ar prosez en un doare direol. Bro-Euzkadi, evel Katalonia, a chom gwasket ken gwazh ha biskoazh, hag e kendalc'ho ar stourm evit ar frankiz.

Hag e gwirionez, e devezhioù kentañ ar bloaz-mañ, e fellas da renerien Vadrid diskouez anat e oant atav ar vistri. Ouzhpenn 50 den a voe harzet e Bilbao, war zigarez o doa aozet harz-labour evit enebañ ouzh prosez ar vroadelerien. Kenwerzhourien o doa klozet o stalioù a voe roet urzh dezho da glozañ e-pad 5 deiz.

Katalonia Ar c'helenner Jordi Carbonell, unan eus an 300 Kataloniad a oa en em serret e manati Montserrat evit enebañ ouzh prosez an Euskariz, a zo bet harzet. Goulennataet e oa bet gant poliserien, ha respontet en doa e kataloneg, o nac'h komz spagnoleg. Ouzhpenn se, an Ao. Carbonell a oa aet e Bro-Saoz, ha graet en doa eno diskleriadurioù o doa displijet da renerien Vadrid.

Harzet e voe ivez an Ao. Xavier Folch, rener un ti-embannerezh e Barcelona. Nac'het en doa daskoriñ o basport d'ar bolis.

Uruguay Kannadour Breizh-Veur en Uruguay, an Ao. Geoffrey Jackson, a voe skrapet d'an 8 Genver, hag eñ war e hent d'e vurev e Montevideo. Ar skraperien, sur-mat, a oa "Tupamaros", ar c'houvrezelidi o deus lazhet un Amerikan o doa skrapet warlene, hag a zalc'h un Amerikan hag ur Braziliad e gouestl.

Gouarnamant Uruguay, betek bremañ, en deus nac'het plegañ da c'houlennoù ar skraperien. War-dro 150 Tupamaro a zo e prizon, hag en aner o deus o c'henseurted goulennet ma vijent dieubet en eskemm ouzh an dud skrapet.

Polonia Soudarded gant tankoù a voe kaset da gêrioù Gdansk (Danzig), Gdynia ha Sopot, en aod ar Mor Baltek, evit mogañ un emsavadenn, tarzhet d'ar 15 Kerzu. Micherourien, simidi, studierien, merc'hed a gerzhas dre ar straedoù evit enebañ ouzh ar c'hresk lakaet dre urzh ar gouarnamant war brizioù ar boued. Stalioù a voe gwastet, savadurioù tangwallet.

A-voc'h damsioulaet an traoù e Gdansk ha tro-war-dro, e teue keloù eus un emsavadenn all e Szczecin (Stettin), diwar an hevelep abeg.

Ken grevus e voe an dizurzhioù ma rankas Gomulka, kentañ sekretour ar gostezenn gomunour ha mestr ar vro abaoe c'hwezek vloaz, dilezel e garg (war zigarez e oa klañv), d'an 20 Kerzu. Pevar ezel all eus ar gouarn-amant a gollas o c'harg ivez, hag e-lec'h Gomulka e voe anvet Gierek.

Daoust m'o deus ar renerien nevez nac'het digreskiñ ar prizioù, prometet o deus kreskiñ pae al labourerien, mar deus tu.

Rusia Ur bagad tud, yuzevien an darn vuiañ anezho, a voe barnet e Leningrad, e dibenn miz Kerzu. Tamallet oant da vezañ en em glevet evit skrapañ ur c'harr-nij ha tec'hout diouzh Rusia evel-se. Daou eus an damallidi a voe kondaonet d'ar marv.

Raktal e voe trouz en Israel hag e broioù all, ha goulennoù kaset da renerien Rusia evit terriñ ar varnedigezh.

War-dro 3 milion a yuzevien a vev en Unaniezh Soviedek, da lavarout eo muioc'h eget niver ar re a vev en Israel. Kalz anezho a glask divroañ, hogen nebeud a zeu a-benn. Hervez al lezenn rusian, nep keodedour a glask kuitaat ar vro hep aotre a c'hell bezañ barnet d'ar marv.

Ar barnedigezhioù a voe diwezhatoc'h torret gant ul lez-varn-engalv, ha troet da 15 vloaz labour-ret.

Reter-Kreiz An Dr. Jarring, karget gant ar Broadoù Unanet da glask ober ar peoc'h er Reter-Kreiz, a yeas da Jeruzalem d'an 8 Genver.

An harz-tennadeg etre Israel hag an Arabed a dle echuiñ d'ar 5 C'hwevrer, hag ar prezidant Sadat eus Egipt en deus diskleriet e oa prest da adkregiñ gant ar brezel, daoust n'eus ket da grodiñ en deus c'hoant e gwirionez. An Arabed a c'houlenn ma lamo Israel he soudarded diouzh an tachennoù aloubet ganti, hag Israel, anat eo, a zo mennet da virout anezho, pe darn anezho da vihanañ.

E Jordania ez eus atav krogadoù etre ar c'hou-vrezelidi balestinat ha nerzhioù ar roue. Ur strollad nevez, "Emsav Jordania Dieub", a zo bet krouet, e bal didronañ Hussein evit mat. E izili a zo holl Jordaniz, nemet spi o deus da vezañ skoazellet gant Palcstinez.

Kameroun Un eskob katolik, an Ao. Albert Ndongmo, ha pemp den all a voe barnet d'ar marv gant ul lez-varn-vrezel e Yaounde, kêrbenn gKameroun, e derou miz Genver. Tamallet oant da vezañ kemeret perzh en un irienn evit muntrañ ar prezidant Ahidjo, aozet gant ur strollad e-maez-lezenn, "Unaniezh ar Bobl".

Ar prezidant Ahidjo, a ren abaoe ouzhpenn dek vloaz, en deus klasket ingalañ ar galloud etre al luskadoù niverus a gaver en ur vro n'eus enni gwir unded ebet :

mouriadoù disheñvel o sevenadurioù, o relijionoù, dalc'hmat oc'h enebiñ an eil ouzh egile.

Roet e voc da c'houzout ne vije ket lakaet an eskob d'ar marv, na daou all eus ar re gondaonet. Tri avat a voc fuzuilhet dirak ar bobl.

Abisinia Un emsavadenn ouzh gouarnamant Abisinia a ya war greñvaat en Eritrea, renet gant un "Talbenn Dicubiñ". Hervez an emsavidi, e vije bet dicubet tachadoù oc'hon eus ar vro, ha ne chomje mui soudarded an impalaer Haile Selassie mistri nemet war ar c'hêrioù hag an hentoù bras. Harpet e vije an emsav gant Siria, Libia, Soudan, hag ivez gant Stadoù komunour ar bed-holl.

EMBANNADURIOÙ NEVEZ

gant Roparz Hemon

ISTOR AR YEZHOU KELTIEK, Levrenn II, gant Arzel Even
(embannet gant HOR YEZH).

Kentañ levrenn al labour-mañ a oa bet embannet e 1956. Enni, goude diskleriadurioù a-zivout an indezeuropeg, e studie Arzel Even ar galianeg, ha div eus ar yezhoù predenek, ar brezhoneg hag ar c'herneveg.

Bremañ e teu an eil levrenn, enni studi ar c'hembraeg, hag an teir yezh ouezelek, an iwerzhoneg, ar skoseg hag ar manaveg.

D'an neb a fell dezhañ kaout un daolenn dre vras eus tachenn ar geltiegouriezh, n'eus ket, e yezh ebet, gwelloc'h eget an oberenn-mañ.

E 554 a bajennoù e tisplog ar pep pouezusañ a zo da c'houzout. Dudius eo da lenn d'an dud ha n'int ket yezhourien. Hag ar yezhourien o-unan a gav dastumet enni ur bern sklaeridigezhioù a vefe diaes kavout e lec'h all, skignet ma'z int e meur a levr hag a gelaouenn. Prizius eo dreist-holl d'ar studierien. Ha ma vefen-me kelennet en ur skol-veur e Breizh, e lakafen an oberenn-mañ war roll ar re a rank bezañ anavezet.

Kemmoù bras a zo deuet er yezhoniezh er bloavezhioù-mañ. Dispennet eo bet ar c'hramadeg klasek. Doareoù nevez a zo bet ijinet da studiañ ar yezhoù, darn anezho talvoudus hag efedus marteze. Hogen dre vras n'o deus graet nemet lakaat rouestl er speredoù. Fur eo bet Arzel Even o stagañ d'an urzh ha d'an termenadur hengounel, a zo aes da gompren ha na glot ket re fall ouzh ar yezhoù keltiek.

(Evit kaout an eil levrenn eus "Istor ar Yezhoù Keltiek, kâs 30,00 lur da : P.Denis, CCP.RENNES 1499-51).

HOR YEZH, niv.62

Roll gerioù pouezusañ ar brezhoneg, gant F.Kervella, warnañ : 1) Gerioù ar Brezhoneg Eeun, savet gant Roparz Hemon ; 2) Gerioù "pouezus a-walc'h evit bezañ kemeret er Brezhoneg Eeun" ; 3) Gerioù all e-touez ar re dalvoudusañ.

Roll gerioù ar Brezhoneg Eeun, embannet evit ar wech kentañ e niverenn 83 GWALARN ("Alc'houez ar Brezhoneg Eeun", Here 1935), a zo bet savet hervez pennsturioù resis, diazezet gant yezhourien, dreist-holl ar yezhour saoz C.K.Ogden (1889-1957). Lakaet eo bet ar Brezhoneg Eeun da dalvezout evit aozañ levrioù da zeskiñ ar yezh hag un niver bras a-walc'h a skridoù. Ma vefe adembannet ar roll gant e aozer, ne vefe graet nemet ur gemmadenn ennañ : ur ger, hag ur ger hepken a vefe lakaet ouzhpenn, ar ger tredan.

Ar gerioù dastumet amañ war an eil hag an trede roll a c'hell servijout da heñchañ ar re a gelenn ar brezhoneg : ar gerioù kentañ da zeskiñ, ur wech peurzesket gerioù ar Brezhoneg Eeun.

Ar rebech brasañ da ober eo bezañ kemmet doarc-skrivañ gerioù 'zo, ha dre se lakaat strafuilh er yezh skrivet. Stummoù lennek a zo, evel gervel, dorc'hel, teurel, ha ne dleer ket lakaat gelver, delc'her, teuler en o lec'h. N'eo ket gwir lavarout n'eus ket "a du da zibab etre daou zoare da skrivañ ur ger" : atav eo a dleer skrivañ, ha n'eo ket ato ; mediñ, ha n'eo ket midiñ ; tog, ha n'eo ket tok ; purgator, ha n'eo ket purkator. Mont gant an hent-se a zo mont gant hent an diskar, hent an dizurzh a rene gwechall. A-wechoù zoken ne roer nemet ar stumm kavet mat gant an aozer : jot e-lec'h jod, pilhaouaer e-lec'h pilhaouer. Kefridi ar geriadurour eo plegañ d'ar boaz, ha n'eo ket "reizhañ" hervez ma tro en e benn. Anez e vefe graet ha disc'hraet ar yezh skrivet bep sizhun.

Ur rebech all : ar berradurioù, en ul labour brezhonek, a dle bezañ ar re implijet peurvuiañ e brezhoneg, ha n'eo ket berradurioù iskis a c'hiz nevez diazezet war ar galleg.

HOR YEZH, niv.63

Pennadoù liosseurt.

Alioù fur gant P.Denez e "Skoazell d'ar gelennerien war ar brezhoneg". N'eo ket a-walc'h kaout levrioù da zeskiñ ar yezh. Ret eo d'ar gelennerien gouzout kelenn. Ur vicher eo, ha war ar vicher-se evel war bep micher all, e ranker bezañ gourdonet.

Kalz labour a zo act d'ober ar pennad "Diwar-benn implij al lizherennoù e skritur ar brezhoneg", gant F.Kervella. Hogen ne weler ket mat da betra e c'hell

talvezout. N'eo ket gouzout ez eus lizherennoù implijetoc'h eget re all a zo a bouez bras, hogen gouzout penaos e vez strollet al lizherennoù (pe gentoc'h penaos e vez aozet ar strolladoù-sonioù), - penaos, da skouer, e c'haller kavout ar strolladoù sk, skl, skr, sp, spl, spr, st, stl, str e derou ur ger, ha ne c'haller kaout sl, sm, sn, sr, sf nemet en ur ger amprestet nevez 'zo gant ar yezh lennek. Neuze e vefe tu da lakaat a-wel stummadur soniadurel ar brezhoneg.

Traoù mat a gaver er pennad da heul, gant F.Kervella ivez, "Ur gudenn gasaus : Implij A ZO hag EZ EUS, A ZO hag EO, EO hag EUS". Pezh a ziskler a zo gwir peurliesañ, nemet astenn a ra re a-wechoù marteze tachenn-implij EUS diwar-goust tachenn-implij EO.

Dedennus eo an daou bennad diwezhañ, "Ragistor ar sinema", gant L.Kergoat, hag "An displegoniezh dre ar c'heñver-niveriñ", gant R.Surzbur. Er pennad-mañ e troer amañ-ahont ur ger pe ur strollad-gerioù e galleg etre krochedoù-kromm, pezh a zo dreistezhomm, da'm soñj.

(HOR YEZH, trimiziek, koumanant-bloaz 20,00 lur. Kas an arc'hant da gont-chekennoù-post P.Denis, merket a-us).

"DEIZLEVR BREZEL 1944", gant Youenn Olier (180 p.).

An tamm skrid-mañ, omc an aozer, koulz hag an Deizlevr evit ar bloavezh 1943, n'eo embannet "nemet evel un diell, a-benn reiñ un alberz eus istor an Emsav ha buhez an Emsaverion ur c'hard kantved 'zo, e-pad an eil brezel bed".

D'ar re o deus bevet e Roazhon er bloaz-se e tegas kounioù e-leizh. D'ar re yaouank, n'o deus ket anavezet an amzer-se, e tiskuilh hep mar darvoudoù a dleont kavout iskis-meurbet a-wechoù.

Ne vern penaos, plijus eo al levr da lenn.

"AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI", gant Youenn Drezen (77 p. - priz : 7,50 lur war baper boutin, 12,00 lur war baper kaer. - embannet gant AL LIAMM).

Unan eus gwellañ kontadennoù hol lennegezh e vremañ, embannet evit ar wech kentañ e GWALARN e 1932. Ar mouladur-mañ, kempennet gant Per Denez, a zo kaer-tre, dindan ur golo kempennet gant Yann Vaze.

Adurzhiat eo bet ar skrid gant an oberour.

LEKSIONAL, Sulioù ha Gouelioù ar Bloavezh C.
(BARR-HEOL, niv.66).

Amañ e kaver al Lennadennoù evit Sulioù ha Gouelioù ar bloavezh C, da implij eta e 1971.

Daoust ma'z int graet, da gentañ, da lenn en ilizoù, e c'hellont ivez bezañ lennet er gêr gant an holl. Talvoudus e vint, o c'hortoz embannidigezh klok ar Skriturioù.

(Priz : 12,00 lur ; koumanant-bloaz BARR-HEOL : 20,00 lur, da gas da : Revue BARR-HEOL, CCP.Rennes 245-453).

(da genderc'hel)

=====

GANEDIGEZH. - Kresket eo ar familh e ti Jaume ha Gwenola Rossinyol. Mona-Núria he deus bet ur c'hoar vihan : Garsenda, Nolwenn, Laia, Katell, e Naoned d'ar 5 a viz Du 1970.

=====

PROFOU D'AR BED KELTIEK (Gwengolo-Kerzu 1970) :

An It.Grall, 30,00 lur. - An Ao.R.Le Gleau, 10,00. -
 An Ao.M.Audic, 30,00. - An Ao.L.Bihannic, 5,00. -
 An Dim.O.Chevillotte, 10,00. - An Ao.Ters, 5,00. -
 An Ao.P.Pennec, 50,00. - An Dim.Cazin, 5,00.
 En holl, 145,00 lur.
 Trugarez d'ar brofourien.

=====

E KOUN ETIENNE RIWALLEN. - Dek vloaz 'zo eo aet da anaon Etienne Riwallen eus Boulvriag, a voe marteze ar brasañ talabarder bet diwanet e Breizh, abaoe ma soner biniou ha bombard dre ar vro.

D'ar Sul 10 a viz Genver, e voe lidet e koun an den yaouank kalonek, marvet diganimp re abred, ur gouel bras a zedennas tud eus pevar c'horn ar vro da Voulvriag.

Ar pep fromusañ e voe an oferenn, bet kanet e brezhoneg, da 10 eur 30 gant 6 beleg. An holl a gemeras perzh el lidoù gant birvidigezh. Sur eo bremañ e peder gwelloc'h e brezhoneg eget e galleg pa vez al lidoù en hor yezh. Adkavout a reer e gwirionez blaz an traoù sakr, bet kollet gant ar galleg.

Ur sarmon dispar a voe graet gant an Ao.Ar Sant, person Brelevenez, a bouezas war dalvoudegezh Etienne Riwallen evel Rener-Bagad brezhoneger hag evel kristen. Biskoazh ne c'hwhitas Etienne d'ober gant ar yezh pa voe tu, ha da lakaat ar vugale a stumme da gomz brezhoneg e pep degouezh. Ur skouer eo bet ivez evel kristen hag abostol ar re baour, hag eñ atav o strivañ evito, betek mont da gestal cvit ar re rouzeudikañ. M'en dije bevet, sur-mat en dije bet Etienne Riwallen ul levezon vrasoc'h c'hoazh war Gernev-Uhel, bro e gavell. - P.Even.

=====

KAMP ETRKELTIEK AR VREZHONEGERIEN a vo graet eus ar 15 d'an 31 a viz Gouere. Kemennet e vo al lec'h diwezhatoc'h.

- T -

'ta sl.eta.

tabac'h g. trouz bras, hv.tousmac'h, todilhon, cholori, bourbl, karnach, karbac'h, safar, tourni, talabao.
tabac'hañ v. ober tabac'h. (+ tabac'her).

tabarlank g.-où daez pe stel douget er prosesionoù.

tabernakl g.-où 1. an armel war un aoter ma lakaer enni kustod an hostivoù, hv.armel-sakr. 2. pabell pe deltenn sakr implijet gant an Henhebreed.

tabezerezh g.-ioù tresrezh-neud graet gant nadozioù pe war ur stern-gwiader.

tablez g.-ioù 1. taolig pe blanken implijet evit c'hoari kartoù, domino ha c'hoarioù ar seurt. 2. taolenn, treset warni karzennoù du ha gwenn evit c'hoari damoù, echedoù h.a, hv.damer. 3. ti pe sal evit c'hoari kartoù ha c'hoarioù-chañs all.

tablezenn gg.-où taolennig pe blanken implijet evit lakaat traoù, evit skrivañ warni, evit dougen un enskrivadur h.a.

tablezer g.-ien 1. unan a zalc'h tablez (hvz ar ster 3). 2. noter, pe zen karget gwechall da skrivañ paperioù un noter.

tabonenn gg. taboned amprevan divaskellek a flemm ar c'hezeg hag ar chatal, hv.mouienn, kelienn-dall, kelienn-varc'h, kelienn-vorz, boulienn, brouderez.

taboulin gg.-où 1. benveg-sonerezh, anezhañ ur groc'henenn stegnet war ur granenn pe un hantervoull c'houllo, ma skoer warni gant div vazh. 2. nep tra heñvel pe zamheñvel ouzh ar benveg-sonerezh-se. 3. kleuzenn e-kreiz ar skouarn, stegnet ur groc'henenn dassonus warni.

taboulinañ v. skeiñ war un daboulin.
 (+ taboulinadeg, taboulinadenn, taboulinerezh).

tabouliner g.-ien unan a c'hoari an daboulin.

tabut g.-où diemglév, alies gant trouz ha komzoù flemmus, hv.dael, rendael, riot, arvell, kabal, kroz, noaz, striv, tag, regas.

tabutal v. kaout tabut. (+ tabuterezh).

tabuter g.-ien unan a dabut, a glask tabut.

tach g.-où garennig vetal, gant ur beg lemm diouzh un tu, ur penn diouzh an tu all, a sanker gant ur morzhol evit kenstagañ, startaat h.a.

tachañ v. 1. kenstagañ gant tachoù. 2. lakaat tachoù (en udb.).

tacher g.-ien 1. unan a dach. 2. unan a zo e vicher ober tachoù.

tacherezh g. 1. an tachañ. 2. micher un tacher (hvz ar ster 2).

tacherezh gg.-ioù stal-labour pe stal-werzh un tacher (hvz ar ster 2).

tach-jenofl g. broñsenn disec'hot bleunienn ar wezenn-jenofl (Caryophyllus aromaticus), implijet evel tomz-boued.

tachoù ls. (dre skeudenn-lavar) treid, diazez.

tachad g.-où 1. gorread-douar. 2. pennad-amzer, hv. sl.taluad.

tachenn gg.-où 1. gorread-douar. 2. kement tra a vez e dalc'h ur skiant, un arz, un obererezh h.a.

tachennad gg.-où endalc'h un dachenn.

tachennadel ag. a denn d'un dachennad.

tachenn-c'hoari gg. tachenn aozet evit ober c'hoarioù.

tachenn-nij gg. tachenn aozet evit reiñ tro da nijerezed da vont kuit ha da leuriañ.

tachenn-nijal gg. evel "tachenn-nij".

tachenn-sportoù gg. tachenn aozet evit ober sportoù.

tad g.-où 1. gwaz, e-keñver an hini a zo bet engehentet gantañ. 2. gwaz en deus engehentet ur bugel pe vugale. 3. par en deus engehentet ul loen pe loened yaouank. 4. (skrivet Tad prl.) titl a enor roet d'ur relijiuz. 5. anv roet dre fent d'un den kozh. 6. (implijet dirak anv anevaled 'zo) par. 7. (el liester) ar re o deus bevet en amzer dremenet, e-keñver o diskennidi.

tadeg g.-ed evel "tad-kaer".

tadel ag. a denn d'un dad.

tadelezh gg. perzh nep tra a zo tadel.

tad-kaer g. tadoù-kaer tad pried ub., e-keñver hemañ pe houmañ.

tad-kozh g. tadoù-kozh tad tad pe vamm ub., e-keñver hemañ pe houmañ.

tad-kuñv g. tadoù-kuñv tad tad-kozh pe vamm-gozh ub., e-keñver hemañ pe houmañ.

tad-mager g. tadoù-mager unan a zesav ur bugel evel pa vefe gwir dad d'ar bugel-se.

tadrenerezh g. renerezh ur Stad, ur gevredigezh h.a. e-giz ma ren un tad e diegezh. (+ tadrenerezhel).

tad-you g. tad tad-kuñv pe vamm-guñv ub., e-keñver hemañ pe houmañ.

tad-segal g. kleñved a dag ar segal, graet dre efed funguz, hv.druilh, pigell.

taer ag. 1. douget da oberiañ trumm, gant nerzh hag hep aon. 2. graet trumm, gant nerzh hag hep aon, hv.feuls. (+ taerded, taerder).

taeraat v. mont pe lakaat da vont taer, pe daeroc'h.

taerijenn gg. emzalc'h taer.

taeriñ v. mont taer.

taeroni gg. perzh nep den, nep oberenn a zo taer.

taerus ag. techet da daeriñ. (+ taerusted, taeruster).

taf g.-où tamm danvez (spoue h.a.) a dalvez da stankañ un toull, hv.sl.stev.

tafañ v. stankañ (un toull) gant un taf.
(+ taferezh).

tafarachoù ls. a bep seurt kozh traoù mesk-ha-mesk, hv.turubailhoù.

taftas g. gwiadenn voan, luf, graet gant seiz, pe gant seiz ha lien, seiz ha gloan.

tag ag. (db.frouezh h.a.) a ginnig tagañ pa glasker lonkañ.

tag g. 1. an tagañ. 2. tabut.

tagañ v. 1. mirout (ouzh ub.) da dennañ e anal dre waskañ pe dre stankañ e gorzailhenn.
2. bezañ divarrek da dennañ e anal gant udb. o waskañ pe o stankañ ar gorzailhenn.
3. mont taer (a-enep ub. pe udb.) evit ober droug dezhañ, hv.arsailhañ, argadiñ.
4. debriñ pe lonkañ trumm, hv.plaouiañ.
(+ tagadeg, tagadenn, tagadur, tagerezh, tagidigezh, tager).

tagell gg.-où 1. kordennig skoulmet evit pakañ ha tagañ evned pe loenedigoù all, hv.las, lasoù, las-kroug, krouglas, lindag, gardinez.
2. al lec'h ma kej div froud-dour an eil ouzh eben. 3. koumoù goloet gant bezhin.

tagellañ v. lakaat tagelloù (hvz ar ster 1)
(en ul lec'h bnk).

tagellus ag. 1. leun a dagelloù, risklus.
2.(db.ub.) douget da hegasiñ ha da feukañ, prl. evit farsal, hv.atahinus, hegasus, kampagnus, chilper, garchenn.
(+ tagellusted, tagelluster).

tagennañ v. krial ken na venner tagañ.

tagus ag. 1. a dag, gouest da dagañ. 2. trenk e vlaz. (+ tagusted, taguster).

tagn g. kleñved a dag kroc'hen ar penn.

tagn ag. stag e galon ouzh an arc'hant hag ar madoù, a sell piezh ouzh an dispignoù a ra, hv.sl.pervezh.

tagnous ag. 1. taget gant an tagn. 2. evel "tagn ag.". 3. atav en imor fall, darev da enebañ, hv.sl.rekin.

tagnousaat v. mont pe lakaat da vont tagnous, pe dagnousoc'h.

tagnouz g.-ien unan tagnous.

tagnouzal v. bezañ en imor fall, darev da enebañ.

tagnouzell gg.-ed plac'h pe vaouez tagnous (hvz ar ster 1), tagnouzez.

tagnus ag. 1. a c'hell reiñ an tagn. 2. evel "tagnous.1". (+ tagnusted, tagnuster).

tagos ag. (db. un den) krenn ha tev, hv.tobios, torgos, krapok, krenndev, bouroun.

tagos g.-où tamm kig a gresk war zarn pe zarn eus ar c'horf, hv.kig-kresk, draen-kig, kreskenn-gig.

tagosek ag. evel "tagos". (+ tagosegezh).
tagosenn gg.-où gwezenn divarret en doare da
 ober ur guchenn e beg ar c'helf,
 hv.targos, penndogenn.

tagosennek ag. (db. ur wezenn) dezhi stumm
 un dagosenn.

tagosenniñ v. divarrañ (ur wezenn) evit ober
 un dagosenn.

tailh gg. 1. doare, neuz. 2. troc'h, troc'herezh (ar
 gwez h.a.).

tailhañ v. 1. troc'hañ, dh. diouzh ur vent
 rekis. 2. muzuliañ. 3. lakaat tailhoù
 (hvz ar ster 1) (war ub.). 4. drevezañ,
 ober dre fouge pe evit touellañ an neuz
 da vezañ (tra pe dra). (+ tailherezh).

tailhanter g.-ien den-e-karg, e gefridi dastum
 an tailhoù, hv.teller, dastumer-gwirioù.

tailhenn gg.-où 1. tamm tailhet diouzh udb.,
 hv.skejenn, darnenn, tell. 2. tamm koad
 ma veze graet askoù ennañ gant ur baraer
 evit merkañ niver an torzhioù gwerzhet
 d'ur prener.

tailher g.-ien unan a zo e vicher ober dilhad,
 hv.kemener.

tailheris g.-où gwezeg ma troc'her ar gwez
 enni a vare da vare, hv.koad-med.

tailhoù ls. 1. arc'hant a ranker paeañ da gef
 ur Stad, ur rannvro, ur gêr h.a. evit
 harpañ ar servijoù boutin da vont en-dro,
 hv.taosoù, telloù. 2. doareoù un den a
 glask bezañ seven pe vezañ kemeret evit
 unan a renk uheloc'h egetañ, hv.sl.neuz.

tailhouer g.-où boest, dezhi ur golo, evit
 lakaat amanenn.

takad g.-où 1. traoù (da sk. tiez) a-stroll. 2. kementad
 (danvez, labour h.a.) kemeret, graet en ur wech.
 3. lec'h, gorread-douar.

takadenn gg.-où evel "takenn".

takenn gg.-où 1. boullig a zistag diouzh un
 dourenn, hv.tapenn, tapad, banne,
 bannac'h, lomm, berad, beradenn,
 deveradenn. 2. netra. 3. (implijet da
 rakverb) tamm ebet.

takennad gg.-où endalc'h un dakenn.

takennerez gg.-ed ardivink bihan evit muzuliañ
 ur c'hementad dourenn takenn-ha-takenn,
 hv.deveradennerez.

takenniñ v. kouezhañ takenn-ha-takenn.
 (+ takennadur, takennerezh).

takahiniñ v. tabutal diwar-benn traoù a nebeud a bouez.
takahinus ag. techet da dakahiniñ.

take neat v. (db. saout ha loened all) adchaokat boued distroet eus ar stomok d'ar genou, hv.daskiriat, dambleat, taskagnat. (+ take neerezh).

take neer m.-ed loen a dakene.

take neüs ag. a dakene.

take zenn gg.-où 1. ar grampouezhenn graet da ziwezhañ, hv.krazenn. 2. (dre fent) ar bugel diwezhañ ganet en un tiegezh, hv.krazenn, gwidoroc'h, benoni, lostig an ti. 3. diod.

takon g.-où 1. tamm gwiadenn implijet evit aozañ ur pezh-dilhad roget pe uzet, hv.dabon. 2. tamm ler implijet evit aozañ ur votez roget pe uzet.

takonañ v. lakaat un takon (d'ur pezh-dilhad). (+ takonadur).

takoner g.-ien 1. unan a dakon. 2. unan a zo e vicher takonañ (dilhad, boteier).

3. marc'hadour dilhad kozh.

takonerezh g. 1. an takonañ. 2. micher un takoner.

takonerezh gg.-ioù stal-labour pe stal-werzh un takoner.

taksi g.-où karr-tan louacherezh, warnañ un taksimetr.

taksimetr g.-où ardivink evit muzuliañ hed an hent graet gant ur c'harr louacherezh ha merkañ ar priz da baeañ.

tal g.-ioù 1. darn eus an dremm, etre an divabrant hag ar blev. 2. darn-araok udb., dh. pa vez plaen pe zamblaen. 3. an darn blat eus ar varrikenn, ur gibell h.a. 4. an tu eus ur gwele ma emañ penn ar c'housker, hv.pennwele.

talad g.-où taol roet gant an tal.

talad-moger g. pennad-moger etre daou veg-moger en ur ramparzh.

talañ v. 1. skeiñ gant an tal. 2. (dre astenn-ster) herzel, derc'hel penn (ouzh udb.).

3. lakaat un tal (d'ur varrikenn, d'ur gibell h.a.). (+ taladur, talerezh).

talbenn g.-où 1. darn-araok un ti, en diavaez, enni prl. an nor vras. 2. darn eus moger un ti, ar penn uhelañ anezhi, tric'hognek prl., dindan an doenn. 3. planken pe gloued evit serriñ lost ur c'harr pe un dumporell. 4. ar bajenn e derou ul levr, merket warni an anv anezhañ, anv an aozer h.a. 5. anv (ul levr, ur skrid h.a.), hv.titl.

6. linenn-araok un arme, ur strollad-listri h.a., e-pad un emgann pe ur brezel.

7. (ster kozh) harzoù (ur vro h.a.).

taled g.-où bandenn (gwiadenn, metal h.a.) douget war an tal.

taledenn gg.-où 1. evel "taled". 2. al lodenn cus ar c'hoef (hini Kemper da sk.) a vez staget gant spilhoù war ar vourledenn, ha goloet gant ar c'hoef-bras, hv.koef-bihan.

- taleg g.-ed 1. (Coryphocna hippuris) pesk dour sall damalaouret e liv, hv.sl. suienn. 2. (ls.taleien) den talek.
- talek ag. (db. un den) uhel e dal. (+talegezh).
- talgab g.-où nein un doenn soul.
- talgen g.-où evel "taled".
- tal-ha-tal rv. 1. tal an cil stok ouzh tal egile. 2. (dre vras) kichen-ha-kichen.
- tal-kein g. tu-adreñv (udb.).
- tal-ouzh-tal rv. evel "tal-ha-tal".
- talabao g. trouz bras, hv.sl.tabac'h.
- taladur sl.daladur.
- talant g.-où 1. unanenn muzuliañ pouez gant an Hen-c'hresianed, an Henromaned h.a. 2. pezh-moneiz aour pe arc'hant, dezhi ar pouez-se.
- I. talar g.-où benveg bras evit ober toulloù er c'hoad.
- talarañ v. toullañ gant un talar. (+ taladarur, talarezezh, talareidigezh).
- talareg g.-ed (Ammodytes lanceolatus) pesk-mor, e gorf a stumm gant hini ur silienn, a doull an traezh gant e benn damheñvel ouzh beg un talar.
- talaregeta v.-et pakañ talareged. (+ talaregetaerezh, talaregetaer).
- talarek ag. (db. an daoulagad) lemm-lemm.
- talartro g. doare talar pe wimeled gant ur stignadur evit treiñ aesoc'h ar beg.
- II. talar g.-où ervenn diwezhañ e penn ur park ; bezañ war e dalaroù, ober e dalaroù bezañ en e amzer diwezhañ, war e dremenvan, tost da vervel.
- talarat v. peurechuiñ.
- talbenn sl. dindan tal.
- talbod as.(un.-enn) 1. (Angelica archangelica) plant frondus eus kerentiad an umbellifered. 2. gwrizioù ar palnt-se, konfizet hag implijet er pastezezezh.
- taled, taledenn, taleg, talek sl. dindan tal.
- talekon g. evel "talier".
- talfas g.-où 1. dremm ledan. 2. aozerezh dilhad uzet, prl. graet buan, hep kalz evezh.
- talfasat v. ober un talfas (hvz ar ster 2). (+ talfasadur, talfaserezh, talfaser).
- talfasek ag. ledan e zremm. (+ talfasegezh).
- talfaset ag. dezhañ un talfas (hvz ar ster 1).
- talgab, talgen sl. dindan tal.
- tali g. bezhin kali.
- tali-friz g. doare bezhin (Laminaria saccharina).
- tali-moan g. doare bezhin (Laminaria flexicaulis).
- tali-penn g. doare bezhin (Laminaria cloustonii).
- talier g.-où darn-adreñv korf loened 'zo (kezeg, ezen h.a.) etre ar c'hreiz hag al lost, hv.krouzell, talpenn, talekon.

UR C'HLEMMER, GWECHALL

gant Herve Ar Menn

E 1788, Loeiz XVI, roue Bro-C'hall, a c'houlennas digant ar parrezioù kas dezhañ o c'hlemmvanoù. Setu amañ klemmoù un nobl, Kerjegu, eus Sant-Toz, letanant ar roue e Karaez. Un denjentil eo o klask difenn ar geizh hag ar reizh. N'eo ket ar gentañ gwech ma weler ur Breizhad o tifenn ar gwir a-enep d'ar bed. Taolenniñ a ra stad ar vro en e amzer. Setu perak em eus kavet mat lakaat e skrid e brezhoneg.

E-touez klemmvanoù parrezioù Kastell-Nevez-Ar-Faou, e dielldi Kemper, emañ skrid Kerjegu e-unan-penn.

Herve Ar Menn

Hetiñ a ran na vo paeet nemet un truaj d'ar Roue, a blij din envel "an truaj gwirion", da vezañ lakaet war madoù ne vern pe zouger kleze a zo er rouantelezh.

Ne fell ket din e paefe ar berc'henned truaj dre benn, deog, dalc'h-kuit, mog na tailhoù all d'e Veurded. Rak ne fell ket din e vefe ken a reseverien domanioù ar Roue. El lec'hioù m'en deus ar Roue leveoù e c'hellint bezañ meret gant un den anvet bep bloaz gant ar c'huzul-parrez, hep gopr ebet.

Ra lakaio ar Roue da baeañ truaj an dud hep douar o piaouañ arc'hant, leveoù pe oberiantiz, hep madoù diloc'hus.

Hetiñ a ran ma vo eürusoc'h ar werin. Va dlead sitoaian eo, ouzhpenn ma'm eus an enor da vezañ un den eus ar bobl.

Ret eo adsevel ar varnouriezh roueel. Evit kaout barnerien ouiziek ha direbech eo ret o dibab da ginnig d'ar Roue.

An holl a oar, a-zoug ar wech eo bet gwallgaset an intañvezed hag an emzivaded gant ar c'hrefierien. Reolennoù ar varnerien vras n'o deus gallet morse diarbenn ar walenn-se. Holl a-unan e tleomp goulenn digant ar Roue tennañ ar reuzeudiged-se a-zindan krabanoù ar c'hrefierien. Pe ra vo graet ul lezenn nevez d'o diwall.

Atav o deus bet lavaret an alvokaded ne c'haller ket lakaat truaj warno. Azalek hiziv, ra daolor truaj warno, pa n'ouzont ket talvoudegezh o skridoù hag o breutadegoù. Kemend-all a lavaran evit an notered.

Hag ar vezeged, ra lakaor truaj warno. Arabat unan pemdeziek : dre eur kentoc'h. Rak penaos ober kont ur mezeg o vont da di Yann da bemp eur beure, e-lec'h ma vo paeet e zevezh dezhañ ? Ac'hano da diez all e-lec'h

m'en devo gopr bep gwech. Kemont-se a ra meur a zevezh en unan. Alies e tremen ar mozeg an noz e ti ur c'hlañvour. Ra baeo truañ ivez evit an curioù labour-nnoz.

Personed ha beleien o deus an deog war an eostoù. N'eus gwashoc'h tra evit ar gouerien. Medet an eost, eo ret dezho ma teuo mevelion ar veleien da gerc'hat o lod. Re bell e rankont gortoz. Pa vez amzer fall, e kollont an eost.

Ra vo berzet an deog perc'henniezh evel hini ar veleien. Gaou a reont ouzh an holl. Me a gav din ne vefe ket diaes paeañ an deogoù-se en arc'hant ; pe o frizachañ, ma ne baeor nemet un truañ hiviziken.

Ret eo sevel taolenn an douaroù e pep parrez.

Ra vezo eveshaerien-gontoù, ur wech an amzer. Ra vo ur priz unvan d'an hevellep evezhiadennoù, ha gopraet an eveshaerien a-zoare.

Evit echuiñ, uvel e pedan ar Roue da reiñ dimp ar veliezh en deus bet ar vadelezh da brometiñ, dreist-holl beliezh Kemper hag unan all er C'hastell-Nevez, a zo e-kreiz etre Kastellin, Gourin ha Karaez.

E Kerjegu, parrez Sant-Toz, e dalc'h Kastellin, d'ar 25-vet a viz C'hwevrer 1789.

N'em eus ket komzet c'hoazh eus ar brokulored.

Ezhomm ebet ne deus anezho. A-walc'h e vefe gant an alvokaded, a lakafe kloer da skrivañ evito. Gant un alvokad hepken e vefe d'ober hiviziken. O reizhañ mat pep tra, e kavfed muioc'h a c'hounideien, re nebeut anezho e Breizh, da zifraostañ douaroù.

Piv gwelloc'h eget un alvokad a c'hallfe ober labour un noter, gant muioc'h a wirionded, a ouiziegezh hag a c'halloud ? Ra vezo eta war un dro alvokad, noter ha prokolor, ha ne vo mui flastret ar bobl c'hall gant an dud-a-lezenn.

Ezhomm a zo ivez da wellaat stad an urcherien. Ra vezint dereatoc'h, nebeutoc'h a gammvoazioù ganto en o labour.

Ezhomm a zo a wardoù-broad, gant ma vo ar reol d'an holl wazed tennañ ar bilhed evit bezañ gward.

Ur vezh eo gwelout an dud uhel o treistwiriañ o mevel n : an holl kevatal.

Teir renkad tud a zo e Breizh-Izel, ker d'ar Stad dre ma'z int tud, va breudour.

Ar renkad kentañ eo ar berc'henned pinvidik o chom war o douar, o lakaat difraostañ douar da c'hounit eostoù, d'ober foenneier, koadoù, da sevel kleuzioù ...

(Amañ un nebeut linonnoù, debret ar paper gant an tartouzed. Moarvat an eil renkad eo ar berc'henned vihan hag ar verourien).

An trede renkad eo ar pennoù-tiez hep douar. Drastañ ha laerezh a reont an div renkad all. Ar c'hoad dreist-holl eo a blij dezho. "Pep tra a chom er-maez en noz a zo boutin," emezo. "Ezhomm hon eus koad da dommañ soubenn d'hor bugale."

D'ar c'hentañ gwelout emañ ar gwir ganto. Ur fals hini eo avat. Ret eo gwelout e pelec'h emañ ar si evit e ziwrizeniañ. Houmañ eo brasañ dizurzh ar maezioù, setu va meno.

Gwinizh-du a vez eostet e Breizh a-bezh. Kerkoulz e kresk gant ludu, teil pe demzoù all. Seul vui a geuneud devet, seul vuioc'h a ludu evit ar gwinizh-du. Ar c'hounidcien a zalc'h o ludu ganto. Daoust da se, war marc'hallac'hioù ar c'hêrioù, e vez muioc'h a sac'hadoù ludu eget a sac'hadoù ed, kent ha goude hadañ gwinizh-du. Ludu ar pennoù-tiez eo a vez gwerzhet, graet o teviñ koad laeret.

Klasket o deus Breujoù Breizh urzhiañ an dizurzh-se. Ur bern tregas a zo o klask testoù, mont d'al lez-varn evit magañ barnerien ha prokulored. Piv a rafe kement a vizoù evit barn un den divadoù ? Gwell e kav ar gouerien dioueriñ o c'hoad eget koll o arc'hant gant an dud-a-lezenn.

Un deiz e c'houlennis ouzh un alvokad mat perak kement a zizurc'h. "Abalamour m'eo displijus d'ar varnerien, setu perak," emezañ.

Setu koulskoude un dra a c'hell bezañ graet gant nebeut a vizoù. Reiñ ur c'hastiz a gorf bennak d'al laeron, o vont betek ar marv, mar bez ret. A-hend-all ne vo harz ebet d'al laeroñsioù.

A-wechoù ivez ar benndicien a vez lakaet dindan gazel-ge gant ar juloded o feurmiñ ker un ti, evit bloaz hepken, hag ober kalz devezhioù labour ouzhpenn. Mar klemm e vo taolet er-maez da Ouel-Mikael, o lavarout dezhañ : "Laeret ec'h eus diganin va c'heuneud. Kerzh da laerezh da lec'h all bremañ."

Petra ober a-enep ar walenn-se ?

Marteze ne vo ket va c'henvroiz a-du ganin. Ne welan tra ken d'ober nemet rediañ ar berc'henned atantoù da baeañ o c'hoad laeret d'ar verourien vihan.

(Amañ eo debret ar paper adarre).

Ur c'hleñved boutin hag euzhus eo al lorgnez. Ur wech an amzer e koll ar c'hlañvour ur vrec'h, un dorn pe ur c'har. Diviet eo ar c'hakouz gant e gleñved, nerzh ebet dezhañ d'ober mann.

Petra ober ?

Lavarout a ra ar vezeged e pare ar re gozh taget gant al lorgnez. N'eus louzoù ebet d'an dud c'hour. Ker e koust naactaat gwad ar vugale.

Ma'z adpeñfe ar Roue d'evashaat gant muioc'h a aked da sevel ospitalioù er c'hêrioù bras, e-lec'h ma vefe mezeged ampart da bareañ ar vugale, neuze e chomfe en

e Stadoù muioc'h a c'hounideien, brasoc'h niver a soudarded vat evit an arme e-ser rentañ eürusoc'h ar baour-kaezh tud-se klañv gant droug-Sant-Kado.

Un nebeut bloavezhioù a zo e voc savet herberc'htioù anvet "bicêtre", o reiñ spi d'an dud na vije ket gwelet ken labaskenned, peorien, kantreerien ha skraperien war an hentoù hag er parrezioù, hag e c'halljed pelloc'h mont en hent hep arvar da vezañ taget ha laeret.

Kent eget mervel gant an naon en toullou-bac'h-se, an dud a oa enno a gavas gwelloc'h terriñ dorioù ha prenestroù evit tec'hout kuit. Didalvez eo an herberc'htioù-se bremañ, ha ker o dorc'hel a-ratre.

Me a gav din em eus kavet gwelloc'h doare-ober.

Ra vo tennet digant renerien an herberc'htioù ar gwir da doullbac'hañ. Reiñ an aotre-se d'ar velcien, kuzulierien-barrez hag an dud a bouez. Ar re-mañ a lakafe peorien, labaskenned ha skraperien da labourat douar. E berr amzer ne vefe ken na kantreer, paour na labaskenn dre ar vro. Re hir e vefe menegiñ niver an drougoù o vont da get hag ar vad a zeufe ac'hano.

Graet e Kerjegu, parrez Sant-Toz,
eskopti Kemper,
d'ar 25-vet a viz Meurzh 1789.

Dupays de K/jegu,
Letanant ar Roue e Karnez.

=====

Kamp Etrekeltiek evit deskiñ Iwerzhoneg

Ur c'hamp etrekeltiek a vo dalc'het war-dro Pask en Iwerzhon evit deskiñ komz iwerzhoneg eeun da dud eus ar broioù keltiek all, gant ma ouestlo un niver bras a-walc'h anezho dont. Digor e vo ar skol e-pad 10 pe 14 devezh. Goulennet e vo digant ar berzhidi studiañ a-zevri, ma teskint ar muiañ ma vo en o galloud e-pad ar pennad berr-se.

Merour div skol holliwerzhonek e kreisteiz ar vro, Cormac Mac Carthaigh, a vo laouen o reiñ lojeiz ha boued dezho. Gant ma teuy 15 pe 20 en holl, ne goustfe nemet £10.50 (war-dro 135 lur gall) ar sizhun da bep den.

Tu a vefe d'aczañ ar c'hamp e skol Trábolgan, war an aod e reter kontelezh Corcaigh, pe, gwelloc'h c'hoazh, en un ti-skol-hañv en Enez Cléire (ur gouezelva) e mervent Iwerzhon. O tont eus Breizh, e c'hallfed berraat an hent dre zont gant al lestr-beajourien eus Abertawe (Swansea) da gCorcaigh.

Abeg a vez kavet er C'hevre Keltiek o vezañ ma reomp kement gant ar saozneg. Fellout a ra deomp reiñ tu, dreist-holl d'ar re a oar endeo ur yezh keltiek all,

da zeskiñ an elfennoù pouezusañ eus an iwerzhoneg gant un distagadur mat.

Ar skol-mañ a dlefe bezañ an hini gentañ eus ur rummad, - ket hepken evit deskiñ iwerzhoneg, - da vezañ aozet gant ar C'hevreur Keltiek. Evel-se e vo digoret an hent frankoc'h d'an darempredoù etrekeltiek, hep ma ve ezhomm d'ober gant ar yezhoù a wask hor re-ni. Goulenn a raimp digant iwerzhonegerien vat dont ivez, evel skoazellerien, evit ma c'hallio pep hini pleustriñ ar pezh a zesko. Degemeret e vo merc'hed ha paotred a ne vern pe oad.

Ar re zo dedennet a-zevri gant ar mennad-mañ a zo pedet da skrivañ diouzhtu da : A.Housaff, 9 Bóthar Cnoc Sion, Ath Cliath 9 (Iwerzhon), en ur lakaat un timbr etrevroadel evit ma vo respontet dezho kerkont, ha ma vo divizet gwelloc'h ar mare, al lec'h, h.a. Da bep hini eo lavarout pegoulz a zeroo ar gwellañ dezhañ pe dezhi : divizet e vo ar mare ha pad ar c'hamp diouzh ar pezh a zeroo d'ar brasañ niver.

Evit ma vo tennet ar brasañ splot eus ar skol, e vo goulennet digant ar bleustridi pleustriñ reoliek ar c'hentelioù, adalek an derou. E-pad an abardaevezhioù e vo tro da ziskuizhañ pe da aozañ abadennoù.

A.Housaff

Da renerien ar c'helaouennoù ha sekretourien
ar c'hevredigezhioù :

Ho pediñ a ran da embann ar gemennadenn a-us, pe d'he diskouez da izili ho kenurzhiaour pe ho kevredigezh an abretañ ar gwellañ.

Ret e vefe kaout respontoù a-raok derou Meurzh.
Trugarez evit ho harp.

=====
"ISTOR AR BINIOU"

Ur galv

Abaoe un daou-ugent vloaz bennak e tastuman danvez da skrivañ un "Istor ar Biniou". Daoust da se e chom c'hozh kalz peadra da zastum.

Goulenn a ran digant lennerien AR BED KELTIEK reiñ din da c'houzout mar anavezont : skridoù, tresadennoù, gwer a liv, taolennoù pe gizelladurioù savet diwar-bonn hor sonerion. Meneget e vo anvioù hor c'henlabourerion war al levr. Trugarez a-greiz kalon a lavaran dezho diaraok.

HERVE AR MENN

 AR C'HOARIVA BREZHONEK E PARIZ

gant L.Andouard

Displeget eo bet "Ar c'houmoul a dec'h", pezh-c'hoari A.O.Roberts, troet e brezhoneg gant Roparz Hemon, d'ar Sadorn 19 a viz Kerzu e "Ker Vreizh" Pariz, da 6 eur noz, gant ar strolladig-tud en doa c'hoariet warlene, en hevelep sal, "Un den a netra".

Siwazh Doue ! n'eo ket bet gallet dastroc'hañ an abadebb gant pennadoù sonerezh, evel ma'm boa soñjet ober. Degaset em boa, evit se, ur bladenn gombreat brudet ha'krouiñ an aergolc'h a zerc'ouzh ar pezh, nemet n'eo ket bet gallet he lakaat da dreiñ. Un druez eo, rak bravoc'h a se e vije bet an abadenn.

Daoust da se n'eo ket bet re fall en holl, ha laouen eo bet an arvesterien, war am eus klevet, gant ar pezh o deus gwelet ha klevet. Koulskoude, n'eus arvar ebet e vije bet displeget gwelloc'h ar pezh-c'hoari m'hor bijo gallet labourat muioc'h a-gevret.

Bec'h, avat, hon eus bet evit kavout ur plac'h da c'hoari ganeomp, ha re laouen omp bet p'hon eus kavet unan evit gwelout diouzhtu pegen diaes e vije bet ken-labourat ganti. Emañ-hi o chom e Nancy, hag abalamour d'ar pennad-hent a zo etre ar gêr-mañ ha Pariz, n'he doa gallet dont nemet ur wech da labourat ganeomp. Desket-mat, avat, he doa he lodenn, ha tremenet hon eus hor beurevezh disadorn diwezhañ o pleustriñ war ar pezh hag oc'h aozañ pep tra evit an abardaez.

Kinkladurioù mat hag eeun, e gwenn hag e du, a oa bet treset gant bugale hor mignon Bruneau, hag un tamm aoz a oa bet graet d'an tredan evit c'hoari gant ar goulou evel ma oa ret.

Setu amañ anvioù ar c'hoarierien hervez an urzh ma'z int deuet war al leurenn :

Herried Meudeg Ur Wreg

Jilberzh Bruneau Hec'h Ozhac'h

Jermen Breton Ar C'hasker-Bara

Evidon-me, a rae an Droukspered, chomet on kuzhet a-dreñv d'un tamm lienenn du o kouezhañ eus ar solier betek ar plañchod, e-pad an displeg-adenn a-bezh.

A-rack kregiñ gant ar pezh-c'hoari em eus lakaet an arvesterien da zerc'hel soñj eus ar pal a glaskomp tizhout : reiñ buhez en-dro d'hor c'hoariva.

Goude, ez eo bet lennet gant Tereza Ar C'horr, ur plac'h yeouank a zo ganti taol-mouezh Treger hag ur vouezh flour, an darn vrasañ eus ar pennad-skrid

"Pezhioù-c'hoari", ma tiskler ennañ Roparz Hemon perak en doa lakaet pezh A.O.Roberts e brezhoneg.

Evit d'an dud bezañ erruet diwezhat, hogos leun e oa ar sal p'hon eus kroget ganti, ur c'hardeur goude an eur merket.

Da geñver an displegadenn-mañ e kav din e c'hallan ober an evezhiadennoù da heul :

a) Ur souezh eo n'hon eus ket merzet muioc'h vertuzioù ar c'hoariva, ha rak-se pleustret muioc'h warnañ eget n'hon eus graet abaoe diwezh ar brezel, ha dreist-holl abaoe un dek bloavezh bennak.

b) Displegañ ur pezh-c'hoari a zo un oberiantiz dreist evit ar Vretoned, rak lakaat a ra meur a zen da labourat asambles e-pad ur pennad-amzer hir pe hiroc'h e sell da dizhout ur pal resis, da lavarout eo, da ober pezh ne ouzont ket ober ha ne garont ket peurliesañ. Setu perak e rankfe ar Vretoned pleustriñ a-zevri war ar c'hoariva, muioc'h eget ar pobloù all marteze. E penn kentañ ar miz, kredet hon eus e-pad ur maro ne vije ket ar "Wreg" evit dont da Bariz evit an deiz merket, nemet va mignoned ha me hor boa graet hor menoz c'hoari ar pezh, d'an deiz-se, koustet a gousto, rak kavout a rae dimp ne c'hallemp ket kilañ ken.

k) C'hoari ur pezh a zegas ouzhpenn tud nevez d'ar yezh ha d'an Emsav. Ret eo d'ar c'hoarierien goulenn skoazell digant re all, ha neuze lakaat tud all da genlabourat ganto. Soñjet em boa, da gentañ, ober kinkladurioù ar c'hoariloc'h me va-unan. Nemet lammet em eus gant ar joa pa'z eo en em ginniget bugale Vruncau d'ober al labour-se, ha, muioc'h c'hoazh, pa'm eus gwelset frouezh o labour. A-hend-all, e-touez an arvesterien e oa tud diveaz, digustum, dedennet nemetken, pe gant ur c'hoarier, pe gant ar c'hoant da adkavout e-pad ur pennadig un draig bennak eus o yaouankiz pe eus o bro.

d) Souezhus e oa gwelout an diforc'h a oa e "Ker Vreizh" a-raok an displegadenn ha goude. Neuze e oa kaozioù gant an dud, birvilh ha joa en o zouez. Buhez !

e) Merzet em eus ivez an diforc'h a oa etre ar c'hoarierien o tibunañ o lodenn dirak keder goullo ha dirak ur saliad-tud. Neuze e vezont evel "douget" gant an arvesterien. Anat eo bet kement-se dreist-holl evit ar "Wreg", am boa kavet unton a-walc'h diouzh ar beure, hag a zo en em ziskouezet leun a dan hag a nerzh en abardaevezh. J.Breton a zo bet dispar evel boaz, ha Bruneau, a ouie e lodenn war benn e viz abaoe pell, en dije gallet bezañ gwelloc'h a-wechoù. Danvez ur c'hoarier a zo ennañ, avat, ha pegen souezhet bennak e c'haller bezañ gantañ, - pevar bloaz 'zo ne anaveze ger brezhonek ebet, - e vimp sur a-walc'h muioc'h c'hoazh er bloavezhioù a zeu. Ar "Wreg" a zo, sur-mat, danvez ur c'hoarier enni, o welout ar pezh he deus graet a-ziwar an taol kentañ

ma'z eo "en em ziskouezet" war ul leur-c'hoari. N'hallan ket lavarout "savet", evel ma vez lavaret, rak e "Ker Vreizh" n'eus ket a leurenn-c'hoari, nemet spi hon eus e vo unan a-barzh nemeur. Kement-se a ra, da'm meno, diouer bras dezhi e pep keñver.

Arabat krediñ e kavomp peurvat pezh hon eus graet. Nemet laouen omp a dra sur da vezañ graet un dra bennak war un dachenn ma n'emañ ket an dud oc'h en em vountañ an eil re ouzh ar re all. Gouzout a ouzomp n'hor boa ket labourer a-walc'h, dreist-holl a-gevret, ne oa ket bet aozet mat pep tra ganeomp, ne oamp ket aet don a-walc'h e munudoù an aozañ. Deskarded omp c'hoazh, hag evit pell moarvat. Hor si brasañ, marteze, eo bezañ labourer hep den barrek d'hor c'huzuliañ, d'hor barn ha d'hor c'henteliañ.

Emaomp, avat, e soñj da zisplegañ "Ar c'houmoul a dec'h" un eil gwech e Sceaux, a-benn ur miz, moarvat, ha, neuze, evel just, e klaskimp ober gwelloc'h.

Evit an amzer da zont, ret e vo kenderc'hel, en ur mod bennak. Fiziañs hon eus, avat, e teuo skoazell deomp, hag hor bo nebeutoc'h a boan da gavout c'hoarier-azed ar wech all. Ar profoù a zo bet roet gant "Ker Vreizh" d'ar c'hoarierien goude an displegadenn d'o zrugarekaat a ziskouez ar pouez a ro he renerien hag he frezidant, Mikael Koig, da zasorc'hidigezh hor c'hoariva broadel.

=====

A-DU GANT EUSKARIZ

gant Alan Heusaff

Lavaret e oa bet e vije graet prosez ar c'hwezek brogarour e derou miz Du. Divizout a reas poellgor Skourr Iwerzhon ar "C'hevre Keltiek" ober un displegadeg gant skritelloù dirak kannaddi Bro-Spagn.

Lizheroù a oa betskrivet d'ar c'hannad, unan anezho sinet gant 22 zen "a bouez" e buhez politikel ha sevenadurel ar vro. Respontet e voe hepken e oant bet degemeret.

Ne oa ket a-walc'h.

Marteze e vije kaset ar prosez da benn buan-ha-buan.

D'ar Sul da noz en em glevas un nebeut tud evit mont d'ar c'hannaddi ar Meurzh da c'houde. Goude koan e vije, rak ne vijent ket dieub e-pad an deiz.

En em gavout a rejont e ranndi Art ha Maire, nepell diouzh Droichead na Dothre hag Aylesbury Road, m'emañ bodet an darn vrasañ eus ar c'hannaddioù. Art eo en doa pouezet evit ma vije graet buan, hag en doa pedet un toulladig mignoned da zont. Enk a-walc'h eo e sal-debriñ

ha kegin. Edont a-zevri o tresañ skritelloù, ouzh o fegañ gant "sellotape" hag o stagañ ouzh bizhier gant broudoù.

Bleniañ a reas Art e garr-tan e-barzh ur straedig dizarempred. Hag e kerzhjont daou pe dri c'hant metr, a-hed ar vali, betek o fal, pep hini gant e skritell : "Gora Euzkadi", "Saoirse do na Bascaigh", "Franco, muntre", "Ar Gelted a-du gant Euskariz" : bez' e oa anezho e peder yezh.

Kannaddi Spagn a zo anezhañ ur mell savadur, damguzhet en ul liorz h vras, e penn ur vali gamm. Ouzh toull al liorz h, hag a zigor war groazhent Aylesbury Road ha hent Dún Laoire, ez eus un ti-gward.

Kregiñ a rejont da vont-dont war ar riblenn, hed-ha-hed ar voger, o tiskouez o skritelloù d'an dremenerien pe d'ar vlenierien girri-tan a chome a-sav pa veze ruz ar goulou-kroazhent. Degouezhout a reas un nebeut paotred all, en o zouez unan hag a ouie spagnoled. Bep ar mare e hope unan bennak : "Franco d'an traoñ !", pe washoc'h.

Tremen a reas un archer toghouarnet war varc'h-dre-dan. Distreiñ a reas ha chom a-sav e-kichen ar riblenn da sellout ouzh an displegerien. Mont a reas en tu all d'ar straed, hag a-ziwar e varc'h e voe gwelet o komz ouzh un ardivink a oa gantañ war e vruched.

Derc'hel da vont hep teurel evezh ouzh an evezhier. Dizale avat e tiskenn tri archer all eus ur c'harr-tan, hag e chomont ur pennad da arvestiñ ouzh an dougerien skritelloù o tremen e-biou dezho.

"Piv zo e karg ?" a c'houlenn an hini koshañ anezho.

"Piv a gomzo outo ?" a lavar Maire.

Tomas a raio. "Na ra ket gant ar saozneg," eme vMaire e pleg e skouarn.

Tra ma vez goulennataet Tomas, e kendalc'h ar re all da gerzhout. Rak difennet eo chom a-sav evit un displeg-adeg.

"Pe anv hoc'h eus ?" (e saozneg). - "Ne fell ket din komz saozneg" (en iwerzhoneg). - "Pe anv hoc'h eus ?" (en iwerzhoneg). - "Ne gav ket din em eus ezhomm d'hen lavarout." - "Piv eo ar re all ?" - "N'o anavezan ket dre o anv." - "Perak emaooc'h o kerzhout evel-se ?" - "Evit diskouez hor c'hengred gant tud hag a zo gwasket gant gouarnamant Bro-Spagn. tud hag a zo en arvar da vezañ lazhet peogwir o deus stourmet evit o yezh hag o frankiz." - "Perak ez oc'h ken chalet-se ganto ? Perak ne rit ket a zisplegaded abalamour d'an iwerzhoneg ?" - ... ! - "Pe anv hoc'h eus ? E pelec'h emaooc'h o chom ?"

Tomas a zalc'h start d'e linenn-difenn. N'eus amañ netra a-cnep al lezenn, ha dacañ a ra an archerien da lavarout ez eo ret reiñ e nav. A-benn ar fin ez cont kuit.

Nav eur bennak eo. Eus tu ar c'hannaddi ne fiñv netra. N'eus den ebet en ti-porz hier. Poent eo mont da welout ar c'hannadour. Gant ar vali c'hrouanek ez cont betek menk-ti goulaouet-kaer ar maner. Tomas a ya da skeiñ war an nor, ar re all bodet en traoñ gant o skritelloù a-us d'o fenn.

Ur paotr duard e lifre gwenn a zigor.

"C'hoant am eus da reiñ ul lizher d'ar c'hannad."

Adserret en deus an nor. Trouz ebet en diabarzh. Gortoz. Moarvat ne zeuio ket. Goude pemp munud, setu ma vez digoret avat. En trepas e chom un den kozh ha div vaouez. En iwerzhoneg e komz Tomaz, daoust ma oar ervat ne vo ket komprenet.

"Ne gomprenan ket mat saozneg," eme an aotrou.

"Deus amañ 'ta," a c'halv Tomas en iwerzhoneg, o treiñ war-du e geneil yaouank, ar spagnoleger. "Displeg dezhañ e fell deomp reiñ dezhañ ul lizher, o tamall ouzh e c'houarnamant gwaskañ ha gwallgas Euskariz. Sede al lizher."

Hag e krog un diviz tric'hornek. Ar c'hannad a lavar en deus kaset ondeo ul lizher digant ar C'hevre Keltiek da Vadrid, ha ne c'hell-cñ ober netra. N'eus anezhañ nemet un dilcuriad.

Diskloriet eo dezhañ avat ez eur deuet d'e gaout, peogwir ne oa ket mat a-walc'h lavarout hepken e oa bet resevet al lizher.

Bremañ avat e savas e vouezh : "Dont da'm direnkañ d'an eur-mañ !" - "Aotrou, Euskariz a zo en arvar da goll o buhez." - "Gervel a rin ar bolis." - "Mat !" eme Tomas, "lennot hoc'h eus al lizher. A gement-se e felle deomp bout sur. Kenavo 'ta."

Darc'havet eo bet an nor war o lerc'h.

Un nebeut sizhunvezhioù diwezhatoc'h, e voe graet un displegadedeg heñvel en endervezh. Graet e voe adarre war ar prim, un tammig war atiz un aozer programmoù skinwel. Muioc'h a dud a zeuas ar wech-se, izili eus ur strollad republikan dreist-holl, hag ivez un dileuriadur mat eus Skourr Iwerzhon ar C'hevre Keltiek.

Savet e oa bet ur C'homite Iwerzhonat-Euskarat daou zevezh diagent, met un darn vat eus ar re a gemere perzh ennañ a oa anezho tud habask.

Divizet o doa e vije aozet ur gerzhadeg vras a-dreuz kêr, gant ar spi e teuje ur bern izili eus ar strolladoù-micherourien. Ne gave ket dezho e oa arvestus a-walc'h ur "picket" gant div pe deir dousenn a dud er fabourzioù.

Ar gerzhadeg a voe lakaet d'ar Sadorn endervezh, 19 a viz Kerzu. Kemennet-mat e voe en unan eus ar c'helaouennoù pendeziek da vihanañ.

Da greisteiz avat e oa ur vodadeg all e-tal Burev Bras ar Post evit goulenn ma vije dieubet Iwerzhoniz hag a zo barnet da veur a vloavezh toull-bac'h e Bro-Saoz, tapet ma voent o kas prenañ armoù da implij er 6 Kontelezh. Bernadette Devlin a oa aze, hag a yeas da zigoriñ un dousennad Republikaned a oa o kregiñ en deiz-se gant ur gerzhadeg eus Dulenn da gCorcaigh, evit tennañ evezh war wall stad an doullbac'hidi ivez. (250 kilometrad hent a rejont war droad penn-da-benn).

Gant se ne voe ket taolet moarvat kement a bled d'ar gerzhadennig a-du gant Euskariz a-dreuz kêr adalek Leur-Gêr Parnell betek Ministrerezh an Aferioù Diavaez e Leton Stefan (Stephen's Green).

Da deir eur e tleed loc'hañ. Un 30 den bennak a oa degouezhet. Daou zen o doa degaset skritelloù. Nebeut a dra. Re all a oa bet aozet en derc'hent, met pedet e oad bet d'o lezel e-pad an noz e ti an "United Irishman" ha n'emañ nemet 400 metr ac'hane. Aet e oad dre ziv wech d'o c'herc'hat, - en aner. An nor a oa prennet. Mont a rejod adarre : tra d'ober. Ankounac'haet en doa unan bennak e gefridi. Buan-ha-buan e redas ur paotr da draoñ Straed O Connell da brenañ paper-tresañ tev, hag e voe livet teir pe beder skritell all.

Daou-ha-daou en ur steudad e kerzhas neuze an displegerien war-du kreiz-kêr, paotred o skritelloù divazh er penn a-raok, ambrouget gant un archer. Dre ma tostaed ouzh ar pal, e kreske ar bagad, da 100 pe 150 den en holl, hag e chome muioc'h-mui eus ar "Christmas shoppers" a-sav war ar riblenn da sellout outo o tremen.

E-tal ar Ministrerezh e oa bodet e-leizh a archerien, met ne glaskjont ket herzel ouzh an displegadedeg o nep doare. Daou rener an abadenn a yeas betek an nor, da c'houlenn komz ouzh ar ministr. Ne oa ket eno ...

Neuze e trojont war-du o houlrierien, hag e voe graet ur brezegenn nerzhus ha kalonek, onni un notenn a gorse koulskoude, peogwir ne oa ket deuet muioc'h a dud.

Un nebeut devezhioù goude e voe graet un displegadedeg gant skritelloù dirak burev ar gompagnunozh karnijerozh IBERIA, en ur vanell stok ouzh Straed Grafton. A bep seurt kaozioù a voe klevet digant an dremenerien, darn o vouliñ ha re all o kareziñ. Ur beleg a lavaras e oa kement hag en em ziskleriañ a-du gant muntreerien. Un Euskaradez a fizias e oa-hi a-du gant he c'henvroiz toullbac'het, met ne zaleas ket war an dachenn.

Un nebeut devezhioù a-raok Gouel Nedeleg, e oa dalc'het unan eus emvodoù ar C'homite Iwerzhonat-Euskarat, e kav Halla na Saoirse, ar savadur uhel war c'hlan al Life.

Un dousennad tud a oa eno. Anv a oa da aozañ ur vodadeg foran, kerkent ha ma vije anavezet barnadennoù prosez Burgos. Goulennet e oa bet digant ur c'helaouenner a oa bet eno dont da brezeg, ha spi a oa da zegas un Euskarad, ezel eus ETA, eus Bro-Saoz ivez.

Ar vodadenn-mañ ne oa gouestlet nemet d'an dra-se, met un den yaouank, doare dezhañ da vezañ ezel eus ar "Connolly Youth Association", a lavaras ne oa ket mat pouezañ kement war an abegoù a vroadelouriezh, gant aon da anozañ kalz tud eus an tu kleiz e Bro-Spagn : gwelloc'h e oa komz eus ar gaou graet gant renadurezh Franco ouzh ar vicherourien. Sekretour ar C'homite a enebas taer ouzh ar c'hinnig-se : eñ a oa ur sokialour ivez, met da gentañ e oa ret d'ar broioù suj gounit o frankiz d'en em

c'houarn, ha goude e oa dezho da welout peseurt liv a vije d'o gouarnamant.

Bez' e oa aze daou gomunour tu Moskov, poellek o alioù ha parfet o doare da gomz. Un den yaouank a grogas da damall da c'houarnamantoù Polonia hag Unaniezh ar Soviedoù bezañ roet harp da c'houarnamant Franco pa oa harz-labour e mengleuzioù-glaou Asturia n'ouzon dare pe vare. Ret e oa tagañ paotred Voskov koulz ha re Vadrid ...

Troc'het e voe dezhañ e gaoz gant un den kozh, ur sindikadour, hag en em ziskulias evl Maoad, deuet aze da glask tennañ mad eus ur vodadeg da harpañ Euskariz ha prezeg a-du gant e chapelig e-unan. Egile a zalc'has gant e aviel, met goulennet e voe digantañ reiñ peoc'h.

N'eus ket bet a vodadeg foran. Tud 'zo a gave didalvoud a-walc'h ar mennad, o toujañ e vije fuzuilhet ar re a vije barnet d'ar marv a-raok ma vije bet gallet aozañ ur vodadeg vras. Divizet o doa skeiñ diouzhtu, daou zevezh d'ar muiañ goude ma vije embannet ar varn-edigezh, en un doare koustus evit Spagnoliz.

Ne voe ket kaset ar steuñvad da benn, peogwir e voe kemennet e oa kemmet ar barnadennoù dindan peder curvezh warn-ugent goude ma voe lavaret e oa kondaonet c'hwec'h eus ar brizonidi d'ar marv.

AN AOZADUR GLADDALC'HEL
LEZ AN DUG

troet diwar
Istor Breizh
La Borderie
(Levrenn III)

Al lezioù dugel kentañ

Koshañ bodadeg a c'hell bezañ anvet lez dugel en amzer Lignez Roazhon a voe galvet e Roazhon end-ecun e 990 gant Konan Ar C'hamm.

Edo ar priñs-se e Dol d'an 28 Gouere, deiz gouel Sant Samzun. Aet oa da bediñ e kev an iliz-veur gouestlet d'ar sant, hag eno en doa graet donezonoù bras-mourbet da abati Menez-Mikael-ar-Mor, ken bras ma soñjas e oa ret, evit na vije arguz ebet, o lakaat da vezañ pourwiriekaet gant pennañ tud e zugelezh, liked ha kloor. Galvet e voent da Roazhon d'an 9 Eost. En o zouez e oa an nav eskob a Vreizh, deuet war c'hour-c'hemenn groñs Konan, un nebeut abaded, hag un niver bras a aotrouncz lik.

War-dro ar bloaz 1000, an dug Jafrez I a zalc'has en Alre "e parlamant meur hag holl lez e varoned".

E 1027, e vab Alan III a zibabas da lec'h-emvod Enez (hiziv Ledenez) Kiberen, a oa neuze dindan ur c'hoad stank jiboezus, hag etre dalc'hioù-azez an uhelvodadeg, ez aoze an dug hemolc'hadennoù da ziduiñ e varoned.

Priñsed an amzer-se a gare ivez ober o annez en abatioù, peurgetket re Redon ha Kemperle.

Konan II, goude ur vinoriezh hir, a zigoras e gemeridigezh-c'halloud gant ur vodadeg dalc'het e Redon. Eno edo e "optimates", da lavarout eo pennañ aotrounez Vreizh, ha douget e voe ur varnedigezh pouezus-tre, a gomzin anezhi pelloc'h.

E Redon ivez e talc'has Alan Fergant e lez hollek (plenaria curia) gant e "optimates" e 1089, ha c'hoazh e 1110 gant e varoned. En un diell eus an amzer-se e lavarer zoken e oa boas da vodañ e Redon holl uhelidi Vreizh.

An dug Hoel, e 1069, a vodas e varoned e Kemperle, hag e 1082 en Alre ; Alan Fergant e Kemperle c'hoazh e 1107, hag e Naoned e-tro 1110 ; Konan III en abati Sant Sulpis e-kichen Roazhon e 1146, h.a.

Izili al lez dugel

En dielloù stag ouzh ar bodadegoù-se e weler, meneget dre o anv, un nebeud eus an dud a gemeras perzh anno. Niver an aotrounez lik lakaet bezant e dalc'hioù al lez dugel a ya eus 10 betek 20 pe war-dro. Ne verker avat nemet anvioù ar re bennañ. Hep mar e oa kalz muioc'h, pezh a zo anataet gant un diell eus abati Kemperle a-zivout al lez dugel dalc'het er gêr-se e 1069.

En diell-se, e tiskler an dug Hoel e oa bodet eno "un tolp bras a dudjentil, eus ar re bennañ, ar re uhelañ, eus Bro-Naoned, Bro-Wened, Kernev ha Leon".

Hag e lavar ouzhpenn :

"Bet em cus digant va breur Bencad, abad Kemperle, ur yalc'had a 30 lur e dineroù, evit bastañ da ezhommoù va marc'heien, a nij davedon evel gwenan eus o ruskenn, a bep korn a Vreizh".

Ar vodadeg foran-se (publicus conventus), al lez dugel-se dalc'het e Kemperle a oa enni eta un niver bras a berzhidi, ha koulskoude n'eus e traoñ an diell nemet sinoù an dug e-unan, e zaou vreur Benead ha Budic, ha daouzek all. Hep mar e oa kalz muioc'h a dud.

Niverus-tre e oa eta, peurliesañ, ar re a gemere perzh e bodadegoù al lez dugel, lez hollek pe parlamant meur. Un doare diouto o-unan o doa, rak kavet e veze atav enno, mesk-ha-mesk, tud eus pep rannvro. E Naoned, da skouer, e oa brezhonegerien mesket gant Naonediz. E Kemper pe e Kemperle, mesket gant Kerneviz, e oa tud eus Breizh-Uhel.

Ur wech e'hoazh, lavaromp e tenne ar veskadeg-se dreist pep tra da gondeuziñ ar rummoù disheñvel en un unded vroadel, da ziorren, e Breizh-Uhel koulz hag e Breizh-Izel, ar santad brezhon.

Dizurzh hag urzh el lez

Dizurzh a save e-wechoù diwar an emvodañ tud, disheñvel o yezhoù hag o boazioù. En amzerioù kentañ ar c'hladdalc'helezh, e veze tousmac'h purliesañ er bodadegoù-meur-se. An dug end-coun a e'hoarvezo dezhañ bezañ gwallgaset ha kunujennet gant e wizien.

Da skouer, e "Parlamant Mour Alre", meneget uheloc'h, ma oa bet galvet e holl varoned gant an dug Jafrez I, "e savas arguz," hervez ur c'hronik kozh, "etre Jafrez hag aotrou Ar Gemene-Heboe. Ma'z eas an aotrou-mañ er-maez anezhañ e-unan, betek dislavarout Jafrez dirak holl dud al lez. Gant ar gounnar e kuitas Jafrez ar Parlamant, hag act en e gambr, e taolas e vallozh war e lignez hag e wizien, nemeto a glaskje digoll dezhañ digant aotrou Ar Gemene-Heboe."

E-tro dibenn an 11-vet kantved e veze reizhet gwelloc'h an traoù. E lez an dug Hoel hag hini e vab Alan Fergant, e weler ofiserien anvet dougerien-wialennoù (virgiferi), karget da virout an urzh en emvodoù-se.


=====

LEVR-BLOAZ 1971 AR C'HEVRE KELTIEK. - El levr-se e vo embannet un daolenn eus an darvoudoù pouezus pe bouezus-oc'h eus ar vuhez vroadel e Breizh hag er broioù keltiek all. Al levr-bloaz a dle bezañ embannet a-benn ar 25 Mezheven. Gant harp an daolenn-se e c'hallo gweladennerien eus ar broioù all gouzout pelec'h ha pe vare e vezo abadennoù, bodadegoù, gouelioù, kenstrivadegoù eus ar seurt-mañ pe ar seurt-hont, gouest da reiñ dezho un tañva eus dibarderioù ar vro hag a dremenfent a-biou dezho a-hend-all marteze. Anaoudek e vefen ouzh al lennerien a deurvezfe tennañ va evezh (pe hini Sekretour Skourr Breizh, Jakez Derouet, 2, Place du Martray, 44-NANTES) war zarvoudoù eus ar seurt-se a dle degouezhout hevlene pe ar bloaz a zeu, en ur verkañ o zalvoudegezh hag o deiziad resis. N'eo ket hopken Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien a dle bezañ meneget, met ivez kendaeloù, devezhioù-studi, bodadegoù kevredigezhioù, o vezañ ma rofent tu da vignoned da Vreizh da welout Breizh nevez o sevel, ha da virout na zistrofent d'o bro en ur lavarout : "Tremenet on e Breizh. N'em eus gwelet roud ebet eus an Emsav broadel." - A.HEUSAFF.


=====

C.C.P.P. No.36.242.


Le Gérant : Mlle Y.Martin, 24, rue Poull ar Bachet, BREST.
Liesskrivet gant ar gelaouenn/Ronçotypé par la revue.



Kelaouenn vizek
Niv.147 - Meurzh 1971
Koumanant-bloaz : 20 lur
(Studierien ha soudarded : 15 lur)
(Broioù estren : 25 lur)
"AR BED KELTIEK"
24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST
CCP.RENNES 1907-07



=====
PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON
=====



T a o l e n n

- 60 Ar c'hoariva adarre (Roparz Hemon)
- 62 Delioù, sec'h ha glas (Anjela Duval)
- 66 Gwechall du-mañ : Koroll ar Seizenn (Herve Ar Menn)
- 68 An aozadur gladdalc'hel, kendalc'h
(troet diwar Istor Breizh La Borderie)
- 73 Geriadur ar Brezhoneg, kendalc'h (Roparz Hemon)
- 79 Displegadegoù (Alan Heusaff)
- 82 Merc'hed Béal Feirste e-kreiz an emgannoù
(Alan Heusaff)
- 85 Ar miz (15 Genver - 15 C'hwevrer)

ooo

A viz da viz e kresk niver koumananterien
AR BED KELTIEK.

Penaos e teu dimp koumananterien nevez, ne ouzomp
ket, rak ne reomp ket a vruderezh. Hep mar ez eo un
arouez eus an darvoud a verzer bremañ : pobl Vreizh o
tistreiñ d'o yezh.

Moarvat ivez hon eus mignoned a labour evidomp.
O zrugarekaat a reomp.

AR C'HOARIVA ADARRE

gant Roparz Hemon

En e bennad "Ar C'hoariva brezhonek e Pariz", e niverenn ABK miz C'hwevrer, e tenn L.Andouard hon evezh war ur gudenn a bouez bras. D'ar mare end-eeun ma weler emskiant ar yezh o kreñvaat, embannadurioù a bep seurt o tont er-maez, ar skolioù brezhoneg o paoaat, e seblant ar c'hoariva bezañ toc'hor.

Gwir eo, e vez displeget pezhioù-c'hoari ur wech an amzer, er c'hêrioù, war ar maez, er c'hampoù, da geñver gouelioù ha kendalc'hioù. Ne vez ket atav graet anv anezho war ar c'helaouennoù, hag e-giz-se e chomont dianav d'an darn vuiañ eus ar Vrezhoned. Ma vefe tu da sevel roll klok an abadennoù a vez aozet bep bloaz, e vefe merzet ez int stankoc'h eget na greder.

Koulskoude, ret eo anzav n'eus ket e Breizh ul "luskad c'hoariva" evel ma'z eus e Kembre pe en Iwerzhon. Ha soñjal ez eo bet Breizh gwechall "bro ar c'hoariva", e ra ar pezhioù-c'hoari ul lod bras eus hol lennegezh kozh, ha ne reont ket ul lod dister eus hol lennegezh a vremañ kennebeut.

Evel m'en deus merket L.Andouard, ez eo ar c'hoariva un oberiantiz kevredigezhel a dalvoudegezh. Da gentañ, lakaat ur strollad tud da genlabourat etrezek ur pal resis, ha n'emañ ket re bell da vezañ tizhet e berr amzer. D'an eil, bodañ en ur sal arvesterien en em gav, e-pad ur mare, unanet en un heuliad trivliadoù. E-keñver ar striv da reiñ lañs d'ar yezh, n'eus netra efedusoc'h marteze.

Lakait ar goulenn dirak ar re a zo, war an dachenn vroadel pe an dachenn lec'hel, e karg eus emsav ar yezh, hag ho pezo diganto ar respontoù boas : n'hon eus ket amzer, n'hon eus ket arc'hant, ne ouzomp ket ar vicher, n'hon eus ket a dud gouest da c'hoari, da gempenn gwiskamantoù, da fichañ kinkladurioù, n'hon eus ket a sal. A-wechoù zoken e klever : ne gavomp ket a bezhioù-c'hoari.

Da gement hini a lenno ar pennad-mañ, e lavaran : mar kemerit perzh, evel rener pe evel ezel, en ur c'helc'h, en ur skol, en ur c'hamp, en un devezh-studi, en ur vodadenn bennak, pa vo klasket sevel roll "an traoù d'ober", grit ar c'hinnig-mañ :

"Ha ma aozfemp-ni ur pezh-c'hoari ?"

Peurliesañ, am eus aon, e vo diarbennet ho kinnig. Ha c'hoazh, piv 'oar, e-touez ar re a vo ganeoc'h, e vo unan, daou pe dri, na raint ket skouarn vouzar. Rak ar c'hoant da ober c'hoariva a van morgousket e meur a galon, ha ne c'hortoz nemet ur gomz da zihuniñ.

Soñjal a ran dreist-holl er skolioù brezhoneg. Kelennerien 'zo a gred ez eo mat lakaat buhez en o c'hentelioù. Darn a zesk kanaouennoù d'o diskibled. Darn a ijin c'hoarioù a bep doare : c'hoari loto, c'hoari domino, c'hoari kartoù, c'hoari gouestloù, h.a.h.a. Darn a ya betek ober charadennoù. Ur c'hammed muioc'h, hag emaint war hent ar c'hoariva.

Nann, n'eus ket ezhomm diouzhtu da zisplegañ "Gurvan", nag "Otello", na "Marc'hadour Venezia", nag unan eus hor misterioù kozh, enno pemp arvest pe c'hwec'h, hag ouzhpenn. kant c'hoarier.

Lakait daou pe dri eus ho tiskibled da c'hoari ur pennad ho po kempennet eus an "Divizoù" pe ar "C'holokoù", a gaver aes a-walc'h skouerennoù anezho. Pe gemerit ur pennad berr tennet eus ur pezh-c'hoari bennak. Pe c'hoazh, dibabet ur gontadenn, enni kaozadennoù e-leizh, lakait un diskibl da lenn ar rannbennadoù a rank bezañ lennet, ha diskibled all da ober rolloù ar c'hoarierien.

E-giz-se ho po tamm-ha-tamm "stummet" aktored, a vo prest neuze da zisplegañ ur gwir bezh-c'hoari.

Meur a wech hon eus meneget war ABK ar c'hoariva-margodennoù hag ar c'hoariva-kartoñs. Un druez vras eo ne vefe ket bet c'hoazh heuliet ar skouer gant an Ao. Dr.Roparz. Amañ adarre e soñjan er skolioù brezhoneg. Pep skol a c'hell kaout he "minic'hoariva" : ur penn kartoñs pe ur batatezenn e penn ur vazh, ha setu, - da stagañ ganti, - ar margodennoù. Mar kroger evel-se, kerkent e savo c'hoant da ober un tammig gwelloc'h, ha kalz gwelloc'h dizale. Perak ne rafec'h ket e Breizh pezh a vez graet gant kement a verzh e skolioù broioù all ?

Mar bez selaouet va alioù gant unan hepken eus ar re a lenno va fennad, ne vo ket bet skrivet en aner.

====

Roll pennadoù a-zivout ar c'hoariva embannet gant AR BED KELTIEK :

- 1963. Grit ho c'hoariva merc'hodennoù (Roparz Hemon), niv.51, Meurzh, p.44.
- 1965. Ar c'hoariva-kartoñs (Arzel Even), niv.79, Gouere, p.198.
- 1966. C'hoariva AR BED KELTIEK, niv.87, Meurzh, p.75.
Margodennoù (Erwan Roparz), niv.95, Du, p.315.
- 1967. Penaos ober ur c'hoariva-kartoñs (Arzel Even), niv.97, Genver, p.5.
C'hoariva (Roparz Hemon). niv.101, Mae, p.126.
- 1968. Pezhioù-c'hoari Roparz Hemon. niv.118, Here, p.280.

DELIOÙ, SEC'H HA GLAS

gant Anjela Duval

Setu miz Kerzu aet en tu-hont d'an hanter. N'eo ket stank ken an delioù er gwez. An derv-gwenn, ar fav-put a zalc'h d'o dilhad kozh betek an nevez-amzer, hogen nebeut a c'houdor ne gaver ken dindan ar gwez-mañ. Nemet plijus eo klevout o deil sec'h o trouzal gant an avel. Evel pa vefent o c'hoarzhin goap outañ.

Al lodenn vrasañ eus an delioù avat a zo stlabezet du-mañ du-hont. Mont a reont pell, darn anezho, da gouezhañ, pa vez kreñv an avel. Sant Ingaler, a lavare va zad, a zo hiziv, pe c'hwezhe an tempest da goulz kouezh an delioù.

Un implij a bouez bras a veze graet gant an delioù gwechall. Ur wechall n'emañ ket pell war a-dreñv c'hoazh.

Ul lodenn vras eus an teil a veze graet gant delioù. Delioù dastumet tro ar parkoù, ar pradoù. Er c'hoadoù-tailh ivez, ar bloaz ma veze troc'het ar c'hoad. El lanneier memes tra. Al lodenn lann a veze troc'het bep bloaz e miz Meurzh d'ober gor a leze ur gwiskad "gweskoù" war o lerc'h, a oa prizet a-walc'h.

Un tamm mat a labour a rente an deliaoua-mañ. Se oa mat pa oa tud er feurmioù. Bremañ eo echu roll an delioù. A-boan ma vez dastumet c'hoazh ar raden, hag a zo un danvez-temz eus ar c'hentañ koulskoude. Serret e vez hepken en tachennoù ma vezont fonnus da droc'hañ evit golo ar brenioù potaj er goañv.

An douar-gwinizh a veze deliaouaet da gentañ kent hadañ. A-boan ma veze kouezhet an tri c'hard eus an delioù. Pa veze hadet ar gwinizh, e veze kroget gant ar pradoù hag an douar-kerc'h. An douar-hañv da ziwezhañ. Goude an here hag ar c'heuncud.

Delioù ar pradoù, hag a vez pounner, a veze charreet ar peurvuiañ d'ar parkoù a dlee dougen an trevadoù hañv : potaj kaol, patatez hag all. Eno e veze kaset teil tomm diouzh ar c'hrevier da goublañ an delioù. Hennezh oa teil koukoug.

An delioù skañv hag ar raden a veze lakaet dindan al loened da fonnusaat ar plouz. Ur gouzer blot a raent.

Ledet e veze ivez ur gwiskad war ar porzh da dremen ar goañv. Ar c'houzeriadenn-mañ a veze savet e-kerz Meurlarjez, ha mesket gant teil tomm.

Ar bernioù teil gwechall oa ur binvidigezh hag ul lorc'h, - ya, ul lorc'h a lavaran, - evit ar c'houer. Ur porzh hep teil oa ur vezh. Porzh ur c'hemener ! a lavare ar baotred kozh gant fae. E gwirionez, ur bern teil n'eo ket an dra heugus a soñj da dud kêr. Ar bern teil gwechall a veze graet gant arz hag urzh :

un hirgarrezenn ledanoc'h ouzh traoñ eget ouzh krec'h, war-dro pevar droatad uhelder. An hed hag al lec'hed oa hervez ment ar feurm, se zo sklaer.

En deiz a hiziv ar bernioù teil n'int nemet bernioù lastez, taolet warno kement loustoni. Arabat oa ober kemend-all gwechall. An teil oa teil, gouzer ha teil eus dindan al loened, hep netra all ebet gouest da flaeriañ ha da lakaat doñjer d'ar re a rae war e dro. Respet oa evit an douar.

Plijet-bras e vezan bep tro gant pennadoù Herve Ar Menn, pa skriv diwar-benn al labourioù en e vro en amzer e yaouankiz. N'ouzon ket avat ha bez' ez eus kalz a lennerien ken dedennet all gant seurt danvez, rak gwall rouez eo, 'm eus aon, ar gouerien evel lennerien d'ar c'helaouennoù brezhonk.

Krediñ a ran koulskoude eo tra brizius ober un dezrevell eus labourioù an douar. Meur a studier yaouank a gav danvez-studi aze, kenkoulz ha ma kav en artizanelezh gwechall.

Da hetañ eo e teufe micherourien a bep seurt da gomz eus micherioù o vont da get, evel miliner, karrer, boureller, toer-plouz, gov ha me 'oar.

Panvet bezañ torr-penn evit lennerien AR BED KELTIEK, em befe komzet un tamm eus ar binvioù implijet evit an deliaoua, hag an doare d'ober al labour.

Gant troc'hañ berr marteze ne vo ket graet re a rebechoù din da vezañ kollet amzer ha paper.

Da gentañ eo ret kompren penaos deliaoua kleuzioù ha touflezioù n'eo ket skubañ alezioù ur c'hastell eo. An drez hag ar spern a sav deiz-ha-deiz e maezioù Breizh ! Ar c'head, stank war hon douaroù, ar balan, al lann, ar brulu ha me 'oar, kement-se holl mesket, luziet, gwriet gant an drez, a vez ret o dibab a-raok kregiñ da rastellat, evel just.

Hag un nebeudig mat a vinvioù a vez da bourchas da vont d'al labour.

Ur falz da fogodiñ. Ret eo troc'hañ ar skourroù a gouezh a-us d'an douar-labour. Ar re-mañ a vez amaret ha lakaet a-gostez d'ober tan.

Ur falz gouzoug hir hag ur fichell solut da droc'hañ ar strouezh : drez spern-du ha gwenn, ar gwezvoud, hag all. Ar re-mañ a vez lakaet ivez en o fart o-unan, ha tan a vez graet ganto er park pa vezont brizhsec'h.

Ur falz skañv hag ur fichell skañv evit troc'hañ ar raden, ar geot hir, ar plantennoùigoù hag ar bleñchoù munut. Ar re-mañ a chom war blas. Klozet e vezont goude da heul an delioù.

Ur rastell da glozañ, da zilcinañ, da zifrechañ. Ar restell gwechall a oa graet e koad ha dantet gant ibilioù houarn graet er c'hovell. Un troad hir a oa d'ar rastell :

Un troad pal dindan ho kazel,
Un troad trañch dindan ho fri,
Hag un troad rastell keit ha c'hwi.

An treid binvioù a vez ar peurvuiañ en haleg, pe gistin. An onn a zo prizet ivez; dous eo d'an dorn, met pounneroc'h.

Un divac'h evit dastum an delioù klozet.

Ur c'hravazh pa veze daou o sevel an delioù, pe ur garrigell pa ne veze nemet unan.

Ur skubellenn spern-du da glozañ diwar ar Pradoù. Ar skubellennoù spern a oa graet gant ur fichellennad begoù spern, plantet enni un troad koad, ha serret-start gant ur c'hevren munut e derv-gwenn, haleg pe dilh (evlec'h). Skuizhus-kaer e oa lavigañ ur seurt benveg, met labour kalz propoc'h a rae eget ar rastell war leton ar Pradoù, hag a zo techet da zigroc'henniñ tamm pe damm gant dent ar restell. Met pa veze kreñv an avel, ne oa tu ebet da c'hoari gant ar skubellenn.

Klasket-tost e veze an delioù gwechall. E-touez ar c'heuneud, e veze ret d'o dilojañ c'hoari gant an dorn. Ha pa veze rev-gwenn diouzh ar beureoù, ne oa ket brav karzhañ bourjadoù, evel ma lavare va zad, Doue d'hen pardono. Abred e veze an dud war ar bale d'ar c'houlz-se, ha pell an deiz o tont. Teñval c'hoazh pa'z ae an dud d'ar park. Ma rae ar baotred kozh ur c'hornedad da c'hortoz ma vije "deiz delioù", evel ma lavarent.

E sitreadoù e oa ar c'hiz da zastum an delioù en daou du d'ar c'hleuz a aparchante ouzh ar park. Da lavarout eo en doa ar gwir perc'henn ar c'hleuz da vont da zeliaoua e park e amezeg an delioù kouezhet eus e wez. N'em eus ket gwelet ar c'hiz-se amañ er C'hozhvarc'had. Pep hini a zastum an dro diabarzh e bark, nemet ne c'hell ket dileinañ kleuz e amezeg.

Naet ha brav e veze ar gwrimennoù bet rastellet-mat, evel blev kribet, hag ar geot nevez a vounte abred, glazur tener ha liesseurt, strewet a vleuñv-amanenn ha roz-kaouled, prizet-kenañ gant ar saout d'ur c'houlz-bloaz ma vez rouez ar peuriñ. Evel ma lavar unan eus krennlavarioù Breizh :

C'hoario Meurzh 'r pezh a garo,
Ur c'hostez 'r c'harzh a dommo.

N'em eus komzet betek-hen nemet eus an delioù sec'h, kouezhet war an douar.

E glas e veze graet ivez meur a implij gant an delioù, hervez ar gwez hag ivez hervez ar bloaz. Pa veze sec'hor vras, pa en em gave rouez-kaer ar boued loened, e veze ret-mat kouezhañ war an delioù gwez.

An delioù tilh dreist-holl a oa prizet-kaer evel boued moc'h. Ur gwelien gludek a raent, pa veze taolet dour bervet warno hag ur vozad brenn, gwinizh, pe greun malet. Un toullad patatez poazh ne oa ket gwelloc'h pred evit ur pemoc'h !

Klasket e veze sac'hadoù delioù tilh, dirañset

eus ar bodoù yaouank. Bez' e oa tilh en holl feurmioù pe dost, bet plantet da waskediñ al lojeiz hag ar bernioù plouz ha foenn. Gwrizioù ken hir a ra an tilh ma n'he deus krog ebet an avel war ar gwez-mañ d'o displantañ. Terriñ dre an hanter a reont a-wechoù pa vez ur sec'hadenn er c'hoad.

Delioù, pe gentoc'h skourroù haleg a zo mat-tre evit ar givri hag al lapined, delioù onn ivez, hag an drez.

An iliaev a oa klasket da vat gant an tiegezhioù paour gwechall. Sot-nay eo ar saout gant iliaev, met n'eo ket mat re dezho. Dont a reont da vezañ drouk diwar debriñ re a iliaev.

D'an nevez-amzer, kalz eus ar saout a gar kalz debriñ delioù yaouank, da vihanañ e-lec'h ma c'hellont c'hoazh tostaat da gleuz pe da goad. N'eo ket un dra vat. Meur a hini a dap diwar se "kleñved an tarlask", hag a zo dañjerus a-walc'h. Terzhienn o devez ha gwad en o zroazh.

An delioù gwern a zo prizet a-walc'h gant al loened ivez. Ouzhpenn, e veze graet gwechall un implij all gant an delioù gwern. Servijout a raent da dremen o laezh d'ar c'hezekenned pa veze dizonet o loened bihan. Frotet e veze o zezh dezho gant delioù gwern, trempet en dour tomm.

Gant an delioù onn em eus gwelet ober un doare piketez e-pad ar brezel, pa ne veze ket kavet a voeson nemeur.

An delioù drez a zo prizet gant ar givri dreist an holl voued all. Mat int ouzh ar boan-c'houzoug, bervet en dour. An tizan-mañ, mesket gant ul loaïad vel pe ziv dre bep tasad, a zo mat-tre da bareañ an añjin.

An delioù gargel pe gelenn a veze implijet kalz em yaouankiz d'ober garlantizi evit kinklañ al lec'h ma veze graet ar pred-eured. Ul labour a basianted e oa. Mont da droc'hañ ar gargel, dispenn an delioù hini da hini, tremen enno un neudenn solut, o lakaat da zivilhañ en hantergelc'hioù tro-dro d'ur sal pe d'ur c'hrañj, pe d'un deltenn. Me 'lavar deoc'h 'oa ezhomm un toullad treatadoù !

Hag evit echuiñ war un notenn farsus, hervez a lavare ar re gozh, re gozh va bugaleaj : ar marichal Bismarck a rae soudarded gant delioù derv. Mar doa gwir eno, eme va zad, eo gwir amañ ivez.

Ancr e vefe emichañs degas da soñj ar plas a zalc'he an delioù e c'hoarioù ar vesaerien vihan. Nag a biladoù krampouezh a raemp-ni gant an delioù fav melenet. Ha gant an delioù kistin e veze fichet toubieroù, gwriet an cil delienn ouzh eben gant drein spenn. Rollañ a raemp anezho ivez e stumm kernioù, seurt a veze en ti-butun da bakañ butun-fri.

Bremañ ne servij mui an delioù nemet d'ober bokidi kenedus, pa vezont-i krog da vrizhellañ en diskar-amzer. Ar faou-put hag an derv-gwenn a chom pell amzer en o stumm hag en o livioù gell dudius, gant ur bodig pin pe gargel d'o heul. Na koantañ bokidi goañv !

(30 a viz Kerzu 1970)

 GWECHALL DU-Mañ : KOROLL AR SEIZENN

gant Herve Ar Menn

Da ouel kantvloaziad marv Jañ-Mari Ar Skourr e oa aozet ur fest-noz, gant kenstrivadegoù kan ha koroll, en Hañveg.

A-viskoazh hor boa du-mañ hag er c'humunioù nes d'hon hini ur c'horoll a-ratozh evit ar c'henstrivadegoù dañsal. Koroll ar seizennoù eo anvet. Da'm meno eo ar c'haerañ hini a zo e Breizh, o reiñ lec'h da zivorzañ an divesker ha da ziskouez ar oueskter.

Ma ! e Mezheven ne oa den en Hañveg o c'houzout mat koroll war ar seizenn. Un tregont vloaz bennak a zo, e voe desket er C'helc'hioù Keltiek ur "c'horoll ar seizennoù" na oa ken ur marmouzerzh e-skoaz hon hini. Meur a Gelc'h o deus dalc'het-mat d'an doare fall-se. Doare koroll Plougastell-Daoulaz eo an tostañ d'hon hini, daoust ma chom pell war-lerc'h.

Gwechall e veze alies kenstrivadeg ar c'horolladegoù. Seizennoù dreist-holl a veze roet da brizioù. Ac'hano e teu an anv "koroll ar seizenn". E lec'hioù all e veze "koroll ar gajoù", na oa anezhañ nemet ur gavotenn.

War ar seizenn e koroller daou-ha-daou, dorn kleiz ar paotr krog e dorn dehou ar plac'h. Evit ar c'horolloù all e vez graet ar c'hontrol. Ur c'helc'h a ra ar c'houbladoù. Luskañ a ra ar gorollerien evel an heol. E diabarzh ar c'helc'h emañ an dañser. Dezhañ e vo diskouez e ampartiz. Setu perak emañ e diabarzh ar c'helc'h, rak ar barner a zo er c'hreiz anezhañ, an douger-prizioù en e gichen.

Kroget ar soner da son, pe ar ganerien da ganañ war un ton kalz lamm gantañ. Setu an dañserien o lammat e-ser kroaziañ o divesker e pep doare, o skeiñ an talonoù an eil ouzh egile, pe o lakaat anezho da skeiñ war o fenn-adreñv. A bazioù bihan e kerzhont en-dro, bepred war beg an treid. Gant ar brozhioù o tiskenn betek an ufernioù, ne weler ket kerkoulz koroll ar merc'hed. An hevelep pazioù a reont, nemet kalz bihanoc'h.

Setu ar barner o reiñ ar priz kentañ d'ar c'houblad gwellañ. Ar c'horoller a lez ur youc'hadenn skiltr, o vont kerkent kuit. Ne vez ket tronius ar re a chom da goroll an diwezhañ. Int eo ar fallañ dañserien.

Aet eo ar c'houbladoù d'an ostaleri gant o frizioù. Ar plac'h eo a bae da evañ, rak ar priz a vezo roet dezhi. En deizioù war-lerc'h e ouezo an holl dre ar vro gant piv eo aet ar prizioù kentañ. Un enor bras eo d'ar c'hounezerien.

E-lec'h reiñ ar prizioù war-eeun war al lec'h, e kavan-me gwelloc'h reiñ tammoù kartoñs niverennet, an dañserien o tont goude da gerc'hat o gopr d'ul lec'h diskleriet.

Ur wech all e skrivin deoc'h a-zivout ar c'horolloù all a veze graet en Hañveg kent ar brezel-bed kentañ.

AR STOURM E KORSIKA

Krouet e 1957, Kreizenn Studiadennoù Korsika a stourm enep ma vo dalc'het an enezenn da vezañ un drevadenn a Vro-C'hall evel hiziv, enep gwir-miret an dougataerezh arvorel, evit kenderc'hel, arnevesaat hag astenn an hent-houarn, evit un didroc'h-douar gwirion ha klok, ur skol-veur gorsikek, h.a.

Savet ez eus bet nevez 'zo embannadurioù broadel.

Deuet eo er-maez eus ar wask ur yezhadur, hag ur rummad-kentelioù korsikek ; ur reolennadur galleg-korsikek hag ur geriadur a vo embannet hep dale.

Ur skol dre lizher a ya en-dro abaoe bloavezhioù.

Da zont, ouzhpenn, ur gelaouenn vareadek.

Ar Strollad Broadel-se a garfe "kaout darempredoù gant brogarourien cus Elzas, Euzkadi, Breizh, Katalonia, Flandrez, Loren, Normandia, Okitania, h.a., o stourm dre vras evit ar mems frankiz ..."

Evit resev diskleriadurioù hiroc'h, skrivañ mar plij d'an Ao.Yann Albertini, 28-ter, Cours Paoli, 20-CORTE.

Y.Hourmant

OALD SEVENADUREL MENEZ KAMM

E-kreiz ar Menezioù-Du, hanter hent etre Spezed ha Gourin, "Menez Kamm" a zegemer pep hini a fell dezhañ anavezout pe reiñ lañs d'hor sevenadur-pobl, en un aergelc'h yaouank hag oberiant.

Oald Sevenadurel Menez Kamm a ginnig :

- Bezañ ul lec'h kejañ evit ar Vretoned yaouank a zeuio un-hag-un pe a-stroll,
- Bezañ ur greizenn sevenadurel e kreiz Breizh,
- Reiñ bod d'an Emsav evit bodadegoù, devezhioù-studi (kambroù, predoù, salioù).

Chomlec'h : Oald Sevenadurel MENEZ KAMM,
29 S - SPEZET.

(Kemennadur digant ar "Gevredigezh Vreizhat a Sevenadurezh)

AN AOZADUR GLADDALC'HEL
(kendalc'h)

troet diwar
Istor Breizh

La Borderie
(Levrenn III)

2) Ar varoned

An aotrounez a oa el lez dugel a vez anvet peurvuiañ, e dielloù ha kronikoù an 11-vet hag an 12-vet kantved, baroned an dug. Pouezus eo gouzout resis petra oa, e Breizh, en amzer-se, talvoudegezh an titl a varon.

E yezh ar c'hladdalc'helezh, e testennoù kalz "Kustumoù" eus ar Grennamzer, baron ur roue, ur priñs, un aotrou, eo ar gwaz a zegemer e zalc'h-douar "in capite", da lavarout eo war-eeun digant ar roue, ar priñs pe an aotrou-se.

Ar varoned o deus gwizien d'o zro, war-eeun dindano, nemet ar wizien-se n'int e-keñver ar roue pe ar penn-aotrou nemet "gouwizien"; o dalc'h-douar n'eo nemet ur "gouzalc'h". Ur rummad tudjentil niverus int, hogen baroned ar roue pe ar priñs n'int ket. En aktaoù e reer anezho vassali, vavassores (gwizien, gwizien-wizien), diforc'h-krenn diouzh ar varoned.

Baroned dug Breizh a oa eta an holl aotrounez a zegemere o dalc'hioù-douar war-eeun digantañ, a zouge gwazoniezh-stag dezhañ, a doue al le a fealder dirazañ, ligentiam et fidelitatem, evel ma tiskler un akta lidel eus ar bloaz 1209 (an emglev-dimeziñ etre Alis Vreizh hag Herri Penteür).

An dug en doa muioc'h eget nav a wizienn-war-eeun : ouzhpenn kant a oa anezho. Dre se, en aozadur kentael ar c'hladdalc'helezh vrezhon, en 11-vet, 12-vet, 13-vet ha zoken er 14-vet kantved, an ensavadur lesanvet "an nav henvaroniezh", meneget gant hon holl istorourien nemet Lobineau, meneget dreist-holl gant Dom Moris, a zo ur vojenn ha netra ken.

Diouzh an tu all, an titl a varon, daoust na voe biskoazh roet e Breizh "d'an holl uhelidi", evel ma vez lavaret e gaou gant skrivagnerien 'zo, a zo bet roet a-wechoù da dud estreget gwizien-war-eeun an dug, ha setu amañ penaos.

Dleadoù ar varoned

Pennañ dlead ur gwaz e-keñver e aotrou oa e skoazellañ leal en amzer a beoc'h evel en amzer a vrezel ;

e-pad ar brezel, dre reiñ ar servij-arme ; e-pad ar peoc'h, dre reiñ ar servij-lez, da lavarout eo, dont davet an aotrou evit seveniñ e c'hourc'hemennoù, e ambroug, e ziwall, dreist-holl dougen barnedigezhioù a-unan gantañ ha difenn diouzh ret e varnedigezhioù.

Fournisañ lez an aotrou a veze graet eus an dra-se, hag ar briñsed, evit displegañ o galloud, a blije kalz dezho kaout ul lez "fourniset"-mat.

Ouzhpenn o gwizien-war-eeun, a dlee derc'hel ar renk kentañ, ouzhpenn ar bennañ ofiserien (senesal, marichal, kañseller, h.a.), e tegemerent laouen war o zro tud na oant ket rediet dre o c'harg pe dre ar servij dalc'h-douar da vezañ eno, tud a zeue a-youl-vat ; ha dre o finvidigezh pe o dellid, pe dre o niver hepken, e kreskent sked al lez m'en em stagent outi.

Daoust ma tleje al lez-se, hervez ar gwir strizh, bezañ bet "fourniset" hepken gant gwizien-war-eeun ar pennaotrou, da lavarout eo gant ar varoned hepken, e roed ivez an titl a varon, dre voaz, hogen o vont dreist d'ar reol, d'an holl dud a oa eno, zoken d'ar re a zeue eus an diavaez.

"Baroned" Konan II

E 1065, pa'z eas an dug Konan II d'ober gweladenn lidel d'e contr Thibaud kont Bleaz, e oa tud niverus ouzh e ambroug, oc'h ober evel ur skeudenn eus e lez c'hlad-dalc'hel. An dug e-unan, en un diell savet e Teurng e-pad ar veaj, a lavar piv a gemere perzh :

"Gant va dorn," emezañ, "em eus treset sin ar Groaz war ar barchenn-mañ, dirak ar re-mañ, a zo va baroned."

Ha setu amañ an dud ma ra an dug va baroned anezho :

- | | |
|---|----------------------------------|
| 1. Geofroi de Mayenne, | 16. Gui de Sablé, |
| 2. Geofroi Papeboeuf, | 17. Grossard mab Martin, |
| 3. Jelvestr mab Mainguine, | 18. Papin des Rahières, |
| 4. Tepot, e vreur, | 19. Guinou Leon, |
| 5. Herve ar c'hoadour, | 20. Arzhur Scrvon, |
| 6. Jiron mab Ansquetil, | 21. Suhard Aginieg, |
| 7. Aofred mab Alan Rieg, | 22. Heloc mab Rivallon, |
| 8. Rouaot, e vreur, | 23. Norman <u>an telenner</u> , |
| 9. Even mab Raoul Ledan, | 24. Judicael mab Juhel, |
| 10. Carioc mab Caradoc, | 25. Mainguine ar Brezhon, |
| 11. Mainfinit Naoned, | 26. Huon mab Froger, |
| 12. Auberi Ver, | 27. Bernon <u>ar c'heginer</u> , |
| 13. Herve mab Rouaot, | 28. Eudon mab Doallon, |
| 14. Rivallon mab Friol, | 29. Haimon mab Odelin, |
| 15. Ascot (pe Harscoet) mab
Rouaot beskонт Naoned, | 30. Herve, e vreur. |

Piv an tregont den-se, oc'h ober amheuliadeg an dug Konan II, ma ra e-unan va baroned anezho ?

En o zouez, da gentañ, ez anavezzer aes a-walc'h un dek bennak eus izili tiegezhioù a wad uhel, o dalc'hioù-douar, bras pe vihan, o tont war-eeun digant an dug. Da skouer, aotrounez Werc'h (3 ha 4), Kastell-Jiron (6), Rieg (7, 8), Ver e-kichen Añseniz (12), Donz (15), Leon, Servon, Agigneg. Herve mab Rouaot (13) a oa marteze unan eus aotrounez Ar Pirc'hirin, ha Mainfinit Naoned (11) a oa un den a bouez, meneget e anv alies en aktaoù an amzer-se. Ouzh ar re-mañ, gwizien-war-eeun an dug, e teree mat an titl a varon.

A-gevret ganto, avat, ez eus daou zenjentil da vihanañ na oant ket brezhon : Geofroi de Mayenne ha Gui de Sablé (1 ha 16). Bez' e oa ivez kargidi eus an dug, disheñvel-bras o renk : Herve ar c'hoadour, Norman an telenner (pe gentoc'h barzh-telenner), Bernon ar c'heginer (5, 23, 27). Karg ar c'hoadour a oa uhel a-walc'h peurvuiañ, hini an telenner ne oa ket ken uhel, hag hini ar c'heginer ne oa uhel tamm ebet.

En diwezh, e-touez an trizek den a chom, na c'haller spisaat nag o micher nag o ziegezh, e oa hep mar tud c'halloudus, evel ar Papeboeuf-se, iskis e lesanv, lakaet da eil koulskoude war ar roll. Ivez Even mab Raoul Ledan (9). An darn vuiañ anezho, evelkent, a dlee bezañ tudjentil, dister o renk, dister o madoù, ha mar o doa dalc'hioù-douar, ne oa ket war-eeun a-berzh an dug.

Pezh a denn an evezh dreist-holl eo stumm brezhonek-rik an anvioù : Carioc mab Caradoc (10), Rivallon mab Friol (14), Heloc mab Rivallon (22), Judicael mab Juhel (24), Mainguinoe ar Brezhon (25), Eudon mab Doallon (28), Guinou Leon (19), hep komz eus Herve, Even h.a.

Ur skouer anat eo eus ar c'hemmesk padus, pe gentoc'h ar genvreudeuriez e brezhonegerien ha gallegerien e lez an dug, am eus meneget uheloc'h.

An dud-se, ken disheñvel, bras ha bihan, gwizien pe nann, Brezhoned pe estrenien, a vez anvet gant an dug va baroned (baronibus meis). Se ne c'haller ket nac'h. N'eus netra boutin etrezo nemet daremprediñ lez Konan II hag e ambroug en e veaj. Setu perak end-eeun e ra va baroned anezho holl. Diwar ar pred m'int bet degemeret da zerc'hel kompagnunezh dezhañ, ez int deuet da vat da vezañ e amheulierien ; "fournisañ" a reont al lez. A-walc'h eo evit o heñvelaat, en dro-mañ da vihanañ, ouzh gwizien-war-eeun an dug, a oa o gwir hag o dlead pennañ ober an dra-se. Evelto e tougont eta an titl a varoned.

Padal, an titl a varon an dug ne dlee ez reizh bezañ douget nemet gant ar wizien-war-eeun. Ar ster ordinal eo, e seurt doare m'o deveze baroned an dug, - evel, da skouer, beskouted Leon ha Pourc'hoad, aotrounez Felger, Gwizhrieg, Dinan, Monforzh, Roc'han, h.a., - en 11-vet hag en 12-vet kantved, o baroned dezho o-unan, hag ar re-mañ a oa o gwizien-war-eeun, o gwir hag o dlead ivez "fournisañ" o lez.

"Baron" ha "baronelezh"

Stag ouzh an den oa an titl a varon da gentañ : bez' e oa baroned, ne oa ket a varonelezhioù.

A-nebeudoù, evel ma tlee bezañ, ez eas an titl eus an den d'an douar, ha dalc'h-douar ar baron a voe anvet baronelezh. An anv-se a gaver implijet ez kefridiel en ordrenañs vrudet 1180, ma reer anezhi "Azez ar c'hont Jafrez".

War-dro ar mare-se, eil hanterenn an 12-vet kantved, e voe reizhekaet ar c'hustum da reiñ an titl a varon da bennañ gwizien-war-eeun an dug, atav, pe i a oa e lez an dug pe ne oant ket.

"An nav baron a Vreizh"

Ur fazi bras e vefe koulskoude krediñ ne veze roet an titl neuze nemet d'an nav aotrou ha d'an nav aotrouniezh a voe graet anezho diwezhatoc'h an nav baron hag an nav baronelezh kozh a Vreizh.


Ur grouadenn eo, ijinet er 15-vet kantved (pelloc'h e vo gwelet peseurt orin he doa). Ken dianav e oa diagent ma kaver, adalek ar bloaz 1000 betek ar bloaz 1450, er c'hronikoù hag en aktaoù a Vreizh deuet betek ennomp, ur c'hantad a aotrouniezhoù da nebeutañ, a roer d'o mistri an titl a varoned. Ha muioc'h a oa hep mar.

En 12-vet kantved ivez, e krogjod da lavarout "baron an dug" ha "baron Breizh", hep kemm etrezo. Ar stumm diwezhañ eo a drec'has tamm-ha-tamm.

Ar varoned en 11-vet hag en 12-vet kantved

Berr-ha-berr, en 11-vet hag en 12-vet kantved, baroned Vreizh, da lavarout eo an dud a zouge an titl ez reoliek hag ez padel, a oa gwizien-war-eeun an dug, ha perc'henned e oant da zalc'hioù-douar bras-tre peurvuañ. Ne raent ket ur rumm a-ziforc'h, klozet-strizh. Hogen ar penn e oant, an dibab, ar renkad kentañ eus an noblañs ; ha gant ar re uhelañ eus an dud-a-iliz (eskibien hag abaded), e oant dre redi kuzulierien ar priñs. En diavaez d'o zalvoudegezh evel tud prevez, e talc'hent ul lec'h a oa diouzh braster o aotrouniezhoù.

Ret eo eta, evit kompren an darvoudoù, sevel un daolenn verr eus an aotrouniezhoù-se. Hag amañ eo reizh he sevel, peogwir e voe aozet ar c'hladdalc'helezh e Breizh, dre vras, gant lignez dugel Roazhon ha lignez dugel Kernev.



SKOL VREZHONEG E KEMPER

Graet e vez e "Ti ar Vro", 19, straed ar Froud (e-kichen an iliz-veur).

56 skoliad enskrivet evit ar bloavezh 1970/71.

51 a heuilh ingal ar skol.

Bep Merc'her, da 20 eur 45, Skol uhel, gant Y.Ar Beg.

5 skoliad (brezhonegerien a-vihanik, nemet unan, en o zouez div gelenner).
 Skol eil bloavezh, gant an It.Kemere (5 skoliad).

Bep Yaou, da 14 eur, Skol gentañ, gant Herve Ar Beg

(15 skoliad, dreist-holl 17-18 vloaz, paotred ha merc'hed.

Da 17 eur 30, Skol gentañ, gant an It.Kemere (8 skoliad, en o zouez 5 eus ar skol-vistri).

Da 20 eur 45, Skol gentañ, gant an It.Kemere (7 skoliad, en o zouez div gelenner).

Bep Sadorn, da 14 eur, Skol-C'hoari, gant Mona Ar Beg, evit ar vugale etre 6 ha 10 vloaz (11 skoliad).

=====

KUZUL AR BREZHONEG

Bodadeg-Veur vloariet KUZUL AR BREZHONEG a zo bet dalc'het d'an 11 a viz Du 1970 e Menez Kamp. Ar 17 kevredigezh a oa bet pedet e koulz hervez ar reolennoù. Met darn ne gasjont dileuriad ebet. Ouzhpenn se e oa bet pedet ivez tud prevez a c'halle o ali bezañ pouezus evit ar gengevredigezh.

Yann Talbot, kadoriad, a zisplegas e zanevell diwar-benn an tri bloavezh tremenet abaoe e anvidigezh e penn ar gengevredigezh e diwezh bodadeg Karaez e miz Here 1967. Pouezañ a reas war an diaesterioù a zo bet e diabarzh K.A.B. abaoe an amzer-se, ha war an diouer a nerzh a zo bet kavet gant meur a hini d'ar C'huzul. Pennabeg ar gwander-se a zo aozadur ar gengevredigezh hec'h-unan, ha n'he deus e gwirionez pal pleustrek resis ebet. Savet e oa bet evit bezañ ul lec'h a emglev hag ur benveg a zifenn, met bremañ e tlefe bezañ ur benveg a vruderezh hag a stourm evit mont war-raok ha gounit tachenn d'ar brezhoneg.

Ur goulenn-emezelañ a zo bet kaset d'ar Burev gant KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ, renet gant L.Kergoad. Strollañ a ra ar gelennerien vrezhoneg evit astenn ha gwellaat kelennerezh ar yezh. Degemeret eo bet a-unvouez. Adalek bremañ ez eus eta 18 kevredigezh er C'huzul.

Adanvet eo bet Yann Talbot evel kadoriad, Yann Ar Beg evel teñzorier, an It.de Bellaing evel sekretourez-veur, an It.Kemere ha Gwennole Ar Menn evel izili eus ar Burev.

Ar vodadeg da zont a vo dalc'het war-dro Pask 1971.

- talinkañ v. stagañ un higenn (ouzh ul linenn-besketa).
- talk g. danvez damheñvel ouzh kleiz, implijet evit ober soavon, poultr evit ar c'horf, h.a. (+ talkek).
- talkad g.-où pezh a lonker en un taol, hv.lonkad.
- talliom g. (Te, niverenn atomek 81) metal gwenn-louet pe gwenn-arc'hant, heñvel e berzhioù ouzh re ar plom, implijet evit ober doareoù gwer.
- talm gg.-où 1. arm pe c'hoariell evit teurel mein dre harp ul lerenn, hv.batalm. 2. taol trumm (kurun, kloc'h h.a. 3. lamm (ar gwad er gwazhied).
- talmad gg.-où 1. taol talm. 2. taol talmañ.
- talmañ v. 1. ober gant un dalm. 2. teurel gant un dalm. 3. lamm a daoladoù ingal (da sk. evel ar gwad er gwazhied). 4. (db. ur gouli h.a.) ober ur boan lemm a vareadoù ingal. 5. (db. ur c'hloc'h) seniñ a daoladoù ingal. (+ talmadeg, talmadenn, talmadur).
- talmer g.-ien unan a ra gant un dalm.
- talmerezh g. 1. an talmañ. 2. (Gouezoniez) niver a wechoù ma c'hoarvez un dra e-pad un unanenn-vuzuliañ-amzer.
- talmeta v.-et stekiñ-distekiñ (ouzh udb.) gant ar bizied, hv.dornata, pafalañ, tastornat, toulbabañ, meudañ, merat. (+ talmetaerezh, talmetaer).
- Talmud g. dastumad lezennoù relijiel ha renerezhel ar yuzevien. (+ talmudek, talmudel).
- talmudour g.-ien 1. unan ampart war studi an Talmud. 2. unan a zalc'h da gelennadurezh an Talmud. (+ talmudouriezh).
- talpenn g.-où 1. darn-adreñv korf loened 'zo (kezeg, azened h.a.) etre ar c'hreiz hag al lost, hv.talier, krouzell, talekon. 2. penn tolzennek udb. (menez, roc'h, bodad-gwez h.a.). 3. (dre fent) reor.
- talpiñ v. (db. ul loen) mervel.
- talsoc'h ag. (db. ul laonenn, ur benveg h.a.) dilemm, kizet e zremm, hv.sl.ratous.
- taltouin g.-ed den izil, hv.sioc'han, gouzen, speñv.
- taltous ag. 1. evel "talsoc'h". 2. (db. ar fri) berr ha ledan, hv.tougn.
- taltouzañ v. 1. mont pe lakaat da vont taltous. 2. (db. an dent) ober droug un tammig, hv.tozonañ, kloc'hañ, toezellañ, tourjounañ, trechoniñ, chalsañ. (+ taltouzerezh).
- taluvad g.-où pennad-amzer, hv.pred, koulz, herrad, reuziad, maread, frapad, tachad, peusad, momed, rabinad.
- talvezout v. 1. dellezout ur priz, ur c'hementad arc'hant pe draoù all. 2. bezañ a bouez. 3. bezañ implijet (da ober udb.). 4. ober (da ub.) kement a zroug pe a vad hag en deus graet deoc'h ; talvezout kement ha (db. ur ger pe ur frazenn) kaout ur ster kevatal gant (ur ger pe ur frazenn all).
- talvoud g.-où tra a dalvoudegezh.

- talvoudegezh gg.-ioù 1. priz dellezet (gant udb.). 2. priz bras dellezet (gant udb.). 3. pouezusted, spletusted, afedusted. 4. ster (ur ger pe ur frazenn).
- talvoudek ag. a dalvez (kalz prl.).
- talvoudekaat v. mont pe lakaat da vont talvoudek, pe dalvoudekoc'h.
(+ talvoudekadur, talvoudekaerezh).
- talvoudenn gg.-où skridenn o reiñ aotre da gaout udb. pe ur c'hementad arc'hant, pe draoù all kevatal ouzh talvoudegezh udb.
- talvoudus ag. 1. a dalvez (kalz prl.). 2. a c'haller implij (da ober udb.).
(+ talvoudusted, talvouduster).
- talvoudusaat v. mont pe lakaat da vont talvoudus, pe dalvoudusoc'h.
(+ talvoudusadur, talvoudusaerezh).
- talvout v. (an anv-verb ha trede gour unan an amzer-vremañ, tal, talv implijet dh.) evel "talvezout".
- tamall v.-et kavout fall, kavout abeg, lakaat (udb.) e kiriegezh ub. pe udb., hv.abegout, rebech.
(+ tamalladeg, tamalladenn, tamalladur, tamallerezh, tamallidigezh, tamaller).
- tamall g.-où ar pezh a reer o tamall.
- tamallad g. tamallidi den tamallet.
- tamalladus ag. a c'hell bezañ tamallet.
(+ tamalladusted, tamalladuster).
- tamallout v. evel "tamall".
- tamallus ag. a damall, douget da damall.
(+ tamallusted, tamalluster).
- tamariskl as.(un.-enn) (Tamarix) gwezigoù eus kreisteiz Azia hag Europa, gant skourroùigoù pluheñvel ha bleunioù gwenn ha ruz-roz, lakaet da greskiñ e Breizh ha Gwalarn Europa evit startaat tuniennoù traezh.
- tamm g.-où 1. ar pezh a zistager pe a c'haller distagañ diouzh un hollad, hv.darn. 2. kementad bihan (da sk. da zebriñ). 3. (dirak un anv) ger implijet evit damverkañ dispriz pe c'hoaperezh (da sk.: va zamm buhez, e damm spered, he zamm peadra, un tamm aotrou); un tamm un nebeud, un nebeut ; tamm, tamm ebet (implijet da rakverb) e doare ebet ; an tamm anezhañ (war-lerc'h un anv-gwan) tro-lavar implijet, alies dre fent, evit kreñvaat ar ster (da sk.: rok an tamm anezhañ, du hor penn an tamm ac'hanomp).
- tammañ v. troc'hañ e tammoù, hv.didammañ.
(+ tammadur, tammerezh).
- tammata v.-et troc'hañ-didroc'hañ e tammoù.
(+ tammataadur, tammataerezh).
- tamm-dre-damm, tamm-ha-tamm rv. a-nebeudoù.

- tamolodiñ (prl. en em damolodiñ) v. dastum e izili, stardañ e izili ouzh e gorf, hv.en em rodellañ, kropañ.
- tamouez g.-où benveg evit disrannañ tammoù munut un danvez diouzh an tammoù brasoc'h, gant mailhoù evit mirout ouzh ar re-mañ da dremen, hv.sl.ridell.
- tamouezad g.-où endalc'h un tamouez.
- tamouezaer g.-ien unan a zo e vicher ober tamouezoù.
- tamouezat v. lakaat (un danvez) da dremen dre vailhoù un tamouez. (+ tamouezadeg, tamouezadenn, tamouezadur, tamouezerezh, tamouezidigezh, tamouezer).
- tamponnus ag. douget d'en em chalañ. (+ tamponnusted, tamponnuster).
- tan g.-ioù 1. goulou ha gwrez o tont eus un danvez. 2.(dre skeudenni-lavar) trivliad a laka taerder pe c'hred en ub.; dre dan (db. un ardivink) o vont en-dro dre obererezh an tan, pe ur wikefre bnk a ro lusk dezhañ.
- tanañ v. lakaat an tan (en udb.).(+ tanadur, tanerezh, tanidigezh, taneñ).
- tan-arvest g. displegerezh fuzeenoù ha tresadennoù-goulou liesfurm en oabl, prl. da geñver ur gouel.
- tanarvestour g.-ien unan a zo e vicher aozañ taniou-arvest, pe oberiañ danvez taniou-arvest. (+ tanarvestouriezh).
- tanc'houzañvus ag. (db. priennoù h.a.) na dorr ket pa vez lakaet en tan pe dommet betek un derez-gwrez uhel. (+ tanc'houzañvusted, tanc'houzañvuster).
- tanek ag. 1. tan ennañ. 2. graet gant an tan pe gant ur wrez uhel-tre. (+ tanegezh).
- tanflamm ag. skedus ha tomm evel flammoù tan.
- tanflamm g. tan a daol flammoù.
- tanflammañ v. 1. devañ gant flammoù bras. 2. lakaat (udb.) da zevañ gant flammoù bras.
- tan-foeltr g. 1. diskargerezh tredan en oabl gant luc'hed, hv.foeltr, tan-kurun, tan-taran. 2. (implijet evel touadell pe estlammadell) ger o verkañ ar sebez, ar gounnar h.a.
- tan-foll g. flammoù gwelet a-wechoù en noz, dh. er geunioù, hv.tan-red, tan-noz, taraned, arc'helar, kelerenn, kilher, sklaerderig-noz.
- tangarr g. tangirri karr emlusk, hv.karr-tan, karr-dre-dan.
- tangarrdi g.-où ti evit lakaat tangirri, hag alies evit reiñ dezho an aozadur hag ar pourvezadur rekis.
- tangarrdiour g.-ien den e karg eus un tangarrdi.
- tangarrer g.-ien blenier tangarr.

- tangarrerezh g. 1. blenierezh tangirri.
2. ar beajiñ e tangirri.
- tangwall g.-où tan en un ti, ur c'hoad, ur park h.a.
- tangwallañ v. lakaat an tangwall (en udb.).
(+ tangwalladur, tangwallerezh, tangwaller).
- tanharz g.-où klouedenn pe skramm metal a lakaer dirak an oaled evit mirout na grogfe an tan en ti.
- tanijenn gg.-où 1. koeñvadur ha ruzder en-dro d'ur gouli. 2. (dre skeudenn-lavar) evel "tan 2".
- tanijennañ v. lakaat tanijenn (en udb.) pe dont da gaout tanijenn.
- tan-kurun g. evel "tan-foeltr".
- tanlec'h g.-ioù tan pe c'houlou en aod ar mor evel arouez d'al listri.
- tan-losk g. darouedenn (dh. war an dremm) gant poan loskus.
- tan-noz g. evel "tan-foll".
- tan-red g. evel "tan-foll".
- tan-sant-Marsel g. brein-krign, marvenn-gig.
- tantad g.-où 1. tan graet gant ur bern keuneud pe draoù all. 2. tan enaouet war ar maez da geñver ur gouel (dh. Gouel-Yann), hv. tantez, inorzenn, olizenn, goueliadenn, mopedell.
- tantez g.-ioù evel "tantad".
- tanteziad g.-où endalc'h un tantez.
- tan-taran g. evel "tan-foeltr".
- tanus ag. a dan, gouest da danañ.
(+ tanusted, tanuster).
- tanailh g. evel "tanijenn 1".
tanailhañ v. 1. evel "tanijennañ".
2. disec'hañ. 3. skuizhañ.
- tanav ag. 1. bihan e dreuz e-keñver e c'horread pe e hed, hv. moan. 2. (db. un dourenn) a red aes, a c'haller luskañ hep poan, hv. rouez. 3. (db. traoù) a-skign hep bezañ stardet an eil ouzh egile. 4. (db. ar spered) disoñj, goullo. 5. (db. ar skouarn, ar fri h.a.) a verz mat. 6. (dre vras) bihan, gwan, dister. (+ tanavded, tanavder).
tanavaat v. mont pe lakaat da vont tanav, pe danavoc'h. (+ tanavadur).
- tanavenn gg.-où darn ur wiadenn uzet hag aet tanav.
- tandaman g.-où doare koef liv teñval.
- tane g. liv ruz skedus-tre.
- taneal v. ober heñvel (ouzh ub.), hv. drevezañ, marmouzañ.
- tango g.-ioù doare koroll eus Bro-Spagn ha Suamerika.

tank g.-où karr-emgann hobregonet, hv.karr-arsailh.
tanker g.-ien soudard gourdonet da ober gant tankoù.

tankerezh g. an darn eus un arme a ra gant tankoù.

tankeal v. skeiñ ouzh an douar gant an treid hep kemmañ lec'h, hv.trepikal, trepikellat, tripal, draskal, champalat. (+ tankeerezh, tankeer).

tann as.(un.-enn) (Quercus) 1. gwez eus kerentiad ar c'hupulifereged, o frenn kalet implijet evit an tisaverezh, evit ober arrebeuri h.a. 2. prenn ar gwez-se, hv.derv.

tannwez as.(un.-enn) evel "tann 1".

tañva v.-et 1. merzout blaz (udb.) gant an teod, ar staoñ hag an ankouc, hv.blazañ. 2. merzout an dudi a denner (diouzh udb.). (+ tañvadenn, tañvaerezh, tañvaer).

tanvenez g.-ioù toull e gorre an douar, ma flistr drezañ reier war deuz, gazoù h.a., bet savet en-dro dezhañ a-dreuz an amzerioù ur menez gant danveziou distalet o kaletaat, hv.menez-tan.

tanvenezel ag. o tennañ d'an tanvenezioù.
 (+ tanvenezelezh).

tanveneziek ag. paot ennañ an tanvenezioù.
 (+ tanveneziegezh).

tañvouezenn gg.-où, tañvouezad penn-ed, ennañ ar greun, hv.lanvenn, toc'hadenn.

tañvouesa v.-et dastum an tañvouezennoù chomet war an douar goude mediñ, hv.lanvenniñ, toc'hata, teskaouiñ, pennaouiñ.
 (+ tañvouesaerezh, tañvouesaer).

tañvouezennañ v. 1.(db. ed) kaout tañvouezennoù.
 2. evel "tañvouesa".
 (+ tañvouezennerzh, tañvouezenner).

taoc'h g. doare kinvi a gresk war an tornaodoù.

taoegezh gg. relijion aozet e Sina diwar gelennadurezh Lao-tzu (7-vet kantved).

taocour g.-ien unan a heuilh an daoegezh.

taocouriezh 1. studi an daoegezh.
 2. evel "taoegezh".

I. taol g.-ioù 1. ar pezh a reer o teurel. 2. ar pezh a reer o skeiñ, o lakaat un dra da vont a-herr ouzh un dra all. 3. ar pezh a c'hoarvez trumm, a reer en ur wech, pe a aozer evit noazout. 4. brank nevez kresket, hv.taoladenn, strujenn, bouilhastrenn. 5. korfig a gresk war ur blantenn, ma teu dioutañ ur skourr, delioù pe vleunioù, hv.taoladenn, broust, broñsenn, sapadur. 6. strollad gwenan o nijal a-gevret, hv.hed, barr. 7. strollad pesked o neuiñ a-gevret. 8. tamm douar troc'het gant soc'h un arar, hv.bomm.

taolad g.-où 1. endalc'h un taol (hvz an holl sterioù). 2. pennad-amzer, hv.sl.rabinad.

- taoladenn gg.-où 1. pezh a vez taolet en ur wech. 2. evel "taol 4 ha 5".
- taoladur g.-ioù 1. an teurel. 2. hollad taolioù (hvz ar sterioù 4 ha 5).
3. an teurel-pluñv gant an evned evit ma kresko pluñv all en o lec'h, hv.muzadur.
- taolaj as. hollad skourroù a gresk war ar plant hep reiñ broñs.
- taol-amzer g. barrad avel vras, hv.korventenn, reklom, barr-amzer, barr-avel, bouilhard, rugenn.
- taol-arnod g. oberiadenn graet evit arnodañ, hv.arnodenn, esaeadenn, taol-esa.
- taol-arnodiñ g. evel "taol-arnod".
- taol-bro g. rann eus ar vro, merket he harzoù dh. e sell eus ar melestrezh, hv.kanton, pastell-vro.
- taol-chañs g. tra a c'hoarvez dre chañs.
- taol-c'hoari g. kevrenn un abadenn-c'hoari (kartoù, da sk.).
- taol-c'hoarzh g. c'hoarzhadenn drumm.
- taol-degouezh g. tra a c'hoarvez dre zegouezh.
- taol-diskar g. taol (hvz ar ster 3) aozet evit diskar (ur gouarnamant, ur Stad, ur strollad h.a.).
- taol-dispac'h g. dispac'hadenn, dh. aozet a-ratozh.
- taol-droug g. droug pe gleñved o tont trumm, hv.sl.resmiad.
- taolerez gg.-ed ardivink evit teurel.
- taolerez-daredoù gg. ardivink implijet gwechall evit teurel daredoù.
- taolerez-vein gg. taolerezed-mein ardivink evit teurel mein.
- taol-esa g. evel "taol-arnod".
- taolet anv-gwan ar verb teurel. (+ taoladeg, taolerezh, taolidigezh, taoler).
- taol-finesa g. taol (hvz ar ster 3) ijinet dre finesa evit tizhout ur pal.
- taol-flemm g. tra lavaret evit flemmañ, hv.flemmadenn.
- taol-flip g. taol trumm gant touchenn ur foet, hv.flipadenn.
- taol-freuz g. freuz o tont trumm, dh. graet gant ur bagad brezelidi, tud emsavet, livastred, h.a.
- taol-gwad g. barr-kleñved a seiz ar c'horf, da heul direnkadur red ar gwad.
- taol-gwidre g. taol (hvz ar ster 3) ijinet dre widre evit tizhout ur pal.
- taol-ha-taol rv. a vare da vare.
- taol-heol g. 1. loskadur war ar c'hroc'hen graet gant bannoù an heol. 2. kleñved-empenn o tont dre chom re bell e bannoù brout an heol.

DISPLEGADEGOÙ

gant Alan Heusaff

Edon o tremen dirak ministrerezh an Deskadurezh, deiz Gouel Maria Gwerc'hez Dinamm.

Unan eus an teir pe beder skol holliwerzhonek kentañ-derez a zo e Dulenn a zo a-dreñv ar burevioù, en-dro d'ur porzh ha d'ul letonenn ledan.

N'eus ket skol hiziv. Ur strolladig tud a zo o vont-dont er porzh, ha war ar riblenn-straed ez eus re all, skritelloù en iwerzhoneg gwintet ganto e penn bizhier.

Gouzout a ran. Un nebeut devezhioù 'zo em eus lennet en ur gelaouenn ul lizher sinet gant ar skrivagner Diarmuid O Suilleabháin ... "Iwerzhon e kañv. Douaret eo bet an iwerzhoneg gant ar gouarnamant. A-benn dimeurzh e kerzhin va-unan dirak ministrerezh an Deskadurezh, ganin ur vandenn du war va brec'h."

N'emañ ket e-unan eta. Izili eus ar strolladig "Misneach" (Kalonegezh) a zo a-gevret gantañ. Mairtin O Cadhain an hini a oa o rener speredel, ha bremañ ma'z eo marv ez eo kouezhet ar garg war choug O Suilleabháin moarvat.

Emañ aze, ledan, un tamm souchet, e zaouarn e godelloù e vantell fouilh, o komz ouzh ur c'helaouer. En tu-mañ eus ar straed ez eus chomet kalzik tud a-sav da guriuziñ, ha luc'hskeudennerien ar skinwel a zo o lavigañ gant o ardivinkoù.

Broudet eo bet ar skrivagner pa'z eo bet lamet digantañ gopr un devezh-skol. Ral skolaer eo a vicher. Deuet e oa e miz Here da zouaridigezh O Cadhain hep goulenn aotre. Ne vezer ket ken strizh-se, keit ha ne vez ket ur c'hargad ezvezant nemet gwechoùigoù. Fellout a rae dezhañ ambroug e geneil evit ar wech diwezhañ ha dougen e arched.

N'eo ket en abeg d'an tammig arc'hant ez eo chalet, emezañ. Un arouez eo ar c'hastiz avat. Enebiezh a oa etre O Cadhain hag ar pennadurezhioù. Talabao a oa savet e Dún Dealgan daou vloaz 'zo, da geñver un emvod en eñvor eus ar barzh ulat Peadar O Duirín, p'en doa langajet an dispac'her an hini a zo bremañ ministr an Deskadurezh.

"Ma vije bet harpet O Cadhain a-berzh-Stad," eme O Suilleabháin, "e vije bet roet ar priz Nobel a-benn bremañ, evit ar wech kentañ, d'un Iwerzhonad."

Paotred "Misneach", ha kalzik re all, a gred start ez eo bet divizet el lec'hioù uhel en em zisammañ goustadik eus an iwerzhoneg. Mar diselaouer ar c'homzoù kaer hag ar gouestladennoù evit barn diouzh an oberioù hepken, e chomer e gwirionez en entremar.

El "Levr Gwenn" a zo bet embannet a-zivout efedoù ar C'henvarc'had war ar vroad-mañ, da skouer, n'eus ger ebet a-zivout an iwerzhoneg. Deiz Gouel Nedeleg ne oa nemet pemp munud (keleier) en iwerzhoneg er skinwel, e-keñver war-dro trizek eurvezh e saozneg. Hag alies e vez anv bremañ eus "an daou gultur" a zo en Iwerzhon, sañset evit sioulaat speredoù 'zo er 6 Kontelezh, hag a nac'hfe adunanidigezh Iwerzhon war zigarez e rankfent deskiñ "gouezeleg" ... yezh tud ouez.

Ar stadrenerien a zistaol an holl garezioù. Int a ra a bep seurt traoù evit ar yezh ; reiñ a reont labour ha skoazelloù-arc'hant da boblañs ar Gouezelva. Ar glemmerien ne reont nemet klemm ha rendaelañ.

Pa weler avat unan eus ar wellañ skrivagnerien iwerzhonek, pegen dianav bennak ma'z eo d'an darn vrasañ, o taeriñ evel-se ...

Daou aotrou a zo aze o kas gouzout petra 'c'hoari gant ar glemmerien. Hen displegañ a ran dezho.

"A !" eme unan anezho, "c'hwi 'zo un Alaman ?"

A bep seurt eñvorennoù a dremen trumm dre va spered. N'haller ket tec'hout diouzh e donkadur ... Sale B... !

"No, a Breton. From Brittany."

Ezhomm a zo da spisaat, anez bout kemeret evit ur West Briton, pezh a vefe marteze gwashoc'h eget tremen da Alaman.

"Ur Gall neuze !"

"N'emaoc'h ket ganti."

"A ! Gwelout a ran bremañ. C'hwi 'zo neuze a-du gant ar re-se."

Ne respontan ket.

"Me a vefe ivez moarvat, ma komprenfen o skritelloù."

Hag cñ kuit, tra ma choman-me en amzivin a-zivout kadoniezh paotred "Misneach".

Adal ma reer un displegadeg foran ez eo poellek diskleriañ mat e abegoù d'an arvesterien. Perak ne oa ket ur skritell da vihanañ e saozneg ? E c'haller lavarout koulskoude ez eus un hanter eus an dud da vihanañ gouest da lenn un nobeut sloganoù en iwerzhoneg, hag ar re all, mar o deus c'hoant da c'houzout, a c'hell kavout aes un droidigezh.

Ministr an Deskadurezh, evel re all er gouarnamant, a soñj hep mar ez eo tagnous an dud-mañ : ne gomprenont ket mat ar politikerezh.

Gwelet hon eus nevez 'zo ne vez ket ezhomm d'ober kalz trouz evit kaout ar pezh a c'houlenner. A-hervez. Bloaz 'zo bennak e voe lakaet ur skingaser kuzh da vont en-dro, holl en iwerzhoneg, e Gouezelva Konamara. Ne oa ket tre dre guzh. Graet e oa an taol gant studierien eus Corcaigh. Ne voe ket klasket o herzel. Paouez a rejont goude ur sizhun, o lavarout ec'h adkrogjent ma ne savje ket ar gouarnamant ur seurt servij. An Taoiseach (Pennministr), goulennataet, a ziskouezas bezañ troet-mat. Seoirse O cOlla, ministr an Arc'hanterezh hag

ar Gouezelva, a brometas e vije studiet ar gudenn. En emell ar gouarnamant, pe Radio-Telefis Eireann, e rankje ar servij bezañ avat. (Doujañ a reer levezon ha frankiz ar skingomz kalz muioc'h eget hini ar gomz voulet. Keñveriañ brezhoneg komzet ha brezhoneg skrivet).

Abaoe ez eus eta ur strollad-enklask o labourat, ha gouestladennoù startoc'h a zo bet roet.

Ken a sav al "Language Freedom Movement" e benn adarre, o kunudañ peogwir e kousto ar servij £500,000 ar bloaz, evel pa ne vije ket a-walc'h a dailhoù dija, hag e vez foranet kement a arc'hant gant ar "gouezeleg" hep gounid ebet ...

E miz Du e voe dalc'het un "Oireachtas", un doare Eisteddfod, e Ros Muc Konamara, evit enebañ ouzh an hini a vez aozet gant "Kevre an Iwerzhoneg" bep bloaz e Dulenn. Ne zeu ket kalz tud eus ar Gouezelva da Oireachtas Dulenn : re ger evito, ha re lorc'hus e kavont kompagnunezh an nevezierzhonegerien. (Marteze ne gav ket dezho e komz ar re-mañ iwerzhoneg saourus a-walc'h ?). Forzh penaos, a lavaront, - ha dispac'herien Dulenn a zo a-du ganto, - Gouel Bras ar Sevenadur Iwerzhonat a dle bout graet el lec'h ma'z eo bev c'hoazh ar sevenadur-se.

2.500 den a yeas da Oireachtas Ros Muc, eus pep gouezelva. Ha n'eo ket sonerezh ha korolloù, ha divizoù mod kozh a oa eno, met breutadegoù politikel ivez, hag ur bern tud o kemer perzh enno.

Chom a reas poellgor an Oireachtas-se gant £500 a zle war o c'hein avat.

Lavarout a reer ez eus bremañ ur spered dispac'her er gouezelvaoù. E-pad an Oireachtas e tistroas Radio-Dieub Konamara en aer. Neuze eo e voe komennet-start gant Scoirse O Colla e vije savet ar servij holliwerzhonok, evit ar gouezelvaoù.

Setu eta un trec'h, marteze da wir, a vo bet gounezet gant un tammig poan. Gounezet e vo bet, peogwir n'eo ket chomet ar glemmerien da glemm, graet o deus ar pezh a oa d'ober int o-unan, hag o tiskouez ouzhpenn se ne goustje ket ker. Moarvat ne c'houlennfe ket gwelloc'h ijinourien Radio-Dieub Konamara eget lodennañ o ampartiz ...

=====

AR C'HOARSEZ. - E Gwidel eo bet aozet Gouelioù Goursez Skolaj Barzhed Breizh-Vihan er bloaz-mañ, d'ar 15, 16 ha 17 a viz Eost. Labour a zo bet graet eno e-pad an tri devezh. Rebechet eo bet d'ar Skolaj chom re gevrenus pe ober bruderezh, gant tud a zo. Abaoe pell e striv ar varzhed da sevel un doare "Framm Keltiek" nevez, a vefe e bal lakaat emglev etre ar c'hevredigezhioù ha bleniañ an Emsav war an hentoù mat. Bep un tammig e tostaont ouzh ar pal-se. Tud a youl vat, deuit daveto.

Ne oan ket bet er C'hoursez abaoe 1932. Siwazh, gwelet em eus en deus ar galleg gounezet kalz a lec'h war vuzelloù ar varzhed ivez, daoust m'eo o c'hofridi gentañ difenn ar brezhoneg. - Herve AR MENN.

MERC'HED BÉAL FEIRSTE E-KREIZ AN EMGANNOÙ

gant Alan Heusaff

Emgannoù a zo bet bemnoz koulz lavaret e Béal Feirste e-pad ar sizhun dremenet.

Kregiñ a rejont pa'z eas bagadoù soudarded, war un dro gant archerien argarzh an R.U.C. (Royal Ulster Constabulary), d'ober furchadeg-armoù e tiez ar c'harterioù katolik.

Moarvat e oa bet broudet penngadourien an arme gant klemm ur c'hannad, - me 'gred e oa Paisley.

Fougeal a rae pastred an IRA (Irish Republican Army), emezañ, ne grede mui arme Bro-Saoz nag ar bolis dont e-barzh karterioù 'zo eus Béal Feirste. Int (an IRA) eo a oa ganto ar veli eno, ha skouerioù a oa bet roet o tiskouez e oant mennet da ziwall urzh ar gevredigezh. (Daou zen a oa bet kavet goloet gant ter-du ha pluñv, kastizet goude m'o doa laeret pe heget merc'hed yaouank).

Kement a freuz a reas ar soudarded ma kounaras ar boblañs. Kabaduilh a voe, bombezennoù-eoul-maen, mein ha boutailhoù bannet diouzh un tu, ha boledoù kaoutchoug diouzh an tu all. Pemp soudard a voe tizhet gant tennoù mindrailherez, ha nouspet den a voe gloazet a-hend-all.

Renerien an Unanourien ("Disrannourien", a lavarfen kentoc'h) a damallas pep tra da Arme Republikan Iwerzhon.

War a seblant koulskoude, e oa bet graet freuz a-walc'h gant ar soudarded evit ma taerje an dud hep bout atizet a-hend-all.

Ar merc'hed dreist-holl a oa droug enno.

Daou emzalc'h disheñvel a gaver en o zouez : un darn vat a glask distanañ ar c'hrogadoù etre o gwazed hag ar soudarded ; re all a zo a-du evit kas ar stourm betek ar penn.

Da heul an emgannoù-se o deus savet renerien strolladoù habask o mouezh da damall d'an arme saoz bezañ untuck, o furchal tiez ar gatoliged hepken, koulz lavaret. An holl a oar ez eus kalz muioc'h a armoù e dalc'h an "Unanourien". Kasoni a zo bremañ eta ouzh an arme saoz. Ne seller ket mui outo evel gwarezourien ar bihanniver.

Ur vandennad merc'hed yaouank o kerzhout a-benn d'ar soudarded e Hooker Street, hag oc'h ober dezho kilañ betek penn ar straed. Peder flac'h harzet evit bezañ taolet mein ouzh ar soudarded. Merc'hed yaouank o pignat gant Falls Road o werriñ ouzh ar soudarded (1) en ur

 (1) gwerriñ : komz en un doare daeüs, evit lakaat droug en un den all ; da geñveriañ marteze gant gouerus.

ganañ : "Mar tizhez ur soudard saoz, stlak da zaouarn, stlak da zaouarn !". Setu arvestoù pemdeziek.

"Arabab d'ar merc'hed krediñ," eme vinistr an Aferioù Diabarzh, "e chomimp hegarat mar kemeront perzh er c'habaduilhoù. Pelloc'h e rankimp mont garv outo ivez."

C'hoarvezet eo bet e gwirionez. Merc'hed a zo bet duet o brec'hioù hag o c'heinoù gant taolioù ar soudarded.

Unan eus ar re oberiantañ eo an Itron Frances Mac Mullen.

Ganti ez eo bet kenurzhiat ar merc'hed e "domani" Baile Ui Mhurchú (Ballymurphy).

"Heuget-mik omp," emezi. "Ni a garfo holl kaout ploc'h, met ur ploc'h reizh, n'eo ket ploc'h da n'eus forzh pe briz."

Kadoriadez eo da Gevredigezh Feurmerien Baile Ui Mhurchú. Dindan he renerezh ez eus bet kaset da benn harzoù-feurm, ha lakaet bec'h war ar pennadurezhioù hag ar berc'henned evit ma vije adaozet an tiez ha gwellaet ar servijoù boutin. "N'eo ket a-walc'h kaout tiez, ezhomm 'zo ivez eus tachennoù-c'hoari evit ar vugale, hag eus stalioù en ardremez." Evit reiñ tu d'an dud da amprestañ arc'hant hep sammañ kampioù uhel, o deus savet un unaniezh-kredad, hag a zo 690 ezel enni. Kevredet int gant 19 unaniezh all.

Gant an darvoudoù dispac'hus, e vez broudet ar merc'hed da vont gant hent ar feulster ivez.

Ar re yaouank eo a zo ar muiañ a-du gant kas ar stourm da benn. Evel just, ar re a zo dimezet a zo chalet na c'hoarvezfe droug d'o bugale ha d'o gwazed. Mont a reont en egar avat en abeg d'ar furchadegoù untuek ha d'ar stalabarn a lez ar soudarded war o lerc'h. N'oulont ket selaou mui ouzh ur gouarnamant hag en deus graet fae war o ezhommoù e-pad keid-all.

E karter Cluain Ard (Clonard) ez eo fervoc'h an dud c'hoazh eget e Baile Ui Mhurchú. Ar boblañs eno a zo 100% katolik. Pemp maouez o deus savet ur Strollad-Obererezh. Da gentañ e oa evit difenn ur vaouez dizimez a 68 vloaz, hag a oa bet kavet armoù en he zi. Hi a lavaras e oant bet lakaet eno hep gouzout dezhi. O vezañ ma oad bet douget d'ar Republikaned en he familh, ne voe ket kredet, hag e voe barnet d'ur bloavezh toull-bac'h : ur gwall gastiz evit ur vaouez eus hec'h oad. Aozet e voe ur gerzhadenn-enebiñ. En aner : emañ-hi atav en toull.

Pa zeu ar soudarded d'ober furchadegoù en ur straed, e tiskenn ar merc'hed hag ar vugale er straed, hag en ur skeiñ taolioù war c'houlc'herioù ar podoù-lastez, e roont da c'houzout da dud ar straedoù amezek e tleont bout war evezh.

Evel-se e tiskouezont o displijadur ivez. Rak an arme a zo dizamant ouzh ar freuz, ha n'eus ket tu da c'houlenn digoll evit an traoù a foeltront.

Kaer o deus bet furchal, n'o deus kavet ar soudarded nemet nebeut a armoù betek-hen.

E karter Cluain Ard emañ ar greanti Mackey, ma labour ennañ protestanted dreist-holl. Enebiezh a zo etrezo hag ar boblañs tro-war-dro. Piv a grogas, n'ouzon ket, met mein a voe taolet ouzh ar greanti ha tammoù houarn a voe stlapet gant ar vicherourien dre ar prenestroù en tiez-annez. Pa vez hopet war ar protestantezed a zou da naactaat ar greanti, ec'h cilgeriont d'ar c'hatoligezed : "Devet eo bet ho tiez, ha devet e vint c'hoazh !"

E karter Ard Oighenn e kemer ar merc'hed yaouank perzh en argadoù taolioù mein ha boutailhoù. Ha n'o devez ket aon ? Eo sur, met pa welont ar soudarded o tont en o straedoù, e trec'h o c'hasoni war o aon hag e talc'hont penn.

Ur c'hrogadig 'zo e voe taget ar Republikaned gant eskob katolik Béal Feirste. Dircizh (immoral !) e oa eus o ferzh lakaat an dud da emsevel, peogwir ne c'houlennent nemet bevañ e peoc'h. Daeet e voe da ziskleriañ hag eñ a gave reizh dalc'hidigezh ar 6-Kontelezh gant an arme saoz. Ha mont a reas un dileuriadur a verc'hed da rebech e emzalc'h outañ. Ne voe ket digoret dor ar palez dezho.

Goude ma voe lazhet ur plac'hig pemp bloaz gant ur c'harr-emgann saoz, en em vodas un tolpad merc'hed evit goulenn ma vije degemeret soudarded en anv ar Broadoù Unanet da gemer lec'h an arme saoz er 6-Kontelezh. Un heklev eus an arc'hadur-se a zo bet dec'h e Dáil Eircann, peogwir e voe anv a sevel klemm adarre e Bodadeg ar c'henurzhiadur etrevroadel.

Strolladoù merc'hed a zo koulskoude o klask mirout ouzh an enebourien d'en em gannañ. C'hoarvezout a ra d'ar maouezed dont etre ar soudarded hag an dud yaouank, oc'h ober kazel-ha-kazel ur chadenn a-dreuz ar straed.

Bez' ez eus ul luskad "Women together" o klask derec'hel pontoù etre izili ar c'hredennoù disheñvel. E penn al luskad-se ez eus ur gatoligez ganet e Bro-Saoz. Protestantezed Sean Chill (Shankill) a lavar e klaskont mirout ar peoc'h ha netra ken. Diwall a reont kement ha ma c'hellont na dafe o bugale er veskadeg. O vont kreiz-etre an emgannerien o deus bet tapet leizh o skevent a c'haz-C.S. (cncpkabaduilh).

Pa'z eus gwad o redek avat ez eo diaes-tre ober berzh gant seurt strivadoù. Ha protestanted ar c'harterioù micherourien a soñj ne roer ket o lodenn eus an tiez nevez dezho. Gourvenn a sav enno pa gav dezho e vez sevenet c'hoantoù ar gatoligez diwar-bouez obererezh enep al lezenn ha ... muntrevezh.

Pezh a zo sur, n'eo ket war gomezañ ez a an diforc'hiñ relijiel er 6-Kontelezh. N'haller ket komz eus an dispac'h du-hont hep ober gant an termennoù relijiel. Pell e chom pal Wolfe Tone ! ... Lakact eo bet e zelwenn e Dulenn da darzhañ !!

(11.2.71)

C'HOARIVA

An Ao.L.Andouard a gemenn dimp ez eo bet c'hoariet Ar C'houmoul a Dec'h evit an eil gwech, e "Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadurezh" e Sceaux, dindan baeroniczh ar Gevredigezh "Da Virviken", ar Sadorn 23 a viz Genver, da 5 eur noz. Ar c'hoarierien a oa an hevelop re a zisplegas ar pezh e KERVREIZH d'an 19 a viz Korzu. Dastroc'het e voe an abadenn gant kanennoù sakr kembreat. A-raok ar pezh e voe displeget brav-tre gant Tereza Ar C'horr an darn vrasañ eus pennad Roparz Hemon, "Pezhioù-c'hoari".

Evit klozañ an abardaevezh, e voe lavaret un oferenn vrezhonek e koun un ezelez yaouank eus "Da Virviken", marvet, goude ur c'hleñved berr-souezhus, un deiz bennak a-raok.

=====
 Profoù d'AR BED KELTIEK : An Ao.Herry, 30 lur. -
 An Dim.M.Gourlaouen, 20. - An Ao.A.Guillou, 30. -
 An Ao.Gelezeau, 5. - An Dim.Ivona hag an Ao.J.Konan, 10. -
 An Ao.Ducamp, 30. - An Ao.Y.Ar Beg, 30.

En holl : 155 lur.

Trugarez d'ar brofourien !

=====
AR MIZ

(15 Genver - 15 C'hwevrer)

BREIZHAr Brezhoneg hag ar C'huzulioù-Meur

Goude Kuzul-Meur departamant Penn-ar-Bed, o deus Kuzulioù-Meur Aodoù-an-Hanternoz hag ar Mor-Bihan savet ur mennad a-du gant ar brezhoneg. Goulennet o deus e miz Genver ma vije skrivet anvioù-lec'h Breizh-Izel en un doare dereat.

Setu amañ mennad Kuzul-Meur Aodoù-an-Hanternoz, kinniget gant an Ao.Erwan Bourdonneg, kuzulier-meur Ar Roc'h-Derrien (a gomzas brezhoneg er vodadenn), - degemeret a-unvouezh :

"O vezañ ma tleer mirout an danvez istorel a zo en anvioù brezhonek an tiez-furm, al lec'hiennoù, ar c'hêriadenoù, ar pennkêrioù,

"O vezañ ma vez prientet purliesañ ar skritelloù-arouez war an hentoù, ar c'hemmadenoù graet er c'hadastr evit e adreizhañ pe evit adframmañ an douaroù, h.a., en un doare dievezh, hep anaoudegezh eus gwir ster an anvioù, pe o vezañ ma vezont gallekaet diampart,

"E c'houlenn ar C'huzul-Meur ma klasko teknikourien ar Pontoù-ha-Chaoserioù, renerezh departamantel ar Gounezerezh-Douar, ar C'hadastr, ha dre vras an holl

velestradurioù karget eus seurt kefridioù, mirout feal
 bep tro an testenioù-se eus ur sevenadur hag ur yezh a
 ra unan eus pinvidigezhioù Breizh ha lorc'h ar Vrezhoned."
 E Kuzul-Meur ar Mor-Bihan e voe graet ar c'hinnig
 gant an AoAo.Robig, Ihuel, Ar C'habelleg hag Ar Roc'h.

Marv Daniel Bernard

Daniel Bernard a varvas d'an 19 Genver e Kleden-ar-
 -C'hab, ar barrez ma voe ganet d'an 19 C'hwevrer 1883.
 Implijad ar Post e oa bet. E holl amzer vak a ouestlas
 d'ar studi, studi Istor Breizh dreist-holl. Kenlabourat
 a reas da gelc'hgelaouenn "Kevredigezh Istor hag Henoniezh
 Vreizh", d'an ANNALES DE BRETAGNE, d'an UNION AGRICOLE,
 h.a. E-touez e oberoù niverus e tleer menegiñ e "Undaolenn
 Gleden-ar-C'hab", e "Istor ar Post-Lizhiri e Breizh adalek
 ar 15-vet kantved betek an Dispac'h", e embannadur, a-
 -gevret gant Yann Savina, eus "Kaieroù-Klemmoù Senesal-
 iezhoù Kemper ha Konk-Kernev". Un druez eo en deus savet
 e holl skridoù e galleg. En amzer e yaouankiz hag e oad-
 -gour ne oa ket c'hoazh ar c'hiz da ober gant ar brezhoneg
 el labourioù gouezoniezh.

Kudenn ar saotradur

Hep gortoz labour ministrerezh an Endro e Pariz, o
 deus kevredigezhioù liesseurt divizet sevel e departamant
 ar Mor-Bihan ur strollad-kefridi evit "Gwarez an Endro".
 Kentañ tra a vo sevel ur gartenn eus saotradur an dour,
 a c'hallfe talvezout da ziazez d'ul "Levr Du" evit Breizh
 a-bezh. Ur studiademn resis a dle bezañ graet eus mor-
 lenn An Oriant.

Al ligistri

E 1963 e voe aozet en aod hanternoz Bro-Leon lennoù
 evit al ligistri hag ar grilhed-mor. An anavaled-se, a
 oa aet stank dre eno e-pad an eil brezel-bed, a oa aet
 war rouesaat, paket ma vezent hep urzh na muzul. Divizet
 e voe eta gant "Strollad-kefridi lec'hel peskataerezh
 Brest" krouiñ lennoù, ma vije maget ligistri ha grilhed-
 -mor, ha lezet e peoc'h da baotaat e-pad 5 bloaz.
 Krouet e voent e Landeda, ha goude e Konk-Leon, Porsal,
 Kerlouan hag en Enez-Werc'h. An taol a seblant dont da
 vat. Nemet diaes a-walc'h eo mirout ouzh tud 'zo,
 dreist-holl touristed, da legestreta e kuzh en tachennoù
 berzet.

An eoged

Pezh a zo bet graet en Iwerzhon a c'hell bezañ
 graet e Breizh.

Dedennet e vez tud a-vern eus pevar c'horn ar bed
 da bakañ coged e stêrioù Iwerzhon : ur vammenn a
 binvidigezh evit ar vro.

Bloaz 'zo e voc krouet ur "C'hevelorezh Gwarczadur an Eoged e Breizh", gant an Ao.Pierre da rener. E bal eo dreist-holl treiñ ar Blaouezh da "stêr-eoged". O vezañ mat tle ar Blaouezh talvezout da bourchas dour mat da evañ d'An Oriant, ez eus abeg da grediñ e vo miret disaothr hiviziken. Prientet ez eus bet ur raktres 15 bloaz, rannet e tri maread 5 bloaz. Er c'hentañ maread e vo lakaet fardelloù etre genou ar stêr ha Pont-Aogan, gant ur c'honter elektronek e Kerrouz evit studiañ buhez an eoged ; en eil maread e vo aozet ar stêr betek chaoser Gwerledan ; en trede maread, en diwezh, uheloc'h eget ar chaoser.

An istr

N'eus ket pell c'hoazh, e veze kavet e morlenn Vrest kregin-Sant-Jakez e-leizh. Tost distrujet int bet gant ar c'hreginaerezh kefluskerezet, ha gant yenijenn ar goañv 1962-63. Setu ma rankas ar greginaerien dastum horbalaned hag istr plat, ur vicher na oa ket gwall arc'hantus.

Darn o deus soñjet e vije tu da aozañ istregoù. E 1959 endeo e oa bet savet "Kevredigezh Istrvagerezh Morlenn Vrest", a zo enni bremañ 366 a izili. Pemp kevredigezh all a zo bet krouet abaoe, o kenstrollañ kreginaerien eus Brest, Keraliou, Konk-Leon, An Treizh, An Oberlac'h, Kerc'hor, Tindu, Logonna, Keraskoed, Rostivieg. 656 hektarad a zo bet roet dezho (pezh n'eo ket an hanter a-walc'h) e gevred ar vorlenn, da vogañ istr.

BREST

D'ar 1-añ C'hwevrer, e mulgul morlenn Vrest, evoc "kentraouet" al lestr-roueder PENN-AR-PONT gant ar splujerez nukleel REDOUTABLE. Kerkent ez eas al lestr-roueder d'ar strad, nemet dre eurvad e teuas ar 6 den a oa e bourzh a-benn da saveteiñ o buhez.

Hervez mestr PENN-AR-PONT, an Ao.Herri Gloanog eus Ar Gelveneg, hag e vartoloded, ez eo ar splujerez a zo kablus. Servij ar Morlu gall a lavar ar c'hontrol. Enklask a vo. Frealzet e vo an holl o c'houzout n'en deus ket bet al lestr-brezel re a zroug.

Da vihanañ n'eo ket bet paket e rouedoù PENN-AR-PONT, evel ur splujerez all eus An Oriant, ESPADON, a vo tapet ha stlejet e-pad tost un eur gant rouedoù L'IGUANE, ur vag-pesketa eus Loktudi, d'ar 4 C'hwevrer.

KEMBLIZIEG

Sant Konvoion, krouer abati Redon, a zo bet enoret en e barrez c'henidik, Kemblizieg. Binniget e voe e miz Genvor un delwenn c'hreunvaen anezhañ. Skoazell-arc'hant, war-dro 10.000 lur, a oa bet roet gant kuzul-kêr, pezh a zisplijas da dud 'zo, - moarvat tud na ouzont ket kalz a dra a-zivout Istor Breizh, - a begas skritelloù flemmus dre ar vourc'h.

Naoned

Abaoe ur miz o deus 1.800 micherour greanti ar Batignolles diskroget diouzh al labour. Ar greanti-se, a raed ennañ stlejerezed hent-houarn gwechall. Adalek 1950 ne ra mui nemet labourioù minterezh ha mekanikerezh bihan. E 1963 e voe lonket gant "Strollad Le Creusot", ha sellet outañ gant ar strollad-se evel un dra dister. Izeloc'h eo gopr micherourien ar Batignolles eget hini micherourien all ar vetalouriezh e Naoned, a vez paeet o-unan nebeutoc'h eget an darn vrasañ eus micherourien Frañs.

Aozet e voe e Naoned d'an 22 Genver un displegadeg a-du gant an harzlabouridi. Ne voe bodet, avat, nemet war-dro 3.000 den, studierien en o zouez. (15.000 metalour a zo e Naoned). D'an 28 e tibunas an harzlabouridi dre ar straedoù gant o gwraez hag o bugale evit goulenn skoazell digant ar maer.

Sindikadoù bras Pariz a dennas o mad, evel boaz. eus an darvoud evit ober o zamm bruderezh. Ne voe ket diskoulmet ar gudenn avat : "Adkrogit gant al labour," eme ar vistri, "ha neuze hepken e vo tu d'ober emziviz."

DRE AR BEDKudenn an tireoul

E Teheran ez ae en-dro e miz C'hwevrer kendivizoù etre ar broioù e tu pleg-mor Persia a werzh tireoul hag ar c'hompagnunezhioù bras a bren anezhañ. Ar broioù-se a zo deuet pinvidik a drugarez d'o zireoul, hogen fellout a ra dezho pinvidikaat c'hoazh. Ar c'hompagnunezhioù bras a zo pinvidik ivez, ha ne fell ket dezho e tigreskfe o gounid.

En ur brezegenn, d'an 3 C'hwevrer, e tisklerias cha Iran e tleje ar broioù-tireoul kreskiñ o frizioù a 20% da vihanañ, ha troc'hañ krenn ar pourvozañ diouzh ret.

Ken prizius eo deuet an tireoul er bed ijinerezhel a vremañ ma ne c'hallfe ket dioueriñ anezhañ. Broioù, evel re Gornog Europa ha Japan, siwazh dezho, a rank prenañ tireoul. Hag ezhomm o deus mui-ouzh-mui eus an danvez-se.

Emglev a voe graet d'ar 14 C'hwevrer, evel ma oa da c'hortoz, diwar-goust an dud vunut, a breno keroc'h an tireoul.

Kembre E Londrez (3 C'hwevrer) e voe barnet 4 ezel eus "Kevredigezh ar C'hembraeg", tamallet da vezañ freuzet ur prenestr e Palez Parlamant Westminster e miz Genver. O fal a oa bet mont er palez hag en em serriñ e burev ministr ar Post, evit tennañ an evezh war emzalc'h gouarnamant Breizh-Veur e-keñver ar yezh kembraek.

Unan a voe kondaonet da zaou viz, hag unan da ur miz prizon, o-daou gant dale-kastiz. Didamallet e voe an daou all. Kembræg hepken a gomzjont e-pad ar prosez.

Iwerzhon Trubuilh a vez atav e Norziwerzhon. War washaat ez eas an traoù e Béal Feirste diwar an 3 a viz C'hwevrer. Soudarded saoz a rae ar furch evit kavout armoù kuzhet en tiez. Taget-feuls e voent gant ar boblañs. Implij a rejont taolerezed-dour ha tennoù gom-gwevn. An dud diouzh o zu a savas bardelloù, a lakaas an tan e kirri, a daolas mein, brikennoù ha bombezennoù. Ken na rankas gouarnamant Londrez kas soudarded all dre girri-nij eus Bro-Saoz.

5 den, marteze muioc'h, a gollas o buhez e Béal Feirste d'ar 6. Krogadoù a voe ivez e Doire.

En ambrougadegoù-kañv tud lazhet e voe gwelet paotred gwisket gant lifre an Arme Republikan : bonedoù du ha porpantoù gell. E-doug un interamant e voe skrapet banniel Iwerzhon diwar an arched gant ur c'hrennard protestant, ha kann a savas da heul. Berzet e voe gant ar pennadurezhioù dougen lifreoù "aozadurioù e-maez-lezenn".

Breizh-Veur Unan eus pennañ kompagnunezhioù Breizh-Veur, Rolls-Royce, a roas da c'houzout e derou miz C'hwevrer ne c'halle mui chom en he sav. Ne oa ket deuet a-benn da seveniñ un emglev graet gant ar gompagnunezh amerikan Lockheed da bourchas dezhi kefluskorioù kirri-nij. Ar gouarnamant a zivizas saveteiñ darn hepken eus Rolls-Royce, dre breñañ (ne gredas ket ar Virourien implij ar ger "broadelañ") ar c'hevrennoù rekis evit emzifenn ar vro. Kalz micherourien a ranko bezañ dilabour. Un taol fall eo evit ijinerezh ar c'hirri-nij, hag un taol spontus da vrud vat Breizh-Veur dre ar bed.

Helvetia Dre referendom (7 C'hwevrer) e voe roet d'ar merc'hed ar gwir da votiñ en dilennadegoù broadel. Bremañ n'eus mui er bed nemet nebut broioù a nac'h ar gwir-se ouzh ar merc'hed, en o zouez Yemen hag Arabia Seoudat.

Gwazed hepken a gemeras perzh er referendom, hervez al lezenn gozh. 621.403 a votas a-du, 323.596 a-enep. En ur referendom all, e 1959, e oa bet er c'hontrol muioc'h a vouezhioù a-enep eget a vouezhioù a-du. E 10 eus ar 25 kanton, dreist-holl ar re ma komzer enno galleg hag italianeg, e oa bet aotreet er bloavezhioù diwezhañ d'ar merc'hed kemer perzh er votadegoù lec'hel.

Ar strollad en doa stourmet kalzetañ evit ma vije respontet nann er referendom oa "Kevredad Merc'hed Helvetia a-enep ar gwir-votiñ d'ar merc'hed" !!

Italia D'ar 6 C'hwevrer e voe gwastet ur rannvro en hanternoz da Roma gant ur c'hren-douar. Tarquinia, ur gêr a 8.000 a dud, brudet evit an aspadennoù a gaver onni eus amzer an Etrusked, a voe gwall dizhet.

Stadoù-Unanet Kalifornia, deuet da vezañ unan eus pennañ kreizennoù danvezel ha speredel ar bed, a zo, siwazh dezhi, war ur frailh don, atav en arvar da vezañ gwastet gant ur c'hren-douar. An hini a reas distruj bras d'an 9 C'hwevrer n'eo, eme ar sismologourien, nemet ragarouez gwallzarvoudoù gwashoc'h c'hoazh. Er c'hreisteiz e c'hoarvezas, e Los Angeles ha tro-war-dro. Un 50 den bennak a varvas, kalz anezho en ur c'hlañvdi e San Fernando. Skarret e voe ar chaoser a zalc'h dour al lenn Van Norman, ha ret e voe da viliadoù a dud skampañ, rak aon na zeuje ar chaoser da darzhañ.


Ginea 92 a dud a voe barnet d'ar marv e Ginea gant ar Vodadenn Vroadel evit bezañ kemeret perzh en aloubadenn aozet evit diskar ar prezidant Sekou Toure. 72 a dud, en o zouez arc'heskob Konakri, a voe barnet d'al labour-ret a-hed buhez (24 Genver).

Indezsina E dibenn miz Genver e redas ar brud e oa aet soudarded eus Suvietnam, harpet gant nijerzed amerikan, dreist harzoù Laos, evit troc'hañ hent ar pourvezioù kaset gant ar gomunourien etrezek ar c'hreisteiz. Nac'het e voe avat reiñ keloù gant gouarnamant Washington eus an taol-se. E gwirionez, ne grogas aloubadeg Laos gant nerzhioù Suvietnam nemet d'an 8 C'hwevrer.


Oabl Diouzh ar C'hab Kennedy, d'an 31 Genver, e voe bannet an oabllestr APOLLO-14 etrezek al Loar, en e vourzh 3 den, Shepard, Mitchell ha Roosa. Nebeut goude ar vannadenn e savas trubuilh. Bec'h a voe o stagañ ar glozenn-loar, lesanvet "Antares", ouzh korf al lestr, lesanvet "Kitty Hawk". Ne zeujod a-benn nemet d'ar pevare taol. D'ar 5 C'hwevrer koulskoude e leurie "Antares" war al Loar, tostik-tost d'al lec'h merket, hogozik e kreiz an adplanedenn evel gwelet eus an Douar, en hanternoz da dorgennoù Fra Mauro. Shepard ha Mitchell a zeuas er-maez da lakaat ardivinkoù, - ar stalabard da vuzuliañ ar "c'hrenioù-loar", un dameuc'her laser, gwikefreoù da jediñ nerzh an avel-heol hag energiezh an elfennoù kosmek. Antronoz e kerzhjont etrezek un "toull menez-tan" anvet ar Bikernenn. O fal a oa krapañ betek al lein. Ne voe ket tizhet avat. Bale war al Loar e-mesk rec'hell bras ne oa ket ken aes ha ma soñjed. An daou zen a skuizhas buan. War-dro ur c'hilometrad hent o doa graet evelato, en ur zastum poultr, ha tammoù mcin ha reier. Ur garrigell a oa ganto, hogen ne voe ket tu d'he stlejañ penn-da-benn d'an hent. "Antares a zibradas hag en em stagas hep poan ouzh an oabllestr, leviet gant Roosa, a oa chomet o treiñ en-dro d'al Loar, o c'hedal e zaou genveajour. D'an 9 e tiskennas an oabllestr er Mor Habask.

=====
C.C.P.P. No.36.242.


Le Gérant : Mlle Y. Martin, 24, rue Poull ar Bachet, BREST.
Liesskrivet gant ar gelaouenn/Ronéotypé par la revue.



Kelaouenn vizek
Niv.148 - Ebrel 1971
Koumanant-bloaz : 20 lur
(Studierien ha soudarded : 15 lur)
(Broioù estren : 25 lur)
"AR BED KELTIEK"
24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST
CCP.RENNES 1907-07




=====
PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON
=====



T a o l e n n

- 92 Ar miz (15 C'hwevrer - 15 Meurzh)
- 93 Geriadurioù (Roparz Hemon)
- 96 A-zivout kanañ ar "Vro Gozh" (J.Plouard)
- 101 Du-mañ gwechall : Gwall deodoù (Herve Ar Menn)
- 103 Embannadurioù nevez (Roparz Hemon)
- 106 An aozadur gladdalc'hel, kendalc'h
(troet diwar Istor Breizh La Borderie)
- 109 Geriadur ar Brezhoneg, kendalc'h (Roparz Hemon)
- 113 Ar mengleuziañ en Iwerzhon dieub (Alan Heusaff)
- 119 Ar miz, kendalc'h



AR MIZ

(15 C'hwevrer - 15 Meurzh)

Iwerzhon N'eo ket war sioulaat ez a an traoù e Norziwerzhon, gant taolioù-strap, bombezennoù, tud lazhet pe c'hloazet bep sizhun. Nevez 'zo eo deuet a-wel ar c'hevezerezh etre daou skourr eus an Arme Republikan, pezh a blij hep mar d'an "Unanourien" a-du gant Bro-Saoz.

En noz etre an 10 hag an 11 Meurzh e voe muntret tri soudard skos yaouank, hag i o pourmen dilifre e Béal Feirste.

Breizh-Veur D'an 20 Genver e tiskrogas ar bosterien diouzh al labour. Goulenn a raent e vije kresket o fae a 15%, ha ne ginniget dezho nemet 8%. An harz-labour, an hini hirañ e Breizh-Veur abaoe an eil brezel-bed, a badas betek an 8 Meurzh. En deiz-se e rankas implijidi ar Post plegañ, hep bezañ tizhet netra, nemet kaout promesa e vije studiet ar gudenn. E berr gomzoù, trec'het e oant. N'o doa mui arc'hant da genderc'hel gant o stourm.

Un trec'h bras e voe er c'hontrol evit gouarnamant ar Virourien, o tiskouez e venne herzel start ouzh kresk koust ar bevañs hag ouzh ar revoneizadur.

Tu a vije bet d'ar bosterien da chom pelloc'h hep labourat ma vijent bet skoazellet gant ar sindikadoù bras. Ar re-se, avat, a gavas gwelloc'h mirout o c'hef leun. Da grediñ eo ne vint ket prest da aozañ harzoù-labour hir er sizhuniou da zont. Gwall arvarus eo stad an implij, hag un arouez fall eo bet diskar ar gompagnunezh Rolls-Royce.

Helvetia D'an 22 C'hwevrer e tigoras e Lausanne prosez unnek den tamallet da vezañ dalc'het ti-polis Delemont d'an 29 ha 30 Mezheven 1968. An damallidi ne oant ket el lez-varn. Edont e Strassburg, e ti Kengefridiezh Europat Gwirioù an Den, o klemm a-zivout sujidigezh o bro, Bro-Jura, da Helvetia.

Izili int eus ur strollad anvet "Les Béliers". Gallegerien int, ha ne dlefe ket o bro, emezo, bezañ darn eus kanton Bern, poblet dreist-holl gant alamanegerien. Kavout a ra dezho e vezont mac'homet.

Luskad gallegerien Bro-Jura a zo diwznet pellik 'zo. Tud ar vroig-se a zo rannet e tri : an UPJ, na c'houlennont ket muioc'h a frankiz, an MPJ, a c'houlenn ma vo graet gant Bro-Jura ur c'hanton distag, an RJ, a c'houlenn krouidigezh ur Stad, distag-krenn diouzh Helvetia.

(kendalc'h p.119)

GERIADURIOÙ

gant Roparz Hemon

Soñj am eus eus un denig fri-hir o follennata
geriadurioù brezhonek displeget en ur stal-levrioù.

"Ar geriadurioù brezhonek !" emezañ o hejañ e skoaz,
"heñvel int holl ! Pep geriadur nevez a vez graet dre
eilskrivañ ar geriadurioù kozh !"

Me ne lavarais netra. Al levr a oa gantañ etre e
vizied oa unan eus va geriadurioù.

Prederiañ a ris avat :

"Hemañ, evel kalz re all, a gred e tle pep geriadurour
tennañ diouzh e benn an holl c'herioù a laka en e
c'heriadur, pe dastum anezho marteze diouzh ar c'haozeadennoù
en deus klevet pe ar skridoù en deus lennet."

Ha p'en dije ur geriadurour notennet an holl c'herioù
en deus klevet ha lennet adalek amzer e vugaleaj, ne ve
ket un digarez da lezel a-gostez ar geriadurioù kozh.
Hevelep fazi am eus graet va-unan, o kregiñ gant va
Geriadur Istorel. Ne felle din da gentañ nemet tennañ
gerioù ha skouerioù diouzh testennoù. Merzet em boa evlato
e oa ret, evit reiñ un daolenn klok a-walc'h eus ar
c'hrennvrezhoneg, menegiñ gerioù ar c'hCatholicon, hor
c'hentañ geriadur, aozet e dibenn ar 15-vet kantved.
Tamm-ha-tamm, e-kerz va labour, e teuas sklacr din e oa
bet ken bras levezon ar geriadurioù war furmidigezh ar
yezh skrivet ma tleent bezañ burutellet ken aketus hag
an testennoù.

Ha war-bouez treiñ bemdez, e-pad meur a vloaz,
pajennoù ar geriadurioù bras savet Gant Gregor Rostrenen,
Dom Le Pelletier, Cillart (l'Armerye), Ar Gonideg, Troude,
Ernault, Vallee ha re all, em eus dizoloet ur bern traoù.

A-zivout pep unan eus an oberennoù-se e ve tu da
sevel ur pikol tezenn doktorelezh. Ha n'eo ket en ur pennad
berr evel hemañ e c'hallfen displegañ kement am eus desket.

Eus ar c'hCatholicon ne lavarais ket kalz a dra.
Studiet eo bet gant Trepos, en ANNALES DE BRETAGNE, hag
emañ Ch.Guyonvarc'h oc'h e adembann er gelaouenn OGAM
en un doare dereat. Ha ne lavarais ket kalz a dra kennebeut
eus daou c'heriadur kozh all, n'am eus ket bet tro,
siwazh, da implij evel ma'm dije karet : Nomenclator
Quiquier Rosgo (1633), aozer brudet (pe a dlefe bezañ
brudet da vihanañ) ar C'hollokoù ken dudius, ha geriadur
an Tad Maner, a gaver en e levr Le Sacré Collège de Iesus
(1659).

Ar c'hentañ geriadur bras da vezañ moulet e voe hini
an Tad Gregor a Rostrenen. Ne ouzer hogozik mann a-zivout
an den-se. Ne ouzer ket zoken e anv-tiegezh. E levr,
ennañ 980 pajenn, a voe embannet e 1732, gant skoazell
Stadoù Breizh.

Un tammig disprizet eo bet al labour "ramzel"-se, gant ar re zoken o deus graet o mad anezhañ. N'em eus ket aon da lavarout ez eo, a-galz, an hini gwellañ eus an holl c'heriadurioù brezhonek, nemet, - ha c'hoazh n'on ket sur, - Geriadur Bras Vallee.

Gregor a oa ar brezhoneg yezh e gavell (sur a-walc'h brezhoneg Gwened); un anaoudegezh dispar en doa eus ar rannyezhoù komzet en e amzer; ur bern dielloù a oa bet studiet gantañ, darn anezho aet da get bremañ; ha war ar marc'had e oa un den speredek, hep mar ebet.

E levr, leun a c'herioù, a droioù-lavar, a frazennoù kutuilhet er "brezhoneg bev" koulz hag er brezhoneg skrivet, a zo ur vengleuz n'eus ket bet c'hoazh tennet diouti kement a c'haller tennañ. Talvoudus eo d'ar gwerinoniour ha d'an istorour koulz ha d'ar yezhoniour.

Geriadur Dom Le Pelletier, embannet e 1752, goude e varv, gant skoazell Stadoù Breizh ivez, a zo prizius, hep bezañ ken fonnus hag hini Gregor. Un dornskrid anezhañ, klokoc'h e meur a geñver eget an hini moulet, a zo bremañ e Lenndi Roazhon.

Rannyezh Wened ne oa ket chomet war-lerc'h ar rannyezhoù all. Geriadur an Ao.de Châlons a voe embannet e 1727. Unan brasoc'h, lesanvet Geriadur l'Armerye, aozet, a greder, gant Collart a Gerampoul, a zeuas er-maez e 1756. Prizius eo, nemet, e-lec'h kaout an onestiz da anzav en doa eilskrivet kalz eus danvez e levr diouzh Geriadur Gregor, ez eo aet an aozer betek e zismogañsiñ en e gentskrid.

Brudet-bras eo Ar Gonideg, gant reizh. Gwir eo en deus roet lusk da adsavidigezh ar yezh lennegel en amzer-mañ. Pa vuruteller avat e C'heriadur, embannet en e stumm kentañ e 1821, e spurmanter un dra ha n'eo bet merket splann neblec'h. a gredan : graet eo, hogos en e bezh, gant Geriadurioù Le Pelletier ha Gregor. Bihan eo ennañ niver ar gerioù na gaver ket en unan eus an daou c'heriadur-se, ha ne ra Ar Gonideg alies nemet adskrivañ ar skouerioù roet gant an daou-se.

Troude, en e c'heriadurioù, embannet e 1842, 1869 ha 1876, a denn kalz ivez diouzh Le Pelletier ha Gregor, o lakaat ouzhpenn koulskoude gerioù ha frazennoù eus brezhoneg-pobl e amzer, roet dezhañ peurlvuiañ moarvat gant e genlabourer feal Milin.

Pezh en doa graet Ar Gonideg gant Geriadurioù Le Pelletier ha Gregor a reas Emil Ernault gant Geriadur l'Armerye, en e C'heriadur Gwenedek, embannet e 1904. Evit sevel e labour en deus kemeret holl c'herioù l'Armerye, pe dost, ha neuze lakaet ouzhpenn geriennoù pennaouet e Geriadur Châlons hag e skridoù gwenedek, dreist-holl e Livr el Labourer Guillom.

E c'hGériadurig Brezonek-Gallek, embannet e 1927, a zo kalz gwelloc'h, hag a chom talvoudus-bras en deiz a hiziv.: ur vammenn builh a "c'herioù-pobl", dastumet dreist-holl e Treger. Arabat faziañ koulskoude : kalz

eus e c'herioù, dezho blaz saourus brezhoneg ar bobl, a zo bet kutuilhet war-eeun e Geriadur Gregor, - pe c'hoazh kutuilhet e Geriadurioù Ar Gonideg ha Troude, o doa kutuilhet anezho e Geriadur Gregor.

Gregor, Gregor, atav Gregor !

Gregor adarre, Gregor an hini eo en deus pourchaset da Vallee un darn vat eus danvez e bennoberenn, e C'heriadur Bras, embannet e 1931.

Gwelet em eus a-dost krouidigezh ar pikol levr-se, frouezh ur vuhez a studi hag a boan. Biskoazh ne vije deus er-maez, panevet gred ar mouler, F. Debauvais, ha kendalc'husted R. Ar Rouz, a strivas e-pad bloavezhioù da "sunañ" diouzh empenn Vallee muiañ ma c'halle eus an teñzor berniet ennañ, hag a aozas an dornskrid. Ernault a genlabouras ivez.

An tri-se en em vode e Sant-Brieg, e ti Vallee. Da dreiñ pep ger gallek, - rak, evel ouzoc'h, ur geriadur gallek-brezhonek eo, - e veze furchet er geriadurioù kozh, e dielloù a bep seurt, levrioù, kelaouennoù, dornskridoù, paperachoù. Savet e veze gerioù nevez diouzh ret. Ne oa ket, siwazh, kalz a urzh. Ne veze ket heuliet-strizh reolennoù ar c'heriawouriezh. Pep hini a roe e ali. Breutaet e veze, ha graet disentez, a-wechoù un tammig re vuan.

Skrijañ a ris, soñj am eus, pa welis ar strobard kentañ deuet er-maez.

"Perak," a c'houlennis ouzh Vallee, "ne roit ket evit pep ger ur stumm hepken ? Da betra lakaat stumm Treger, stumm Leon, stumm Kernev, stumm Gwened, en ur geriadur n'eo ket graet evit yezhoniourien ? En "Notennoù diwar-benn ar Gelted Kozh" hag er "Sketla Segobrani" hoc'h eus roet skouer ar yezh unvan. Perak n'eo ket ar yezh unvan-se a gaver en ho Keriadur ?"

"Ya ya," a respontas Vallee, "ho Keriadur-c'hwi (komz a rae eus va "Geriadur Brezhonek-Gallek", embannet e 1928) a zo geriadur ur yezh diazezet-mat."

Ne oa ket ur respont ceun. Gouzout a ouien avat ar pezh na grede ket anzav. Levezon Ernault e oa, levezon an den a lavare bepred mont goustad, kammedig-ha-kammedig.

Ar meskach-se a zo si bras Geriadur Vallee, ken prizius a-hend-all.

Echuiñ a ran gant un nebeut evezhiadennoù.

1) O welout ur geriadur, e kompren an holl ez eo ul labour hir da sevel. Ne ouzont ket avat pegen hir. Pezh a zalc'h ul linenn hepken en deus koustet a-wechoù eurvezhioù a boan, a furchadennoù, a brederiadennoù, a dermadennoù. Ha c'hoazh, skrivet eo bet alics al linenn-se en ur grenañ, hep bezañ sur da vezañ merket ar stumm nag ar ster reizh.

2) Ar geriadurour a zastum gerioù a bep seurt, n'eo ket hepken gerioù a gav mat, gerioù a implijfe e-unan en e skridoù. Gerioù "meneget" n'int ket atav gerioù "erbedet" gant an aozer.

3) Ur geriadur ne c'hell ket bezañ klok.

Ret eo d'an aozer lezel a-gostez kalz gerioù, kalz diskleriadurioù. Rak ur vevenn a zo d'ar vent, d'ar mizoù a c'hell ober an embanner, d'ar priz a c'hell bezañ paeet gant ar prener. Abegoù danvezel a bouez.

(Ur skouer hepken : a-raok moulañ va Geriadur Gallek-Brezhonek, e lavaras din an embanner, rener "Skridoù Breizh" : "400 pajenn ; n'em eus nag arc'hant na paper da voulañ muioc'h.")

Ret eo lezel a-gostez, - hag an dra-se a zo gwir bremañ dreist-holl, - gerioù nevez krouet, zoken gerioù krouet-reizh : gwelloc'h dastum anezho, da gentañ, e rolloù gerioù "teknikel", a-raok o degemer en ur geriadur eus ar yezh dre vras.

Hogen, ouzhpenn ar gerioù lezet er-maez a-ratozh, nag a c'herioù, zoken gerioù boutin, ankounac'haet, a ziflip diouzh ar roued, kaer a zo lakaat evezh ! Gouzout e c'hoarvez an dra-se atav, zoken er brasañ ha brudetañ geriadurioù saoznek, gallek, alamanek h.a. n'eo ket ur frealz d'ar paour kaezh geriadurour, nag un digarez kennebeut. Siwazh, e-giz-se emañ !

A-ZIVOUT KANAÑ AR "VRO GOZH"

gant J.Plouard

Nevez a zo em eus bet an tu da glevout, war ur bladenn vras, un dastumad a dalvoudegezh eus kanoù broadel meur a vro Europa. Kanet ez int gant tud eus ar broioù, da lavarout eo, gant tud a anavez o yezh hag o sonerezh broadel. Kanaouennoù Europa ar C'hornog, hag ouzhpenn reoù Rusia, Israel, Finlandia hag all am eus klevet. Evit Tchec'hoslovakia e kaver daou gan broadel : unan tchec'hek hag unan slovakiat.

Evit heuliañ va fladenn em eus bet an tu, a-hend-all, da gaout levrioùigoù ma'm eus kavet warnezho ar c'homzoù hag an tonioù gwirion. C'hoariet ha kanet gant arzourion vat ez eo an holl ganoù broadel-se. Met, ouzh o studiañ ez pizh, em eus kavet enno un nebeud bennak a fazioù, zoken diganto.

Diouzh seurt fazioù e fell din diwall hor c'horerion vreizhat, hor pobl, rak kentoc'h dezhi ha neket da arzourion ez eo kinniget ar "Vro Gozh". N'hon eus ket e Breizh a ganerion akuit war gan ar c'hanoù broadel, ret eo anzav. N'hon eus nemet tud a youl vat, leun o c'halon a vrogarantez evit kanañ ; war o zro e vennan ober amañ.

Emaon o vont, da gentañ, da ziskleriañ deoc'h pe-seurt fazioù a c'haller ober ; da c'houde e welimp penaos kanañ eus hor gwellañ ar "Vro Gozh", pe n'eus

forzh pe gan broadel arall. Ar reolennoù a van atav evit an holl.

Dielfennañ a ran bremañ un nebeut kanoù eus ar bladenn am eus komzet anezhi uheloc'hik, deoc'h da chom hep ober an hevelep fazioù (Doue a oar pegen niverus ez int !)

Skouer gentañ : ar "Marseillaise" c'hall. Kanet e tle bezañ e pevar c'houlz ; ar menterezh a zo ur C. Dre fazi ez eo bet kanet e daou goulz, evel ma c'hoarvez peur-liesañ. Setu amañ heul ar fazi-se : mar bez kanet ar "Marseillaise" en doare fall-se, e kouezh ar pouez-mouezh war ar ger-mell "la" ha war zibenn "e" ar ger "patrie" er frazenn "Allons enfants de la patrie", da lavarout eo e kouezh war c'herioù n'o deus talvoudegezh ebet drezo o-unan. Grit un taol-esa hag e welot pegen kamm eo ar frazenn !

An hevelep si a verzomp er paz addoublet "Sambre et Meuse", ma vez klevet alics an taboulinoù o seniñ er menterezh a bevar c'houlz hag an trompilhoù o seniñ dre fazi er menterezh a zaou goulz. Kozh eo ar boaz-se e Bro-C'hall. Setu, deoc'h da welout, ar pezh a lavare Jean-Jacques Rousseau e 1753 :

"... Hag an anatadur gwellañ ma ne oar ar sonerezh
 "gall na livañ na komz eo ne c'hell displegañ an nebeud
 "a gaerderioù a c'hell degemerout nemet war gomzoù
 "na dalvezont netra. Koulskoude, pa glever ar
 "C'hallaoued o komz diwar-benn sonerezh, e kredfed
 "ez eo en o c'hoariganoù e liv arvestoù ha c'hoant-
 "egezhioù bras. Arabat bezañ souezhet gant dizercadegezh
 "an treuzkredennoù-se. Doare daleüs ar yezh, an nebeud
 "a weüsted a zo en o mouezhioù, hag an doare keinvanus
 "a ren atav en o c'hoarigan, a laka hogos an holl
 "unangomzoù gallek e gorregezh, ha, dre n'en deus ar
 "mentadur pouez ebet, nag er c'han, nag en tonioù
 "boud, nag en eiladur, n'eus netra ken daleüs, ken
 "laosk, ken langisus hag an unangomzoù brav-se, a vez
 "bamet an holl dud ganto ... en ur vazailhat : o klask
 "bezañ trist, n'int nemet enoeüs ; o klask fromañ,
 "nemet gwallgas hon divskouarn ne reont ... Bez' e
 "kredan bezañ diskouezet n'eus mentadur na ton er
 "sonerezh gall, peogwir ne c'hell ket ar yezh o
 "degemerout ; ne deo ar c'han gall nemet un harzhadeg
 "dibaouez, dic'houzañvus da zivskouarn seven ; nemet
 "garv hag hep liv ne deo ar c'hensonerezh anezhañ ;
 "an tonioù gall n'int ket tonioù, an danevellganoù
 "gall n'int ket danevellganoù ... Ac'hano e tastuman
 "n'o deus ar C'hallaoued sonerezh ebet ha ne c'hellont
 "ket kaout, pe, p'o deus unan gwech pe wech, gwazh
 "a se evito ..." (Tennet diouzh "Lizher war ar
 "Sonerezh gall").

D'ar studiadenn c'hallgas-se e respontas Charles de Brosses en e "Lizhiri Italiat" (1759) :

"... Pep broad a zle kaout he sonerezh dezhi
"hec'h-unan, hervez ijin-dreist he yezh."

(Prederioù arnevez-kenañ, zoken evit tud a zo
bremañ).

E brezhonog en deus ar pouez-mouezh kalz muioc'h
a dalvoudegezh eget e galleg, c'hwi 'oar. Ha zoken er
"Vro Gozh" e vez dilec'hiet pe zrouklec'hiet a-wechoù ar
silabennoù, brasoc'h talvoudegezh dezho koulskoude. Da
skouer, e derou teirvet pozenn ar c'hentañ poz ez eo kanet
ar ger-mell "ar" dirak "brezel" war ziv notenn-grogek.
Un diskiantadenn a zo aze, peogwir n'eus ket a c'her-mell
divvogalennet e brezhonog, hervez ma ouzon. Perak neuze
kanañ "Dispont 'kreiz a-ar brezel" e-lec'h "Dispont
e-kreiz ar brezel" ?

Evel-se, frazenn an diskan, "Me 'gar va bro, Tra ma
vo'r mor 'vel mur 'n he zro ...", enni c'hwezec vogalenn
e gwirionez, a zo da vezañ kanet, "Me a gar va bro, Tra
ma vo ar mor evel mur en he zro ...", en ur chom evel just
hep reiñ kement a bouez d'an holl c'herioù, rannoùigoù-
-verb, gerioù-mell, araogennoù, atav dre zamant ouzh an
arz hepken, peogwir ez eus ivez c'hwezec ton e sonerezh
ar frazenn-mañ : unan evit pep hini anezho.

Daoust ha ne vo ket sklacroc'h ? Pa vez kalz tud o
kanañ a-gevret, e ranker heuliañ reolennoù an ceunder,
pa venner bezañ komprenet, pe e kaner kantikoù ar c'han
gregorian, pe c'hoariganoù Rossini, pe ar "Vro Gozh".

Evidomp, n'eus fazi ebet da ober a-zivout menterezh
ar "Vro Gozh" : e tri c'houlz, gant un duenn e pep hini
anezho, e tle bezañ kanet. Evit ma kloto mentadur ar
sonerezh gant pouez-mouezh ar c'homzoù, klaskomp tizhout
ur c'hempouez kenglotus en ur venel hep troc'hañ na
diverrañ ar gerioù kelliges. Evit se ez eo mat-tre studiañ
"Lieder" alamanek evit ur vouezh ha piano gant Schubert,
evel e pep keñver. ("Der Lindenbaum" pe "Erlkönig", an
oberenn-mañ adwelet pishoc'h gant Kammer eget Liegeois).

Ur fazi arall am eus merket, er c'han broadel
hollandat, hon eus da zivall ivez dioutañ. Daoust dezhañ
da vezañ bet kanet gant Hollandiz, ez eo diaes a-walc'h
disheñvelout an diskan diouzh ar pozioù anezhañ, dre ma'z
eo ar binviaouegadur an hevelep hini eus derou betek
dibenn ar pezh. Amañ ne deo nemet fazi moestr al lazoù-
-seniñ hag al lazoù-kanañ, na oar ket ober peurzisheñvel-
derioù dre implij binvioù ha "tutti" disheñvel. An
"tempo" n'eo ket start, ne glot ket sonerezh diabarzh
ar c'hlotennoù kennebeut gant mentadur resis ar frazennoù,
hag all.

N'om eus ket skrivet va fennad evit en em lakaat
va-unan da varner nag evit klemm, hogen evit sevel, evit
lakaat pobl Vreizh da ganañ he c'han bravañ-holl eus ar
gwellañ. Dezhi e kasan ar reolennoù-mañ, alioù anezho
kentoc'h, evit ma kano en enor d'he Bro.

Bez' e c'hell ur bobl meuliñ tadoù-meur ar vammvro dre he c'han broadel, pe eviti hec'h-unan (evit reiñ d'he c'halon tommer, fiziañs en dazont hag adkemer nerzh), pe evit tud all, na anavezont ket ar ganaouenn-se, o tiskouez dezho bezañs ur vroad estren. N'eus ket un oberenn a arz eus ar "Vro Gozh" : biken ne vo kanet ha c'hoariet, na gant mistri war ar sonerezh, na war leurenn ur c'hoari-gandi ; ne ra ket danvez un abadenn.

Dre ma'z eo bet savet evit ar bobl e tle bezañ kanet gant kalz tud, arabat kanañ ar "Vro Gozh" re c'horrek. Evit se e kinnigan ma vefe kanet gant un duenn o talvezout an niverenn tri-ugent (60) war ar menter Maelzel (menter a vremañ). Da lavarout eo, an tempo a zo "largetto". Evel-se e vez kanet an darn vuiañ eus ar c'hanoù broadel. Doare meurdezus ha dic'hoarzh ar pezh a c'hourc'hemenn an tempo-se.

A-hend-all e tibaban ar merk menterel 60 evit daou abeg. Da gentañ, e kavan mat e tibabfemp un niver pervezh, evidomp da chom hep kanañ gant tempi ken faltazius, ha neuze evit unanaat an doareoù niverus-niverus ha treuz-neuziet a-wechoù, ne ouzon ket penaos. Setu an eilvet abeg, un abeg aes ha fetis. Pep hini ac'hanomp a vez ur montr gantañ, ha, mar fell dezhañ anavezout tempo reizh ar c'han, e konto pep eilenn o talvezout da zuenn er sonerezh.

Mar bez bras a-walc'h niver ar gorerion, hag int songarourien, ha mar bezont barrek da ganañ e lies mouezh, ez eilor dre gemer harp war dalvoudegezh an deirvedenn hag ar c'hwec'hvedenn. (Ar c'hensonerezh a vo atav eeun ha toniek evit bezañ degemeret aes gant tud na anavezfent ket c'hoazh ar c'han). Nemet an diskan a vo kanet en un doare (a 1 voce, en italiäneg, kontrol da 2 pe 3 voci evit ar pozioù) hepken, ar ganerion, merc'hed pe wazed, o vodañ o mouezhioù, pezh a lakay an holl dud, korerion pe selaouerion, da gounaat mat an ton. A-hend-all ez eus un efed bras ha trivlius-kenañ pa glever an holl vouezhioù uhel ha boud o kanañ an "tutti" a-gevret ; seul nebeutoc'h a zoareoù mouezhioù, seul greñvoc'h e vez dasson an diskan. (Ho pezet soñj eus "Hymne zur Freude" Beethoven). Bez' e kredan e tle an diskan bezañ kreñvoc'h (= più forte) eget ar pozioù, o vezañ birvilhusoc'h.

Evit seurt kan, n'eus nemet un doniezh : E-bemol-brasañ (ar ger "brasañ" implijet ganin amañ o talvezout kement ha "maggiore", kontrol da "minore" en italianeg). En doniezh-mañ, er skeulenn-mañ e vez skrivet an holl bezhioù a zoare gorrek ha dic'hoarzhus (evel en "Heroische Symphonie" vrudet). Ar bemolioù eo a ro dezhi al liv-se.

Peurliesañ, pa vez un engroez o kanañ, seul vrasoc'h ez eo, seul c'horrekoc'h e kan. Ret ez eo d'an hini a ra dezhañ kanañ gouzout lakaat e "tempo" da venel hep lostañ. Evit se, ra bouezo kreñv war goulz kentañ pep mentadur, da sevel evel-se spisverkoù a-hed ar ganaouenn. Pe anez, ha ma n'en deus na sonevrer nag uhelgomzer, da skouer,

ne vo na gwelet e jestroù na klevet e vouezh (gant an dud a zo pell dioutañ), hag e vo dizurzh, rak ar re a zo e penn pellañ ar sal a heulio div pe deir fozenn pelloc'h.

Evit ar c'homzoù, ne anavezan nemet ar re savet gant Taldir diwar ar c'han kembrek "Hen Wlad fy Nhadau" a dalv ar boan komz anezho.

Petra eo ar "Vro Gozh" ?


Ur c'han broadel, hor c'han broadel, evit gwir. Ha gouzout a reomp-ni-holl peseurt ster don a zlcamp reiñ dezhañ ? Re nobeut kanet e vez, met re alies ivez war un dro. Ne vinnan ket amañ digalonekaat, nag hor re yaouank daouzok vloaz, a gan ar "Vro Gozh" da gan-bale evit skouted, nag hor skolvistri ha beleion o deus kement a vec'h o sevel koriouigoù en o bourc'hioù. Met soñj am eus c'hoazh er bladenn-se a ganaouennoù fentus evit ar patronajoù, graet gant unan anezho, ha gant ar "Vro Gozh" warnezhi, lakaet ma'z edo enk etre "An Tri Soudard" hag "Ar Yarig Wenn". Petra en deus hor c'han broadel da welout amañ ? - Marteze evit bruderezh. Rankout a reomp tec'hout ha stourm ouzh ar c'hwez-se a laezh-ribod.

Addeskomp penaos e ganañ, gant hor penn sonn war hon divskoaz. N'hor bezet ket aon na ganfemp gant ur vouezh faos, rak ne reomp ket amañ ur sonadeg. En em lezomp kentoc'h da vont gant an nerzh kreñv-se a c'halv ar pobloù d'an evezh hag o degas d'an dishualder. Pegen meurdeus e teu hor "Bro-Gozh" da vezañ neuze, ha nag enorus e vefe dimp diskouez d'ar re all, d'ar C'hallaoued en o zouez, ez omp barrek da ganañ gant urzh, emzalc'h ha nerzh. Hag e tleomp doujañ ivez tud 'zo, hag a zo bet kalonek-meurbet o krediñ kanañ ar "Vro Gozh" da goulzoù poanius o buhez.

War sav, hag ho tog diwar ho penn, Aotrou 'n Estren, peogwir amañ e kan Breizh, amañ e kan an holl vroioù minwasket, ar re a youc'h en abeg da zroug o gouli. Enor dezhi bepred !

"He c'halon virvidik a lamm c'hoazh en he c'hreiz,
Dihunet out bremañ, va Breizh !"

(Miz Gwengolo 1970)



GWECHALL DU-MAÑ : GWALL DEODOÙ !

gant Herve Ar Menn

Ul livadenn-veur eo bet brezel 1914-18, o veuziñ un darn vras eus an doareoù-bevañ ha prederiañ en hon touez. Betek neuze ne oa en Hañveg nemet un tri pe bevar a dud o resev ur gelaouenn bemdeziek. Ar muiañ lennet e oa "Kourier ar Finister", ur gelaouenn sizhuniek e brezhoneg. Bez' e oa ivez "Feiz ha Breiz" hag ar "Pèlerin" e galleg. Setu aze ar prenestroù ma welomp ar bed drezo.

E meur a zoare e oa bev-mat ar spered koskorek du-mañ, ar gwiskamantoù o talvezout da harzoù ar c'hoskoriadoù.

Er reter hor boa Leoniz an Treou, Sizun ha Sant-Kado. Er mervent e oa "Kerneviz", gouez dimp : e Lopereg, Kimerc'h hag Ar Faou. Pelloc'h er gwalarn emedo ar Blougastelliz, an disheñvelañ diouto holl :

"Etre Ar Faou ha Landerne,
Nag e Leon nag e Kernev."

Setu ar c'hrennlavar a gave dimp a oa gwir. Evel just e oamp-ni a-us d'an holl dud all gwisket disheñvel diouzhimp. Na petra 'ta, atav e vezomp prest d'ober fae warno pe d'o goapaat. Anv a gavomp e doare-komz al Leoniz, daoust m'hen kavomp nerzhek-tre : "Kerzh 'ta, Jañmar, da deurel foenn d'ar gazeg," "Lazhet en deus hennezh ur pemoc'h-gouez." Padal e lavaremp-ni : "Kae 'ta, Jamar (evit Jañ-Mari) da dol foenn d'ar gazeg" (foenn en ur silabenn), "Lahet en eus henne ur pemoc'h-goue."

Leoniz, kozh Leoniz, togoù kolo, reorioù brizh ! Dougen a raent brageier mezher sklaer karavennek. Hor re-ni a oa "rijennek".

"Pegement e werzhez da ebeul ?" (distaget tost da "ibil").

Bep bloaz e teue al Leoniz da brenañ ebeulien diwar o mamm, ar marc'hoù.

Ar gwiskamantoù leonat a gavan divalav, an hanter eus an amzer 'vez dic'haol o bragoù !

Nag a fent ivez diwar-benn an tandaman (distaget "tintamañ"), koef al Leonadezed ! Ar vrud o doa da vezañ pizhezded. Gwerzhañ a raent o blev. Gant an "tintamañ" o c'heleñ mat o fenn, ne weled ket ar blev touzet.

"Marivonig 'zo kollet he mouchouer ganti.

Gant ar mall kaout arc'hant, morse n'he do hini."

Un tamm aviek e oamp e-keñver ar "Gerneviz", gwisket damdost eveldomp, abalamour m'o doa sistr da evañ.

"Yec'hed dit 'ta, Laou, da'z kwreg ha bugale,
Te 'zo 'giz ar vourc'hizien du-se kostez Kernev.
Te 'c'heus sistr da evañ da derriñ da sec'hed,
Ni 'rank gwalc'hiñ hor gouzoug gant dour ar gleskered."

Arabat krediñ evelato ec'h event sistr a-leizh kof.
Anv a gavemp ivez en o brezhoneg berroc'h eget hon hini,
o tistagañ "eue" pe "ie", pa lavaremp-ni "ya".

Diwar-benn ar Blougastelliz e kavemp ar muiañ
traoù da lavarout. Ur pouez-mouezh leonek o deus, hag
int e Kernev. Ne deuent dre zu-mañ nemet d'ar foarioù,
ha da werzhañ sivi. E pardon Rumengol avat e veze
dousennadoù anezho, o dilhad a livioù splann o troc'hañ
war ar gwiskamantoù all, ken niverus koulskoude.

Dibaot e oa d'ar Blougastelliz dimeziñ gant estrenien
d'o c'humun. Mont a rae Hañvegiz da labourat da Blou-
gastell, d'an nevez-hañ dreist-holl. Ki e oa ar vagerien
sivi d'al labour, ha fall ar geusteurenn ganto. Mestrez
an ti a guitae ar park un hanter eur a-raok ar pred, da
vont d'aozañ ar boued. Holl dilerc'hachoù an deiz kent
a veze taolet er pod pe er gaoter d'ober un doare gwelien !

Hag o gwiskamantoù, va zud kaezh, nag a c'hoarzhadeg
diwar o fenn du-mañ ! O brageier ne oa ket heñvel outo
e neblec'h. E diwezh ar c'hantved naontekvet e veze
douget c'hoazh ar c'habell "frigian" e Plougastell. Da
vezañ gwisket brav e oa un tog voulouzennet, evel hon
hini-ni, gant frezilhonù e neud lieslivet en-dro d'ar
gern, heñvel ouzh preñved. Pa welemp-ni ur vuzhugenn
vras pe ur preñv a liv, e lavaremp en ur c'hoarzhin :
"Al loen-mañ avat a vefe gwerzhet kor e Plougastell."

Nag e veze kontet ivez a-zivout "kilhogenn" ar
merc'hed. Un tamm mezher tev eo ar gilhogenn, a zoug
merc'hed ar sivi a-dreñv o c'hein e traoñ ar justinenn.
Heñvel-mil eo ouzh stur ur vag. Ha ni a gane :

"Merc'hed Plougastell n'int ket fur,
Pa rankont kaout pep a stur !"

Ar paotrezed ne zougent ar gilhogenn nemet pa
vezent douet da vaouezed. En Hañveg e lakaent ar c'hoef
azalek neuze.

En amzer-se ivez, ar Blougastelliz a zalc'he o
brageier diwar-goust tri ibil, dres evel ar re a weler
c'hoazh war ar c'habigoù ha seier ar vartoloded. Bez'
e oa ibilien d'ar pemdez, reoù all d'ar Sul. Ar re-mañ
a veze turgnet e beuz melen. Hag an Hañvegiz da fistilhañ
pa welent ur Plougastellad.

"Che ! Sellit hemañ 'ta, lakaet en deus e ibil
beuz ! Da glask ur vaouez eo deuet dre amañ !"

Pe c'hoazh :

"Diwall da goll da ibil Plougastell, ar fallañ hini
a wigour da gentañ !"

N'em eus ket ezhomm da lavarout deoc'h e veze meur
a ster d'ar c'homzoù, damziveiz d'ar yaouankiz a vremañ.

Dav eo din lavarout, evelato, mar doa mat va c'hen-
vroiz da gavout anv ha da c'hoapaat an estrenien, e raent
kemend-all etrezo. Dibaot oa an dud du-mañ hep ul lesanv
pe zaou.

Gant ar brezelioù eo bet kollet an temz-spered-se.
Bremañ, ar spered gall eo a ren du-mañ, zoken pa vrezhon-
eger, seul vuioc'h m'eo yaouankoc'h an dud.

EMBANNADURIOÙ NEVEZ

gant Roparz Hemon

"STUDI HA DUDI"

Setu tri levrig c'hoazh embannet er rummad nevez
"Studi ha Dudi".

SIZHUN AR BREUR ARTURO (7,50 lur), gant Youenn Drezen,
a voe moulet evit ar wech kentañ war AL LIAMM e 1949.
Unan eus e wellañ oberoù eo, unan eus ar re dostañ d'e
galon, dre ma tegas soñj dezhañ moarvat eus bloavezhioù
e yaouankiz tremenet e Bro-Spagn.

GWERZIOÙ KOZH BREIZH (10,00 lur) a zo un dibab eus
gwerzhioù dastumet gant Fañch An Uhel, kempennet gant
Per Denez, Anna Ar Beg ha Morwena Denez. Ur gwall labour
eo "kempenn" testennoù lennegezh-pobl, dreist-holl
kanaouennoù. Marteze e vefe gwelloc'h reiñ ar skrid dres
evel ma voe embannet gant an dastumer, ha lakaat e-kichen
un treuzskrivadur er yezh lennek, hep klask heuliañ
reolennoù ar werzadurezh, hag un nebeut notennoù.

40 PENNAD-LENN EVIT AR SKOLIOÙ (7,50 lur) : pennadoù-
-lenn berr, dibabet gant Per Denez, diwar oberoù skrivagnerien
a vremañ. Ezhomm bras hon eus eus seurt levrioù, a c'hell
talvezout da skolidi an eil derez : skoazell d'ar vistri,
o devez bec'h alies o kavout testennoù da implijout e-pad
o c'hentelioù.

(Levrioù "STUDI HA DUDI" a zo embannet gant AL LIAMM).

HOR YEZH, niv.64.

Atav da skoazellañ ar vistri, ez embann Per Denez
"Poelladennoù diwar-benn 20 kentel gentañ Cours Élémentaire
Roparz Hemon".

Krediñ a ran e vefe bet tu da ober hep frazennoù ha
gerioù gallek. Displegañ a c'haller pep tra d'ar gelenn-
erien e brezhoneg.

(HOR YEBZH, kelaouenn a yezhoniezh. Koumanant 4 niverenn, 20,00 lur : P.Denis, CCP.Rennes 1499-51 ; priz an niverenn-mañ, 5,50 lur).

PREDER, Kaier 123-124 : LAVAR-03

Pennad Goulven Pennad, "Gwrizienn ha bonad er verb euskarek", a vo talvoudus dreist-holl d'hon euskaregourien ; gant ar re all e c'halla bezañ lennet evel kudenn yezhoniezh. Studiet e c'hell bezañ ivez e-keñver an termenadur yezhadurel.

Pouezusoc'h c'hoazh evidomp eo e bennad, "Diwar-benn ar raganvioù-gour 3e un gourel ha nepreizh, ha raganvioù-diskouezañ zo".

A-zivout implij eñ gant ar verb endevoud, e kredan e c'haller aotren troiennoù evel e vreur en deus e wclot, hogen ar c'hiz wenedek, e vreur en deus eñ gwclot, a zo "reizhistorel", evel a lavar G.Pennad, ha ne dle ket bezañ berzet.

Ha ne dleer ket berzañ troiennoù evel selaouit eñ, reizhistorel ivez, eñ o vezañ renadenn ar verb en doare-gourc'hemenn. Arabat avat lakaat ur varrennig-stagañ etre selaouit hag eñ. Lakaat ur varrennig hepken pa zeu ur raganv-gour-muiaat war-lerc'h ar verb ; evel-se e tiforc'her selaouet-eñ (= ra selaouo) diouzh selaouet eñ (= ra selaouo anezhañ).

Kudenn ar raganv-diskouezañ hen, a vefe e gwirionez gwelloc'h skrivañ henn, a zo rouestlet-kenañ. E brezhoneg-bremañ, n'eus mar ebet ez eo ar ger-se a gaver en evel-hen, betek-hen (am eus klevet atav distaget /bete'ken/), ha gwelloc'h e vefe skrivañ evel-henn, betek-henn (bete-honn a vefe reishoc'h c'hoazh).

N'eus ket tu avat da brouiñ start ez eo ar raganv-diskouezañ-se a gaver a-wechoù dirak ur verb. Er skouer B.n.437 da pep quantel en azeule euel doe hac enn auoe, ar ger enn evel ar ger en a zo raganv an trede gour unan gourel, o-daou o tennañ d'an anv doe (keñveriañ B.n.459 auoeaff honn doeou, ha skouerioù all roet em Geriadur Istorel).

Ur fazi eo eta, a gredan, ar c'hiz nevez, lakaat henn dirak ur verb. Ar frazenn aes eo henn ober a gavan direizh. Ma ne garer ket skrivañ aes eo e ober (an doare reizhistorel), ez eo gwelloc'h skrivañ aes eo (h)en ober, un trefodadur deuet boutin adalek kreiz an 18-vet kantved. (Ha na zisoñjit ket ez eo aesoc'h a-wechoù, ha brezhonekoc'h marteze, lavarout hepken aes eo ober pe aes eo da ober).

Evit pozh a sell ouzh hen-ha-hen, reishoc'h e vefe marteze skrivañ henna-henn ; ivez, reishoc'h skrivañ hounna-hounn eget houn-ha-houn (pe c'hoazh honna-honn).

(Gwelout a reer pegen diaes eo reizhañ ur yezh. A reizhadenn da reizhadenn e teuer da gemmañ meur a dra, ha da lakaat rouestl e sigur lakaat urzh. Lennet em eus tu bennak e oan-me unan eus "reizherien" ar brezhoneg. Ma'm bije klasket reizhañ, em bije kemmet doare-skrivañ kalz gerioù, hag eilpennet darn eus reolennoù ar yezhadur, rak abaoe pell em eus merzet e oa anezho "euzhadennoù". Tud 'zo o deus rebechet din bezañ re lent d'ober "gwellaennoù" en doare-skrivañ hag er yezhadur. An diskoacherien-euzhadennoù a wel alies, siwazh, ar merien, ha ne welont ket an olifanted o tripal e-kreiz park ar brezhoneg. Fur eo, a gav din, mirout ar yezhoù lennek evel m'int bet aozet gant rummadoù geriadurourien ha yezhadurourien, pep rummad o lezel warno merk e gredennoù hag e vrizhkredennoù).

Echuiñ a ra G.Pennaod e bennad gant "prosez anezhañ", da lavarout eo an araogenn a stag outi ur raganv-gour, implijet evel renadenn eeun ur verb : me a wel anezhañ.

An doug da ober gant un araogenn da verkañ pe da harpañ un akuzativ a weler e yezhoù all, da skouer a e spagnoleg ha pe e roumaneg. Nemet implijet e vez an araogenn neuze dirak rummoù anvioù 'zo. Ne vez ket implijet, ma ne fazian ket, dirak anvioù-gour. Un trefocadur e c'hell bezañ, dibaot e krennvrezhoneg, diazezet-mat e Leon hag e Tregar adalck derou an 18-vet kantved, dianav e Bro-Wened. Pounner eo, hogen aes ha sklacr. Talvoudus em eus kavet a-wechoù e implijout (pe "implijout anezhañ) em Geriadur Brezhonek evit spisaat an diskleriadurioù.


Kalz am befe da lavarout diwar-benn ar pennadoù all, dreist-holl diwar-benn notennoù ar "Greizenn Imbourc'h Sturyezhouriezh", rak "LAVAR 03" a zo unan eus ar pouezusañ labourioù yezhoniezh embannet en amzer-mañ. Tro am bezo marteze da venegiñ poent pe boent diwezhatoc'h.

PREDER

Setu ivez embannet gant PREDER, taol-ouzh-taol : Arcizh 04 (kaier 111), An Ardivink Denel, Rann 1, gant Gab Cherel (112-113), Manifesto ar Strollad Komunour Marx hag Engels, troet gant G.Etienne (114), An Ardivink Denel, Rann 1, kendalc'h (115-116), "Populorum Progressio" Paol VI, troet gant Jil Ewan (119-120).

Danvez-lenn ha danvez-studi e-leizh.

(PREDER, 12 niverenn, 45 lur : M. G.ETIENNE, CCP.Paris 16 093 13).



AN AOZADUR GLADDALC'HEL
(kendalc'h)

troet diwar
Istor Breizh

La Borderie
(Levrenn III)

3. Brastres ar savadur gladdalc'hel

Kalz istorourien ne fell dezho gwelout er renadur gladdalc'hel, dreist-holl e kevrennadur an dalc'hioù-douar, nemet rouestl ha froudenn. Ur fazi eo.

Anat eo ne voe ket a raktres, aozet, treset war ur gartenn, statudet ha lakaet da dalvezout en un taol, evel kevrennadur Frañs e departamantoù gant ar Vodadenn-Reizhaduriñ. Hogen ne voe ket graet pep tra dre zegouezh, pell ac'hano : bez' e voe pennsturioù, brasvennadoù a bolitikerezh, a benngadouriczh, a zercadelezh, a voe sentet outo peurliesañ, hag a lakaas er pezh a scllant bezañ dizurzh muioc'h a wir urzh eget na greder.

A-hed an harzoù

Evit pezh a sell ouzh Breizh, ar pep retañ oa krouiñ er reter, diouzh tu Bro-C'hall, ul linennad-cnzifenn greñv da herzel ouzh tagadennoù Normandia, Men, Anjev ha Poatev.

Hed-ha-hed an harzoù, e ranked aozañ dalc'hioù-douar bras ha galloudus, ar berc'henned anezho mistri war galz tud ha kalz domanioù, evit bezañ gouest da sevel kreñvlec'hioù meurdezus, da zastum bagadoù-brezel stank e berr amzer, da vezañ prest atav da ziarbenn an argader.

Ma ne vije bet nemet dalc'hioù-douar dister a-hed an harzoù, e vije bet o mistri peuzdieub, gwarizi etrezo, ha tenn e vije bet o unaniñ evit kenstrivañ a-gevret. Buan e vije deuet an enebour a-benn da doullañ al linenn.

Acs avat e oa lakaat pemp pe c'hwec'h baron galloudus d'en em glevout, pa oa o gounid bezañ holl diouzh un tu. O aotrouniezhoù bras, a-hed an harzoù evel ur gourizad gwikadelloù kreñv, a dlee ober ur gael da chom divrall dirak an alouber.

Ret e oa ouzhpenn fiziout ar gwikadelloù-se, - da lavarout eo an aotrouniezhoù bras, - e tud a vije feal

da Vreizh atav, daoust da bep arnod. Broioù Naoned ha Roazhon, ar re end-eeun a oa war an harzoù, ne c'ant bet staget ouzh Breizh nemet e diwezhañ hanterenn an 9-vet kantved. Ha buan a-walc'h da c'houde, e oa deuet aloubadeg vras an Normaned, hag e oa bet torret pe aet laosk al liamm. Abeg oa da zoujañ eta na vije ket gant poblañs an toledoù-se ur spered a vrogarantez hag a vrezhoned ken taer, ken bev, ken diorroet ha gant poblañs kornog al ledenez, diskennet war-eeun eus ar Vrezhoned deuet eus Encz-Vreizh er 6-vet kantved.

An tu nemetañ da ziarbenn ar riskl-se oa lakaat e penn an dalc'hioù-douar a-hed an harzoù, ha dre vras e penn an holl zalc'hioù-douar a bouez e kontelezhioù Roazhon ha Naoned tud a wad brezhon-rik deuet eus ar brezhonegva. An dud-se, diazezet gant o c'herent hag ambrougerien niverus, gwizien ha gwarezidi, a beursankje er rannvroioù-se, ma n'eo ket ar yezh, da vihanañ boazioù, buhezegezh, lezennoù ha dreist-holl karantez virvidik ar vammvro vrezhon. Er c'heñver-se, ne vije mui a ziforc'h etre Goueled ha Gorre Breizh.

Hag ar pourchasoù-se eo, e gwirionez, a voe graet hogozi e pep lec'h pa voe aozet an dalc'hioù-douar a-hed an harzoù gant an duced.

Reolennoù-diazez dalc'hioù-douar ar Reter

Ha setu amañ c'hoazh un nebeut reolennoù heuliet peurliesañ evit aozañ an dalc'hioù-douar-se.

Alies ez eus bet lavaret e oa ledenez Vreizh heñvel ouzh penn ur manac'h : touz e-kreiz, blevek tro-war-dro. Pinvidik ha strujus eo an arvor ; an diabarzhvro, er c'hontrol, a zo, hag a oa muioc'h c'hoazh en 11-vet kantved, war-lerc'h aloubadegoù an Normaned, leun a zouaroù, a lanneier hag a goadeier difrouezh, ha poblet-rouez eta.

Dre se e oa ret d'an duced krouiñ eno dalc'hioù-douar bras-ec'hon. Rak piv en dije asantet kemer al lec'hioù digenvez-se, rannet e toledoù munut ? An dud kalonek, kas-war-raok, a samme warno ar garg da adenaouiñ er gouelec'hioù-se ar vuhez, al labour, an douarc'hounezerezh, ar sevenadur, a ranke kaout dindano, - dindano un dorn hepken, - an holl nerzhioù, an holl oberiusteroù a c'halled dastum en tachenoù-se, ken bras ha ken treut.

En arvor e oa kalz strujusoc'h, kalz frouezhusoc'h an douar. Ne oa ket rekis d'un domani bezañ ec'hon evit bezañ pinvidik. Setu perak, evel a welimp, e oa peurluviañ kalz brasoc'h aotrouniczhoù an diabarzh eget ar re a-hed an aodoù.

Diwezhañ poent : en ur aozañ an dalc'hioù-douar, e sellas an duced, - gant reizh, - ouzh ar c'hresk a c'hallje dont d'o galloud ha d'o beli. Pa savjont dalc'hioù-douar bras e diabarzh al ledenez ha war an harzoù evit difenn Breizh, e taoljont evezh da lakaat etrezo domanioù a chome en o c'herz, pe c'hoazh dalc'hioù-douar bihanoc'h,

war-eeun dindano. Perc'henned an dalc'hioù-douar bihan-se, gant aon da vezañ gwasket gant o amezeien c'halloudus, a rankje goulenn gwarez digant an dug, hag a vije diouzh ret kevredidi feal dindanañ a-enep e wizien vras.

Kent gwelout penaos e voe lakaet ar pennsturioù-se da dalvezout evit aozañ an dalc'hioù-douar, greomp un daolenn eus kevrennoù gladdalc'hel bras an dugelezh.

"Levr an Armeoù"

Bez' ez eus un daolenn hollek eus gladdalc'helezh Vreizh, anvet gant an istorourien vrezhon "Levr an Armeoù", ennañ roll an deverioù hag ar servijoù-brezel dleet d'an dug gant e wizien bennañ, kinniget d'an dug Yann II e Plouarzel-Breizh-Uhel e 1294. Kalz gwizien n'o doa ket respontet, ha kalz toulloù goullo a zo eta en daolenn. Ar stern avat, hep bezañ leun, a zo klok an holl bennlinennoù anezhañ, ha treset-reizh eo. A dalvoudegezh stadel eo zoken an daolenn-se, rak dont a ra eus kañsellerezh an dug. Dre se ez eo prizius evit merkañ pizh kevrennoù gladdalc'hel bras ar vro. Daoust dezhañ bezañ bet savet diwezhat a-walc'h, e vo gwelet bremaik e oa krouet ar c'hevrennoù bras-se endeo, hep mar ebet, en 11-vet kantved.

Breizh a-bezh a zo rannet en daolenn-se en eizh beliezh vras. Ar ger "beliezh" amañ a zo domaniel ha gladdalc'hel e ster kentoc'h eget barnerezhel.


Pep beliezh a zo ar bastell-vro ma toug enni an holl zalc'hioù-douar hag aotrouniezhoù war-eeun dindan an dug gwazonezh d'ur sez hepken, da lavarout eo d'al lec'h ma emañ al lez dugel pennañ.

Setu amañ an eizh beliezh meneget e "Levr an Armeoù":

- | | |
|---------------------------|-------------|
| 1. Roazhon. | 5. Kernev. |
| 2. Plouarzel-Breizh-Uhel. | 6. Leon. |
| 3. Naoned. | 7. Treger. |
| 4. Bro-Wereg. | 8. Penteür. |

Ar beliezhoù-se, eus 1294, a ra dres kontelezhioù bras Breizh en 11-vet kantved :

Kontelezh Roazhon ha beskontelezh Pourc'hoad,
Kontelezh Naoned,
Kontelezh Wened pe Vro-Wereg,
Kontelezh Kernev,
Kontelezh Leon,
An div gontelezh a rae dalc'h-yaouaer ec'hon Penteüs.



- taol-kaer g. meurober sevenet dre gadarnded pe ampartiz, hv.kur.
- taol-kefridi g. oberiadenn graet evit seveniñ ur gefridi.
- taol-kont g.; en un taol-kont buan ha dic'hortoz, trumm.
- taol-lagad g. 1. sell prim. 2. arvest en em zispleg trumm dirak ar sell.
- taol-lonk g. lonkadenn drumm.
- taol-micher g. tra oberiet gant kalz ampartiz vicherel.
- taol-mouezh g. (Soniadouriezh) kreñvadur pe uheladur-ton ar vouezh war un darn (prl. ur vogalenn) eus ur ger pe ur frazenn.
- taolmouezhiañ v. lakaat an taol-mouezh (war un darn eus ur ger pe ur frazenn).
(+ taolmouezhiadur, taolmouezhierarchy).
- taol-nerzh g. 1. ober sevenet dre nerzh, dh. gant un den evit diskouez e nerzh. 2. taol (hvz ar ster 3) graet dre nerzh a-enep al lezenn, da sk. evit tizhout ur pal politikel.
- taolpenn g.-où an darn eus ur blantenn a sav eus an douar hag a zoug an delioù, ar bleunioù, ar frouezh, hv.korzenn, garenn, solenn.
- taol-red g. an hed hent graet en ur redadenn ;
en un taol-red buan hag hep chom a-sav.
- taol-reverzhi g. tarzhioù-mor o sevel trumm hag oc'h aloubiñ an douar.
- taol-reveulzi g. taol (hvz ar ster 3) graet evit degas reveulzi en ur vro.
- taol-rost g. rostadenn re brim eus ur meuz pe darn eus ur meuz lakaet re dost d'an tan pe war un tan re leskidik.
- taol-sav g. taol-c'hoari graet war-lerc'h un taol-c'hoari all, oc'h uhelaat ar skodenn lakaet gant pep c'hoarier.
- taol-sell g. selladenn.
- taol-skarzh g. 1. krog graet gant an troad (e-doug un abadenn-c'houren da sk.) evit lakaat an eneber da gouezhañ. 2. (Politikerezh) al lemel o c'harg digant tud a c'hell noazout ouzh ar re a zalc'h ar veli.
- taol-skoaz g. (dre skeudenn-lavar) tra graet evit skoazellañ.
- taol-strap g. taol (hvz ar ster 3) graet a-enep al lezenn evit diskar beli ur mestr, ur rener, ur gouarnamant h.a.
- taol-tourt g. taol (hvz ar ster 2) roet gant ar penn pe gant un dolzenn bounner, prl. evit freuzañ udb.
- taolva g.-où al lec'h ma taoler dioutañ (un arm-brezel, da sk.).
- taol-yud g. taol (hvz ar ster 3) graet dre drubarderezh.

- II. taol gg. -ioù pezh-arrebeuri, anezhañ ur bladenn douget gant un troad pe dreid.
- taol-bask gg. taolioù-pask aspled en un iliz, dirak un aoter, ma taouliner outañ evit komuniañ, hv.taol-sakr, taol-santel.
- taol-emwalc'hiñ gg. taol, warni an traoù ret evit en em walc'hiñ.
- taolenn gg. -où 1. pladenn e koad, maen, metal h.a. 2. skeudenn livet war ur gorread plat (lien, koad h.a.). 3. pladenn pe follenn merket warni titouroù, sifroù h.a., renket en doare da vezañ kavet aes ha buan.
- taolennad gg. -où 1. endalc'h un daolenn. 2. ar pezh en em zispleg dirak an daou-lagad evel pa vefe livet war un daolenn.
- taolennaoueg gg. -où dastumad taolennoù (dh. hvz ar ster 2).
- taolenn-douaroniezh gg. taolenn skeudennet warni an Douar pe un darn anezhañ, hv.kartenn-douaroniezh.
- taolenn-eñvor gg. taolenn (hvz ar ster 1) lakaet e lec'h pe lec'h evit derc'hel eñvor un den, un darvoud h.a.
- taolenn-feurioù gg. taolenn (hvz ar ster 3), warni, pe levr, ennañ feurioù pe jedadennoù ragaozet.
- taolenniñ v. 1. merkañ, tresañ, livañ h.a. (udb.) war un daolenn. 2. displegañ gant komzoù perzhioù (udb.) en doare ma c'hell ar selaouer pe al lenner ober ur skeudenn eus an dra en e spered, hv.skeudenniñ, livañ, diskrivañ. (+ taolennadeg, taolennadenn, taolennadur, taolennerezh, taolenniñdigezh, taolenner).
- taolenn-jediñ gg. taolenn (hvz ar ster 3) aozet en doare da aesaat jedadennoù.
- taolenn-lieskementiñ gg. taolenn (hvz ar ster 3) a ziskouez disoc'h lieskementadur an niveroù daou-ha-daou, prl. eus 1 betek 12.
- taolenn-skeudenn gg. pajenn pe follenn en ul levr, warni ur skeudenn pe skeudennoù.
- taol-gont gg. taolioù-kont taol (en ur stal, ur burev h.a.) evit kontañ arc'hant ha lakaat marc'hadourezh.
- taoliad gg. -où 1. hollad an traoù a c'holo un daol. 2. hollad an dud azezet ouzh un daol.
- taol-noz gg. taol vihan a lakaer e-kichen penn ur gwele.
- taol-sakr gg. evel "taol-bask".
- taol-santel gg. evel "taol-bask".

- taol-vaen gg. taoliou-maen savadur meurvaenel, anezhañ ur maen lakaet a-blad war vein a-sonn, hv.ti-korriganed.
- taour sl.dindan taoegezh.
- taos g.-où kementad arc'hant a ranker paeañ da gef ur Stad, ur rannvro, ur gêr h.a., da sk. pa vez prenet pe werzhet marc'hadourezh, hv.tell, tailhoù.
- taosañ v. lakaat un taos (war udb.). (+ taosadeg, taosadenn, taosadur, taoserezh, taosidigezh, taoser).
- taotologienn gg.-où adlavar un dra gant gerioù disheñvel. (+ taotologek).
- taouarc'h as. (un.-enn) douar leun a wrizioù louzeier a bep seurt, implijet evit ober tan.
- taouarc'ha v.-et dastum taouarc'h.
- taouarc'heg gg.-i,-où lec'h leun a daouarc'h.
- taouarc'hek ag. leun a daouarc'h.
- taouledet ag. (db.frouezh) re azv, deuet blot hag o teraouiñ breinañ, hv.pezhell, youst, fouist.
- taouliñ v. 1. (db.frouezh) mont pe lakaat da vont taouledet. 2. (db.dilhad) fallaet dre hir implij, hv.teuc'haat, uzañ.
- taouz as. (un.-enn) (Quercus ilex) doare gwez-derv, gant delioù padus.
- tap ag. tapet, touellet.
- tapout v. 1. kemer buan, kregiñ buan (en udb.), hv.pakañ. 2. touellañ. 3. bezañ tizhet (gant ur c'hleñved), hv.serriñ, pakañ. (+ tapadeg, tapadenn, tapadur, taperezh, tapidigezh, taper).
- tapad g.-où evel "tapenn".
- tapenn gg.-où boullig a zistag diouzh un dourenn, hv.sl.takenn.
- tapenniñ v. kouezhañ tapenn-ha-tapenn. (+ tapennadur, tapennerezh).
- tapeled g.-où darn uhelañ un davanjer, a c'holo ar bruched, hv.pateled, barvetenn, butunalenn.
- tapeledenn gg.-où evel "tapeled".
- tapioka g. danvez-boued greunheñvel graet gant gwrizioù maniok.
- tapir g.-ed (Tapirus) loen bras pevarzroadek, kar d'ar frikorneg, gant ur moj berr hag hebleg, a vev e Suamerika.
- tapout sl.dindan tap.
- tarabazh gg. tarabizhier doare strakerez implijet gwechall er manatioù evit dihuniñ ar venec'h.
- tarabazhiñ v. tregasiñ, hegasiñ.
- taran g. trouz a sav da heul an tan-foeltr, hv.kurun.
- taranad g.-où taol taran.
- taraned ls. flammoù gwelet a-wechoù en noz, dh. er geunioù, hv.sl.tan-foll.
- taraniñ v. 1. ober taran. 2. (dre vras) ober kalz trouz.

- taranoù ls. froud-dour a ra kalz trouz o redek dre reier ha mein.
- taras g.-où 1. gwiskad kramenn pe loustoni. 2. douar gleb ha pegus, hv.kailhar, bouilhenn.
tarasennet ag. goloet gant taras.
tarasiñ v. saotrañ gant taras.
tarasour g.-ien micherour a ra fall e labour.
- tarav g. an taravat.
taravat v. lakaat (udb.) da dremen meur a wech war un dra all, en ur waskañ, hv.rimiañ, frotañ, ruzañ. (+ taravadur, taraverezh).
taraver g.-ioù benveg pe ardivink evit taravat.
- tarchelad g.-où danvez pareüs astennet war ul lienenn, da lakaat war un darn glañv eus ar c'horf.
- tarc'hwezhañ v. chom nec'het o c'houzout petra ober, hv.termal, argrediñ, tortañ, marc'hata, soetiñ. (+ tarc'hwezherezh, tarc'hwezher).
- taread g.-où darn, kevrenn (douar h.a.).
- tarentellenn gg.-où 1. koroll fringus eus kreisteiz Italia. 2. ton-sonerezh o klotañ gant ar c'horoll-se.
- tarentolenn gg.-ed (Lycosa tarantula) doare kevrenn vras kavet e kreisteiz Europa.
- targazh g. targizhier par kazh.
- targos g.-ioù evel "tagosenn".
- tariell gg.-où 1. aridennad komzoù diboell. 2. kontadenn.
tariellañ v. dibunañ tarielloù.
(+ tariellerezh, tarieller).
- tarin g.-ed 1. par labous. 2. (diardoù) den a bouez.
3. (diardoù) den dic'hrad, dic'hras.
tarinenn gg. den pe dra a bouez.
- tarkad g.-où taol distaget war jod ub., hv.sl.stlafad.
tarkadañ v. reiñ un tarkad (da ub.).
- tarlask as. (un.-enn) amprevaned eus rannad an akarided, a beg ouzh kroc'hen al loened evit sunañ o gwad, hv.porailhed, boskarded, tilhed, tarrag, megeled.
tarlaskat v. en em zifretañ en ur skrabañ e gein ouzh e zilhad. (+ tarlasker).
- tarlipat v. 1. tremen an teod war udb., hv.lipat, leat.
2. evañ gorrek, a lonkadennoù bihan.
(+ tarliperezh, tarliper).
- tarner g.-où tamm gwiadenn implijet evit sec'hañ, naetaat h.a., hv.torchouer, sec'her.
- tarod g.-où kartenn-c'hoari eus ur rummad 78, italiat a orin.
- tarrag as. (un.-enn) evel "tarlask".
- tarroz g.-ioù torgenn serzh, hv.krapenn.
- tartez as. (un.-enn) pasteziou enno frouezh, koñfitor h.a.
- tartouz g.-ed 1. amprevan (meur a rummad anezhañ) a grign an dilhad, ar pallennoù, ar foulincenoù h.a., hv.gaozan, preñv-dilhad, preñv-mezher. 2. (dre skeudenn-lavar) den kintus.
tartouzañ v. bezañ krignet gant tartouzed.
(+ tartouzerzh).

 AR MENGLEUZIAÑ EN IWERZHON DIEUB

gant Alan Heusaff

Ur rummad studierien eus Skolaj an Dreinded, Dulenn, o deus kaset da benn un enklask pervezh diwar-benn ar mengleuziañ en Iwerzhon. An disoc'h a zo embannet en ul levrig talanvet "Irish Mining - The Need for Action". Da eilanv eo merket : "A Case Study of Exploitation", studi ur gorvoadeg !

Mennad ar Strollad Enklask-Fonnderioù a zo lakaat pobl Iwerzhon da c'houzout pegen puilh eo an teñzorioù a zo bet nevez dizoloet er vro, ha penaos emañ ar binvidigezh vroadel-se o redek er-maez hep bout degaset nemeur a splet dezhi.

Ar c'hompagnunezhioù a zo aotreet da duriellat douar Iwerzhon ha da dennañ ar c'hailh-metel a zizoloont a zo hogozik holl e dalc'h estrenien. Chomet int sioul goude embannidigezh al levrig. Ne blij ket dezho ar bruderezh-se en-dro d'o oberiadenoù.

Pell oa e roed da grediñ da Iwerzhoniz e oa dister kondoniad kailh-metel ar vro. Abaoe 1958 avat ez eus bet tennet tost da zek milion tonennad kailh plom, zink, kouevr hag arc'hant en holl. War a jeder, e chom da vihanañ 50 milion tonennad da dennañ c'hoazh. Nepell diouzh Luimneach (Limerick), e Silvermines, emañ bremañ brasañ mengleuz-zink dindandouar Europa. Hag e kontelezh Gaillimh (Galway) emañ brasañ plomgleuz Europa. En Iwerzhon emañ arc'hantkleuz kenderc'husañ hag unan eus brasañ kouevrgleuzioù Europa. Ar pempet brasañ mengleuz arc'hant-bev eus ar bed a zo e Gort Droim, e Tibrad Arann.

Peseurt gounid a denn Iwerzhoniz eus kemend-all a fonnder ? Pádraig Pearse a gelenne he deus pep broad ar reizhveli glok war he madoù-natur, e tlefent eta talvout da greskiñ pinvidigezh ar boblañs.

Padal, en Iwerzhon emañ an ezc'hwiliañ hag an eztennañ kailh-metel e-kerz hag e dalc'h un hanterdousenn a gompagnunezhioù norzamerikat. N'eo ket er vro e vez teuzet ar c'hailh, na kentoc'h-meiz treuzfurmet ar metal rik gounezet diouto.

Hervez ar studierien-mañ o devo rozellet an estrenien etre 250 ha 300 milion lur sterling etre kreiz ar bloavezhioù tri-ugent ha derou ar bloavezhioù pevar-ugent.

Hervez al lezenn degemeret e 1967 evit dedennañ ar c'hompagnunezhioù etrevroadel, n'o devo ar re-se an disterañ tell da baeañ war ar gounidoù marzhus-se.

N'eo ket hepken war dachenn ar mengleuziañ ez eo treantet armerzh Iwerzhon gant an arc'hanterezh etrevroadel. An arigrap m'emañ stardet ar mengleuziañ ennañ a zo o pakañ gennadoù all eus buhez ar vro. Kendoniañ a ra se gant sturienoù an embregerezh "dieub". P'emeur da vat o klask digor ar C'honvarc'had, n'our ket tuet-kaer da vroadelañ ar greanterezh nevez.

Istor ar metalgleuziañ en Iwerzhon a grogas da vat er 17^{vet} kantved. Keit ha ma voe ar vro dindan veli ar Saozon, e tennjod mad eus he c'hleuzioù-kailh er feur ma teree ouzh ar vistri ebrel just. Arabat e oa lezel ar vroiz da reiñ lañs d'ar greanterezh-se.

E-pad dekvedoù kentañ ar Stad Dicub, e voe pledet d'an tennañ taouarc'h ha glaou, kentoc'h eget d'an tennañ kailh-metal. An imbourc'hoù a voe kaset da benn a voe digalonckaus, re goustus evit ur vro hep kevala.

Ne zisklerias biskoazh gouarnamant Dulenn ez eo fonnderioù an douar-kondon tra ar bobl iwerzhonat en he fezh. Gant un akta a voe degemeret e 1940 a-zivout ar mengleuziañ e voe degaset kemm e tri c'heñver : a) an douar a chomfe ar c'hondon anezhañ e piaou ar Stad, an hini prenet hiviziken digant an dierned (landlords) hag adwerzhet da gouerien ; b) an aotre da ezc'hwiliañ, e sell da gavout kailh-metal, a vije diforc'h diouzh an aotre da embreger ar c'hailh ; k) pa vije kavet kailh-metal, he dije ar Stad galloud da breñañ an dachenn digant he forc'henn e sell da vengleuziañ. Ur wech roet aotre d'ur gompagnunezh da dalarat, n'hallje ket ar perc'henn mirout outi d'hen ober.

Al lezenn-se a roe galloud bras-konañ da Vinistr ar Greanterezh e-keñver ar gounit-kailh-metal. Da zibab a oa etre daou hent : reiñ lañs d'ur greanterezh-Stad eus ar c'hailh-metal (an hent-se a oa bet dibabet evit an tredan hag an taouarc'h); pe reiñ an emell d'ar c'hompagnunezhioù estren.

Arthur Griffith, ha na oa tamm ebet ur sokialour, en doa erbedet diorren ur gevalaouriezh vroadel. Ret e vije bet herzel ouzh arboelloù Iwerzhoniz a vont er-mac eus ar vro. Lavaret e vo ne oa ket tu d'ober an dra-se hep d'ar gouarnamant kontrollañ start an armerzh a-bezh, hag e oa diaesterioù all o tont diwar rannadur ar vro. Ha gallet o dije c'hoazh kevalaourien ur vro vihan chom pell dizalc'h diouzh ar gevalaourien etrevroadel ?

N'eo ket an hent-se a voe dibabet. Spisaet e voe gant S.Lemass (an den galloudusañ e Fianna Fáil goude De Valera) e 1947 e oa an eztennañ-kailh da gentañ-holl afer an embregerezh prevez. Koulz e vije bet dezhañ lavarout an embregerezh prevez estren.

Savet e oa e 1947 ar gompagnunezh-Stad karget da ezc'hwiliañ, da glask fonnderioù-kondon a-hed hag a-dreuz Iwerzhon dieub, ha d'o c'henderc'hañ. Ober a reas war-dro ar fosfat, ar pirit hag ar glaou, ha tra ken. E 1955 e tizoloas avat kailh-kouevr e-leizh en Avoca, e gevred Iwerzhon. Kinnig a reas lezel ur gompagnunezh prevez da gas da benn an eztennañ. Gant arc'hant ar bobl, ar baerien-dailhoù, e oa bet dizoloet un teñzor, met profet e oa d'ar re o doa arc'hant a-walc'h evit e zi-c'horren. Evit atizañ c'hoant ar gompagnunezh kanadaat "International Mogul Mines", e voe kinniget reiñ divec'h-tailhoù dezhi a gant dra gant war ar gounid a raje e-pad

ar pevar bloavezhiad kentañ eztennañ, hag a 50% e-pad ar 5 bloaz da heul. Kenlezet e voe ganti mengleuzioù Avoca war-hed 21 bloaz, evit un hanter vilion lur sterling, hag etre 4 ha 9% eus ar gounid da reiñ d'ar Stad.

Hervez Lemass, a oa d'ar mare-se er-maez eus ar gouarnamant, ne oa ket bet klasket kavout ur gompagnunezh iwerzhonat d'ober war-dro an eztennañ. Iwerzhon a oa neuze e-kreiz ur c'houzizenn armerzhel, ar c'hevala broadel er par izelañ. Petra voe graet neuze, nemet digeriñ frank an nor d'ar c'hompagnunezhioù estren. Dija e oa bet roet aotre spesiel da 276 kompagnunezh estren da oberiañ en Iwerzhon. Diwar neuze, avat, e krogas ar c'hompagnunezhioù-mengleuziañ etrevroadel da astenn o c'hrog war Iwerzhon. A-barzh un nebeut bloavezhioù, e oa kontrollet-klok an dachenn ganto. Distaolet-krenn e voe ar bennsturienn embannet gant Pearse, hini ar reizhveli vroadel war ar fonnderioù danvezel.

Hervez Lemass, ec'h engouestlje Mogul 2½ milion £ evit ragaozañ an eztennañ en Avoca. Goude ur bloavezhiad eztennañ e vije adc'hounezet an dispignad-se ganto, o lakaat e oa gwerzhet £240 an donenn gouevr. Dastum a raje ar gompagnunezh en holl etre 10 ha 13 milion £ diwar varc'hadañ ar c'houevr hepken. Bez' e oa zink, plom, sulfur hag all c'hoazh. Ha kreskiñ a reas ar prizioù. An holl c'hounid-se, war-bouez ar goprou paeet d'ar vicherourien, hag an dregantadig kaset d'ar gouarnamant, a zo aet er-maez eus ar vro hep diskontañ an disterañ telloù.

Bloaz goude ma oa kroget Mogul da rastellat arc'hant en Avoca, e oa Lemass e penn ar gouarnamant, hag e-lec'h lakaat skoilh d'ar werzhidigezh, ez eas houmañ war vuanaat. E sigur ober pep tra evit reiñ labour da Iwerzhoniz en o bro, e voe lamet pep strishadur war ar c'hompagnunezhioù-mengleuziañ.

Ha setu ur gevredigezh nevez savet e Toronto, "Northgate Exploration Ltd.", o tapout krog er bevez. Gant nebeutoc'h eget tri bloavezhiad ezc'hwiliañ hag un dispign a zaou pe dri c'hant mil £, e tiskoachjont ur gwelead fonnus a blom, zink, Kouevr hag arc'hant e Tynagh, kontelezh Gaillimh. E 1966 e tenne Northgate, dindan an anv "Irish Base Metal Ltd.", 2.000 tonennad a gailh bemdez.

Abaoe 5 bloaz o deus dastumet 15 milion £ a splet. Emañ ganto ar vestroniezh e mengleuz kouevr/arc'hant/arc'hant-bev Gort Droim; lodek int evit 70% er gompagnunezh teuziñ-kailh nevez savet e sell da dreuzfurmiñ ar c'hailh en Iwerzhon; hag emelladoù a 10% o deus e kompagnunezhioù estren all oc'h oberiañ er vro.

Abaoe 1968, emañ mengleuz dindandouar Silvermines da gentañ en Europa evit kenderc'hañ zink. 75% eus ar c'hevrennoù a zo dalc'het gant Mogul (Kanada), ar peurrest gant ur gompagnunezh hag a seblant bout renet gant Iwerzhoniz, met a zo ken estren an darn vrasañ eus he c'hevrennidi ha re Mogul pe Northgate. Teurel a ra 3.000 tonenn bemdez. Fonnusoc'h eo he gweleadoù eget re Tynagh, bravoc'h e vo ar gounid.

Heñvel eo ar gont e lec'h all : Kanadaiz e Gort Droim, Yankied e Ballynoc, hag e Bennetsbridge. E-kichen Tara ez eus bet dizoloet gwelloc'h c'hoazh eget e Tynagh, war a seblant. Iwerzhoniz an darn vrasañ eus ar "renerien" (direktored !), met n'eo ket anat c'hoazh piv ar gwir berc'henn ha mestr.

Moarvat e vo dizoloet gweleadoù bras bep 4 pe 5 bloaz hiviziken. Eus an 19.000 km² ezc'hwiliet etre 1958 ha 1970, hgozik an hanter a zo bet graet gant Northgate hag o skourroù. Hgozik an holl a zo e dalc'h estrenien. Buanoc'h-buanañ e vez roet an aotroù-ec'hwiliañ da estrenien. Perak ne laka ket ar gouarnamant harz d'an dilamm-war-an-aour evit adprederiañ e vennadurezh diouzh ar sellboent broadel ?

Anv a zo da sevel ul labouradeg teuziñ-kailh evit ma c'hounezfe Iwerzhoniz un tammig muioc'h diwar ar fonnder nevez dizoloet. Douar a zo bet prenet e sell da se gant Northgate e-kichen Corcaigh. Ar gouarnamant a brestfe 7 milion £ evit al labourioù-diazez, daoust na rofe an teuziñ-kailh gourc'hwel nemet da war-dro 400 den. Spi a zo e pado al labouradeg-se da vont en-dro 40-50 vloaz, hag e tegaso ur bern greanterezh all d'he heul. Gant an teuziñ-kailh e vo daougementet talvoud an donennad vetal. Ma vefe gallet kas da benn an treuzfurmiñ betek rez ar c'henderc'hadoù peurechu, e vefe ugentkementet.

Padal, an teuzerezh a vo e dalc'h an hevelep rummad hag an eztennerezh. Ezporzhiet e vo ar metal rik evit pourvezañ labouradegoù pinvidik. Dija ez eo bet arveret o gounidoù iwerzhonat gant Northgate evit ezc'hwiliañ e Groenland.

Burutellerezh

Nevez 'zo e pellgomze unan eus merourien "Irish Base Metals" d'un den eus va anaoudegezh :

"Ha lennet hoc'h eus al levrig embannet gant ar studierien ?" a c'houlennas hemañ.

"Ya," eme egile, "met e pelec'h o deus kavet o sifroù 'ta ? Faltazi ar pep brasañ anezho !"

Va c'heneil a zisklerias ec'h anaveze mat unan eus ar studierien, hag e oa aet betek Zürich da ober an enklask.

"N'eo ket ur maour ?"

Mar goulenner ouzh ar C'hrenniwerzhonad petra soñj eus an doare ma vez foranet evel-se pinvidigezh ar vro, e lavaro marteze :

"Edo aze an holl amzer, ha ne oamp ket gouest da dennañ mad diouti. Arabat deomp klemm eta !"

Ar studierien a sell a-dost ouzh an abegoù digarezus. Gwir eo e oa risklus gwechall an imbourc'hiñ kailh-metal. Bez' e c'halle degas rivin ken buan ha fortun. Reizh e kaved eta lezel ar re a samme ar riskl da rozellat ar gounid pa gavent tro.

Hiziv an deiz e c'haller avat ezc'hwiliañ en un doare gouezh pervezh hep kaout da zispign e-leizh ha mont e riskl da c'hwitañ.

Lavarout a reer ne vije ket bet arc'hant iwerzhonat evit kas da benn an ezc'hwiliañ hag an eztennañ en derou ; ne oa ket a galvezourien ampart a-walc'h er vro ; e oa serret ar marc'hadoù ; e vez re a chal-dichal e prizioù ar metal ; ne vije ket bet efedus ar mengleuzierezh dindan vestroniezh ar Stad ; ez eo ret doujañ d'an embregerezh dieub.

An arguzennoù-se a zo disprouet pe diskredet warno gant ar strollad-enklask-mañ. Evit degas ar 6 mengleuz vrasañ d'ar par-oberiañ, ez eus bet dispignet nebeutoc'h eget priz tri c'harr-nij jumbo : 23 milion £. Gant an ezc'hwilierezh e voe dispignet 7 milion ouzhpenn. Kement-se astennet war ur skourrad a zek vloaz. E 1956 e lavare Lemass ne oa ket dic'hallus kavout ar c'hevala-se er vro.

E-leizh a Iwerzhoniz a zo o labourat gant kompagnunezhioù-mengleuziañ dre ar bed-holl. Ma ne zistrofe ket a-walc'h anezho, e vefe tu da amprestañ ijinourien er broioù all. Diaes e vefe moarvat lakaat ar re-se da rannañ o anaoudegezh hag ampartiz gant Iwerzhoniz, met gant an amzer e wellafe an traoù.

Gwir eo ivez ez eo diwallet-mat ar marc'hadoù gant ar c'hompagnunezhioù bras. Skouerioù Indonezia, Perou, Chili, Aljeria a ziskouez ez eus tu koulskoude da zerc'hel penn outo, diouzh ret dre adtresañ an darempredoù kenwerzhel gant ar broioù all.

Evit ar prizioù, pa'z a war greskiñ ar goulenn, e c'haller kontañ ne ziskenno ket priz ar plom hag ar zink ac'han da 1975 da vihanañ.

Ha gwir eo ne vez ket broudet an embregerezh-Stad da c'hounit kement hag an hini prevez, hag e vez ret alies d'ar baerien-dailhoù stankañ an toull er c'hef ? An holl gompagnunezhioù-Stad iwerzhonat, Tredan, Sukr, Taouarc'h, Aer Lingus, o deus marilhet gounidoù e-pad ar bloavezhioù 1969-70. Kemend-all a c'hounid evit ar vroad dre vras.

Gant an holl ardivinkoù arnevez, fiñvskeudennerez-karr-nij, muzulier direizhderioù e lanv magnetek an douar, muzulier skinobererezh ar c'hailhoù hag all, ez eus tu da gas ur raklun-imbourc'hiñ pervezh da benn a-hed hag a-dreuz Iwerzhon evit ken nebeut hag $\frac{1}{2}$ milion £.

Ar pezh a zo heverkañ er plegennoù a vremañ eo pegen nebeut dre gant eus talvoudegezh ar metal rik a chom en Iwerzhon da vataat an armerzh. Eus Tynagh ne chom nemet 28% goude kontañ pep tra : 44 milion £ hepken eus ar 166 milion a dalvoudegezh engehentet eno a sil en armerzh ar vro. Heñvel eo ar gont e Silvermines.

Mar kendalc'h evel-se, e sanko Iwerzhon e rez un drevadenn mod nevez da Gornog Europa ha Norzamerika. Ha da ziwall e vo, pa vo kalz micherourien e dalc'h ar c'hompagnunezhioù estren, e vo gouest ar re-mañ da bouezañ war he stadrenezh evel ma c'hoarvez e republikoù Suamerika.

Arc'hadurioù

"An arc'hant dastumet diwar ar fonnderioù-mengleuz a dlefe bout troet e stummoù kevala all a dalvoudegezh ken bras pe vrasoc'h, pergen en emstaladurioù greanterezh-diazez, hag e kenreizhadoù gremm, dezougerezh ha kehenterezh. Trezañ glad n'eo ken pa droer ar fonnderioù uhelderez diouzhtu en arc'hant da zispign, en ur o czporzhiañ." (Harrison S. Brown).

Tezenn ar strollad-enklask eo eta e tleer bremañ diouzhtu diazezañ ur greanterezh iwerzhonat war ar fonnderioù-kondon, dindan vestroniezh ar Stad, hag ober gant ar gounid da startaat sichenn ar greanterezh dre vras, en ur arverañ danvezioù kraai aes da zegas dre vor eus ar broioù all ivez. Evel-se hepken e vo trec'het d'an divroañ ha d'an dilabour (70.000 den dilabour a zo bremañ er 26 kontelezh, kement dre gant hag en Indez).

Ar strollad-enklask a c'houlenn :

Broadelañ ar mengleuzierezh en Iwerzhon, hep dic'haou d'ar c'hompagnunezhioù estren ; sevel ur gompagnunezh-Stad evit ezc'hwiliañ, eztennañ, teuziñ ar c'hailh ha gwerzhañ ar metal er-maez eus ar vro ; diazezañ al labouradegoù teuziñ-kailh, neket e Corcaigh, ma'z eus arvar da saotrañ re an aergelc'h hag an dour, met en unan eus ar rannvroioù gwalleget, en tu-hont d'ar stêr Sionainn (Shannon), er gouezelva marteze ; atizañ ar galvezourien iwerzhonat da zistreiñ d'ar vro, pe amprestañ kalvezourien-ijinourien er broioù estren, ha gourdonañ Iwerzhoniz en ur skol a vengleuzouriezh iwerzhonat.

Mar nac'h ar c'hevredigezhioù etrevroadel reiñ tu da ziorren ar mengleuziañ dre an hent-se, adprederiañ darempredoù etrevroadel Iwerzhon ha klask harp digant ar gouarnamantoù hag ar pobloù a vo prest da reiñ harp ha da zoujañ gwir Iwerzhon da biaoañ he finvidigezh vroadel.

En ur vodadeg foran aozet gant ur strolladig republikaned, ec'h addisplegas di-leuridi ar strollad-studierien ar mennadoù-se. Re abred eo moarvat evit lavarout ne vo ket muioc'h a geflusk da heul o flemmskrid. Ma ne sav ket avat rummadoù niverusoc'h eus ar boblañs da c'houlenn ar broadelañ, ne vo ket dav d'ar gorvoerien kaout aon. Paet o deus aotreoù, o gwir eo bremañ da leuniañ o godelloù ...

=====

SKINGOMZ HA SKINWEL . - Goulenn a reer brezhonegerien vat evit kenskrivañ gant studierien, ha barrek da reizhañ o lizheroù. Skrivañ da : "Skingomz ha Skinwel", 18-bis straed Duguay-Trouin, 22 SAINT-BRIEUC. Reiñ da c'houzout an danvezioù (lennegezh, sonerezh, sportoù h.a.) a blij ar muiañ.

AR MIZ (kendalc'h diwar ar b.92)

Betek-hen e veze meneget atav Helvetia evel ar Stad ma c'halle tud, dezho yezhoù disheñvel, bevañ e peoc'h, evit prouiñ "ez eo diskiant lavarout eo stag ar vroadelezh ouzh ar yezh". Hogen Helvetia n'eo mui skouer an demokratiezh ken meulet gwechall. Ouzhpenn kudenn ar yezhoù ez eus eno ivez kudenn ar gouennoù. Al labourerien estren, deuet niverus er blozvezhioù diwezhañ, a lavar e vezont gwasket, implijet e-giz chatal, ha graet o deus trouz nevez 'zo.

Aljeria Mui-ouzh-mui e fell da Aljeriz en em zieubiñ diouzh an emglevioù sinet etre o bro ha Frañs. E dibenn miz C'hwevrer e tivizas gouarnamant Aljer kemer 51% eus kenlodennoù an tireoul, o lezel 49% hepken gant ar c'hompagnunezhioù estren (gall dreist-holl). Kaout 49% hepken ne dalvez ket da galz, ha gwelloc'h e vefe gant ar C'hallaoued dilezel pep tra ha bezañ digollet.

Kaset e voe (26 C'hwevrer) un notenn gant gouarnamant Pariz da Aljeria oc'h enebiñ ouzh "untuegezh" an diviz.

Libia Libia, evel Aljeria, a c'houlenn uheloc'h priz evit he zireoul. E dibenn miz C'hwevrer hag e derou miz Meurzh e oa kendivizoù etre ar gouarnamant ha dileuridi eus 35 kompagnunezh estren. Libia a zo pinvidik a-walc'h da chom hep gwerzhañ tireoul e-pad ur pennad. Hogen anat eo n'eo ket gouest da dennañ diouzh he douar kement a direoul ha ma ra bremañ, mar rank tremen hep skoazell ar c'hompagnunezhioù. 25% eus an tireoul implijet e Breizh-Veur a zeu eus Libia.

Turkia 4 nijer eus an aerlu amerikan a voe skrapet en Ankara e derou miz Meurzh gant izili eus "Arme Dieubidigezh Turkia". Ar gouarnamant, o krediñ e oant dalc'het er Skol-Veur, a gasas soudarded hag archerien di hag e voe emgannoù taer gant studieren. An Amerikaned, a oa e gwirionez serret en un ti en ur c'harter all eus ar gêrbenn, a voe roet dezho o frankiz d'an 9 Meurzh. Ne voe ket kavet ar skraperien. Komprenet o doa ar re-mañ e oant aet re bell. Gwerzh-daspren a c'houlennent, hogen nac'het o doa ar renerien plegañ. Gaou en deus graet an taol ouzh "Arme an Dieubidigezh", a zo bet tamallet zoken gant an tuadoù a-enep ar gouarnamant. Digarez e voe an darvoud-se avat da bennoù-bras an arme da ziskar ar pennvistr Demirel. Kinnig a rejont kemer renerezh ar vro etre o daouarn ma ne vije ket furmet ur strollad-ren nevez diouzhtu (12 Meurzh).

Demirel, ur mirour, a voe anvet da bennvistr e 1969, hag e kreded e vije peoc'h ha stabilded e-pad pell. E 1970 koulskoude, darn eus e heulierien, re an Dhou pellañ, a guitaas e gostezenn, anvet "Kostezenn ar Reizh", evit krouiñ un tuad nevez, anvet ar "Gostezenn Demokratik". Koll a reas Demirel ar brasniver er Sened, ha n'en doe mui nemet ur brasniver a unan er Vodadenn Vroadel. War washaat ez ae stad

an armerzherezh. Bez' e voe dilabouradegoù, trouz ha tousmac'h gant ar studierien. Hag e tleer menegiñ ivez emsav ar Gurded o c'houlenn o emrenerezh.

Reter-Kreiz D'ar 7 Meurzh e teuas an harz-tennadeg d'e dermen, ha ne voe ket nevezet. Ne adkrogas ket ar stourm avat. An Arabed, hep mar war ali Rusia, hag Israel, hep mar war ali ar Stadoù-Unanet, a chomas sioul. Digor eo an hent marteze d'an englevioù peoc'h.

Pakistan Ha tu a vo da zerc'hel Stad Pakistan en he flom ? Ur Stad iskis eo, anezhi div gevrenn, tost 2.000 km an eil diouzh eben, hag Indez etrezo. Meur a wech o deus kinniget tud ar gevrenn reterel, an hini vihanañ hogen ivez an hini bobletañ, en em zistagañ krenn ha sevel ur Stad emren, war zigarez e oant gwasket gant politikerien ar gevrenn gornogel.


Ur c'henreizhadur nevez a dle bezañ aozet. D'an 3 Meurzh e voe pedet an 12 strollad parlamantel gant ar prezidant Yahya Khan d'en em vodañ d'an 10 evit ober englev. Ar pal oa distreiñ d'ar renerezh nannsoudardel, goude daou vloaz tremenet dindan al lezenn-arme. E-touez ar re pedet da gemer perzh e oa ar cheik Mujib Rahman, levier ar C'hevre Awani, galloudus-tre er reter, hag an Ao.Zulfikar Ali Bhutto, levier "Kostezenn ar Bobl", a zo bet trec'h er votadeg-veur diwezhañ er c'hornog. Etre an daou zen ez eus bet eneberezh betek-hen.

Aliet en deus ar cheik e heulierien da chom sioul. Berzet o deus pennadurezhioù ar gouarnamant pep tra graet, zoken pep tra embannet a-enep unded hag anterinded ar Stad, dindan boan a gastiz, betek 10 vloaz prizon, evit ar re a dorrje ar gourc'hemenn. Daoust da se e voe diz-urzhioù grevus e Dekka, kêrbenn kevrenn ar reter.


Indez "Kostezenn Nevez ar C'hongres", hini an Itron Gandhi, a c'hounezas un trec'h bras er votadeg-veur e miz Meurzh. Ar brasniver he deus bremañ e Kambr Izelañ ar Parlamant. War-dro 250 milion a dud a votas. Enebour bras ar bennvinstrez, an Dr.Singh, a voe korballet. Divodet oa bet ar Gambr Izelañ, al "Lok Sabha", e miz Kerzu, goude m'he doa al Lez-Dreist nac'het terriñ ar gwirioù dibar miret c'hoazh gant ar briñsed a rene er vro gwechall. Un digarez ne oa ken. An It.Gandhi a venne kaout ar brasniver. Kolloù bras he doa graet Kostezenn ar C'hongres e votadeg 1967, ha rannet e oa e daou abaoe 1969.

=====
C.C.P.P. No.36.242.


Le Gérant : Mlle Y.Martin, 24, rue Poull ar Bachet, BREST.
Liesskrivet gant ar gelaouenn/Ronéotypé par la revue.



Kelaouenn vizek
 Niv.149 - Mae 1971
 Koumanant-bloaz : 20 lur
 (Studieren ha soudarded : 15 lur)
 (Broioù estren : 25 lur)
 "AR BED KELTIEK"
 24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST
 CCP.RENNES 1907-07



=====
 PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON
 =====



T a o l e n n

- 123 Anvioù-lec'hioù (Roparz Hemon)
- 126 Gwechall du-mañ : Hentoù kozh Hañveg
 (Herve Ar Menn)
- 127 Bartok : un den, ur skouer (J.Plouard)
- 130 An aozadur gladdalc'hel, diwezh
 (troet diwar Istor Breizh La Borderie)
- 133 Notennoù yezhadur : "em fenn" pe "em penn"
 (Roparz Hemon)
- 134 Embannadurioù nevez (Roparz Hemon)
- 135 Geriadur ar Brezhoneg, kendalc'h (Roparz Hemon)
- 139 Lez-Varzhoniezh (Alan Heusaff)
- 142 Tri barzhoneg diwar ar skoseg
- 144 Gwelloc'h darempredoù (Alan Heusaff)
- 146 Ar miz (15 Meurzh - 15 Ebrel)
- 148 Embannadurioù nevez, kendalc'h



KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN a vo dalc'het er bloaz-mañ, eus an 18 d'an 31 a viz Gouere, e KREHEN-PLANKOED.

Digor eo ar skol-hañv-se d'an holl re o deus c'hoant brezhonegañ ha peurzeskiñ ar yezh, an hini nemeti implijet e-pad ar C'hamp.

Kentelioù, studiadennoù, baleadennoù, dudielloù, pep tra a vez aozet e sell da lakaat an holl berzhidi da vestroniañ ar yezh en un endro yaouank ha plijus.

Priz : 15,00 lur an devezh.

Evit kaout displegadurioù hiroc'h, skrivañ d'an Itron de Bellaing, 28 rue des 3 Frères Le Goff, 22-SAINT-BRIEUC (Pellg.33-26-66).

(Lakaat un timbr evit ar respont).

=====

EMSAV, Kelaouenn bolitikel miziek, B.P.125, 35-RENNES.

Kroget eo ar gelaouenn EMSAV gant he 5-vet bloavezh.

War an niverennoù da zont e vo kavet kendalc'h an Notennoù Politikel : Renadoù faskour, renadoù ar riezoù isdiorreet.

War ar stern emañ ivez an Notennoù Kevredadel a gemero lec'h er gelaouenn pa vo echu an Notennoù Politikel. En hevelep doare resis ma voe studiet ar bolitikouriezh hag an armerzhouriezh, e vo pleustret war zavez hollek ar gevredigezh.

Kendalc'het e vo evel just gant ar pennadoù a-zivout Istor Breizh hag an Emsav, istor an Emsavioù all.

Kendalc'het e vo ivez da verat pervezh kudennoù fetis, hollek ha dibarek, pemdeziek ha padek an Emsav.

Koumanant-bloaz (diwar ar 1-añ a viz Genver) : 24,00 lur, da gas da EMSAV, CCP.Rennes 2 460 10.

=====

GRAMMAIRE STRUCTURALE DU BRETON DE L'ILE DE GROIX (dialecte occidental), gant Elmar Ternès. - 394 p., Heidelberg 1970, Carl Winter, Universitatverlag. (hep priz merket).

Spi hon eus e c'hellimp komz hiroc'h diwar-benn an oberenn-mañ, unan eus ar re bouezusañ embannet a-zivout ar brezhoneg en hon amzer. Erbediñ a reomp da gement hini a gemer dudi er brezhoneg komzet he studiañ. Sklaer-tre eo, ha kalz aesoc'h da lenn eget an darn vuiañ eus al labourioù aozet hervez hentenoù ar yezhoniezh nevez.

=====

ANVIOÙ-LEC'HIOÙ

gant Roparz Hemon

Gant divizoù Kuzulioù-Meur tri departamant kornog Breizh ez eo bet tennet an evezh adarre war gudenn an anvioù-lec'hioù. Fellout a ra d'hor c'huzulierien ma vefe skrivet war ar skritelloù-hent anvioù ar c'hêriadenoù bihan, ar pennkêrioù, "lec'hioù-distag" ar c'humunioù en o stumm brezhonk reizh.

Ur menoz mat eo.

Chom a ra da c'houzout avat penaos e c'hell bezañ sevenet. Aes a-walc'h eo merzout eo bet distummet un anv. Un abadenn all eo spisaat ar stumm reizh.

Pa grogis a-zevri da studiañ ar brezhoneg, e voen souezhet o welout ne gaved neblec'h ur roll klok, zoken eus anvioù parrezioù Breizh-Izel. Lakaat a ris em soñj eta sevel unan, o tastum pezh a gaven er geriadurioù, er "c'hollokoù", e levrioù a bep seurt, er c'helaouennoù evel "Kroaz ar Vretoned", "Dihunamb", "Le Courrier du Finistère" h.a. Evit ur barrez e kaven alies anvioù disheñvel. Evit parrezioù 'zo, kaer am boa furchal, ne gaven tra. Ha me ober un enklask : goulenn digant tud kas din anvioù parrezioù o c'horn-bro. A-benn e teuis, gant mil poan, da glokaat ar roll, a implijis em "Enklask diwar-benn stad ar Brezhoneg e 1928" (moulet e "Gwalarn"), ha diwezhatoc'h em Geriadurioù.

Da stur e kemeris ar reolennoù-mañ :

1) Dibab ar stumm lennek, pa oa unan, diazezet start a-walc'h.

2) Pa ne oa ket tu da ober, derc'hel kont eus doare-distagañ tud ar barrez.

Setu perak e skrivas Kemperle, Pont-'n-Abad, Meilhvern (ha goude Meilh-ar-Wern), stummoù lennek, daoust ma ouien ervat e vezent distaget Kiperle, Ponad, Melivern.

Er c'hontrol, e skrivas Speied, Purid, Plegad, stummoù warno liv teodyezh ar c'hornad (ha tamallet e voen garv gant ar re a gave dezho e vije bet gwelloc'h chom tostoc'h ouzh stumm kozh an anv).

Ar roll-se am eus miret, gant un nebeut kemmadenoù hepken. Gouzout a ran n'eo ket disi. Nemet ret eo stagañ d'un urzh bennak, gant aon da gouezhañ en dizurzh, war zigarez ober gwellaennoù.

Kudenn anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel, dreist-holl anvioù ar c'humunioù, a voe studiet gant Jeusset. Warni e labouras meur a vloaz, oc'h embann pennadoù e "Sav" hag "Al Liamm". Ar roll aozet gantañ, - diglok, siwazh, -

moulet e niverenn 14 "Al Liamm", 1949, a zo bet embannet en ul levrig, diaes da gavout hiziv, a gredan.

Jeusset ne oa ket lec'hanvadurour muioc'h egedon, da lavarout eo, ne oa ket. Ne oa ket zoken yezhoniour a vicher. En em harpañ a reas koulskoude war oberoù lec'h-anvadurourien ha yezhoniourien. Eveldon e verzas e oa rot kaout urzh. Darn eus ar reolennoù a heulias a zo, diouzh sellboent al lec'hanvadurezh c'hlan, un tammig faltazius, a dalvoudegezh politikel kentoc'h eget a dalvoudegezh yezhoniell.

Degemeret em eus roll Jeusset en e bezh, war-bouez nebeud. Al lod brasañ eus an anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel embannet em "Geriadur Nevez Brezhonek-Gallek", a zo dezho ar stumm roet er roll-se. Implijet eo bet ivez e tro-idigezh Istor Breizh La Borderie, pezh a voe ur frealz da Jeusset, evel ma skrivas din en unan eus e lizheroù diwezhañ. Rak mantret e oa bet gant ar rebechoù graet dezhañ, hag e oa aet tost da grediñ en doa poaniet en aner.

Diwar-benn al lec'hanvadurezh, ur skiant a denn d'ar yezhoniezh, d'an istorouriezh ha d'an douaroniezh, n'eus levr ebet e brezhoneg c'hoazh. Diwar-benn lec'h-anvadurezh Vreizh, n'eus levr ebet kennebeut.

Labourioù talvoudus a zo avat :

1) Dictionnaire topographique du département du Morbihan, gant L.Rosenzweig, 1870, ennañ war-dro 25 000 anv-lec'h, da heul hogos pep anv ar stummoù kozh kavet en dielloù. N'eo siwazh nemet diwar-benn un departamant. Hogen, o vezañ ma kaver dre-holl anvioù heñvel pe zamheñvel ouzh re ar "Mor-Bihan", e c'hell hag e tle bezañ implijet pa studier ar rannvroioù all.

2) De la toponymie bretonne, dictionnaire étymologique, gant William B.S.Smith, embannet gant ar gelaouenn amerikan "Language", Ebrel-Mezheven 1940. Ur mouladur distag a zo bet graet. Iskis eo istor an oberenn-se. Ar barzh Aogust Brizeug en doa tremenet kalz amzer o sevel ur Geriadur eus anvioù-lec'hioù Breizh. An dorn-skrid, anezhañ eizh kaier tev, a voe prenet e 1934 gant Skol-Veur Columbia. Dre se, e c'hallas un Amerikan yaouank, William Smith, e vurutellañ. Diwarnañ, a liet ha skoazellet gant un nebeut Breizhiz, evel an Ao.Saut, Yeun Ar Go, R.Delaporte, e savas e labour, al labour hollek gwellañ embannet betek-hen a-zivout lec'hanvadurezh Vreizh. Diskleriadurioù Brizeug, daoust d'e c'hred ha d'e drevell, a oa diamzeret peurliesañ. O kemer harp war ar geltiegouriezh a vremañ, ez aozas William Smith ur studiaden 136 pajenn, a rank bezañ, hag hi diglok hag enni fazioù amañ-ahont, implijet gant an neb a ra war-dro an anvioù-lec'hioù.

3) Nomenclature des hameaux, écarts et lieuxdits, embannet ur 5 bloaz 'zo bennak gant Renerezh Rannvroel Roazhon eus Ensavadur Broadel ar Feurjedoniezh hag ar

Studioù Armerzhel, 4 levr bras liesskrivet, unan evit pep departamant (nemet departamant Naoned, evel boaz, a zp lezet a-gostez). Ne gaver enno nemet rolloù anvioù, hogen an anvioù brezhonek (en o stumm gallek) a zo bet reizhet gant Trepos.

4) Ar c'haieroù Lec'hanvadurezh-Vor (Toponymie nautique), embannet er bloavezhioù-mañ gant an "Annales Hydrographiques", dindan renadur an Ao.H.Dyèvre, o reiñ ur bern anvioù, gant notennoù ha diskleriadurioù, eus al lec'hioù a-hed aodoù Breizh-Izel.

E-kichen an oberoù-se, e kaver titouroù e-leizh e skridoù yezhoniourien, istorourien, douaroniourien, henoniourien, gwerinoniourien, sentvuhezourien h.a. : Loth, Ernault, d'Arbois de Jubainville, Duine, Largillière, Fleuriot, Gourvil ha meur a hini all. Pennadoù-skrid stank-ha-stank, disheñvel o zalvoudegezh, o venegiñ hag a-wechoù o studiañ anvioù-lec'hioù, a zo skignet er c'helaouennoù hag er c'hazetennoù, adalek ar c'helc'h-gelaouennoù bras evel "Revue Celtique" hag "Annales de Bretagne" betek ar c'hannadigoù-parrez.


Dastum, imbourc'hiñ, lakaat war fichennoù, dirouestlañ hag urzhiañ kement-se a rofe labour da galz tud o buhez-pad. Hag ouzhpenn ez eus studi ar c'hadaastroù, an enklask e-touez ar boblañs, ha studi anvioù-lec'hioù ar broioù all, dreist-holl Kernev-Veur ha Kembre.

Da seveniñ da vat mennad an tri C'huzul-Meur, e vefe dav krouiñ ur strollad-kefridi, evel ma voe graet en Iwerzhon, karget da studiañ an anvioù-lec'hioù, da ziazezañ an anvioù pennañ, da reiñ ali diwar-benn an anv-mañ-anv, pa vefe goulennet.

Seurt strollad-kefridi ne vo ket krouet warc'hoazh : ret e vefe kaout tud barrek da gemer perzh ennañ, tud o defe amzer da labourat a-zevri, ha ret e vefe kaout arc'hant.

Ne gredan ket ez eus tu da seveniñ ul labour hollek, bremañ da vihanañ. Pezh a c'hell c'hoarvezout avat eo an dra-mañ : ur c'huzul-kêr, pe ur strollad bennak, pe un den prevez a c'hell goulenn ali a-zivout un anv pe un nebeut anvioù. Mont a ray da gaout hep mar un den anavezet evel "brezhoneger desket". Ar "brezhoneger desket"-se a vo marteze c'hwi, a lenn ar pennad-mañ.

Alies e vo diaes deoc'h respont. Bez' e c'hellit evelato reiñ un ali poellek. Da nebeutañ, mar grit fazioù, ne vo ket ar fazioù mantrus graet gant tud na ouzont ket hor yezh ha n'o deus nemet dismegañs evit hor bro.



 GWECHALL DU-MAÑ : HENTOÙ KOZH HAÑVEG

gant Herve Ar Menn

A-viskoazh eo bet an hentoù, muioc'h c'hoazh ar stêrioù pe vorioù, evel ar gwazhied ma tremen drezo ar gwad pe ar c'henwerzh, o lakaat buhez dre ma'z eont. Lodennet mat a-walc'h eo bet parrez Hañveg gant an hentoù, daoust dezho bezañ bet fall betek ur c'hantved a zo.

Bez' hor boa daou borzh-mor war lenn-vor Brest : An Ospital-Kamfroud hag Ar Faou (An Ospital-Kamfroud ha porzh Ar Faou a oa e parrez Hañveg betek an Dispac'h), ha lec'hioù all c'hoazh da c'houdoriñ al listri, pe zoken da ziskargañ marc'hadourezh, evel Keraskoed, Troaon, ha Lanvoe. Bet o deus ar porzhioù-se o amzer. Pa grogas an Dispac'h, e oa ul letanant-maltouter, un isletanant ha pevar maltouter en Ospital. Brasoc'h porzh e oa c'hoazh er Faou. Betek 1914 e teue ul lestr-dre-dan bep Sadorn eus Brest d'Ar Faou, gant tud ha marc'hadourezh.

Ur c'hae a voe graet eno. Astennet e voe teir gwech er c'hantved diwezhañ. Azalek amzer Loeiz XIII, Roue Bro-C'hall, e talvezze hor porzhig da gas gwez Koad ar C'hrannoù da framman listri da Vrest. Talvezout a reas ivez evit degas an traezh a servije da zidrenkañ an douaroù, dreist-holl goude 1850, pa voe aozet hentoù bras a-zoare.

An hent, bet roman, dugel, roueel, republikan, impalaerel, ha republikan bremañ adarre, o tont eus Kemper da vont da Vrignogan, a dremene dre borzhioù-mor Kemper, Kastellin, Pont-ar-Veuzenn, Ar Faou, Landrene ha Brignogan. A-hed ul lev e treuze parrez Hañveg, eus ar c'hreisteiz d'an hanternoz. Tamm-ha-tamm eo bet dilezet, azalek 1843, pa oad kroget da zigeriñ an hent broadel niv.170.

Un hent all hor boa, a nebeutoc'h a dalvoudegezh marteze, o vont eus Ar Faou da Sant-Tegoneg, ac'hano da Gastell-Paol a-gleiz, ha da Vontroulez a-zehou, o tremen dre Hañveg, Sizun, An Drev-Nevez, Logeginer. Dougen a ra bremañ an niv.18 en departamant. Eeun a-walc'h eo evit bezañ bet un hent roman a eil derez.

Un hent ken pouezus all e voe an hini a zeus eus porzh An Ospital-Kamfroud, penn-da-benn ar barrez betek he bevenn er Menez-Arre, o kejañ gant an hent 18 e Kroaz Bodoù-Gwenn. E Kroaz ar Gov en em gave hennezh gant hentoù all, a gomzimp anezho bremaik.

Un hent all a zeue eus porzh Ar Faou, o tremen dre Rumengol, a-dreuz Koad ar C'hrannoù, da dapout Kroaz

ar Gov. Eus Ar Faou d'ar C'hrannoù e toug bremañ an niv.46. Anvet eo : hant Ar Faou da Blistin (e Bro-Dreger).

E Kroaz ar Gov en em gave an daou hent meneget o tont eus perzhier-mor. Dre eno e tremen ivez hent Sizun da Gastellin, dre Lopereg. Gwechall e oa anvet "Hent ar Givijerien". Tremen a ra dre ar Menez Meur, kêrbenn "Park an Arvorig". Eus Kroaz ar Gov e kerzhe un hent all etrezek Sant-Riwal ha Brasparz-Uhelgoad. Daou hent, dilezet bremañ, o vont eus Kroaz ar Gov, a dreuze Menez Hañveg, unan war-zu Ar Merzher, egile trema Landerne ha Roc'h-Morvan. Kroaz ar Gov, ul lec'h ken darempredet gwechall, n'eus anv na merk ebet anezhi war ar c'hartennoù.

Un hent kalz disteroc'h, o vont ivez d'ar reter, a yae eus Hañveg, Menez Meur, pe Kroaz ar Gweneg, o kas da Sant-Riwal ha Sant-Herbod pe Ar Fouilhez.

Setu ar brasañ gwazhiennoù a zegase buhez da'm parrez, teir anezho o vont eus ar porzhioù-mor d'ar reter, a-dreuz Menez-Arre. Peder all o kas eus Kernev da Leon, unan e goueled, unan e gorre ar barrez, o treuziñ ar menez.

BARTOK : UN DEN, UR SKOUER

Gant J.Plouard

En e yaouankiz e veze Bela Bartok (1881-1945) o redek hep ehan dre Vro-Hungaria. O furchal edo. Petra ? -
Un teñzor n'en deus ket e bar : kanaouennoù poblel e vro.

Bez' ez ae gant ur mignon, Zoltan Kodaly (1882-1968), en ur adskrivañ hag en ur lakaat war bladennoù pe granennoù a wecharall ar c'hanaouennoù bravañ a glevent digant an dud kozh war ar maezioù. Ret eo anzav he deus Hungaria ur glad arzek dibar.

Ha goude bezañ studiet an tonioù dastumet un tammig dre-holl, o deus an daou baotr savet an "20 Kan Poblel Magyarek", embannet e 1906.

Dek anezho a voe kendoniet gant Kodaly, an dek all gant Bartok. Enno e teu an eiladur ez-eeun diouzh an hensonerezh.

Ur sell ouzh oberenn bras-kenañ Bartok

Un tamm diwezhatoc'h, etre 1907 ha 1917, e teu er-maez "8 Kan Poblel Magyarek", aozet e doare "rondo".

Gant "Taolennadoù a Gêriadennoù" hon eus ur strollad kanaouennoù poblel a Vro-Slovakia. Enno ec'h adkemer al linenn-vleniañ (al "Leitmotiv") ar mareoù pouezusañ eus buhez ur vaouez, hag ar c'houlzoù ("die Sätze" en alamaneg) a zeu lerc'h-ouzh-lerc'h e lieder gorrek (an daouvet hag ar pevarvet), pe vuan, hervez ar framm klasel binviaouegel.

Anavezet madik a-walc'h e vez al levrioù diaesoc'h-diaesañ eus "Mikrokosms", savet etre 1926 ha 1937, gant an holl biancourien, nemet pevar fezh evit ur vouezh ha piano. Diwar o fenn e lavare Bartok "e c'halle o diaester klotañ gant ampartiz ur c'haner barrek d'en em eilañ gant ar piano, pe a c'houlenno digant unan all e harpañ."

E-touez ar "C'hanaouennoù Poblel Magyarek Nevez" ez eo manet atav er c'houn an hini vravañ-holl : "O, koad gwer, pegen uhel eo da wezenn uhelañ !" (dastumet e pempet levrenn "Mikrokosms").

E gwirionez, emamp amañ en eienenn awenerezh Bartok, pa skrive, a-zivout "O klask an Tonioù Kozh", d'an Dim.Stefi C'heyer :

"O mirout a reomp, o skrivañ a reomp. Peogwir, ma n'o adskrivomp ket, ne vo ket tu da c'houzout diwezhatoc'h petra a ganed amañ un amzer a voe. Ar re yaouank, va c'hrediñ a c'hellit, a anavez kanaouennoù arall, ha ne fell ket dezho anavezout ar sonioù kozh. N'o deskont ket, daoust d'ar re-se bezañ koulskoude kalz bravoc'h eget ar re a vez kanet hiziv. A-benn hanter-kant vloaz, ne vo den ebet evit gouzout hon eus bet anezho, ma n'o adskrivomp ket."

Pegoulz e skrive Bartok ar prederennoù-se, a gredit ? E 1907 !

Bremañ, Breizhiz, emamp e 1970, ha tud evel ar Bartok pe ar C'hodaly n'hon eus ket bet ha n'hon eus ket.

Petra e oa menozioù an dud-se ?

Unan hepken : adsevel sevenadurezh kozh o bro, pe gentoc'h, a lavarfen, he lakaat da vevañ, da drec'hiñ war ur fals hini, he doa he c'haset kuit ha kemeret he lec'h. Sonerezh poblel Bro-Hungaria a yae da goll. Kavet e voe hon daou baotr evit he mirout dre bladenoù ha kaieroù.

En hor bro ez a ivez sonerezh poblel Breizh da goll. Ne vez kavet gour evit ober al labour diaes ha brav-se.

Diwallomp enta diouzh ar falssonerezh enepoblel graet gant hon tud yaouank, a vir ouzhimp da anavezout gwir zremm hon tonioù kozh. Krediñ a ra an dud-se kanañ diouzh ur c'hiz vreizhek : faziañ a reont.

Al lizher meneget uheloc'hik a voe skrivet gant Bartok e 1907, da lavarout eo, kent an daou vrezel a zlee meskañ an dud, ar gouennoù hag ar sevenadurezhioù. D'ar mare-se, e Hungaria, e rene c'hoazh menozioù penn-bras ar Vro, Kossuth ; menozioù a vrogarantez, a vroadelouriezh, re romantel a-wechoù ... ne vern. An hent a oa diskouezet, hent ur "redadeg d'an teñzor" : teñzor ar yezh, ar sonerezh, an diijinouriezh ... broadel evel just. Tud a voe kavet diouzhtu evit ober war-dro pep hini eus al labourioù-se, diaes ha divent evelato.

Hor paotr Bartok a reas war-dro sonerezh e vroad, en ur gaout atav doujañs vras ouzh ar pobloù niverus a vev war zouar e vro. En oberennoù am eus komzet anezho e vez disheñvel eiladur ar piano hervez ar broioù. Da bep hini he lod. Ouzhpenn, ez eo bet Bartok ar sonaozour magyarek kentañ a savas ur c'hoarigan e magyarek, "Kastell Paotr e Varv Glas".

Penaos e skriv Bartok sonerezh ? Peseurt doareoù a zibab ?

Ne venn ket ijinañ. Adkemerout a ra hepken. Treiñ a ra war-du an amzer dremenet, hag adkemer diouti he doareoù, he zonioù, he skeulganou, gwasket ha lakaet en argoll ma oant bet dre heg gant ar sonerezh alaman (gouarnamant Wien en devoa lakaet e sevenadur germanek war ar re all gwitibunan).

Bartok a lakay ar skolioù hungariat da gelenn tonioù magyarek d'ar vugale, da skouer. Ur studiadenn deknikel en deus graet war ar c'hanaouennoù niverus en deus miret war e bladenoù. E holl oberennoù a zo livioù a-ziforc'h warnezh, pezh n'o devoa ket reoù e genvroad Liszt, a oa lies gwech kouezhet er falsfolklor, pa adkeme-eñ tonioù germanek e gwirionez en doare "magyarek", a gave dezhañ.

An hevelep si ne c'hell ket hon telearnourion nag hor c'hanerion vreizhat mirout dioutañ, pa aozont tonioù breizhek en un doare latinek, hep dezho gouzout. Kit da c'houlennt enta digant unan anezho kanañ ur skeulenn bemptonek, a zo ken hiniennel d'ar sonerezh keltiek, hag e welot ha kanañ a reont pe donioù breizhek pe donioù ... gall.

Ne deo ket hor sonerezh breizhek ha keltiek aet d'an diskar. Mui anezhañ ne vo avat pa vo aet da anaon an den kozh diwezhañ eus hor bro, hag a ouie ken mat kanañ e donig bihan, en e gornig-bro. Dimp-ni da zerc'hel d'ar c'hanaouennoù, d'o mirout, ouzh o adskrivañ war un tamm paper, bep gwech m'hon eus tro d'hen ober war ar maez.

Abaoe ur pennad ec'h embann ar gelaouenn AL LIAMM "Gwerzioù Kozh Breizh", a veze kanet (a ganer c'hoazh ?) e kornioù 'zo eus hor bro. Un neuz dezho nemeto o deus, hag e vefe mat-kenañ mirout ivez an tonioù.

Bet hon eus ivez, abretoc'h, ar c'hanaouennoù "war follennoù distag"; met, siwazh, nag un druez gwelout pegen aozet diouzh ar c'hiz c'hall ez int, gant tonioù ha mentadurioù diwirion. Pell emamp diouzh labour Bartok en Hungaria, a voe ul labour a adstrolladur hag a vruderezh.

Ne c'hellomp ket ober kalz evit hor c'hanaouennoù kozh, war a seblant. Gellomp !

Ur skouer : pa vez un eured e Breizh-Izel, ne deo ket rouez c'hoazh kaout un den kozh evit kanañ unan. Un dra hepken a zo da ober neuze : adskrivañ ar ganaouenn-se, a zo sur brav-brav, pe, ma n'omp ket barrek, kemerout hor magnetofon. Evel-se e teuas Bartok a-benn da gaout ouzhpenn 16.000 a granennoù ! Ma vijemp bet speredek a-walc'h evit hen ober er bloavezhioù tremenet, hor bije bremañ ur bern kaer a wir ganoù breizhek, ha brezhonek, a zo muioc'h !

En Alamagn e c'houlenn un ti-moulerezh digant forzh piv kas dezhañ seurt kanaouennoù (bandennoù maentouchel, kaieroù notennaouet, skridoù a nep doare ...) evit o reizhañ, o difaziañ diouzh ar c'hiz kozh gwirion hag evit ober ganto dastumadennoù a bouez bras, ken talvoudus hag holl oberennoù arzel an amzer dremenet.

Dleout a reomp ober heñvel er Vro. Eno hon eus un arz nevez da zizoleiñ. N'o deus ket hor c'hanerion a vremañ da skrivañ tonioù nevez ; adskrivañ tonioù kozh a zo da ober hepken.

Eno e kavimp folklor gwirion Breizh.

(Miz Gwengolo 1970)

AN AOZADUR GLADDALC'HEL
(Diwezh)

troet diwar
Istor Breizh

La Borderie
(Levrenn III)

1. Kontelezh Roazhon

Kontelezh Roazhon, zoken goude krouidigezh dalc'h-yaouaer Penteür, a oa brasañ rann c'hladdalc'hel Breizh. Klotañ a rae gant beliezh Roazhon ha beliezh Plouarzel-Breizh-Uhel "Levr an Armeoù".

Enni e oa eskoptioù Roazhon, Dol, Aled pe Sant-Malo ; ouzhpenn se deaniezhoù Karantor, Pourc'hoed, Ar Gemene-Wegant (Ar Gemene war ar Skorv) en eskopti Gwened ; kornad biz eskopti Kernev, bevnet diouzh tu ar c'huzh-heol gant ar Blaouezh, adalek Neulieg er c'hreisteiz betek Purid-Kintin en hanternoz ; ha kornad kreisteiz eskopti Sant-Brieg, etre Uzel er gwalarn, Sant-Vran er biz, Brehant er c'hreisteiz. - Un dachennad ken ec'hon ma voe ret rannañ ar gontelezh-se etre daou gelc'hiad-barn, daou zomani bras anvet amañ uheloc'h beliezh Roazhon ha beliezh Plouarzel-Breizh-Uhel.

Ar veliezh diwezhañ-mañ a zalc'he lec'h pezh a oa bet "Poutrocoet" (Pourc'hoad) hag a oa aet a-bezh abaoe amzer ar roue Salamun e-barzh kontelezh Roazhon.

Lakaet e-keñver ar rannoù-douar-iliz, beliezh Plouarzel-Breizh-Uhel a oa enni deaniezhoù Monforzh, Lanoez-Veur, Begnen-Briezh-Uhel en eskopti Aled, an teir deaniezh eus eskopti Gwened anvet amañ uheloc'h,

beg kreisteiz eskopti Sant-Brieg ha beg biz eskopti Kernev.

E beliezh Roazhon e kaved eskoptioù Roazhon ha Dol, rann hanternoz eskopti Aled (pe Sant-Malo), anavezet diwezhatoc'h dindan an anv a arc'hdeaniezh Dinan, deaniezh Louzieg en hevelep eskopti, hag en diwezh, en eskopti Naoned, war an harzoù, seizh parrez pe drev e baroniezh Kastell-Briant, dalc'h-douar kontelezh Roazhon.

II. Kontelezh Naoned

Kontelezh Naoned, en 11-vet hag en 12-vet kantved, heñvel ouzh beliezh Naoned, a oa enni holl zouar eskopti Naoned, nemet ar seizh parrez pe drev-se, hag ivez, anat eo, nemet seitek parrez eus Anjev stag ouzh an eskopti, ha na oant nag e kontelezh nag e beliezh Naoned, nag e Breizh.

III. Kontelezh Wened

Kontelezh Wened, anvet ivez Bro-Wereg, a glote (da vihanañ abaoe an 9-vet kantved) ouzh beliezh Bro-Wereg meneget e "Levr an Armeoù". Ne oa ket ken bras, na tost, hag eskopti Gwened.

A-hed an aod ez a eveltañ eus ar Wilun d'an Elle ; hogen en diabarzhvro ne sav ket ken uhel en hanternoz, pell ac'hane.

Rannet oa eskopti Gwened e 9 c'hevrenn ilizel : e traonienn izelañ ar Wilun hag en aod (eus ar Wilun d'an Elle), tolead Redon, tolead Rieg, deaniezh Ploueol, tolead Gwened, deaniezh Pou-Belz hag hini Ar Gemene-Heboe ; - en diabarzhvro, deaniezhoù Karantor, Pourc'hoad, Ar Gemene-Wegant. Diwar an 9 c'hevrenn-se, ne oa e kontelezh Bro-Wereg nemet ar 6 kentañ ; edo an teir all e beliezh Plouarzel-Breizh-Uhel, da lavarout eo e kontelezh Roazhon.

IV. Kontelezh Kernev

Kontelezh Kernev en 11-vet kantved a glote e braster hag e douar ouzh beliezh Kernev en 13-vet kantved : an holl eskopti, nemet ar c'hornad-douar-se er biz hon eus meneget, bevannet diouzh tu ar c'huzh-heol gant ar Blaouezh, a oa e-keñver ar c'hladdalc'helezh e beliezh Plouarzel-Breizh-Uhel.

V. Kontelezh Leon

Heñvel-rik e oa en 10-vet kantved hag e derou an 11-vet ouzh eskopti Leon. War-dro ar bloaz 1035, goude ar brezel tarzhet da heul savidigezh dalc'h-douar-yaouaer Pentür, an dug Alan III, evel gopr da veskont Leon, en doa e skoazellet hag a oa en em gannet kalonek e-unan,

a roas dezhañ an holl dachonn etre an Douron ha stêr Vontroulez, da lavarout eo an darn eus eskopti ha kontelezh Treger ar muiañ diouzh tu ar c'huzh-hool, anavezet neuze, pe un nobudig amzer goude, dindan an anv a gastellaniezh Montroulez-Lanneur, a chomas stag ouzh kontelezh Leon betek 1179. Er bloaz-se, Herri II, roue Bro-Saoz, mac'homer Breizh, a zistagas ar gastellaniezh-se diouzh Leon evit he daskoriñ da gontelezh Treger. N'edo ket eta e beliezh Leon en 13-vet kantved.

Gwelet hon eus penaos e oa bet aozet dalc'h-douar-yaouaer Penteür, ennañ div rannvro, div aotrouniezh vras tost an eil ouzh eben, hogen diforc'h : kontelezh Penteür ha kontelezh Treger.

VI. Kontelezh Treger

Kontelezh Treger a oa un tamm distaget diouzh pezh a oa bet Devnon en amzer gozh, adalek dibenn an 10-vet kantved piauget gant lignez Roazhon. Da gentañ, a-raok savidigezh dalc'h-douar-yaouaer Penteür, e oa er gontelezh-se eskopti Treger hag aotrouniezh Ouelou a-bezh. Bro-Ouelou, avat, evel ma voe savet e rann Eozen breur an dug Alan III ha kentañ kont Penteür, en em astenne mui pe vui e tri eskopti.

Enni e oa :

1) An darn eus eskopti Sant-Brieg etre ar Goued, aod kornogel pleg-mor Sant-Brieg hag al Lev, ma komzed brezhoneg c'hoazh.

2) Darn reterel eskopti Treger, eus al Lev pe an Drev.

3) Ur c'hornad bras a-walc'h eus Kernev-Uhel e biz an eskopti-se ; rak baroniezh Kintin, lamet diouzh Bro-Ouelou en 13-vet kantved, ha roet evel da dalc'h-douar d'ur yaouaer, a oa enni 28 parrez pe drev, 10 anezho en eskopti Sant-Brieg hag an 18 all e hini Kernev.

Brasoc'h e oa eta kontelezh Treger eget an eskopti, hag a-hed an aod ez ae eus genou ar Goued betek hini stêr Vontroulez.

Evit kastellaniezh Montroulez-Lanneur, distaget gant ar gontelezh-se e-tro 1035 ha staget ouzh Leon, pa voe lamet diouzh Leon e 1179, ez eas adarre e Treger hervez reolenn ar c'hladdalc'helezh, hogen ne voe ket lakaet e-barzh dalc'h-yaouaer Penteür hag e chomas diwar neuze e domani war-eeun dug Breizh.

VII. Kontelezh Penteür

Kontelezh Penteür a oa, evel hini Dreger, un tamm distaget diouzh Devnon : ar pagus Penteur pe Pentevr meneget ken abred hag ar 6-vet kantved e koshañ buhez sant Tudual, astennet etre ar Goued hag an Arganun.

En 11-vet kantved, e-barzh ar gontelezh, evel

e-barzh ar veliezh heñvel outi en 13-vet, e oa an holl dachenn eus eskopti Sant-Brieg a zo a yezh c'hallek hiziv, nemet ar beg pe an tric'hogn hon eus graet anv anezhañ (o komz eus kontelezh Roazhon), etre Sant-Vran, Uzel ha Brehant. E tu ar reter avat ez ae korn biz kontelezh Penteur un tammig en tu-hont da harzoù eskopti Sant-Brieg, oc'h enderc'hel 6 pe 8 parrez eus eskopti Aled etre an Arganun hag ar stêr Froud-Veur a zisrann parrez Lanseog diouzh hini Sant-Brieg.

Setu aze kevrennoù bras, linennoù pennañ, diazez an aozadur gladdalc'hel. Gwelet hon eus dre beseurt mennadoù ha pennsturioù e voe savet. Roet hon eus da anaout ar brastres.

Ret e vo gwelout bremañ penaos e voe lakaet da dalvezout evit suraat, startaat ha difenn harzoù Breizh.

=====

NOTENNOU YEZHADUR ; EM PENN pe EM FENN ?

gant Roparz Hemon

Goude va, he, o, raganvioù-gour o talvezout ivez da anvioù-gwan-perc'hennañ, e vez graet, evel ouzer, ar c'hemmadurioù dre c'hwezhadenniñ : K/C'H - T/Z - P/F.

Skrivet e vez eta : kambr, va c'hambr, - tal, va zal, - penn, va fenn.

Goude 'm, avat, raganv-amc'her ar c'hentañ gour unan, hervez an ali roet em Yezhadur, ne reer nemet ar c'hemmadurioù K/C'H, - T/Z : klev, c'hwi am c'hlev, - kasont, mar em c'hasont, ez in, - trugarekaat, deuet eo da'm zrugarekaat, - ti, emaint em zi.

P eta a chom digemm.

Tud 'zo a c'houlenn, avat : daoust ha ne dleer ket ivez ober amañ ar c'hemmadur P/F ? Ha reishoc'h eo skrivañ, da skouer : em penn eget em fenn ?

Hervez an darn vuiañ eus hor yezhadurourien, e tro P da F goude 'm : Yezhadur "Breuriczh ar Feiz", 1847, - Yezhadur Hingant, 1868, - Geriadur Moal, 1890, - Yezhadur Ernault, 1897, - Yezhadur Gwilhevig hag Ar Gov, 1902, - Yezhadur L.Le Clerc, 1908, - Yezhadur F.Kervella, 1947.

Hervez tri yezhadurour koulskoude, e chom P digemm : Gregor Rostrenen, en e Yezhadur, p.13, 1738, a ro ar skouerioù-mañ : 'c'huy am c'haro, am zommo, am poëso'.

Ar Gonideg, en e Yezhadur, p.25, 1838, a skriv : "goude am, n'eus nemet div lizherenn a gemm : K,T."

Ha vallee, en e levr-deskiñ brezhoneg, - p.62, mouladur 1910, - a lavar n'eus nemet ar c'hemmadurioù diglok K/C'H, T/Z a vez graet goude 'd'am, em'.

(En e Yezhadur evelato, p.15, 1902, en doa spisaet e oa gwir e Leon ; e Treger, emezañ, e tro P da F).

Douget e vefen da grediñ en deus heuliet Ar Gonideg ali Gregor, hag en deus Vallee heuliet ali Ar Gonideg.

Ret din anzav n'eus ket atav da fiziout er pezh a lavar Gregor a-zivout ar c'hemmadurioù. Mat eo eta sellout ouzh oberoù ar skrivagnerien. An den a zo bet gwellañ komzour-plaen an 18-vet kantved, Charlez Bris, eus Lanouarne, ne ra morse, a gredan, ar c'hemmadur P/F goude 'm.

Setu amañ ar pezh a skrivan em Yezhadur Istorel :
 "Ar c'hemmadur-se (hini /p/ goude -m) ne vez ket graet atav : ne vez kavet kalz a-raok an 19-vet kantved, pezh a c'hell lakaat da grediñ n'eo ket kozh ; er skouerioù da heul e weler bezañs hag ezvezañs ar c'hemmadur : IN.p.277 d'am poulsa ; RP.p.71' n'am punissot ; RS.p.136 em peultrin ; SG.f.83-b e-m-plas ; EMG.p.189 em penn ; p.190 em fennad goulou ; p.300 am fae (= a bae ac'hanon)."

Krediñ a ran ez eo gwelloc'h mirout ar reolenn roet gant Gregor, Ar Gonideg ha Vallee : chom hep kemañ P goude 'm. Arabat bezañ re strizh koulskoude. Skrivañ em fenn e-lec'h em penn n'eo ket torfed.

=====

Embannadurioù nevez : HOR YEZH, niv.65

HOR YEZH, daleet an embannidigezh anezhi e-pad ur mare, a zeu er-maez bremañ alies, en doare ma vo ad-c'hounezet hep mar a-benn un nebeud an amzer gollet.

En niv.65 e kaver kendalc'h Danvez Geriadur an Ao.G.Esnault, eus al lizherenn J betek al lizherenn L. An darn vuiañ eus ar gerioù, kutuilhet hep kalz urzh, a zo anavezet, ha lod a zo bet studiet gant ar yezhourien endeo. An diskleriadurioù roet a-zivout orin gerioù 'zo, ijinus a-wechoù, ne seblantont ket bezañ reizh atav. Un dastumad bitrakoù eo kentoc'h eget ul labour a yezhoniezh. Koulskoude e tellez bezañ burutellet.

Ar pennadoùigoù hag an notennoù a ra eil lodenn an niverenn a vo lennet gant dudi. Marteze dindan levezon P.Denez, e vez roet gant HOR YEZH muioc'h a bouez eget diaraok da gudennoù pleustrek evel kelennerezh, bruderezh, buhez ar yezh, pezh a gavan mat, gant na vo ket lezet a-gostez ar studiadennoù yezhoniezh.

ROPARZ HEMON

(HOR YEZH, 4 niverenn, 20,00 lur. Kas an arc'hant da : P.Denis, CCP.RENNES 1499-51).

=====

=====

tartr g. krestenenn lezet gant ar gwin e diabarzh an tonelloù.

tartrat g.-où holen an drenkenn dartrek.

tartrek ag.; trenkenn dartrek trenkenn tennet diouzh an tartr.

tarv g. tirvi (Bos taurus) loen pevarzroadek daskirier, eus kerentiad an ejeneged.

tarva v.-et (db. ur vuoc'h) klask an embarañ.

tarvañ v. ober fall (ul labour), hv.moc'hañ, kouilhourañ, drochañ, strabouilhat.

tarvet (db. ur vuoc'h) embaret gant an tarv, bet lamm ganti digant an tarv.

tarvhed g.-où eil hed graet gant ar gwenan.

tarvhedad g.-où endalc'h un tarvhed.

tarvken g.-où kroc'hen tarv.

tarval g.-ioù 1. penn un tamm koad troc'het d'ar vent ha d'ar stumm rekis evit mont en un ingoch, hv.steudenn.

2. ibil koad evit derc'hel kammed ur rod.

tarvoal ag. damvoal, hanter voal.

tarzh g.-ioù 1. an tarzhañ. 2. digor hir ha moan (en douar, en ur voger h.a.), hv.faut, skarr, skalf, frailh.

3. houlen a darzh (ouzh ar c'herreg h.a.). 4. niver bras. 5. (dre skeudenn-lavar) derou.

tarzhad g.-où evel "tarzh 1 ha 2".

tarzhad-dour g. barrad-glav a zeu trumm.

tarzhañ v. 1. terriñ trumm, prl. gant trouz, dre efed un nerzh-diabarzh. 2. faoutañ trumm.

3. en em deurel trumm ha taer. 4. dont a-wel;

tarzhet e gof dezhañ tarzh-kof. (+ tarzhadeg,

tarzhadenn, tarzhadur, tarzherezh,

tarzhidigezh).

tarzh-an-deiz g. kentañ goulou o tarzhañ en oabl gant an heol o sevel, hv.sl.strink-an-deiz.

tarzh-avel g. barrad-avel trumm ha kreñv.

tarzhdigor ag. (dh.db. un nor pe ur prenestr) damziger, hv.kornziger.

tarzheg g. (Fucus vesiculosus) doare bezhin.

tarzhell gg.-où toull strizh hag hir, e doare ur prenestr, en ur voger, evit leuskel tennoù (-saezh,-fuzuilh h.a.), pe c'hoazh evit reiñ aer pe lezel dour da dremen.

tarzhell gg. boued aozet-fall, kegin fall.

tarzhellañ v. pourvezañ 9ur voger) gant tarzhelloù.

tarzhellat v. ober kegin fall.

tarzhellek ag. (db.ur voger) tarzhelloù enni.

tarzheller g.-ien 1. keginer fall. 2. gwaz a ra labour ar merc'hed hep gouzout ober.

tarzhell-gav gg. tarzhelloù-kav toull pe brenestrig evit reiñ aer d'ur c'hav.

tarzhenn-an-deiz gg. evel "tarzh-an-deiz".

tarzher g.-ien 1. unan a laka udb. da darzhañ (hvz ar ster 1). 2. (ls.-ioù) stignadur pe ardivink a laka udb. (da sk. ur vombezenn) da darzhañ, hv.strakadenner.

- tarzherez gg.-ed ardivink evit lakaat udb.
(da sk. ur voger, un ti) da darzhañ.
- tarzherezh-dent g. skrignerezh-dent.
- tarzherez-neuñv gg. tarzherez war neuñv er mor
prest da lakaat ul lestr da darzhañ.
- tarzherez-vann gg. tarzherezed-bann tarzherez
a vanner ouzh ul lestr evit e gas d'ar
goueled.
- tarzheris g.-où evel "tarzh 2".
- tarzher-kraoñ g. tarzherioù-kraoñ 1. benveg evit
terriñ kraoñ, hv.torr-kraoñ. 2. (ls.
tarzherien-graoñ) (Nucifraga) evn kar d'ar
vran, gell gant roudennoù gwenn.
- tarzh-kalon g. poan-spered vras, hv.sl.
ranngalon. (+ tarzhkalonus).
- tarzh-kof g. bos pe dorgenn graet gant darn eus
ar bouzelloù o tont er-maez eus ar
groc'henenn a c'holo anezho, hv.aveleenn.
(+ tarzhkofek).
- tarzh-kurun g. taol-kurun.
- tarzh-maen g. darnig eus ur maen distaget dioutañ
dre skeiñ pe rimiañ.
- tarzh-mor g. evel "tarzh 3".
- tarzh-sklerenn g. torradeg ur gorread skorn
pa domma an amzer.
- tarzh-tan g. c'hoariell, anezhi ur gorzenn
gartoñs, danvez-tarzh enni, a lakaer da
darzhañ gant trouz, hv.tenn-tarzh.
- tarzhus ag. a c'hell tarzhañ. (+ tarzhusted,
tarzhuster).
- tas g.-où lestrig-evañ gant un dourgenn.
tasad g.-où endalc'h un tas.
tasenn gg.-où evel "tas".
tasennad gg.-où endalc'h un dasenn.
- taset g.-où godellig.
- taskagn g. 1. an taskagnat. 2. den douget da daskagnat
(hvz ar ster 2).
taskagnat v. 1.(db. saout ha loened all)
adchaokat boued distroet eus ar stomok d'ar
genou, hv.sl.takeneat. 2. arguziñ db.
traoù a nebeut a bouez, ha dh.db. priz
ar varc'hadourezh. (+ taskagner).
- taskagnenn gg.-ed maouez douget da daskagnat
(hvz ar ster 2).
- taskagnus ag. douget da daskagnat (hvz ar ster 2).
- tasman g.-où tra-hud, a greder a c'hell degas chañs vat
ha gwareziñ diouzh droukchañs, hv.tilsam.
- tasmant g.-où unan marv, tremenet er bed-hont, merzet
(gant ar sell prl.), hv.teuz, spes, semeilh,
seblant, skeud.
tasmantel ag. a denn d'un tasmant.
(+ tasmantelezh).
- tasmantet ag. (db.ul lec'h) darempredet gant
un tasmant pe dasmantoù).

- tasmantheñvel ag. heñvel ouzh un tasmant.
- tason ag. aet skuizh gant blaz ur meuz, hv.fastet, divlazet, stamouzet.
- tasoniñ v. skuizhañ gant blaz ur meuz.
- tastorn g. an tastornat ; a dastorn, dre dastorn en ur dastornat.
- tastornat (pe tastorniñ) v. stekiñ-distekiñ gant e zorn pe e zaouarn (da sk. evit kavout e hent en deñvalijenn), hv.toulbabañ. (+ tastornadur, tastornerezh).
- tastornell gg.-où organenn e stumm ur c'horn a gaver war benn amprevaned ha kresteneged 'zo, a ro harp dezho da gavout o hent h.a., hv.korn-tastorn.
- tastorner g.-ien 1. unan a dastorn. 2. unan a chom alies etre daou venoz, hep divizout petra ober. 3. unan a labour goustad ha lezirek, hv.luguder.
- tata g. (ger-bugale) tad, tadig.
- tatin ag. douget da datinat.
- tatin g. ar pezh a reer o tatinat.
- tatinat v. ober goap evit hegasiñ, hv.gogéal, godisañ, dejanal. (+ tatinerezh, tatiner).
- tatinus ag. douget da datinat.
- tatou g.-ed bronneg eus rannad an edenteged, e gorf goloet gant pladennoùigoù askornek oc'h ober evel un hobregon, a vev e Suamerika.
- tatouilhat v. komz hep distagañ fraezh, en un doare diaes da gompren, hv.balbouzañ. (+ tatouilherezh, tatouilher).
- tav g. an tevel ; war dav o tevel.
- tavadenn gg.-où 1. pennad tevel. 2. pennad-amzer hep glav goude ur barrad.
- tavadenniñ v. (db.ar glav) paouez da gouezhañ.
- tavedek ag. nebeut douget da gaozeal. (+ tavedegezh).
- tavet anv-gwan ar verb tevel.
- tavus ag. douget da devel. (+ tavusted, tavuster).
- tavañjer gg.-ioù pezh-dilhad douget war du-araok ar c'horf, prl. evit gwareziñ an dilhad all.
- tavanteg g. tavanteien den a vev en dienez.
- tavantek ag. o vevañ en dienez, hv.ezhommek. (+ tavantegezh).
- tavarn gg.-ioù ti ma vez gwerzhet ha servijet ennañ evajoù hag a-wechoù boued all.
- tavarniñ v. daremprediñ an tavarnioù, chom pell en tavarnioù.
- tavarnour g.-ien, tavarnizien unan a zalc'h tavarn.
- I. te raganv-gour a dalvez da aroueziañ an hini ma komzer outañ (implijet dh. pa gomz un den ouzh unan a anavez mat hag eus e gendere).
- teal v. ober gant "te" evit komz ouzh ub. (+ teerezh).

- II. te g. -où evaj graet dre ziskenn dour berv war zeliou disec'het ur blantenn (*Thea chinensis*).
- toal as. (un. -enn) (*Rumex patientia*) plant eus kerentiad ar poligoned, hv.kaol-moc'h.
- teatr g. -où 1. savadur evit displegañ pezhioù-c'hoari hag arvestoù all, hv.c'hoariva. 2. (dre astenn-ster) pezhioù-c'hoari. 3. arz ar sevel pe an displegañ pezhioù-c'hoari. (+ teatrel, teatrelezh).
- tech g. -où doug da ober un dra fall, un dra a zellez tamall.
- techañ v. lakaat un tech pe dechoù (en ub.).
- techet ag. douget (da ober un dra fall).
- tec'h g. an tec'hout; dindan dec'h, war dec'h o tec'hout.
- tec'had g. tec'hidi unan a dec'h, a zo dindan dec'h.
- tec'hadus ag. a c'haller tec'hout dioutañ. (+ tec'hadusted, tec'haduster).
- tec'hout (ivez tec'hel) v. mont kuit, en em dennañ evit pellaat diouzh ur riskl. (+ tec'hadeg, tec'hadenn, tec'hidigezh, tec'her); tec'hout diwar an hent (db. ur c'harr) riklañ diouzh un tu pa zispeg ar rodoù diwar an hent.
- tec'hus ag. a dec'h, douget da dec'hout. (+ tec'husted, tec'huster).
- teil g. danvez graet dh. gant fank al loened hag implijet da strujusaat an douar.
- teilañ g. danvez a bep seurt berniet ha miret evit teilat.
- teilat v. lakaat teil (en douar). (+ teiladeg, teiladenn, teiladur, teilerzh, teildigezh).
- teil-douar g. danvez-strujusaat graet dh. gant plant lezet da vreinañ en douar.
- teileg gg. -i, -où bern teil.
- teileg g. teileien den lorc'hus techet da vrabañsal.
- teilek ag. 1. teil ennañ. 2. lorc'hus, techet da vrabañsal.
- teil-munut g. evel "teil-douar".
- teïñ v. toet goleiñ gant un doenn.
- teir (anv-niver implijet e darempred gant un anv pe ur raganv gwregel) unan ha div.
- teirc'hevrennek ag. teir c'hevrenn ennañ. (+ teirc'hevrennegezh).
- teirdeliennek ag. dezhañ teir delienn.
- teirdelienniñ v. (db. ur blantenn) lakaat an teirvet delienn da greskiñ.
- teirdremmek ag. teir dremm dezhañ.
- teiresker ag. (db. ul lun) graet gant teir linenn, pep linenn e stumm un esker, kenstaget ouzh ur greizenn evel skinoù ur rod.

LEZ-VARZHONIEZH

gant Alan Heusaff

Ar c'hejadenoù etrekeltiek a ya war baotaat C'hoarvezout a reont war dachenoù ken disheñvel ha re ar yezhoniezh, al lennegezh, an arzoù-pobl pe folkor, hag ar stourm politikel.

Breizh a gemer perzh en darempredoù-se nebeutoc'h eget ar broioù keltiek all a vent ganti, en abeg d'an diouer a genyezh, d'ar pellder ha d'ar c'houston ma'z eo beajiñ. Hag un abeg all grevusoc'h a zo marteze. Lavaret eo bet ez eus tu da ziskleriañ un tamm mat eus al "luskad breizhat" dre anadenn an heklev. Gwir eo e reer abaoe pell 'zo heklev da Iwerzhon ha da Gembre, mar galler komz eus heklev pa'z eus anv dreist-holl eus eztaoladur menozioù war baper. Met me ne gavan ket e rafe droug deomp Breizhiz parañ war an tu-se tamm ebet. Ar pezh a gavan noazus eo lavarout, evel ma ra darn bremañ, n'eo ket spletus na poellek durc'haat Breizh war-du ar broioù keltiek all. An ton-se a vez gant rannvroelerien evel Phlipponneau, ha n'emañ ket pell, da'm soñj, kezeg-blein ar "mouvement breton" a vezañ levezonet gant un hevelep doare-gwelout.

Koulskoude emañ an aergelc'h gall o treantiñ pep tra e Breizh, ha n'hell ket ar re a stourm na marteze ar re a glask krouiñ un aergelc'h breizhat mirout a vezañ merket gantañ, betek en doare m'en em ziskleriont, dre o gerioù pe o oberoù. Anat eo se diouzh ar stambouc'h a gaver gwall alies e kelaouennoù gallek an emsav politikel hag e skridoù evel manifesto ar "Front de Libération Breton" (embannet e dibenn 1968).

Petra a c'hortozer diwar ur c'horfad a baper duet ? Hag ezhomm a zo da zanzan ur brederouriezh vogedek evit ma oufe ar remziadoù yaouank evit petra ez eus da stourm e Breizh ? Me 'gred e vefent atizet muioc'h da gempouezañ muioc'h o menozioù gant sevenadennoù pleustrek ma tarempredfent ar stourmerien gembreat hag iwerzhonat.

Doare-ober Kevredigezh Wolfe Tone Dulenn eo gwintañ mennadoù, o breutaat en o bodadegoù, envel un nebeut tud d'o seveniñ, sevel ur gevrenn dindan evezhierzh ar poellgor, ha pa vez kroget-mat an embregadenn, lezel ar gevrenn-se da ober al labour en dizalc'h evit bout gouest da dreiñ hec'h evezh ouzh traoù all. Evel-se ez eo bet krouet ar strollad-studi a eneb ar muiañ ouzh emzeladur Iwerzhon d'ar C'henvarc'had.

Abaoe ur pennad ivez he deus bet aozet Meryl Gourlay abardaevezhioù-barzhoniezh gant harp Kevredigezh Wolfe Tone, hag a roas tro da varzhed kembreat da zisplegañ o oberennoù da Iwerzhoniz. Abadennoù teiryezhek a oa anezho,

pezh a zedennas tud ha na zeujent ket tost da abadennoù en iwerzhoneg hepken. Deuet eo bet Derec Morgan, Dic Jones ha re all da lenn o barzhonegoù e kembraeg. Troet e vezent en iwerzhoneg gant ur jubenner, pe e saozneg gant an aozer, hag hemañ a roe ouzhpenn se diskleriadurioù, o respont da c'houlennoù ar selaouerien.

Talvout a ra ar seurt abadennoù da astenn tu kevredigezhel an emsav iwerzhonat, un egin a gevredigezh iwerzhonek a zo anezho.

Fellout a ra da vMeryl Gourlay degas barzhed eus ar broioù keltiek all ivez. Ur gudenn a vizoù-beaj a zo adarre, ha n'emañ ket e galloud Kevredigezh Wolfe Tone nag ar C'hevren Keltiek (betek-hen ...) reiñ a-walc'h a skoazell dezhi.

E galloud Kuzul Broadel an Iwerzhoneg emañ. Ar c'henurzhiadur-se a vez harpet (un tammig) gant ar Stad, hag e rener, ar c'horonal Eoghan O Néill, a zo tuet-mat d'an etrekeltiegezh. Kemeret en deus eta ar C'huzul war e gont degas tri barzh skosat da Iwerzhon evit ul Lez-Varzhoniezh.

D'an 31 a viz Meurzh e oa dalc'het al lez en ur sal vras eus Skolaj an Dreinded e Dulenn. 'Michaels n'eo ket dre'n abeg ma oa digor d'an holl evit netra e oa e-leizh a dud ! A dra sur e oa eno peadra da reiñ kalon d'ar re o doa aozet ar gejadenn.

Diouzh un tu war ar savenn e oa ar Skosiz, Somhairle Mac Gill-Eathan, Ruairaidh Mac Thomàis ha Domhnall Mac Amhlaidh ; ha diouzh an tu all tri barzh pe varzhez iwerzhonat, Caitlín Maude, Máirtín O Direáin ha Máire Mhac an tSaol. Etrezo ar c'hadoriad Gordon Mac Gill-Fhinnéin, ur Skosad, lennour e Skolaj Skol-Veur Dulenn, hag a gomz iwerzhoneg kenkoulz ha skoseg.

A-viskoazh ez eus bet bodadegoù ha kenstrivadegoù barzhed en Iwerzhon. Chomet ez eus anezho betek an deiz a hiziv e korn-bro Muscraí, e-kreiz menezioù kornog Corcaigh. Distreiñ a reont d'ar vuhez e lec'h all, da skouer e skol-hañv Merriman hag e Dulenn. An aozerien a oar lenn o barzhonegoù, hag a-wechoù e tiskleriont ar plegennoù o deus o awenet koulz hag ar menozioù a vez dezho da ziazez.

Gwechall e roe ar c'hejadennoù-se boued d'an helebini etre ar varzhed, hag e save zoken krogadoù "barzhonegañ" etrezo, an eil o respont war ar prim hag o klask en em ziskouez trec'h d'egile dre e ijin. Darempredoù peuzstank a oa betek derou ar 17-vet kantved etre gouezelegerien Alba hag Iwerzhon, pa oa o div yezh tost a-walc'h an eil d'eben evit bout komprenet aes. Ar wech diwezhañ ma kemeras barzhed skosat perzh en ul lez a varzhoniezh a-gevret gant Iwerzhoniz a voe e 1661 !

Komz a reer en iwerzhoneg eus "eachtra filíochta", un taol-kur a varzhoniezh. Un darvoud e oa hemañ ivez ! N'eo ket hepken e Dulenn e oa o lez da vezañ dalc'het.

En derc'hent e oant bet e Má Nuat, ha dleout a raent mont da gCorcaigh ha da c'hGaillimh en devezhioù da heul. En abeg d'an trubuilhoù en Hanternoz e oa bet kroaziet war ar mennad o degas da vBéal Feirste ha da gCúil Ráithin ivez. Un tammig re nec'het e oad, da'm soñj.

Ambrouget e voent e-barzh ar sal gant Piaras O Gréagáin o seniñ un ton skosat gant e viniou-bras. Ha Gordon Mac Gill-Fhinnein a gomzas e skoseg, ha goude en iwerzhoneg. Somhairle Mac Gill-Eathain a voe galvet da gentañ da zisplegañ ur barzhoneg. An hini koshañ eus an tri ez eo, hag an hini barrekañ. Un den emzalc'hus, tuet d'ar mousfent sioul goapaus. Re vuan e oa e zisplegadur evit din bout gouest d'e gompren, zoken gant harp an droidigezh iwerzhonek pourvezet gant an aozerien, met un dudi e oa selaou ouzh e werzennoù o tibunañ dibaouez hag o tifraeañ evel ur froud, kompez avat hag hogos didrouz. Hervez follenn diskleriadurioù ar C'huzul, ez eo Mac Gill-Eathain brudetañ barzh gouezelek-skosek an amzer-vremañ. Dezhañ ur stil broudus, heson. Eñ eo en deus da gentañ skrivet barzhonegoù, diazezet war an hengoun, en un doare arnevez. Ar re a vefe dedennet a vo mat dezho gouzout ez eus bet embannet agentaou un dastumad barzhonegoù digant pevar barzh skosat, "Four Points of a Saltire", ha Somhairle Mac Gill-Eathain a zo unan anezho.

Domhnall Mac Amhlaidh ne oa ket ken barrek da gehentiñ gant e selaouerien dreist d'an harzoù yezhel. Strobotiñ a rae un tammig, evel unan na vije ket ar gouezelek e yezh c'henidik. Un doare etrevroadel eo e hini. Troet eo gant buhez ar spered, ha diwar-benn kevezerezh an daou sevenadur, dizeriadur ar gouzelva, pilpouzerezh relijiel, karantez e skriv. Lennour keltieg eo en Obar Deathain (Aberdeen).

Ruaraidh Mac Thomàis a zo dezhañ un doare sioul, marvailher, treuzskeudennel. An hini kentañ eo bet d'ober gant gwerzennoù dieub e skoseg. Eñ eo ar c'helenner keltieg e Skol-Veur Glasg'ho.

Un tammig e oant abafaet moarvat o verzout e rae an holl amañ gant an iwerzhoneg. En o displegadur e verzis habaskter ar re a harz ouzh ur wallblanedenn, met na stourmont ket mui gant o holl nerzh.

Keñveriet gant Caitlín Maude ha Máirtín O Direáin, e kaven e oant kuñv, re guñv.

Caitlín zo ur plac'h nevez dimezet, leun a dan, treut ha taer, duardez lemm he zeod, dihabask e-keñver kement seurt kerreizhder er stourm broadel. Spouronet e voe ganti Gwynfor Evans, pa dagas taer ar glaskerien status bourc'hizel d'an iwerzhoneg, ha koulskoude e vame Gwynfor ouzh he donezonoù kanerez ha barzhez goude se. Heñvel eo ouzh un diouganerez, un "darlavariadez", gant he neuz awenet hag entrosellus.

Máirtín O Direáin, genidik evelti eus Konemara, pe evit bout resis, eus Enez Vras Aran, a zo dezhañ ur vouezh o tereout ouzh e gorf a ramz, o tegas diouzhtu da goun

maezioù meinek, garv-dedennus, Konamara. Spi am eus e vo barzhonegoù digant an daou-se, gant un droidigezh vrezhonek, e Levr-Bloaz ar C'hevre Keltiek, 1971.

Da heul e vo kavet ur barzhoneg digant pep hini eus an tri Skosad, troet re vuan moarvat hag en ur fiziañ war an testennoù iwerzhonek pourvezet tal-ha-tal ganto da geñver an abadenn e Skolaj an Dreinded.

=====

TRI BARZHONEG
diwar ar skoseg

(brezhoneg gant Alan Heusaff)

Levrini ha chas gouez

En tu all d'an erc'h en diamzer
e spurmantan va barzhonegoù :
hirnez ganto bout distaget,
roud o favioù o vrizhellañ
gwennder dilavar an erc'heg ;
ernez en o c'hrev, gwad war o zeod,
chas disvouedet ha liezed gouez,
o lammat dreist kleuzioù ha gouerioù,
o redek e disheol ar gwez digenvez,
o leviata dre ar stankennoù strizh,
o furchal ar runioù-avel serzh ;
o cholori hag o c'harnach o tregerniñ
dre ouelec'h kriz an amzerioù chifus,
o harzhal da viken em divskouarn,
tennder o red trec'h da'm skiantoù ;
chas ha levrini en digevannez,
o kas a-herr war-lerc'h ar gouez,
digammdro a-dreuz ar c'hoadeier,
eeun-tenn war lein ar menezier ;
kon habask mibin va barzhoniezh,
chas o klask braventez,
gouezeri gaer dre grec'h ha traoñ,
'vit da blijadur sioul hegarat,
hemolc'h hep gwalc'h nag ec'hoaz.

Somhairle Mac Gill-Eathain

Ar gozhiadez

Daougrommet e kerzhez,
 war-bouez da vazh,
 a-hed ar c'hleuz ;
 chomet a-sav,
 e tistouez da benn pounner,
 ha gant da voz e waskedez
 da zaoulagad ouzh an heol.

Eus ar skeud-se
 ec'h arvestez an arat,
 an ant nevez klazet,
 harzoù an atant
 hag ar menez.
 (Hag e taolez evezh gant aon
 na ve luziet ar vuoc'h en he nask).

Reudet da zivesker,
 e teuez war da giz,
 en ur ruzat da votoù ;
 o harpañ war da vazh,
 ha da zorn ouzh ar voger,
 e tistroez d'an ti,
 ma'z eo bremañ e dreuzoù
 ur skoilh.

Azezet out en-dro war da gador.

Domhnall Mac Amhlaidh

Merc'hed an harink

Hañval o c'hoarzh ouzh ur strinkadenn,
 holen glas dirañvet diouzh o genou,
 ar morc'hlav hag an hili war o zeod,
 hag o bizied krenn, stummet da boazhañ pesked
 pe da sevel bugale, parfet, kempenn,
 klet ha yac'h,
 evezhiek,
 hag o daoulagad ken don hag habask.

An istor eo, eilpennet, a reas
 anezho sklavezed d'ar sasunerien grez,
 du-mañ du-hont er Gouzelva hag e Bro-Saoz.
 Sall ar gopr o deus gounezet
 diwar varilhadoù diniver,
 avel but ar mor war o c'hroc'hen,

ha bec'h an dienez en o irc'hier,
 ha pa ne c'hoarzhfent c'hoazh,
 e kredfed oa torret o neudenn.

Gant al lorc'h en o c'halon,
 e chomont yac'h avat,
 ha kontell-besked o zeod
 a skejfe goaperezh an estren.

Ha, distroet d'ar gêr,
 e kavont labour c'hoazh da ober,
 daoust n'o deus ket a zanvez :
 e nozvezhioù gouez ar goañv,
 o zonkadur ez eo
 krouiñ bugale.

Ruaraidh Mac Thomàis

=====
 =====
 GWELLOC'H DAREMPREDOÙ

gant Alan Heusaff

Deuet e oa 15 eus izili ar C'hevre Keltiek e Dulenn
 d'ar vodadenn en iwerzhoneg, d'an 30 a viz Meurzh.

N'eus ket bet tu da aozañ ar c'hamp da zeskiñ
 iwerzhoneg evit Pask, en abeg d'ar skoilh lakaet e-pad
 daou viz gant harz-labour ar bosterien e Breizh-Veur,
 ha peogwir e oa re nebeut a dud o tiskleriañ e teujent
 d'ar mare-se.

Komzet hon eus abaoe gant Cormac Mac Carthaigh,
 rener Skol d'Trabolgan. Ken prest hag a-raok eo da aozañ
 ur rummad-kentelioù ha da zegemer ar berzhidi er skol.
 Fellout a ra deomp eta ober an arnod adarre, hag hep dale
 ec'h embannimp ar mare a vo divizet.

Un toullad mat a Gembreiz o deus diskouezet bout
 dedennet. Digant ur C'hernevveuriad am eus bet ul lizher
 e kerneveg evit goulenn diskleriadurioù ivez. Spi am eus
 e kavo un nebeut Breizhiz tu da zont, hag o aliañ a ran
 da skrivañ an abretañ ar gwellañ evit ma vo aozet an
 traoù ervat.

Divizet e voe er vodadenn skrivañ en anv ar Skourr
 da Gambr-Genwerzh Brest. Embannet eo bet e "Breiz"
 (Meurzh) e oa bet kinniget gant Kompagnunezh Hentoù-
 -Houarn Iwerzhon d'ar Gambr-se digeriñ ur servij
 dougen-kirri-tan etre Brest ha Cobh. Peogwir e klaskomp
 startaat an darempredoù etrekeltiek, hon eus soñjet e
 vije mat diskleriañ e harzjemp ar mennad diouzh ma
 c'halljemp. Un tammig souezhus eo e vije deuet ar c'hinnig
 digant CIE (Hentoù-Houarn Iwerzhon) ...

Lizheroù a zo bet kaset a-berzh ar Skourr ivez da guzulierien-veur an departamantoù 22, 29 ha 56, d'ober gourc'hemennoù dezho evit o divizoù a-du gant ar brezhoneg. E brezhoneg int bet skrivet. Evit 56 ez eo bet graet gant ur stumm-skrivañ gwenedek. Kaset int bet dre hanterouriezh prezidant Kuzul Finister, hag an Aotrounez Bourdonneg hag Ihuel. Diskredik e c'haller bezañ e vo sevenet ar mennad lakaat an anvioù-lec'h e brezhoneg reizh e pep lec'h dre Oueled-Breizh. Ha ma ne ra ket ar velestradurezh diouzh youl, evel ma'z eo bet diskleriet gant ar guzulierien ? Daoust hag e vo graet diouzh skouer Cymdeithas yr Iaith Gymraeg e Breizh ?

Evit a sell ouzh komz brezhoneg er bodadegoù Kuzul, Skourr Iwerzhon en deus kredet skrivañ evel-hen :

"Gouzout a reomp diwar ar skiant-prenañ hon eus er vro-mañ e vo diaes d'ar vrezhonegerien komz diwar-benn traoù pouezus e bodadegoù ar C'huzul-Meur, en abeg d'ar guzulierien na ouzont ket brezhoneg. Hag ez eus riskl na vefe graet gant ar brezhoneg nemet evit traoùigoù dister.


"Gant doujañs e karfemp eta aliañ ar C'huzul-Meur da ober gant ur genreizhad treiñ-diouzhtu, heñvel ouzh an hini a vez implijet e Bro-Gembre gant Kuzul-Kontelezh Mōn, gant Skol-Veur Aberystwyth, gant Plaid Cymru. Ober a ront gant un ardivink na goust nemet 6.500 lur, ha troet e vez diouzhtu e saozneg ar pezh a vez lavaret e kembraeg, ma vez unan bennak na gompren ket ar yezh-mañ.

"Ur C'hembread, an Ao.Keith Bush, a zo deuet da Iwerzhon n'eus ket pell da ziskouez penaos ober gant ar genreizhad-se. Sur omp e vefe prest d'ho harpañ, m'ho pefe c'hoant da enstaliañ ur servij eus ar scourt-se, ha ne vefe ket re ger."

En ur mennad degemeret er vodadeg, e rebechas ar Skourr da Radio-Telefis Eireann bezañ dibabet ur sonenn e saozneg evit an "Eurovision Song Contest", dreist-holl pa oa en Iwerzhon e oa hemañ hevlene.

"Aes e vije bet da RTE kaout ur sonenn vat hag ur c'hanour gouest da ganañ en iwerzhoneg ma karje, hag ober e vad eus an abadenn-sirk evit diskouez da 200 milion a dud he deus Iwerzhon ur yezh dezhi hec'h-unan, ha ne deo ket ar vro-mañ ur rann eus ar "Rouantelezh Unanet" evel ma kred c'hoazh kalz tud en estrenvro."

Diskleriañ a reas ar Skourr c'hoazh bezañ a-du gant broadeladur an eztennañ kailh-metal en Iwerzhon (gwelout ar pennad an ABK miz Ebrel). Kemennet e voe an diviz-se da Vinistr ar Greanterezh.



AR MIZ

(15 Meurzh - 15 Ebrel)

Iwerzhon Pennvinistr Norziwerzhon, ar Major Chichester-Clark, a roas e zilez (20 Meurzh), daoust ma oa bet kaset davetañ eus Londrez ministr an Emzifenn ha rener-meur an arme evit aliañ dezhañ chom. En e lec'h e voe anvet an Aotrou Faulkner. War a seblant, e bal eo heuliañ an hent-etre.

Gouelioù Pask, mare dibunadegoù bras gant ar Republikaned koulz ha gant an "Unanourien", a zo aet e-biou hep re a drubuilh. Evel boaz, e savas krogadoù, e voe taolet mein ha bombezennoù, hag e voe tarzhadennoù. Gwall arvarus e van stad ar rannvro, ha darvoudoù grevus a c'hell degouezhout ne vern pe zeiz, diwar an disterañ atiz.

Belgia Da gaout prizioù uheloc'h evit o marc'hadourezh, o doa aozet kouerien eus c'hwec'h bro ar C'henvarc'had un devezh-enebiñ d'an 23 Meurzh e Brussel, kêrbenn an aozadur-se. War-dro kant mil a oa anezho, a zibunas dre straedoù kêr, en un doare peoc'hus da gentañ. Buan avat e trenkas ar soubenn, hag e voe kann etre kouerien hag an archerien niverus dastumet gant gouarnamant Belgia da zerc'hel an urzh. Bez' e voe freuz, arouezioù-hent ha postoù-lampoù diskaret, gwerinier torret, pavezioù diframmet. Gwashoc'h 'zo, ur c'houer a voe lazhet, ha kalz tud gloazet, ken e-touez an displegadegerien, ken e-touez an archerien.

Anat eo e chom ar gouerien e-mesk ar re a c'hounez an nebeutañ a arc'hant er bed a hiziv. Evit mirout na greskfe re koust ar bevañs, ne fell ket d'ar stadrenerien kreskiñ prizioù ar c'hig, al laezh, an amanenn, ar bara h.a. Ur gudenn diaes da ziskoulmañ eo.

Aljeria Aljeria a fell dezhi diskar da vat pep roud eus an drevadennelezh c'hall. Divizet he deus bezañ mestrez war he zireoul. Torret he deus ar pezh a chome eus Emglevioù Evian.

Gouarnamant Frañs en deus pleget a-zivout an tireoul. Tra all ne c'halle ket ober. En un notenn kaset da c'houarnamant Aljer (15 Ebrel), e tisklerias e oa prest da genlabourat pelloc'h evit harpañ diorroadur ijinerezhel Aljeria, ha da virout an emglevioù skoulmet war tachennoù sevenadurel ha teknikel. Hogen adaozañ a c'hell an emglevioù-se pa zeuint d'o zermen. Lezet e vo ivez an Aljeriz a labour e Frañs da chom evel m'emaint. Hogen diwezhatoc'h e c'halle o stad bezañ reolennet disheñvel.

Sklaer eo he deus Frañs atav c'hoant da levezonañ an douaroù a oa gwechall en he c'herz, hag aon he deus

na ve displejjet broioù "gallek" Afrika ma torrfe trumm he darempredoù gant Afrika.

Selan Ur strollad anvet "Talbenn Dieubidigezh ar Bobl", berzet gant gouarnamant an Itron Bandaranaike, a glaskas aloubiñ ar gêrbenn, Kolombo, e derou miz Ebrel. Tiez-polis ha savadurioù all a voe taget. Lakaet e voe ar c'heulfe e kêr, ha tud a voe harzet.

Fall-tre eo stad an armerzh e Selan, dreist-holl da heul an digresk e priz an te hag ar gom-gwevn, pennañ ezporzhiadurioù ar vro, ha gant kresk priz an ardivinkoù, a ranker enporzhiañ.

Bihan-tre eo strollad "Talbenn Dieubidigezh ar Bobl". War a lavarer eo harpet gant gouarnamant Korea an Hanternoz.

Pakistan E 1947 e voe savet Pakistan, da vare ar stourmoù bras etre Muzulmiz hag Hindoued. Divizet e voe gant ar Saozon aozañ daou zominion : Indez ha Pakistan.

Da Indez e voe roet an darn greiz eus ar pezh a oa bet anavezet evel "Impalaeriezh Indez". Pakistan a voe graet gant ar rannvroioù muzulmat : re ar c'hornog ha re ar reter.

E 1947 eta, Mohammad Ali Jinnah, rener ar "C'hevrenn Muzulmat", a voe anvet da c'houarnour Pakistan. Ken abred ha 1951, da heul muntr ar pennministr Liaquat Ali Khan, e savas diemglev etre an div gevrenn eus ar vro.

Ur C'henreizhadur nevez a voe embannet e 1956, gant ar jeneral Mirza da brezidant. Diskaret e voe Mirza e 1958, hag ar jeneral Ayub Khan a gemeras ar galloud.

Klask a reas sevel ur Stad demokratek, gant ur Gambr, an hanter eus hec'h izili eus ar c'hornog, hag an hanter all eus ar reter.

E 1965 e tarzhas ur brezel berr etre Indez ha Pakistan a-zivout Kachmir.

Ayub a rankas reiñ e zilez e 1969. Ar jeneral Yahya Khan a zeuas en e lec'h, o prometiñ un doare-votiñ a roje "ur vouezh dre benn", pezh a oa bet goulennet pell a oa gant kevrenn ar reter, an hini bobletañ. E 1970 eta e voe anvet ur Gambr nevez. Kostezenn ar cheik Mujibur Rahman, eus ar reter, a c'hounezas 160 kador. Kostezenn Zulfikar Ali Bhutto, eus ar c'hornog, a c'hounezas 83.

Ne voe ket bodet ar Gambr-se avat : an daou rener ne oant ket deuet a-benn d'en em glevout a-zivout ur C'henreizhadur nevez.

Da heul embannidigezh emrenerezh "Pakistan ar Reter" pe "Bangla Desh", e voe diaes kaout keleier resis eus ar pezh a c'hoarveze er vro. Divizet oa bet gant gouarnamant ar c'hornog mougañ an emsav er reter, hag hervez ar brud e oa bet lazhaedet kalz tud gant an arme.

Indez a zo en em ziskleriet a-du gant emsaverien Reter Pakistan. Tennañ he mad a c'hell, anat, diouzh

gwanidigezh hec'h amezeien. Sina, er c'hontrol, he deus gouestlet harpañ gouarnamant-kreiz Pakistan, a zo bet abaoe pell tuet-mat en he c'heñver.

=====

EMBANNADURIOÙ NEVEZ (kendalc'h)

PREDER, Kaier 127. GOUELER KELT, Deiziadur ar Sent, gant an Tad Turiav.

Ur goueler, pe ur c'halander eo eus sent ar broioù keltiek, o reiñ, evit pep deiz eus ar bloaz, anv ar sant pe ar sent enoret en deiz-se, gant un nebeut notennoù berr. Talvoudus eo an notennoù-se, a ziskouez da vihanañ piv oa pep sant, peur e veve, eus pelec'h e teue, h.a.

Ul labour savet gant evezh bras, o tennañ e vad eus al labourioù gwellañ ha gouiziekañ diwar-benn ar sent kelt.

(Priz ar c'haier-mañ, 5 lur ; PREDER, koumanant 12 niverenn, 48 lur. Kas an arc'hant da : PREDER, CCP.Paris 16 093 13).

SAV BREIZH, niv.1 (Genver-C'hwevrer)

Ur gelc'hgelaouenn bolitikel nevez, moulet-kaer. E galleg ez embanner an darn vrasañ eus ar pennadoù, hogen bez' ez eus pennadoù e brezhoneg ivez, en o zouez daou varzhoneg gant Youenn Gwernig.

(Daouviziek, koumanant-bloaz 30 lur. Kas an arc'hant da : SAV BREIZH, CCP.Nantes 525-59).

AN DIHUN

Ar gelaouenn viziek BREIZ a embann abaoe miz Meurzh ur stagadenn anvet AN DIHUN, e brezhoneg. Pal ar c'hannadig-se eo "kinnig a bep seurt danvez-lenn d'al lennerien, diwar-benn holl gudennoù ar vuhez a vremañ."

Reiñ a ra keleier eus Breizh hag eus ar broioù all, pennadoù Istor, barnadennoù war al levrioù nevez, h.a. Buhezek eo hag aes da lenn.


(Skrivañ da : J.C.Bozec, "Le Catelan", Place de la Victoire, 44-LA BAULE).

Roparz Hemon


=====

C.C.P.P. No.36.242.


Le Gérant : Mlle Y.Martin, 24, rue Poull ar Bachet, BREST.
Liesskrivet gant ar gelaouenn/Ronéotypé par la revue.



Kelaouenn viziek
 Niv.150 - Mezheven 1971
 "AR BED KELTIEK"
 24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST
 CCP.RENNES 1907-07




=====
 PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON
 =====



T a o l e n n

- 150 D'hol lennerien
- 151 Komz-plaen (Roparz Hemon)
- 153 Oaled Sant Erwan 1970
- 155 Maeannoù (Anjela Duval)
- 157 Galv-Diwall ar Skolioù Sonerezhel Broadel (J.Plouard)
- 161 Ar C'hastell gladdalc'hel (troet diwar
 Istor Breizh La Borderie)
- 166 Embannadurioù nevez (Roparz Hemon)
- 167 Ar miz (15 Ebrel - 15 Mae)
- 169 Al ligistri e Breizh (L.Andouard)
- 172 Re a breder gant plom ? (A.Heusaff)
- 175 Iwerzhoneg d'an daoulamm
- 176 Triskel bev (Anjela Duval)



D'HOL LENNERIEN

Diwar bremañ e vo staget AR BED KELTIEK ouzh AL LIAMM, dre englev etre an div gelaouenn.

An arc'hant a chom war gont pep koumananter eus ABK a vo kaset da deñzorier AL LIAMM, ha lakaet war e gont e kef ar gelaouenn-se.

Da skouer, ur c'houmananter da ABK en deus kaset dimp 20 lur da baeañ e goumanant adalek miz Genver 1971 a vo lakaet 10 lur war e gont e kef AL LIAMM.

Un den koumanantet dija d'AL LIAMM a c'halla eta diskontañ an arc'hant-se pa adnevezo e goumanant.

Unan ha n'eo ket koumanantet d'AL LIAMM a resevo niverennoù eus ar gelaouenn-se o klotañ gant talvoudegezh an arc'hant a chom war e gont e kef ABK.

Unan na fell ket dezhañ resev AL LIAMM a c'hell skrivañ da ABK (24, rue Poull ar Bachet, 29 N - BREST). Restaolet e vo dezhañ e arc'hant a chom war e gont. Pedet eo avat da skrivañ a-raok ar 1-añ a viz Eost.

Kavet e vo hiviziken war AL LIAMM an darn vuiañ eus ar pennadoù a vezer boas da gavout war ABK.

En ur drugarekaat ar re o deus hor skoazellet, e kontomp warno d'hor skoazellañ c'hoazh, bremañ ma vimp unanet gant AL LIAMM.

AR BED KELTIEK

KOMZ-PLAEN

gant Roparz Hemon

Evel en darn vuiañ eus al lennegezhioù, n'he deus ar gomz-plaen en hol lennegezh-ni graet he c'hresk nemet diwezhat, kalz diwezhatoc'h eget ar varzhoniezh.

Ar skridoù krennvrezhonek deuet betek ennomp a zo savet e gwerzennoù dreist-holl. Diskouez a reont e oa bet pleustret war arz ar werzadurezh pell amzer e Breizh, moarvat abaoe kantvedoù ha kantvedoù.

Oberoù e komz-plaen a oa ivez, levrioù relijion peur-getket. N'eus ket da grediñ e oa re all. Aozet int ken diampart ma c'haller lakaat ne oa ket a hengoun evel ma oa war dachenn ar varzhoniezh, da vihanañ evit pezh a sell ouzh al lennegezh skrivet. Hep mar e oa tud a ouie kontañ marvailhoù-pobl ken brav ha marvailherien-bobl an 19-vet kantved. Hogen ar marvailhoù-se, siwazh, n'int ket bet dastumet, hag aet int gant an avel.

Diwar an 18-vet kantved e kavomp komzourien-blaen barrek da stummañ frazennoù hervez ijin ar yezh, hep marmouzañ, - pa garont, - ar galleg pe al latin.

Charlez Bris, beleg, ganet e Lanouarne war-dro 1660, a voe hor c'hentañ komzour-plaen a dalvoudegezh. E oberoù stank, troidigezhioù dreist-holl, a zo savet en ur brezhoneg lennek, diazezet war rannyezh Leon. Pa lavaran brezhoneg lennek, e fell din lavarout ez eus urzh en doare-skrivañ hag er yezhadur. Trefoedach n'eo ket. Heuet e vezomp, pa lennomp e skridoù, gant ar gerioù "gouiziek" tennet hep an disterañ morc'hed diouzh ar galleg, gant al lavarennoù hag an islavarennoù pounner. Pa deurveze, avat, lakaat e bluenn da heuliañ pezh a darzhe war-eeun en e spered, skrivañ evel ma komze an dud en-dro dezhañ, e teue gantañ gerioù ha troioù-lavar, un dudi.

Ur beleg all, hemañ eus Bro-Wened, Marion, a zo bet, da'm soñj, hon eil komzour-plaen a bouez. Eñ ivez en deus graet dreist-holl troidigezhioù. Eñ ivez a oa techet da ober gant ur bern gerioù gallek. E vrezhoneg, avat, diazezet war rannyezh trowardroioù Gwened, a zo ken lennek, ken klasel hag hini Charlez Bris, ha buhezekoc'h egetañ. E dibenn an 18-vet hag e derou an 19-vet e veve. N'eus netra par d'e gomz-plaen en amzer-se. Emañ en he bravañ marteze e Magasin Spirituel er-Beurerion, divizoù, fentus alies, etre ul leanez ha tud vunut ur gêriadenn.

An daou-se, Bris ha Marion, ne voent ket diaraogerien e gwirionez. Tud war o lerc'h, zoken betek derou an 20-vet kantved, a gendalc'has da ober gant ur meskach gallek-brezhonek. Hini ebet, evelato, ne oa ennañ danvez ur skrivagner mat.

Diwar atiz Ar Gonideg, e bloavezhioù kentañ an 19-vet kantved, e tiwanas ur rummad skridoù, kalz anezho

e komz-plaen, awenet gant ur spered nevez. Skarzhet e voe ar yezh diouzh un darn vras eus ar gerioù gallek he displebere, klasket e lavar ar bobl troennoù-displegañ kreñv, buhezek ha livus.

Ar Gonideg e-unan ne oa ket gouest da gas da benn seurt kefridi. Ne oa ket ar brezhoneg yezh e gavell. E labour brasañ e komz-plaen, troidigezh ar Bibl, kalz gwelloc'h koulskoude eget na greder, a rae diouer dezhañ an anaoudegezh don eus an doareoù-lavar na c'hell bezañ gounezet nemet gant un den savet e-touez brezhonegerien. Ne vern penaos, ne voe embannet an droidigezh-se nemet e 1866, ha ne voe ket bras he levezon.

Diskibien Ar Gonideg, avat, a voe, kalz anezho, tud a oa ar brezhoneg yezh o bugaleaj. E-mesk ar gomzourien-blaen, e lakaan er renk kentañ Lan Inisan ha Gab Milin.

En oberenn vras Lan Inisan, "Emgann Kergidu" (1877), e tizhas ar gomz-plaen al live uhelañ he doa tizhet biskoazh. Den ebet, en 19-vet kantved, ne ouezas gwelloc'h egetañ displegañ un danevell, tresañ ha livañ an traoù en ur yezh c'hlan, pinvidik ha reizh war un dro.

Gab Milin, evel skrivagner, ne oa ket ken donezonet. Stummet-brav eo koulskoude e gontadennoù, evel re "Ar Marvailler Brezounek" (1870), ha kaer eo e droidigezh eus "Imitatio Christi", "Jezuz-Krist Skouer ar Gristenien" (1862), - an div oberenn-mañ savet gant kenlabour Troude.

Da gavout ur c'homzour-plaen par d'an daou-se, e ranker mont betek bloavezhioù kentañ an 20-vet kantved : Erwan Ar Moal, e anv-pluenn Dir-na-Dor. E tregerieg e skrive, hep teurel kalz pled, a lavare e-unan, ouzh reolennoù ar yezhadur. Ne vez ket mastaret e oberoù, koulskoude, gant gerioù gallek. Glanyezhour e oa, en un doare. Gouzout a rae dibab e rannyezh e gornad ar pep gwellañ, hag ur mailh e oa da ziskoachañ ar ger pe an droenn a glot rik ouzh ar menoz.

Skridoù mat e komz-plaen a baot el levrioù hag er c'helaouennoù embannet adalek kreiz an 19-vet kantved, savet evit ar bobl, en ur yezh a zo yezh ar bobl, distrouezhet pe beuzdistrouezhet diouzh ar galleg. Da skouer, oberoù ar skrivagnerien bodet en-dro da Feiz ha Breiz, Dihunamb, Kroaz ar Vretoned.

E derou an 20-vet kantved e tegouezhas un nevezinti, ragaroueziet e 1903 gant Spered ar Vro, kelaouenn Tangi Malmanche, ha boulc'het da vat e 1911 gant embannidigezh kentañ strobad an "Notennoù diwar-benn ar Gelted Koz", gant F.Vallee ha R.Ar Rouz. Ur gomz-plaen lennekoc'h a voe krouet gant tud desket evit tud desket. Darn hepken eus ar skrivagnerien a gomze brezhoneg a-vihanik. Darn o doa klevet brezhoneg komzet en-dro dezho en o yaouankiz. Darn all c'hoazh a oa gallegerien bet desket o yezh vroadel ganto evel ma tesker ur yezh estren.

Neb a venn hiziv skrivañ e komz-plaen a rank studiañ komz-plaen an amzerioù tremenet. Aes eo kavout levrioù ha kelaouennoù savet e brezhoneg lennek ar c'hantved-mañ. Ar skridoù a wechall, avat, ne vezont mui, al lod brasañ anezho, lakaet e gwerzh.

Ha koulskoude, muioc'h eget biskoazh, e tle ar re yaouank ober anaoudegezh gant ar skrivagnerien-hont a ouie ken brav brezhoneg bev ar maezioù, evit gounit un alberz da vihanañ eus gwir spered ar yezh.

Evit bastañ d'an ezhomm-se em eus prientet adembannadur "Ar Marvailler Brezounek" Troude ha Milin, dindan an titl "Labous ar Wirionez". Bremañ ma vezer a-zevri oc'h aozañ levrioù lennadurioù evit ar skolioù, e vefe mat kenderc'hel en hent-se. Diaes e e vefe, a dra sur, advoulañ levrioù tev evel "Emgann Kergidu" en o fezh. Padal e vefe tu da gempenn un teskad pennadoù tennet dioutañ, e stumm ul levrig evel re ar rummad STUDI HA DUDI. Hevelep tra a c'hallfed ober gant skridoù skrivagnerien vat evel Alan Durand, Y.W.Herri, Goulc'hen Morvan, Klaoda'r Prad, Per Martin, Y.V.Perrot, Loeiz Herrieu, ha re all.

Kembreiz o deus graet an dra-se : embann ur rummad marc'had-mat eus skridoù gwellañ an 18-vet hag an 19-vet kantved. E gwirionez, e pep bro e vez studiet er skolioù lennegezh, komz-plaen ha barzhoniezh, an amzer dremenet. Lavarout n'eus ket e brezhoneg pennoberoù bras n'eo ket un digarez. Bez' ez eus a-walc'h a oberoù dudies. N'eus nemet kemer ar boan da zastum anezho.

OALED SANT ERWAN 1970

Ar boaz a zo kemeret : div, teir gwech ar sizhun, tud a zeu ingal d'an Oaled.

Evit komz brezhoneg ? Ya. Hag evit kejañ gant mignoned, klevout o soñj, deskiñ, skoazellañ ivez, alies ...

Ar re-se a zo ar pileroù. Met lod all a zeu evit goulenn an dra-mañ-dra. A bep seurt : levrioù, pladennoù, deiziadurioù (evit envel babigoù, ar c'hiz 'zo, ket 'ta). Evit kentelioù ... Pe, evit netra. Dre guriustedm souezhet dirak ar stal gant levrioù brezhonek. Na plijus a-wechoù toullañ kaoz ganto ; na trist gwechoù all : tud kozh digalonekaet, tud dilabour, korkerien gaezh a zispleg o flanedenn o klask sikour.

Kinkladur ar gwitryn a gemm bep sizhun, aozet alies gant un arzour, den a vicher : P.Gwirieg. Ha neuze ken kaer e vez pe gaeroc'h eget n'eus forzh pe stal levrier eus ar ru Siam !

Diskouezet e vez levrioù, pladennoù. Gwechoù, staliet evit un degouezh : bruderezh evit "Galv O.LO.LE", evit Kelc'h Henstudi Bro-Leon, evit Gouel Nedeleg ; ivez,

da geñver prezegennoù : war Vro-Berou, war Vro-Iwerzhon, war savadurioù relijiel hor bro, h.a.

Meur a gaozeadenn a zo bet e-doug ar bloaz :

- "Emdroadur an obererezh kulturel er vro," gant Y.Olier.

- "An Emsav e Bro-Gembre", gant an Ao.Ar C'halvez.

- "Un dro e Bro-Iwerzhon", gant an It.Manac'h, gant diapozitivoù ha sonerezh keltiek.

- "Labour ar Stivell", gant G.Kreac'h.

- "Savadurioù Bro-Leon en argoll", gant F.Le Bot, skeudennoù luc'hvannet o harpañ ar prezegour.

- "Ur sell war an Andoù", gant an Ao.Troal, a ziskouezas taolennoù kaer deuet gantañ eus Perou.

Ar skol vrezhoneg kentañ hag eil bloavezh a gendalc'h ingal.

Gwerzhet ez eus bet levrioù, pladennoù, kelaouennoù, h.a., evit 1.541 lur.

Ul lodenn vat anezho a zo bet gwerzhet gant izili eus an Oaled, pergen H.Girardon, e-doug gouelioù a bep seurt, pe war ar blasenn. Salv e vefe kalz tud a seurt-se.

Un nebeud brav a levrioù ha kelaouennoù a zo bet amprestet e levraoueg an Oaled.

Ret eo implij hor yezh e pep degouezh, ar muiañ posupl er vuhez foran. Se a zo soñj tud Oaled Sant Erwan. Dre se, lod anezho a gemeras perzh a brezhoneg er bodadegoù graet evit envel kuzulierien-ganton, o c'houlenn traoù resis evit implij ar yezh. Selaouet ha respontet hegarat e voent bepred.

Lizhiri a zo bet kaset a-berzh an Oaled :


- Da holl veleien Vrest ha d'an Eskibien, evit lakaat sklaer dirazo stad reuzeudik brezhonegerien Vrest (anezhi brasañ kêr vrezhonegerrez a Vreizh a-bezh). Gant keuz bras, ret eo anzav e seblant bezañ evito ur gudenn didalvez : n'eus bet nemet ur respont.

- D'an Ao.Kemener, kuzulier-meur, evit ar c'hinnigoù graet gantañ d'ar C'huzul evit ma vo implijet, doujet hag enoret hor yezh e pep lec'h evel ma'z eo dleet.

- Da gadoriad ha da izili ar C'huzul departamant hag o deus votet a-du, o tiskouez emaint tost d'ar bobl hag e komprenont talvoudegezh hor yezh hag hor sevenadurezh.

Kalz skoazell hon eus resevet e-doug ar bloaz digant "Brudañ ha Skignañ", en deus hor sikouret evit ar bruderezh.

Bennozh dezho.



MAEENNOÙ

gant Anjela Duval

Hervez an almanakoù, emeur dija en nevez-amzer. Gwall abaf avat eo, 'm eus aon. Pe n'he deus ket kousket he c'hont a-hed ar goañv.

Betek-hen n'em eus ket gallet didoublañ c'hoazh, ha gaouiat eo bet ar c'hrennlavar er bloaz-mañ : "C'hoario Meurzh pezh a garo, ur c'hostez a'r c'harzh a dommo". Mil boan oa kavout roz-kamm evit gouel Sant Jozeb. Ar roz-kaouled a zo bet rouez-kenañ. N'eur ket sur da gaout delioù glas d'an deiz kentañ a Vae, nemet e vefe en un draonienn waskedet-mat eus tu ar reter hag ar biz.

Evel ma kouezh bemdez hini pe hini eus an hengounioù e Breizh, - hag e lec'h all moarvat, - kollet eo giz ar "maeennoù", da vihanañ em c'horn-bro. Ur c'hiz koant koulskoude : paotred yaouank o vont e fed an noz da glask ur vodenn faou nevez c'hlazet da lakaat dindan prenestr, - pe harp e dor-di, - e zousig ; ha trefu ar plac'h yaouank d'ar mintin dirak he "maeenn" !

Alies e veze un draig bennak ouzh ar bod : madigoù, ur seizenn, ur gartenn vrav pe bleuñv, pe an eil hag egile.

Ar peurliesañ oa un divinadenn gouzout piv ar c'hinniger, rak dreveziñ a rae e skritur pe lakaat ur c'hamalad da skrivañ en e blas. Gwechoù, ar memes paotr, pe zoken ur vandennad kanfarded, a lakae mae da gement plac'h yaouank a veze er c'hontre. Ar re-se ne lakaent nemet ur bod faou, ket a brof all. 'Oant ket gwir mae.

N'em eus bet em buhez plac'h yaouank nemet ur gwir "vaeenn", ha pell amzer am boa lakaet da c'houzout a belec'h e teue. Ur gartenn oa da heul hag un nebeut madigoù, am eus soñj. Ur gartenn gant peder gwerzenn eus Botrel :

Le Mai d'amour

O doux prodige, à l'instant même
L'arbuste bourgeonna, fleurit,
La belle s'écria : Je t'aime.
Mais Yann avait rendu l'esprit.

Ar Mae a garantez

O burzhud kaer,
Sed a-daol-trumm
Ar bod a vroñs,
Ar bod a vleugn.
Ar goantenn 'lavar :
me az kar.

Met Yannig paour
oa dija marv.

Ar skeudenn oa kaer ha fromus : ur plac'h yaouank gwisket-hir gant ur chal tartañ hag ur c'hoef 'giz Treger, o tigeriñ he dor, hag ur paour kaezh Yann, dilontret e zaoulagad, o kouezhañ war livenn e gein. Ur vaeenn, bleuniet ha kokardennet a-dreuz gantañ war boull e galon.

Ar "mae"-se oa evl ur pesk-ebrel. Ret divinout a belec'h e teuent. Ne deued ket atav a-benn da c'houzout.

Troioù vil zo bet c'hoariet meur a wech da verc'hed yaouank faeüs. Paotred warizius, evit ober mezh d'ur goantenn bet roet ganti kambrest dezho, a itrike traoù souezhus.

Soñj am eus : en ti nesañ amañ oa div blac'h yaouank gant o zad, ur c'hozhriad daoubleget ha brevet. Unan a'r merc'hed oa koant ken ma oa koant, ha laouen e vije bet meur a baotr yaouank d'he daremprediñ. Met figus oa-hi.

Ma. unan bepred ne gavas ket gwell da derriñ d'e gounnar eget plantañ ur vaeenn dezhi e beg ar siminal. Pa lavaran ur vaeenn, oa kentoc'h ur mell fagodenn spern paket-start ha chouket don e kan ar siminal.

Da veure, pa oa c'hwezhet an tan, takenn voged ebet n'ae er-maez. Ha bet oa un abadenn o tennañ kuit ar vaeenn difeson-se, a dra sur. Hag un tamm propr a zroug er paotr kozh 'vel just, ha mezhek an hini goant.

Ne glevan ken ar yaouankiz o komz eus lakaat mae. Ret anzav a-hend-all e vefe koll amzer ha kemer poan en aner evit ar gouerien yaouank, p'emaint-i ken disprizet gant ar merc'hed en deiz a hiziv. Gwelloc'h kalz ganto kemer pep a bilhaouer da bried. Chom a ra hor gwellañ paotred da gozhañ o-unan, pe e rankont plegañ da cheñch micher m'o deus soñj dimeziñ.

Un abeg bennak a zo evel just da gement-mañ. Poanias eo ar vuhez war ar maez evit ar gwraez, daoust ma'z eus bremañ binvioù da skañvaat o labour. Met an eil kont a zeu d'eben. Ker-ruz eo seurt mekanikoù, ha ret eo evit bevañ d'erc'hel kalz brasoc'h atant eget gwechall. Al lodenn vrasañ eus ar yaouankiz a guita ar vro !

Dont a ray da wir an istor farsus-mañ, am eus aon :

An Aotrou B..., eilmaer va farrez, deuet da welout al labourioù war an hent, a lavare din evel-hen :

"Ni 'vez war-lerc'h ordin," emezañ. "Pa oa ar c'hiz o tont eus ar mekanikoù da gannañ, ni oa o lakaat ober stankoù-kannañ. Bremañ, emamp o tigeriñ hentoù, p'emañ aet an dud kuit."

"Marteze 'vo 'hent an distro' evit darn," emezon.

"'Vo ket da," emezañ, "met dont a ray tud eus lec'h all."

"Eus kêr, mutu ? Gant ar seurt-se 'vo ket graet kalz berzh."

"O ! emeur o soñjal fredañ div pe deir batimant da vont du-hont d'ar broioù du da gerc'hat ur gargamant verc'hed yaouank. Lakaet 'vint war varc'had Kallag hag embannet : neb piv bennak a garfe kaout ur wreg, dont da ober o choaz ! Peogwir emañ ar c'hiz eus ar 'gwenn ha du'. Sede an dro-se 'vo e gwirionez 'gwenn ha du' hor bro !"

"Ar pezh a ray Brizhvretonez," emezon. "Met, n'eo ket un artikl da c'hoarzhin, er barezon emañ rentet ar vro."

Ha daoust ha ret e vo da baotred Vreizh aozañ
"maeennoù" evit morianezed ? Spi am eus e tigorero merc'hed
ar vro o daoulagad kent ma vo re ziwezhat ...

(3 Ebrel 1971)

GALV-DIWALL AR SKOLIOÙ SONEREZH EL BROADEL

gant J. Plouard

(Ur studi verr a-zivout ar sonerezh broadel a
Vreizh a venen skrivañ. Met, d'ar poent ma savan ar
skrid-se, e teuan en-dro eus Finlandia, ha ret din
lavarout, goude bezañ studiet sonerezh ar vro bell-se
gant aked, pegen souezhet ez on bet o welout talvoud-
egezh ar broadelerezh er sonerezh finnek, poblet pe
glasel e vefe. Setu, en abeg da se, d'ar menozioù ha
d'ar prevezelezhioù-se, perak em eus dleet pouezañ
kement war istor an arz er broioù estren. E gwirionez,
nebeud am boa da skrivañ diwar-benn Breizh, peogwir
e van pep tra da ober en hor bro).

Ar maread klasel a yae war ziskar. An arvesterion hag
ar selaouerion a zileze tamm-ha-tamm ar c'hoariganoù seven
ha c'hwek-se en devoa lakaet warnezho. Amañ e steuz flourder
farsus sonerezh ar spinetez. An dud-a-lez ne gorollont mui
ar menued. Mont a ra alaouradur kurunenoù ar briñsed e
poultr.

E dibenn an triwec'hvet kantved emamp. A-bell e
c'hwezh un avel greñv, avel an dial, avel ar reveulzi.
Bez' e tarzho ar reklom-se war Europa en he fezh. Eus ar
rouantelezhioù kreñvañ betek ar c'hontelegezhioù bihanañ,
hini anezho n'en devezo tu da dec'hout dioutañ. C'hwezh
spontus ar romantelezh eo, a vo gwrizienn ar skolioù broadel.

Sonerezh klasel an amzervezh-se ne gemere awenrezh
ebet en hini ar bobl. Renet e oa gant reolennoù strizh
ar c'hensonerezh tonek (talvoudegezh-dreist kentañ, pevarvet
ha pempet derez ar skeulenn, da skouer) hag ar gendonouriezh
(aozadur enrackaet ar seizhvet notenn er c'hendon war ar
pempet derez, da skouer). Zoken pa gavomp hiziv ar sonerezh-
se ken skañv ha ken plijus, ret dimp gouzout ez eo bet
savet diwar seurt reolennoù. Hogen, ret eo hen anzav,
damskuizh e oa ar sonaozourion gant seurt sonerezh savet
evit an uhelidi, na raent anezho nemet servijerion,
lakizion eus ar re izelañ.

Ganedigezh ar romantelezh er sonerezh

Neuze e kresk er sonaozourion ar c'hellid aloubus, hag o c'haso da azeulerezh ar "Me". Dija ne glot mui ar c'heal kentañ-se gant perzh sonerezh an amzer. En abeg da se e vo kaset kuit meur a sonour diouzh chapel e briñs (evel ma c'hoarvezas gant Mozart e Salzburg).

Er broioù germanek ez anver an emsav-se "Sturm und Drang", a zo un emsav lennegel, sonerezhel (arzel dre vras) ... ha politikel ivez, liammet ma'z eo gant ganedigezh ur gevredigezh "pobleloc'h" (dreist-holl ha da gentañ e Bro-Alamagn). An emsav bras-se a lakay ar sonaozourion da gejañ gant prederourion vrudet, a vo o fal boutin dizoleiñ teñzorioù kozh o sevenadurezh. Eno e kavint danvez da skrivañ.

E 1811, e sav Beethoven e c'hoarigan "Egmont", a ziskler brogarantez kadarn kont Egmont, a glaskas sevel, e 1587, an Izelvroioù a-enep aotrouniezh ar Spagniz hag a voe dibennet. Setu ur skouer eus awen ar sonaozourion romantel. Reoù all, evel Weber ha Mendelssohn, a fello dezho mont war-du an huñvreoù boemarvestus, ma vez komzet eus korriganezed, erevent, morganezed, hag all. Un niver bras eus c'hoariganoù Wagner (Trestan hag Izold), hag Ar Flem (Strobinellerezh ar Mor) a zo bet skrivet diwar seurt danvez. Lezel a ra an dud-se o spered, o ijin, da rambreal en ur vro a huñvreoù diwirion, a vojennoù, ma vev ur bern tud ha loened iskis.

Ur skouer vrav a zo er c'hoarigan "Roue Iz". Daoust dezhañ da vezañ graet berzh diouzhtu, "Roue Iz", savet e 1879 gant Lalo, a hañval bezañ aet un tamm war goshaat, kerkoulz en abeg d'e zanvez hag en abeg d'an digempouez etre dellidoù gwirion ar sonaozour hag an ijin kreñvoc'h goulennet gant al leurenn lourennel. An digoradur, gant e unc'hoariad hir a c'hourrebed, a zo ar pezh manet ar brudetañ eus ar c'hoarigan-se ; hag ar gwellañ enebenoù a zellez bezañ degaset da soñj, dreist-holl daouadoù Rozenn ha Marc'harid, al lazoù-kanañ breizhat, ha daouad Milio ha Rozenn (zoken er skrid-c'hoarigan gallek e kaver kalz gerioù brezhonek, evel an anvioù-mañ). Abred a-walc'h e vanas koulskoude renerion ar c'hoarigandioù hep reiñ ul lod d'ar c'hoarigan-se, ha ne deo nemet nebeut amzer kent marv ar sonour ma voe dedennet ar selaouerion gantañ, evit gwir.

Petra eo an emsav nevez-se ?

Emsav ar Skolioù broadel ne zeuas ket anezhañ e-unan : un enebemsav ez eo. E kalz broioù Europa, dreist-holl er re nevez deuet d'o frankiz, en em ziskouez an enebemsav-se dre implij ar yezhoù broadel.

Ar c'hoarigan "Ar Gefriza werzhet" gant Smetana a zeuas e skrid e tchec'heg d'an 30-vet a viz Mae 1866.

(Kemeret e vez an deiz-se da zeiziad-ganedigezh ar sonerezh tehec'hek broadel).

Un nebeud goude, e Finlandia, e sav Oskar Merikanto ar c'hoarigan kentañ e finneg, "Merc'h an Hanternoz", diwar g"Kalevala".

En Hungaria, e teu er-maez e magyareg "Kastell Paotr e Varv Glas", gant Bela Bartok (1911).

Ar broioù-se a zo en em savet a-enep yezhoù estren evito, a-enep an alamaneg peurliesañ, a oa d'ar mare-se yezh ar waskerion ; pe ivez dre bennabeg un eneberezh bennak. Neuze, kalz c'hoariganoù a zeuas da vezañ troet e yezh ar vro ma oant displeget enni. Evit ar yezh hec'h-unan ez eo ur gounid a dra sur, met, evit ar sonerezh, ez eo un druez. Bez' e ouzer e tle ar c'homzoù en ur c'hoarigan klotañ gant ar sonerezh. Evel-se er pennoberoù savet gant Gluck, Mozart pe Wagner. Met, ur wech troet, e kouezhont da zistervez, rak eus an droidigezh-se e sav un digempouez etre gerioù ar skrid ha notenoù al levr-c'hoarigan, na c'hell ket bezañ gouzañvet gant divskouarn desket.

Douc ra viro ouzh hon troourion da ober seurt distruj ! Mar fell dezho meuliñ ar brezhoneg, ra veulint ivez ar yezhoù all estren ... D'ar Vreizhiz da sevel c'hoariganoù brezhonek !

Goustad-goustad e tihune en Europa an emsav-mañ, maget gant broadelerezh ha karantez ouzh sevenadurezh ar gourdadoù meur.

Hag e Breizh ?

Hogen kement-mañ n'hon eus ket e Breizh, ha n'hor bezo ket feteiz.

Perak ? Pegoulz e c'hoarvezo kement-mañ en hor bro ? Ha kavet e vo sonaozourion ken kalonek hag er broioù am eus komzet anezho uheloc'hik ?

Da gentañ, n'eus ket e Breizh a hengoun sonerezhel klasel. N'eus hini ebet. Hep mar hon eus en hon amzer dremenet ur sevenadur sonerezhel keltiek, ya, met aon am eus na vefe kollet da viken. Rak, diouzh un tu n'hon eus skrid sonerezhel ebet eus ar maread-se, ha diouzh un tu all, ne deo ket o vinoaouañ nag o telennañ e reer sonerezh keltiek.

Un taol-arnod en doa graet Liszt e Hungaria, o klask adsevel sonerezh poblel kozh e vro. Daoust dezhañ da vezañ addizoloet darn eus doareoù-skeul hollzerez ha pemptonek an Dziganed, ne zeuas ket a-benn, peogwir e oa re levezonet gant ar sonerezh alaman. Gant Bartok ha Kodaly e teuas an trec'h diwezhatoc'h, pa ergerzhent Hungaria en he fezh, en ur glask tammoùigoù eus un hengoun poblel gwirion. An hevelep labour eveshaus-se a voe graet gant Uno Klami ("Danevellgan kareliat") e Finlandia.

Alies ez eo bet rebechet gant songarourion a zo d'ar sonaozourion bezañ bet re vroadel, ha n'eo ket

hollvedel evel ma tleje dezho bezañ bremañ, evel ma lavar ar skridvarnour Leibowitz e-unan.

Da se e respontor e heuilhjont un emsav europat a adsavadur broadel (kentoc'h e lavarfen e voent holl kemeret dre heg ennañ). An emsav-se a sell ouzh pep framm eus ar sevenadur hag ar politikerezh ouzhpenn.

E Polonia, e 1919, e teuas ar sonaozour ha pianoour-dreist Paderewsky da vezañ e penn gouarnamant ar vro, ha drezañ e-unan e teuas d'he frankiz. E Finlandia, e sell ar bobl ouzh Sibelius evel ouzh unan eus brasañ dieuberion ar vroad. Skouerioù a c'hallfed reiñ gant Grieg e Norvegia, Peter Benoit e Belgia a yezh flamankek. En Antwerpen e krouas ur skol-sonerezh ma reer enni gant ar flamankeg hepken ; bremañ ez eo deuet da "Skol-Sonerezh Roueel". (Seurt skol-sonerezh a ra diouer kenañ e Breizh ; klask a raimp kaout unan, deiz pe zeiz).

Penaos e c'hoarvezo an traoù ganeomp ?

En holl vroioù meneget uheloc'h e oa liammet daou zarvoud : ar mennad politikel hag ar mennad arzel ; diaes-tre ez eo gouzout pehini a lakaas egile da ziwanañ. Bez' e kredor kentoc'h e teujont a-gevret.

Da lavarout eo, mar kemencromp Polonia a-raok mare he dishualder, da skouer, e welomp, en amzer romantel ar c'hantved tremenet, sonaozourion o furgutañ ar c'hanaouennoù kozh war ar maez, c'hoant dezho o lakaat e-barzh o oberennoù (ur bern anezho a zo bet binviaouegeget evel "Leit-motiv" er gensonadeg-mañ-kensonadeg).

Met, a-wechoù (amañ emañ an eil tu), e krog an diorroadur arzel broadel goude, nemet goude, an dishualadur politikel. E Breizh e vefe tro da grediñ e c'hoarvezo an dra-mañ, peogwir ne vo ket saveteet hor bro gant bagadoù ar viniaouerien, c'hwi 'oar !

Bez' e prizomp holl sonerezh Bach, Schumann pe Stravinsky. Hogen hep dimp bezañ tuet d'un estrengasoni bennak, rak n'eus ket anezhi pa garer ar sonerezh, klaskomp klevout oberennoù hor pennañ sonaozourion. Diaes a-walc'h ez eo kavout anezho (levrioù-sonerezh pe bladennoù) er stalioù. Met talvezout a ra ar boan klevout "Oferenn Verr da Enor Santez Anna", gant Roparz, va c'hredit !

Un nevezadur a c'hwezh koulskoude war ar sonerezh keltiek, abaoe amzer ar romantelezh. Kalzik sonaozourion o deus pleustret war an danvez-se. Skrivet o deus oberennoù en doare keltiek, daoust na oant ket Kelted, an darn vuiañ anezho. Bez' ez anavezet an "Ecosaises" evit piano gant Beethoven (e gwerzh e ti Peters) ha Chopin (ti Durand), ar "Ganenn-Vale" gant Debussy (evit piano ivez, met evit daou sonour a-gevret, e ti Jobert), a garas kement Breizh ma savas "Ar Mor" : "... e neblec'h n'em luskell ar mor gwelloc'h eget amañ."

Nevez 'zo hon eus klevet anv eus "Daou bezh iwerzhonat" (evit piano, daou rebed, rebed-boud, gourrebed, gourrebed-boud, e ti Peters), savet gant Erik H.Thiman, hag eus "Danevellgan breizhek" (evit saksofon, e ti Leduc), gant Bariller.

Darn anezho a vez anavezet mat a-walc'h, ha spi a c'hellomp mirout e vo tu, gwech pe wech, da gaout ur bladenn gant sonerezh klasel keltiek warnezh.

Koulz lavarout ez eo deuet holl sevenadurezhioù sonerezhel Europa d'o dihun er c'hantved tremenet. Gwelet hon eus e oa mare un emroadur bras-kenañ. Hor sevenadurezh (sonerezhel) n'eo ket c'hoazh dihunet. Met, aze ez eus un digenveizad. Daoust d'he c'houisk hir, Breizh n'he deus ket a c'hounid, peogwir ez eo tremenet amzer ar galv-diwall. N'emaomp dija mui e mare al liesvroadeg. Ar gudenn eo stagañ ar broadelerezh ouzh hollegezh ar Sonerezh a vremañ.

(Miz Eost 1970)

Notenn d'ar songarourion. - D'an ampoent e klevan anv eus Anna Kefeleg, ur bianourez-dreist yaouank, he deus gounezet ar "Priz Kentañ d'an Unvouezh" en "Internationaler Musikwettbewerb" e München. Aozet ez eo ar "Sonerezh-kenstrivadeg Etrevroadel"-se gant "Ti-Skingomz ar Republik Kevredel a'r C'hornog". Na dreistat kannadurezh a Vreizh eus hon arzourion !

AR C'HASTELL GLADDALC'HEL

troet diwar
Istor Breizh
La Borderie
(Levrenn III)

Pennlec'h an aotrouniezh a zo lojeiz, lec'h-annez, mar karit kastell an aotrou.

Hogen alies, en 11-vet kantved dreist-holl, ne oa ket gwall veurdeus ar c'hastell-se. Bez' e oa anezhañ un tour, peurliesañ e koad, ha n'eo ket e maen, e krec'h un dosenn uhel pe uheloc'h.

Diwar zorn den e oa an dosenn-se peurvuiañ, pe sershaet diwar zorn den e oa bet an tuioù anezhi. Al lodenn vrasañ e oa eus ar c'hastell en 11-vet kantved.

Evit kaout un alberz eus unan, n'eus nemet sellout ouzh skeudenn kastell Dinan e 1065, hervez pallenn-moger Bayeux, hag an taolennadur hon eus roet anezhi.

An dosenn dindan an tour a veze anvet "krugell aotrouniezhel". Bremañ e lavarere kentoc'h "krugell c'hladdalc'hel".

Disheñvel-tre e oa ment ar c'hrugelloù-se. Darn o doa 20, darn 30, darn 50 troatad a uhelder, ha diouzh an uhelder e kemme an treuzkiz.

Unan eus ar re uhelañ e Breizh oa hini Vonforzh, rezet hanter-kant vloaz 'zo evit sevel an iliz nevez ; nebeut amzer a-raok ma voe distrujet-krenn, em eus gwelet pezh a chome anezhi, hag a save c'hoazh betek war-dro 30 troatad a uhelder. En abeg d'he ment dibar e oa bet anvet ar grugell-se Mons Fortis.

Tro-war-dro d'ar grugell e oa ur foz gant kaelioù-peulioù start. Harp ouzh ar grugell hag an tour e oa ur c'hlozadur, pe vuioç'h, graet gant mogerioù-douar tev, warno kaelioù-peulioù ivez, alies kenweet-dizirouestlus o skourroù. Da ziwall ar c'haelioù-peulioù-se e oa c'hoazh fozioù.

Eno, er gourizadoù-kreñv-se, en em repue en amzer a vrezel gwizien ha sujidi an aotrou, hag a sikoure difenn ar c'hastell.

A-wechoù e veze savet ar c'hastell en ul lec'h ken kreñv dre natur ma ne oa ket ezhomm e greñvaat c'hoazh gant ur grugell. Da skouer, kastell Gwizhurig, kludet etre div draonienn war ur balirad reier serzh. Ivez kastell Felger, diazezet war un dorgenn roc'hellek a save eus strad ur stankenn aes he beuziñ hag he zreiñ da lenn pe da c'heun didreuzus.

Pe e oa ur grugell pe ne oa ket, en 11-vet kantved e saved ur c'hastell en un draonienn peurliesañ, evit gallout herzel ouzh an enebour da dostaat, dre lakaat dour pe lagennoù tro-war-dro. D'ar mare-se e oa ken dister an danvez rekis da dagañ ur c'hreñvlec'h, - ne oa nemet bangounelloù ha bannerezed landrammus ha berr o hed-tenn, - ma oa tu d'ur gwarnizon gwan, klenket en ur c'hre bihan e-kreiz ul lagenn, da zerc'hel penn keit ha ma oa bitailh. Ne c'halle bezañ trec'het nemet dre gaclerezh, dre drubarderezh, pe dre un dro-widre bennak.

Dibaot a wech e veze graet an tour bras e maen. Hogozik atav e veze graet e prenn, evel an difennoù all. En aktaoù e kaver ur brouenn iskis a se. E bloavezhioù kentañ an 11-vet kantved, Guethenoc, kentañ beskont Pourc'hoad a-raok 1008, a guitaas e gozh ti gladdalc'hel, anvet Kastell-Tro, e Gwilier, evit mont d'ober e annez war ribl an Oud, hag eno e savas ur c'hastell kalz brasoc'h, a zo hiziv Josilin. Fellout a reas dezhañ ma vije binniget e di nevez, hag e c'halvas menec'h Redon. Evit boulc'hañ ar savidigezh, n'eo ket ar maen kentañ a lakaas war an douar, nemet ur peul, un tamm koad, a sankas "evit ober diaz e gastell, hervez ar boaz", a skriver en diell.

An tourioù-meur

En 12-vet kantved e voe kresket kalz kreñvder hag hed-tenn an ijinoù hag an armoù-bann (gwareg hag arbalastr), ha ret e voe kreñvaat an emzifenn ivez.

E-lec'h tourioù koad pintet war grugelloù, e savjod dre-holl tourioù maen, tev, uhel-bras : an tourioù-meur.

A bep stumm a oa anezho : karrezek, kelc'hiek, eizhtuek, c'hwec'htuek, h.a. Ken uhel e oant ma ne oa mui ezhomm o lakaat war grugelloù. En amzer-se, peurliesañ, e voe dilezet pe zistrujet ar c'hrugelloù gladdalc'hel. Da ziwall ouzh un taol-soupren, avat, ne oa na dor na digoradur e traoñ an tour meur. Evit mont e-barzh e lakaed ur skeul ouzh ur prenestr er c'hentañ solieradur, hag ar re a bigne a denne neuze ar skeul-se war o lerc'h.

Ar c'hlozadur-diavaez en-dro d'an tour-meur ne oa mui pourvezet gant koad, bev pe varv. Graet oa gant murioù maen start, enno tourioù bihan alies.

Mui-ouzh-mui e prized lec'hiadurioù serzh hag uhel. Koulskoude, kement hag en 11-vet kantved e kared hag e kaved ret zoken kacout dour tro-war-dro, o krediñ e oa emsav evit pellaat un argader diouzh ar c'hreñvlec'h.

Tour-meur Tremazan

Bez' e weler c'hoazh e Breizh kalz krugelloù gladdalc'hel, chomet diwar-lerc'h kestell an 11-vet kantved. Er c'hontrol, e weler nebeud eus tourioù-meur an 12-vet. Ne van anezho nemet dismantrou diaoz.

Tour-meur Tremazan koulskoude, pennlec'h aotrouniezh ar C'hastell (e Bro-Leon), a vir e stumm dre vras, hag e sav e vogerioù tost difreuz betek 30 m a uhelder.

Setu amañ penaos eo bet taolennet gant un arvester mat, an Ao.Charlez Keranflec'h :

"An tour-meur karrezek, e kostez talad-moger ar c'hornog, a zo anezhañ ur savadur a bemp solieradur, e mein-pastur greunvaen sklentek, aozet evezhiek a-walc'h, gant kognoù mein-benerezh. Diazezet eo war ur grugell diwar zorn den, he sichenn graet gant savennoù mañsonerezh, evit herzel ouzh un arsailher da grapañ pe da doullañ. Iskis eo an tour-meur-se, o vont kalz war strishaat eus an traoñ d'an nec'h, ha se eo a verzer da gentañ. Ken strizh eo ar pempvet solieradur, e-keñver an darn izelañ, ma'z eus bet tu da ober un hent-tro-ged, n'en deus bet biskoazh avat na kranelloù na balegoù-tarzhell. Tostik a-is d'ar mein kompez a ra pavezadur an hent-se, ez eus un heuliad toulloù karrezek, a ya un tammig en tu-hont d'ar voger e-giz ur rizenn, o tiskouez ez eus bet eno ur palier koad, evel ar re e boaz betek an 13-vet kantved. N'eus skouer all abet e Breizh eus seurt palier. E darn eus an toulloù karrezek-se e chom c'hoazh aspadennoù eus an treustoù a zouge anezhañ.

"An nor a oa en derou er c'hentañ solieradur. Evit mont tre e raed gant ur skeul lem-laka, a veze sachet war o lerc'h gant difennerien ar c'hreñvlec'h, ur wech deuet e-barzh. Adkavout a c'haller zoken an nor-se : un digor gant ur gourin karrezek, diginkl, a weler e talbenn ar reter, a sko ouzh ur porzh-diabarzh. Hiziv ez eer en tour-meur

dre un nor grommvegek e rez-an-douar dres a-is d'an digor-se. An nor grommvegek a zo bet toullet hep mar diwezhatoc'h, koulz hag an daou brenestr a-gleiz hag a-zehou dezhi. Da bignat betek ar solieradurioù uhelañ e oa derezioù e korf ar voger, na c'haller ket hiziv tremen drezo."

Tour-meur Koadmen

Tour-meur Koadmen, ken kozh war-bouez nebeud hag hini Tremazan, hogen kalz dismantretoc'h bremañ (mar chom c'hoazh), a save war gribenn un dorgenn noazh ha krin, kanttroatadoù a-zioc'h un draonienn fresk, al Lev o troidellañ en he strad.

Un tour tev e oa, iskis e furm, pintet war ur grugell hirgelc'hiek, darn anezhi naturel. E 1852, ar mogerioù, dezho 4 m a dreuz, o devoa c'hoazh un 20 troatad bennak a uhelder. Pempkognek e oa en diabarzh, hogen tu-diavaez ar voger a oa graet gant ur rummad talbennoùigoù strizh pe strishoc'h, e seurt doare ma raent tost ur c'helc'h. E rez-an-douar e oa un nor grommvegek a zigore ouzh ar reter. An digoroù er c'hentañ solieradur, avat, a oa kromm o lein.

Tourioù-meur all

Meneget ez eus bet ivez aspadennoù diwar dourioù-meur graet e maen, eus an 12-vet kantved hep mar, da skouer e Chevre e Beuzaer, kastell kozh baroned Wizhurig, e Luzuenn e Nizon, e Kastelleg e Pleuigner, h.a.

N'eus mui anezho avat nemet dismanthroù distumm. A-zivout tour Menez-Bran e Plouboul, e pastell-vro Dinan, e tleer lenn Geslin ha Barthélemy, "Eskoptioù Kozh Breizh", VI, p.110, ha Guillotin de Corson, kounskrid diwar-benn "Komanderiezh Werc'h" (Assoc. Bret., Kendalc'h Roazhon 1897, Henoniezh).

Kastell Lehon

En diwezh, e rankomp komz eus ur c'hastell eus an 12-vet kantved, hag eñ hep tour-meur abaoe pell.

Anezhañ e chom dismanthroù dedennus, dibar, a zo bet meneget alies en Istor-mañ : kastell Lehon, e-kichen Dinan.

Savet eo war un dorgenn naturel uhel-tre, troet, diwar zorn den, dre droc'hañ ha sershaat ar vri anezhi, d'ur grugell c'hladdalc'hel ramzel. Gwelout a reer aspadennoù ur c'hlozadur hirgarrezek, un tammig hiroc'h eget ne deo ledan, ennañ eizh tour, unan e pep korn, hag unan e-kreiz pep talbenn. An daou dalbenn hirañ a sell ouzh ar reter hag ouzh ar c'hornog, o hed war-dro 100 pe 110 m. An daou dalbenn all, tro ouzh an hanternoz hag ouzh ar c'hreisteiz, n'o deus nemet etre 80 ha 85 m a hod.

E 1681, setu amañ e pe stad edo ar c'hreñvlec'h kozh, hervez un akta gwiriek :

"Kastell kozh Lehon, gant eizh tour en-dro d'ar murioù, hag un tour-meur e-kreiz ; ivez pennadoù mogerioù, darn en o sav ha darn dismantret ; er c'hastell-se ez eus bremañ ur frouezheg a war-dro 2/3 devezh-arat. Gant an douaroù fraost stag outañ e talc'h 2 devezh-arat, 1/3 devezh-arat ha 16 kordennad ; harp diouzh un tu ouzh Stank an Dug," h.a.

Ne chom mann eus an tour-meur, diskaret er c'hantved tremenet. An "douaroù fraost" a zo tuioù ar grugell a voe savet ar c'hreñvlec'h warni. Gorread ar frouezheg a zo gorread-diabarzh ar c'hastell, da lavarout eo 32 pe 33 arad. Ar muzulioù roet amañ evit pevar zu an hirgarrezenn a zo bet kemeret a-hed troad ar murioù en diavaez. Ar gorread goloet ganto a zo kalz brasoc'h eta eget ar gorread-diabarzh.

En amzer-mañ c'hoazh e sav diaz ar murioù-tro betek 10 pe 12 troatad a uhelder. Klok eo e pep lec'h, ha klok eo ivez diaz seizh eus an tourioù. N'eus nemet an tour e-kreiz talbenn ar reter hag an tour-meur a zo aet da get.


E 1836 e skrive Mérimée :

"A dour da dour ez eus a-boan hed-taol ur maen. Tourioù ken tost an eil ouzh egile a zo merk ur savadur-kreñv eus an amzer gozh. Tevder ar murioù, an doare m'int aozet, hirder an tarzhelloù, graet anat evit tennañ gant ur wareg ha n'eo ket gant un arbalastr, ivez un nor hag ur prenestr, o lein war hantergelc'h, en tour a zo bet miret gwellañ, a ra din krediñ pezh am boa martezeet a-raok : kastell Lehon a dle bezañ bet savet en 11-vet pe en 12-vet kantved."

Aozadur mein an tour a zo dister a-walc'h ; berr-tro eo treuzkiz an tourioù ; an nor hag ar prenestr meneget gant Mérimée a ya re war ledanaat en diabarzh, evel ma oa ar c'hiz en amzervezh romanek ; seurt ledadadur-diabarzh a verzer ivez en tarzhelloù, na reont en diavaez nemet ur faout strizh, a 3 m a hirder a-wechoù.

Kement-se a ziskouez e voe savet kastell Lehon a-raok an 13-vet kantved. Hag e gwirionez, ar c'hreñvlec'h-se, diskaret e 1169, a voe adsavet un nebeut bloavezhioù goude.

O vezañ n'eus ket e Breizh ur c'hastell bras all eus an amzervezh romanek chomet klok e glozadur, daoust d'an dismantr, a c'hell reiñ da intent penaos e veze aozet seurt kreñvlec'hioù d'ar mare-se ha pegen start e oant, e oa ret tresañ un daolenn anezhañ, ken resis ha ken pervezh ha ma c'halled.



EMBANNADURIOÙ NEVEZ

gant Roparz Hemon

HERVE HA NORA, levr kentañ, gant A.Ar C'halvez
(SKOL,niv.46).

Ul levr nevez da zeskiñ brezhoneg. Hag unan eus ar re wellañ, moulet-sklaer dre "offset", ennañ 30 kentel ha 6 lennadenn, ur geriadurig ha notennoù yezhadur, gant ur golo plijus, leun a dresadennoù koant, darn anezho e liv.

Aes eo gwelout ez eo bet savet gant un den a oar kelenn. Pep kentel a zo berr, dudius, aozet e seurt doare ma tesker ar gerioù hep poan, ha ma teuer da voazañ ouzh ar yezh hep bezañ chalet gant reolennoù yezhadur.

Evit bugale yaouank eo graet dreist-holl, "evit ar re a gomz brezhoneg, ar re a gompren ar brezhoneg, hag ar re na gomprenont ket ar brezhoneg".

Merkit ez eo an dra-se un nevezinti. An dornlevrioù embannet er c'hantved-mañ a zo graet evit gallegerien, tud a rank deskiñ o yezh vroadel evel ma tesker ur yezh estren. Souezhet on bet alies o soñjal n'en doa den ebet klasket sevel ul levr evit deskiñ lenn ha skrivañ brezhoneg d'ar vrezhonegerien (nemet, ma ne fazian ket, P.Denez en e levrig-deskiñ-lenn). Sevenet eo al labour en diwezh.

Un dra all. Klotañ a ra al levr, skrid ha skudennoù, ouzh ar vuhez arnevez. Ne weler ennañ na koefoù, na bragoù-bras, na gweleoù-kloz. Ne zouger ket eta spered ar bugel da stagañ ar brezhoneg ouzh an traoù a wechall. Emaomp en amzer bremañ.

Spi am eus e vo lakaet "HERVE HA NORA" e kalz skolioù kentañ derez. Implijet e vo ivez hep mar gant ar gelennerien a ren rummadoù-kentelioù, gant tud a zesk o-unan, gant ar re o deus desket un tammig brezhoneg hag a fell dezho startaat o anaoudegezh eus ar yezh hep torr-penn.

Gortozet e vo gant mall an eil levr, a dle dont er-maez dizale.

(Priz, 6,00 lur dre ar post ; 33% distaol pa brener 10 skouerenn pe vuioc'h. Kas an arc'hant da :

Revue SKOL, CCP.Rennes 1911 06.

Diwar vremañ e c'haller rakprenañ an eil levr :
ur skouerenn 6,00 lur dre ar post ; 5 skouerenn,
25,00 lur ; adalek 10 skouerenn, 4 lur pep skouerenn.

Chomlec'h ar gelaouenn SKOL : Crec'h-Avel,
22-LANNION).

PREDER, kaier 128-129. DAFAR GERIADUR AR YEZH ARNEVEZ

Un eil strobard gerioù nevez krouet, lakaet war follenoù a c'haller troc'hañ en doare d'ober fichenoù, gallek-brezhonek ha brezhonek-gallek.

Ul labour bras eo, ul labour graet aketus, a roio harp d'ar re a fell dezho lenn embannadurioù S.A.D.E.D., EMSAV ha PREDER, ha d'ar re a fell dezho skrivañ war zanvezioù chomet, betek ar bloavezhioù diwezhañ, er-maez eus tachenn hor yezh.

Ar gerioù nevez krouet gant Vallee hag e ziskibien a oa peurluviañ stummet gant elfennoù anavezet-mat. Dre se, ez int aes a-walc'h da gompren diouzh ar c'hentañ sell. Un darn vat eus ar gerioù krouet gant S.A.D.E.D. a zo graet gant elfennoù dianav d'ar re n'o deus ket studiet ervat an henvrezhoneg, ar c'hrennvrezhoneg hag ar yezhoù keltiek tramor, dreist-holl ar c'hembraeg. Dre se ne vezont ket komprenet diouzhtu, ha kavet e vezont gant kalz tud ken iskis ha gerioù ur yezh estren.

Krouiñ ur c'heriaoueg hollvrezhonek evit bastañ da ezhommoù ar vuhez arnevez a zo, hervez tud 'zo, kemer kalz poan en aner. Koulz e vefe, emezo, ober evel ma ra yezhoù all ar bed, tost gwitibunan : amprestañ gerioù etrevroadel. Daoust ma kredan-me e ve gwelloc'h a-wechoù kemer ur ger etrevroadel eget ar ger kinniget amañ, e ouzon ivez n'eus ket atav a c'her etrevroadel a glot rik gant ar pezh a venner displegañ, ha neuze e ranker krouiñ ur ger broadel.

(12 niverenn : 48 lur. Kas an arc'hant da : PREDER, CCP.Paris 16 093 13).

=====

AR MIZ

(15 Ebrel - 15 Mae)

Kenvarc'had Europa Enkadenn voneizel en Europa. Goude ur vodadeg eus ministred an Arc'hant 6 Stad ar C'henvarc'had e Brusel (8 Mae), e voe aotreet gouarnamant Reteralamagn da lezel an Deutschmark da "neuennat". Beuzet oa bet ar marc'had moneizel alaman abaoe ur pennad gant dollared, ha ne c'halle mui feur ar mark chom difiñv e-keñver an dollar. Gouarnamant an Izelvroioù a lezas raktal e voneiz da "neuennat" ivez. Helvetia hag Aostria a ad-talvoudekaas o moneiz.

Frañs he doa nac'het kinnig gouarnamant Bonn : lezel moneiz holl Stadoù ar C'henvarc'had da neuennat war un dro.

Un taol grevus a zo bet skoet eta da gempouez ar C'henvarc'had, hag e vo daleet kalz unanidigezh ar moneiz en Europa.

Kembre Seizh ezel eus "Kevredigezh ar C'hembraeg" a zeuas dirak al lez-varn en Abertawe d'an 3 Mae. Un tregont bennak eus o c'heneiled a reas trouz. Azezañ a rejont dirak an ti evit mirout ouzh ar varnerien da vont er-maez da greisteiz. Unan eus an damallidi, Dafydd Iwan, a lavaras dezho sevel, rak ne dalveze ket ar boan, emezañ, bezañ harzet da zeiz kentañ ar prosez.

Rebechet oa d'ar seizh den-se bezañ saotret pe zis-trujet arouezioù-hent skrivet e saozneg.

Dizurzh a voe a-hed ar prosez, a badas betek ar 14. En deiz-se e voe kondaonet pemp eus an damallidi da ur bloaz prizon, hag an daou all da dri miz, holl gant dale-kastiz a dri bloaz. Da lavarout eo, mar greont tra pe dra a-enep al lezenn ac'han da dri bloaz, e rankint gouzañv o c'hastiz, ouzhpenn nep kastiz all a c'hell bezañ lakaet warno.

RETERALAMAGN Walter Ulbricht a zilezas e garg a Gentañ Sekretour Kostezenn Gomunour Reteralamagn d'an 3 Mae, war zigarez e oa re gozh (77 vloaz) da genderc'hel gant e labour. Roet e voe dezhañ an titl a enor a Gadoriad ar Gostezenn. En e lec'h e voe anvet Erich Honecker (58 vloaz).

Abaoe pell e c'hortozed dilez Ulbricht, a zo bet e penn e-pad meur a vloaz. Bez' e voe unan eus krouerien ar Gostezenn Gomunour alaman, hag eus 1928 betek 1933 e voe kannad er Reichstag. Neuze e tec'has diouzh ar vro da vont en harlu e Tchekoslovakia, e Frañs hag e Rusia. E 1945 e tistroas da heul an armeoù rusian, hag e labouras start da sevel Stad Komunour Reteralamagn.

Feal e voe da Rusia en amzer Stalin. Nevez 'zo e oa aet a-enep tostidigezh Moskov ouzh Bonn, hag hep mar n'eo ket bet displijet renerien ar C'hremlin gant e zilez.

Honecker a zo bet atav diskibl da Ulbricht. Hogen aesoc'h e vo d'ar Rusianed, war a hañval, e lakaat da blegañ d'o folitikerezh, o vezañ n'eo ket ken brudet na ken doujet hag ar sturier kozh.

Stadoù-Unanet 6.000 den a voe harzet e Washington d'an 3 Mae, e-doug displegadegoù aozet a-enep ar brezel e Vietnam. Un 20.000 bennak a dud a glaskas lakaat mesk, "seizañ" buhez ar gêrbenn, dre herzel ouzh red ar c'hirri ha mirout ouzh micherourien hag implijidi da vont d'o labour. Archerien ha soudarded e-leizh, avat, a oa bet kaset war urzh Nixon, gant armoù, gaz-daeraouiñ, biñsaskelloù ha kement ijin a zo rekis evit dont a-benn eus dispac'herien.

Haiti Prezidant Haiti, François Duvalier, lesanvet "Papa Doc", a rene evel diktatour abaoe 14 vloaz, a varvas en oad a 64 bloaz, d'an 22 Ebrel. Hervez e youl, e vab Jean-Claude, n'en deus nemet 19 vloaz, a voe anvet da brezidant war e lerc'h.

Reter-Kreiz Roet e voe da anaout d'an 18 Ebrel e vije kevredet Egipt, Libia ha Siria. Se a voe divizet da heul ur vodadenn e Benghazi etre prezidanted an teir Stad. War un dro e voe diskleriet ne vije ket lezet an disterañ tamm douar da vont gant Israel, hag e vije kendalc'het da harpañ Palestiniz en o stourm evit an emrenerezh. Unanet e vo armeoù an teir bro.

Ne voe lavaret ger ebet diwar-benn Soudan, he doa prometet e miz Du en em stagañ ouzh Libia hag Egipt.

Ur Gambr vroadel a dle bezañ anvet, pep Stad o kaout enni an hevelep niver a gannaded, daoust m'eo Egipt an hini bobletañ. Koulskoude, a-raok seveniñ an unaniezh da vat, e vo graet referendom, en diskar-amzer marteze.

An Ao. Rogers, Sekretour-Stad ar Stadoù-Unanet, a reas un dro e derou miz Mae dre Stadoù ar Reter-Kreiz. E bal oa dreist-holl lakaat Egipt hag Israel d'en em glevout evit addigeriñ kanol Suez.

D'an 13 Mae e roas en Egipt ar jeneral Mohamed Fawzy ha ministred all o dilez. Antronoz e voent "dalc'het en o ziez". Darn eus renerien an Unaniezh Sokialour Arabek, ar strollad politikel brasañ er vro, a voe harzet. En ur skin-brezegenn en deiz-se e tisklerias ar prezidant Sadat e oa bet dizoloet un irienn aozet da ziskar e c'houarnamant.

=====

AL LIGISTRI E BREIZH

gant L.Andouard

Lenn hep kompren, setu, sur a-walc'h, pezh a c'hoarvezas ganin pa zigoris niverenn 147 ABK war geleier "AR MIZ", ha setu perak n'em boa taolet nemeur a evezh ouzh ar pennadig embannet dindan an talbenn "AL LIGISTRI" (p.86).

En deizioù-mañ diwezhañ, o furchal en ABK, e kouezhas va sell war ar pennadig-se adarre, hag ar wech-mañ, e teuas sklaer em spered n'eo ket hepken ar ster anezhañ, met ivez perak n'em boa ket e veizet mat.

Da gentañ em boa lennet anezhañ re vuan. Daoust ha n'eo ket se, avat, a c'hoarvez, peurliesañ, gant ar c'hazetennoù, enno keleier dreist-holl ? Lavarout a rae ar prederour Sertillanges, o.p., e ranke ar c'helaouennoù, hag int graet buan-ha-buan, bezañ lennet ken buan all.

Da eil, ret din anzav n'em boa ket meizet ervat yezh ar pennad, ha dreist-holl talvoudegezh ar ger "lenn" implijet ennañ, nag hini an anv "Strollad-kefridi lec'hel pesketaerezh Brest". Ha koulskoude, mar deus un ensavadur a anavezan mat eo hemañ, peogwir em eus bet darempredoù

cus ar gwellañ gantañ e-pad 25 bloavezh. Kemend-all a c'hallan lavaret eus ar gudenn brastaolennet e niverenn Meurzh 1971 ABK.

Pezh a zo c'hoarvezet ganin a ziskouez, da'm meno, e ranker diwall, pa vrezhoneger un anv pe ur ger, da vezañ komprenet a-dreuz, pe zoken diveizet.

Kement-se lavaret, dao da gudenn al ligistri !

Ar vrezhonegerien o deus lennet "Ar Grilheta e Breizh" a oar peseurt pinvidigezh eo bet ar grilheta, al legestreta hag ar c'hranketa evit hor bro. Goude an eil brezel-bed eo deuet da vezañ brasoc'h eget biskoazh. Abaoe 1963, avat, eo bet kroget ar c'hrestenega da zigriskiñ buan, ha kement-se evit meur a abeg.

Menegomp ar re bennañ anezho :

a) An nebeud a grestened a chom er mor a-hed aodoù Breizh hag ar broioù pell darempredet gant ar Vretoned a-ziwar ar rebesketa.

b) An diaes ma'z eo kavout tachennoù grilheta pe legestreta nevez.

k) Pa'z eus bet kavet anezho, dre chañs, eneberezh ar broioù estren, c'hoant ganto mirout pinvidigezhioù ar mor evito o-unan, ouzh labour hor pesketaerien.

d) An didrevadenniñ. (Da heul dieubidigezh Maour-etania, da skouer, e voe kaset Douarneneziz kuit eus tachennadoù grilhedus ar Rio del Oro (1).

e) Perc'henniezh tachennadoù brasoc'h-brasañ eus ar mor arvorek gant an holl vroioù o deus kaset bevenn o dourioù broadel, pe viret ganto d'o fesketaerien nemetken, eus 3 da 6 pe 12 ha, zoken, en Amerika-an-Traoñ, da 200 milmor adalek an aod.

E-keit ha ma koazhe eta hor pesketaerezh, ne ehane ket ar goulenn da greskiñ war varc'had ar c'hrestened hag o frizioù da sevel uheloc'h-uhelañ.

A-ziwar ar stad-se eus an traoù, hag ivez gant ar c'hoant da wellaat stad-a-vuhez hor pesketaerien vihan, ez eo diwanet ar menoz da glask adpoblañ ar mor a-hed hon aodoù, hag int krestenegus dre natur.

Penaos, avat, tizhout ar pal-se, nemet dre vihanaat, - a-ratozh-kaer, - striv hor pesketaerezh ?

An doareoù bet implijet evit se a zo ar re-mañ :

a) Reolennañ ar binvioù hag ar bigi-pesketa.

b) Difenn ouzh ar besketaerien da dapout ha da werzhañ seurtoù pe rummadoù krestened 'zo (ar re vihan hag ar pazed, da skouer).

k) Merkañ bevennoù da labour ar besketaerien en amzer (marevezhioù-pesketa).

Bez' e c'haller ivez difenn ouzh ar besketaerien labourat war dachennadoù 'zo eus ar mor. Neuze e c'hell ar pesked krogenek bevañ en o frankiz war seurt tachennadoù

(1) P'edo e dalc'h ar Frañsizien, e tegemere Maouretania pesketaerien an Inizi Kanarias hag, en eskemm, e veze aotreet pesketaerien Vreizh - n'oa nemeto - da c'hrilheta war aodoù Rio del Oro.

hag, a-ziwar se, kroskiñ ha paotant.

An tachennadoù-se, a gredan, a zo bet graet "lennoù" anezho er pennadig ABK meneget a-us. Evidon-me, n'em bije ket graet gant ar ger-mañ, met kentoc'h gant "gwarezlec'h" pe "gwarezva". E galleg, evit envel seurt tachennadoù, e vez graet peurliesañ gant ar ger "cantonnement(s)", o tegas da soñj al lec'hioù m'en em ziazez enno ar soudarded, hag e saozneg gant "nursery, nurseries", a laka da soñjal er sevel-bugale.

Seurt gwarezlec'hioù eo a zo bet krouet a-hed aod karter-mor Brest. Eno eo bet krouet an hini kentañ, un dek vloaz 'zo bennak, e kostez Molenez, hag eno eo ez eus ar muiañ anezho : pevar pe bemp, a gredan. Moarvat ez eo dleet kement-se da niver bras ar besketaerien o vevañ diwar ar grilheta pe al legestreta war arvor Leon-Izel, hag int o kompren e rankent oberiañ evit gwellaat o stad-a-vuhez. Ret eo menegiñ ivez labour ur vaouez speredek ha kalonek : an Itron C'hrall hec'h anv, hag hi sekretourez "Komite lec'hel pesketaerezh Brest" abaoe e grouidigezh.

Skouer Vrest a zo bet heuliet e karterioù-mor all, e Breizh dreist-holl, e Normandi, e Vande hag e Korsika.

Diaes, avat, eo lavarout pescort frouezh a zo bet roet gant ar gwarezlec'hioù-se.

Mar seblant bezañ reizh menoz-diazez ar gwarezlec'hioù, e rankfed teurel evezh bras, dezho da reiñ frouezh, na dafe hini ebet da grestenega enno e-pad, da nebeutañ, 5 bloavezh. Kreskañs al legestr o vezañ difonn, n'eo nemet a-benn ar prantad-amzer-se e tizh peurliesañ ar re yaouank ganet da vare krouidigezh ur gwarezva ar vent kenwerzhel a glot gant ar galloud o deus da c'henel.

A-hend-all, evit ma kreskfe buanoc'h a se poblañs ur gwarezlec'h, e vorer warnañ parezed-ligistri, pe c'hrilhed, viaouek, paket e lec'hioù all, da nebeutañ kement ha ma kaver anezho ha ma'z eus arc'hant d'o frenañ. Ne vez ket roet boued dezho avat.

Kompren a reer eta ar mall o deus ar besketaerien da vont da legestreta pe da c'hrilheta war seurt tachennadoù. Lod n'int ket evit herzel ouzh o c'hoant, hag a ya dre laer, lod all a c'houlenn groñs ma vint digoret d'ar pesketaerezh a-benn ar pemp bloavezh rekis, hag a-wechoù, war zigarez pe zigarez, a-raok. Peurliesañ ne vez ket nerzhus a-walc'h ar Mererezh evit enebiñ, hag e vez digoret ur gwarezlec'h pa rankfe, moarvat, chom serret. A-hend-all, ne gav ket din e vez studiet pizh a-walc'h pelec'h ha perak e rankfe bezañ krouet seurt gwarezlec'hioù e sell da boblañ en-dro un dachennad-vor verket, penaos e rankfent bezañ meret, ha pegeit e rankfe bezañ difennet ar pesketaerezh warno e sell da dizhout ar pal-mañ.

Arnodennoù, taolioù-esa n'eo ken, da'm soñj, ar pezh a zo bet graet betek-hen.

Kalz a studiadennoù hag a strivoù a vo ret c'hoazh a-raok ma vo gouezet penaos merañ ur binvidigezh-natur - evel ar pesked-krogenek e Breizh - dezhi da chom en he barr daoust d'ar pezh a vo kemeret diouti evit bevañs an dud. - L.ANDOUARD, bet prezidant "Komite Liesvicherel ar Pesked-krogenek".

 RE A BREDER GANT PLOM ?

gant Alan Heusaff

Ar plom zo kontammus. Klevet hon eus bet skolacrien o komz eus ar "céruse", hag er c'helaouennoù e vez anv eus bugale vihan bet kontammet goude krignat c'hoarielloù pe barrennoù o c'hel livet gant pentur dre blom.

Ha setu bremañ ma tizoloer ez eo ar plom unan eus an elfennoù fallañ o saotrañ ar boued, an dour, an aer.

Pegen fall ? Sorc'hennoù ?

Ar vezeged a oar lakaat ur vevenn uhelañ d'ar c'hementad a c'hell an den kemer eus un danvez kimiek en e wad, hep droug da badout. Lavaret e vez zoken ez eus ur c'hontamm eus kement danvezenn, mar kemerer re diouti. Evit ar plom, ez eo bet degemeret betek-hen e vez tizhet treuzoù an diogelled gant 0,8 miligramm dre litr gwad. Pa vez muioc'h e vez efedoù grevus, hag e vez graet droug dibareüs d'an empenn zoken. D'ar poent-se e vez roet ul labour diarvaroc'h d'ur micherour o labourat en ur greanti ma vez graet gant plom.

Hiziv an deiz e tamgreder ez eus un ere etre kleñvedoù dizerius, dilignezus, hag ar c'hementadoù a euvrer eus danvezennoù ha n'eo ket an den henvoazet outo. N'eo ket hepken pa vez diraezet treuzoù an diogel e tlefed diwall. Efedoù war hirdermen a c'hell c'hoarvezout a-raok.

E gwad kêriz an darn vrasañ eus ar broioù "araokaet" (war-du petra ?) e kaver ez eus dija, well-wazh, etre 0,2 ha 0,25 mg/l a blom. Oc'h imboursañ gwad ur rummad bugale-skol e Manchester, e voe kavet e oa ennañ 0,3 mg/l, hag unan en o zouez en doa 0,5.

Biskoazh n'eus bet ul live ken uhel a saotradur e gwad an dud, o vont ken tost d'an treuzoù. Den ne anavez efedoù hirdermen un dra o tizhout un niver ken bras a dud. N'eo ket dinec'hus, pa'z eo gwir ez eo ar vugale ar re a zo kizidikañ ouzh ar c'hontamm.

Arrouezioù ar c'hontammadur, droug-penn, skuizhentez, diouer a ilboued, diouer a wad, n'int ket spisaus a-walc'h; pennabegoù all a c'hell bezañ dezho. D'ur stad washoc'h e vez diouer a genurzhierezh hag e vez ginus an den.

Anat a-walc'h eo bremañ e c'hell ar plom ober droug da liveoù un tamm mat izeloc'h eget an 0,8 mg/l. E 1964 e voe dizoloet e vez muioc'h a blom e gwad bugale izil-spered eget diouzh reol. Ne brou ket se e teu o c'hleñved diwar ar reblom. Marteze ez eus un dra bennak en o gwad hag o laka da zerc'hel muioc'h eus ar metal-se, un tennder bennak hag o laka da chaokat traoù plomek.

Gouzout a reer avat e vir ar c'hontammadur dre ar plom ouzh ar c'horf da genderc'hañ kelligoù ruz ar gwad. Mirout a ra peurgetket ouzh kenaozadur an haem, ur gevrenn eus an hemoglobin. Enebiñ a ra ar plom ouzh un enzimenn hag a zo ret-holl evit aozañ an haem ; an efed-se a verzer en duellenn-arnodiñ, ne vern pegen nebeut a blom a vez.

E Sveden ez eus bet graet arnodoù hag a laka da wirheñvel e c'hoarvez kemend-all e bevkimiezh ar c'horf. Gouezoniourien e Glasc'ho o deus diskouezet e vez diaesaet aozadur an enzimenn en empenn ivez. Aliañ a reont lakaat un usvevenn-diogel izeloc'h eget ar 0,8 mg/l : d'o meno e tlefe bezañ etre 0,3 ha 0,4.

Mar demañ ar gwir ganto, ez eus ur bern bugale endeo er riblennad-arvar.

Un dra natur eo e vefe plom er gwad. Ul lodig.

Pegement a oa gwechall ? En eskern Perouiz hag a veve 600 vloaz 'zo, e voe kavet un dekvedenn hepken eus ar pezh a zo en eskern tud ar broioù greantelaet.

Pegen buan ez a ar saotradur-dre-blom war washaat a zo diskouezet gant dezrannidigezh erc'h dastumet e Groenland hag en Antarktika e-doug ar bloavezhioù tri-ugent. Keñveriet e voe skouerennoù erc'h a voe gouelezennet e Groenland war-dro 1750 ha tammoù skorn tennet eus ur skorneg ha deziadet da 800 A.K. dre an hentenn radio-karbon. Setu a voe kavet : etre 800 A.K. ha 1750 e voe difonn met dalc'hus kresk ar c'henfeuriad plom en aergelc'h. Etre 1760 ha 1940 e pevarc'hementas. Hag etre 1940 ha 1965 e tric'hementas c'hoazh. En Antarktika e chomas ar c'henfeuriad peuzdigemm ; nebeutoc'h e voe kavet zoken eget er skornennoù groenlandat deziadet da 800 A.K.

1750 a genglot gant derou an oadvezh greantel. Hag abaoe 1940 e lakaer plom e tireoul ar c'hirri-tan hag all. E Stadoù-Unanet Amerika e tiskarg ar c'hefluskeroù $\frac{1}{4}$ milion tonenn blom bep bloaz en aergelc'h. E Breizh-Veur ez eo war-dro 10.000 t. Ar plom-se a zo e stumm euflennoùigoù hag a vez skignet pell. Ar plom lakaet en tireoul a zo hep mar orin un darn vat eus plom an aergelc'h.

Hervez ur strollad-enklask en Ospital St Bartholomew, London, e vez euvret pemp gwech muioc'h a blom gant an den dre ar boued eget dre an aer. Er straedoù leuniet gant divogedad ar c'hirri-tan e vez disheñvel ar c'henfeur, met bez' e vefe c'hoazh tri da unan. Difenn lakaat plom en eoul-maen ne lakafe ar plom da zigreskiñ nemet a 10%.

Setu ar pezh a garfe krediñ ar re a zisplijfe dezho gwelout priz an esañs o kreskiñ. Ar gouarnamantoù koulz hag ar vlenierien-girri-tan. Met diskred a zo bet taolet war sifroù ar strollad-enklask-se. Goulakaat a rae e tremen un darn vat eus plom an aer dre ar skevent hep bezañ dalc'het. Ha ma vefe div wech nebeutoc'h ?

Daou zanevellskrid all a laka da wir ez eo eus an tireoul e teu ar pep brasañ eus ar plom e gwad kêriz. Gouez da zaou Galiforniad ez eo kement-ha-kement hag a vez euvret dre ar skevent hag ar stomok.

Ret eo atav disfiziout eus ar pezh a lavarar a-berzh ar gouarnamantoù ; evit abegoù politikel, e lavaront ez eo dinoaz lakaat plom en tireoul.

Plom a zo en hor boued ivez. Lavarout a reer n'eus netra da ober evit parrat outañ. Ne lavarar ket perak. Ha graet ez eus bet arnodoù er skolioù douarc'hounezerezh da skouer ?

Hag an dour ? Kenurzhiadur Bedel ar Yec'hed en deus aotreet 0,05 mg/l evit an dour da evañ. Se a oa e 1963. E 1970, e voe aotreet an daougement gantañ. Souezhus a-walc'h. Kavet eo bet ez eus muioc'h eget 0,05 mg/l e dour nav c'hêr, ha muioc'h eget 0,1 mg/l e dour teir c'hêr eus Breizh-Veur. Dont a ra ar plom dreist-holl eus an tuellennoù end-eeun !

Er rannvroioù ma'z eo blot an dour, da lavarout eo hep bikarbonat kalkiom, e kemer aesoc'h plom eus an tuellennoù.


Chom a ra c'hoazh kalz tuellennoù-plom e Breizh-Veur. Koustus-bras e vefe lakaat tuellennoù metal all en o lec'h. Er greanterezh e vez graet kement gant ar plom ma vefe dihebleustr ober heptañ.

Ar wrimennad-diogelded a zo o strishaat. Marteze ez eo diviet zoken. An aesañ tra a vefe lakaat berz war arver ar plom en tireoul. Ne lakafe ket dispign ar vlenierien-girri da greskiñ dre vuioc'h eget 10% moarvat, hag arboellet e vefe ar c'hefluskerioù ma vefe lamet kuit.

Met an droug n'eo ket anat da galz tud. Ar c'hreantourien hag ar genwerzhourien a vo gouest da lakaat ar stadrenerien, ar bolitikerien, ar gelaouerien da chom sioul. En ur gevredigezh renet gant ar mennad-da-greskiñ-he-danvez, e vez pledet gant ar c'hudennoù pa n'eus mui tu d'ober a-hend-all. Ne vez ket amzer evit ar pezh a vo grevus pe zrastus a-benn dek vloaz ac'hanamañ.

E kêrioù 'zo ez eus strolladoù tud yaouank prest da herzel ouzh distruj ar buhezkerc'h. En Amsterdam o deus dileuridi er C'huzul-Kêr, hag e koazezont war ar straedoù d'ar mareoù ma vezont stanket gant kirri-tan, evit mirout outo da loc'hañ ha da deurel o flaeriadur en aer.

Ha trec'hiñ a raint war an demokrated ?



I w e r z h o n e g d ' a n d a o u l a m m

Lennerien AR BED KELTIEK a oar e oa hor mennad aozañ ur pemzektevezh-studi da Bask evit deskiñ iwerzhoneg da dud eus an holl vroioù keltiek.

Un harz-labour hag a zo padet tost da zaou viz a zo c'hoarvezet e Breizh-Veur dres d'ar mare ma oa bruderezh da ober evit kaout un niver bras a-walc'h a berzhidi. Ha gwelloc'h e kave darn eus ar re o deus respontet gortoz betek an hañv.

Divizet hon eus eta ober ur skol-hañv e Trabolgan etre an 8 hag an 21 a viz Eost, MAR EN EM OUESTL DA VIHANAÑ 12 DEN DA ZONT.

Trabolgan a zo ur skol iwerzhoneg hag a vez digor hañv-goañv. Lec'hiet-brav eo dirak ar mor, tri c'hilometr diouzh Whitegate, war-dro 15 km er c'hreisteiz da vMiddleton (e-kichen Cork). Roet e vo lojeiz, boued ha kelennadur evit 140 lur gall ar sizhun.

Evel merket, e ranko rener ar skol, Cormac Mac Carthaigh, bout sur e teuy un niver 'zo a dud : n'en deus ket c'hoant da c'houlenn digant ur c'elenner aozañ ar rummad-kentelioù ha mirout ar pemzektez-se ma ne zeufe nemet un nebeut perzhidi. Setu perak e rankomp goulenn digant ar re a fell dezho dont hen reiñ da c'houzout, ha kas 40 lur gall kretadur da A.Heusaff, 9, Bothar Cnoc Sion, Ath Cliath 9, Iwerzhon, a-raok ar 7 a viz Gouere. Daskoret e vo an arc'hant ma n'enrollo ket tud a-walc'h.

Ma n'eus ket tu da gas ul lizher-arc'hant, n'eus nemet skrivañ d'ar chomlec'h a-us an abretañ ar gwellañ, hag e vo erbedet un hent all.

Pledet e vo dreist-holl d'an distagadur ha da elfennoù-diazez ar yezh, evel ma'z int bet spisaet dre enklaskoù C.O hUllacháin.

Tu o devo ar berzhidi da vont goude se e-pad eizhtez da Oileán Cléire, un enezenn e mervent kontelezh Cork, e kompagnunezh "Na Fánaithe". Ar re-mañ a zo anezho ur strollad iwerzhonegerien yaouank hag a ya evit pennadoù du-hont, evit harpañ tud an enezenn, gouezelegerien anezho, da vodernaat o ziez hag all.

Deuet-mat e vior ma roer dorn dezho, met ne vo ket ret. Ne labouront ket e-pad an deiz. Tro a vo eta da bleustriñ iwerzhoneg a-gevret ganto, ha kinnig a reont rikoù-kegin ha seier-kousket, ha lojeiz en ti o deus eno. £3 (40 lur) a vefe da baeañ evit ar sizhunvezh.

Mat e vo lakaat un timbr-respont etrevroadel evit ma roimp kemenn pe ziskemenn war-dro ar 15 a viz Gouere.

A-berzh AR C'HEVRE KELTIEK

Triskel bev

gant Anjela Duval

E koun eus an 18-6-70, ma voe
va zeir Steredenn em zi evel un
Triskel bev.

N'o doa nemet ur Steredenn,
An Tri Roue Maj !
N'o doa nemet unan ...
Teir am eus-me din va-unan,
O skinañ em buhez,
Gwrez ha sklerijenn.
... E troellenn va c'harantez,
O-zeir am eus o liammet
'N un Triskel kevrinel.
... Unan hollwisket e gwenn,
Splannoc'h eget an Heol kreisteiz,
Hi ar c'hentañ deuet em buhez,
Ha bepred an hini garetañ.
... An eil atav e glas he gwelan,
Dezhi liv an oabl hag ar mor,
Barrleun a Huñvre hag a Spi.
... An teirvet 'zo "Gwenn ha Du",
Enni e vev livioù va Bro.
E troellenn va c'harantez,
Emaint-i liammet o-zeir !

=====

UN DEVEZH STUDI EVIT AR GELENNERIEH VREZHONEG. - Un
devezh studi aozet gant KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ
a vo d'an 13 a viz Mezheven e Rann Geltiek Skol-Veur al
Lizhiri, Roazhon. Kregiñ a ray da 10 eur, evit echuiñ war-
-dro 6 eur diouzh an abardaez. Savet eo evit ar gelennerien
vrezhoneg hag ar re a zo e soñj kelenn hor yezh. Digor e
vo d'an holl dud a zo prederiet gant amzer da zont hor yezh.

Studiet e vo kreskoù diwezhañ ar c'helenn brezhoneg :
- an doareoù nevez amprout evit deskiñ ar brezhoneg
d'ar vugale, d'ar vrezhonegerien a-vihanik, d'ar re
a zo o kregiñ, d'an dud divoaz diouzh al labour-
-spered.

- ur gudenn o tennañ da sevenadur hor bro : Yezh ha
strukturallegezh, gant ar c'helenner Gagnepain.

Adnevezet e vo ar Burev. Evit kaout diskleriadurioù
all, skrivañ da : K.A.D.N., 12 rue Astor, 29 S - QUIMPER.

=====

C.C.P.P. No.36.242.

Le Gérant : Mlle Y. Martin, 24, rue Poull ar Bachet, BREST.

Licsskrivet gant ar gelaouenn/Ronéotypé par la revue.